



an TESTAMANT nevez



eil lodenn

OBEROU HA LIZIRI EBESTEL - DISKULIADUR SANT YANN

an TESTAMENT nevez



eil Loden

OBEROU EBESTEL

LIZIRI SANT PAOL

LIZER D'AN HEBREED

LIZIRI

SANT JAKEZ

SANT PER I - II

SANT YANN I - II - III

SANT JUD

DISKULIADUR SANT YANN

NIHIL OBSTAT :

P. GUICHOU
Censor delegatus
Porspoder, d'an 3 a viz meurz

IMPRIMATUR :

Quumper, le 9 Mars 1988.
Francis BARBU,
Evêque de Quimper et de Léon.

«ASSIDUS A L'ENSEIGNEMENT DES APOTRES»

L'accueil fait à la traduction des Quatre Evangiles en breton par l'équipe que stimule et coordonne Monseigneur FAVÉ a été un encouragement à continuer l'œuvre entreprise. Peu après la parution de la traduction des Évangiles, avec mes encouragements, l'équipe s'est remise au travail, en s'attaquant d'emblée à l'Epître aux Romains, un bon test qui parut positif. Et les autres Épîtres, les Actes des Apôtres et l'Apocalypse furent traduits à leur tour.

Après des semaines et des mois de travail méthodique et de confrontations systématiques, voici l'œuvre achevée et livrée à l'imprimeur. Les principes qui ont guidé les traducteurs sont les mêmes que pour le volume précédent et si le vocabulaire est souvent plus abstrait et plus théologique, cela tient au genre littéraire plus complexe que celui des Évangiles.

Pour les auteurs, cette traduction est une œuvre de foi, un hommage à l'Église dont la fidélité à Jésus-Christ est saisie ici en son premier surgissement, sous la conduite vigilante des Apôtres. Ils ont voulu aussi rendre hommage à la langue bretonne, capable d'exprimer toute la richesse de la pensée chrétienne et de guider encore de nos jours l'expérience chrétienne des hommes et des femmes de chez nous, comme elle l'a fait au cours des siècles.

Pour Monseigneur FAVÉ, à 86 ans, cette traduction est comme le sceau apposé sur une vie tout entière inspirée de cette double fidélité : il ne pouvait nous en donner un témoignage plus parlant. Je lui en dis toute la reconnaissance du diocèse de Quimper et de Léon qu'il continuera ainsi de servir encore longtemps. Monsieur le Chanoine ÉLARD, son compatriote de Cléder, et Monsieur l'Abbé Gabriel CABON, léonard lui aussi, ont été pour lui de parfaits collaborateurs, sous la vigilance attentive de Monsieur l'Abbé Pierre GUICHOU, exégète chevronné. Eux aussi, je les remercie vivement.

A cette traduction je souhaite grand succès. Elle permettra à ceux et à celles qui cherchent à approfondir leur foi de puiser à la source même et les rendra capables d'exprimer à leur tour «en leur propre langue, les merveilles de Dieu».


Francis BARBU

Évêque de Quimper et de Léon

Troet e brezoneg gand
V. Favé - F. Élard - P. Guichou - G. Cabon

hag embannet gand
KENVREURIEZ AR BREZONEG
Eskobti Kemper ha Leon

OBEROU EBESTEL



OBEROU EBESTEL

En eul levr kenta (an trede aviel) e-neus Lukaz diskouezet e-neus Jezuz, dre vertuz ar Spered Santel, saveteet ar bed ha diazezet an Iliz war an ebestel a oe karget da brezeg an Aviel beteg penn-pella ar bed.

En eul levr all (Oberou Ebrestel), e tiskouez e teu buan an Iliz da greski dre skoazell an heveleb Spered. Diwar skouer testou leun a gred ha dreist-oll diwar labour an ebrestel Per ha Paol, an Iliz a zeu da veza savet e Kériadennou braz euz an Azia-Izella hag euz Bro-Hres ha dreist-oll e Rom, kér-benn ar bed roman, e-kreiz ar bed payan.

D'AL LENNER

O kuitaad e ebestel, Jezuz e-noa lavaret dezo : «*It, kelennit an oll vroadou...*» An «Oberou Ebestel» a ziskouez deom o-deus greet kemend a hellent, e-kreiz eun toullad mad a drubuillou, evid embann an Aviel dre ar bed.

Jezuz e-noa lavaret ouspenn : «*Deskit dezo mired kement am-eus gourhemennet deoh*». Red e oa eta dezo sikour c'hoaz an Ilizou yaouank da zerhel ar zoñj heb fazia euz kelennadurez ar Mestr ha d'he mired gand aked. Al labour-se, diéz da ober en o amzer, evel m'eo en on hini, eo a gont deom liziri an Ebestel ha Diskuliadur Sant Yann.

Red e oa dezo kennerza an Ilizou yaouank, heskenet aliez gand ar Juzevien hag ar bayaned.

Red e oa dezo diarbenn ar gristenien ouz ar fals-prezegerien a glaske kemmesk ar hredennou hag ar boaziou Juzeo pe bayan gand ar religion gristen.

Sikour a rankent ar Juzevien deuet d'ar feiz kristen d'en em zis-troba da vad euz Lezenn Voizez ; evel ma rankent sikour ar bayaned deuet d'ar feiz kristen da ren eur vuez nevez hervez an Aviel.

Al labour-se a bañtor m'eo o hini, henn ober a reont drezo o-unan pe gand sikour kenlabourerien, pe c'hoaz dre al liziri a gasont evid di-rouestla lod kudennou a vez. Liziri an Ebestel ha Diskuliadur Sant Yann a zo bet skrivet eta evid sikour Kristenien an amzer-se (hag iveau Kristenien peb amzer) da vired kement e-neus Jezuz gourhemennet, da zelher soñj mad euz kelennadurez ar Mestr ha da heulia anezi penn da benn.

P. GUICHOUP

OBEROU EBESTEL

I - -1- Va levr kenta, Teofil, am-eus kontet ennañ kement e-neus greet ha kelen-net Jezuz abaoe ar penn-kenta, -2- beteg an deiz ma oe pignet d'an nêv, goude beza roet e gemennadurez, dre ar Spered Santel, d'an ebrestel e-noa dibabet. -3- Leun a vuez, e teuas dirazo goude e basion; ouspenn eur wech e-noa merket dezo kement-se; e-pad daou ugent devez e-noa en em ziskouezet dirag o daoulagad, ha komzet ganto euz rouantelez Doue. -4- E-pad m'edo o preja ganto, e kemennas dezo chom heb kuitaad Jeruzalem, med chom da hortoz eno promessa an Tad, an hini, emezañ, ho-peus klevet ganin : -5- «Ar vadeziant en dour e-noa roet Yann, med er Spered Santel eo e vezoh-hwi badezet dizale.»

JEZUZ PIGNET D'AN NENV

-6- Bodet e oant eta hag e rejont outañ ar goulenn-mañ : «Aotrou, daoust ha bremañ eo deuet ar mare dit da adsevel ar rouantelez evid Israël?» -7- Respond a reas : «N'ho-peus ket da houzoud evid pe da boent eo bet deiziet kement-se gand an Tad en e halloud. -8- C'hwi a-vad, a resevo nerz o veza ma tiskenno ennoch ar Spered Santel hag e vezoh. testou din e Jeruzalem, dre vro Judea ha Samaria a-bez ha beteg ar penn pella euz ar bed.»

-9- War gement-se e oe dibradet en êr dirag o daoulagad hag e teuas eur goumouenn da guzad anezañ ouz o daoulagad. -10- Hag o veza ma choment c'hoaz da zelled ouz an nev, el leh m'oа pignet Jezuz, setu ma tegouezas en o hichenn daou zen gwisket e gwenn -11- hag a lavaras d'ezo : «Gwazed a Hali-lea, perag chom da zelled ouz an nev? Jezuz, eñ hag a zo bet tennet diganeoh hag a zo pignet d'an nev, a zistroio er memez doare m'ho-peus e weled o vond kuit d'an nev.

AN DAOUZEG ABOSTOL

-12- Kuitaad a rejont neuze menez an Olivez, ha distrei da Jeruzalem; ar menez n'edo ket pell ahano: hed eun deveziad bale d'eun deiz-sabad. -13- Pa oent distro, e pignjont d'ar gambr uhel, el lêh ma reent o demeurañs. Eno edo Pèr, Jakez hag Andre, Filip ha Tomas, Bertele ha Maze, Jakez mab Alfe, Simon ha Jud, mab da Jakez. -14- oll, a-unan, e vezent aketuz da bedi gand eun nebeud merhed, en o souvez Mari, mamm Jezuz, ha gand e vreudeur.

MAZEAZ DIBABET

-15- En deveziou-ze, Pèr a zavas en e zav e-touez ar vreudeur. Bez-ez oa eno bodet wardro c'hweh ugant den, hag e lavaras : -16- «Red e oa kas da benn ar pez e-noa lavaret ar Spered Santel er Skritur Zakr, dre deod David, diwarbenn Judas, deuet da ren ar re o-doa kemeret krog e Jezuz; -17- unan ahanom e oa, bet e-noa lod en or zervich. -18- Hogen an den-se, gand arhant e fallentez, e-noa prenet eun tamm douar; kouezet eo bet war e benn, hag oa bet digoret dre ar hreiz ha ledet eo bet e vouzellou. -19- Gouezet mad o-deus kement-se oll dud Jeruzalem, setu perag eo bet anvet an dachenn-se, en o yez, «Hakeldama», da lavared eo «douar ar gwad», -20- rag skrivet eo e levr ar Salmou :«Ra vezo goullo e di, ha den e-bed o chom ennañ»; ha c'hoaz: «Ra zeuio unan all da germered e garg». -21- Bez'ez eus gwazed hag a zo deuet d'on heul, e-pad an oll amzer ma kerze Jezuz en or penn, -22- azaleg badeziant Yann beteg an deiz m'eo bet lamet diganeom. Red eo eta e teufe unan anezo da veza test ganeom euz e adsao da veo.»

-23- Daou a oe lakeet war ar renk : Josef anvet Barsabas ha lesanvet Justus, ha Mazeaz. -24- Greet e oe neuze ar bedenn-mañ : «Anaoud a rez, Aotrou, kalon an oll, diskouez deom pehini euz an daou-mañ az-peus dibabet -25- evid kemer, er garg a abostol, ar plas e-neus dilezet Judas evid mond d'al leh m'ema». -26- Tennet e oe d'ar zord ha Mazeaz eo a oe dibabet, hag azaleg neuze e kemer ras renk gand an unneg abostol.

AR SPERED SANTEL O TISKENN WAR AN DISKIBIEN.

II -1- Pa zegouezas deiz ar Pantekost, edont oll bodet asamblez. -2- A-greiz peb kreiz e teuas euz an neñv eun trouz heñvel ouz hini eur gorventenn; an ti m'edont ennañ a oe karget a bez gantañ. -3- Neuze e weljont evel teodou tan a en em ranne da blava war beb hini anezo. -4- Oll e oent karget euz ar Spered Santel hag e stagjont da gomz e yezou all evel ma roe dezo ar Spered Santel da lavared.

-5- Hogen e Jeruzalem ez oa o chom Juzevien devod, ginidig euz an oll vroiou a zo dindan an neñv. -6- O veza klevet an trouz-se, eur bobl. tud a zégouezas war al leh. Strafuillet e oent, rag peb hini a gleve anezo o komz en e yez dezañ. -7- Souezet, estlammet e oent, hag e lavarent : «An dud a zo o komz aze, daoust ha n'int ket oll Galileaned? -8- Penaoz eta eh intent anezo peb hini ahanom e yez e vamm: -9- Parted, Meded, Elamitiz, tud euz ar Mezopotamia, euz bro Judea, euz ar Hapadosia, ar Pont, an Azia, -10- ar Pamfilia, an Ejipt, euz al lodenn euz al Libia a sko war Ziren, Romaned o chom amañ, -11- ; oll Juzevien koulz ha Prozelited, Kretiz hag Arabed, ni o hlev o tiskleria en or yez burzudou Doue». -12-Souezet e oant oll hag e lavarent kenetrezo: «Petricinifi an dra-mañ?» -13- Lod all a zirolle da c'hoarzin: «Eur hovad gwin dous a zo ganto!»

-14- Neuze Pèr, hag a oa war al leh gand an unneg, a zavas e vouez hag a zisklerias kement-mañ: «Tud euz ar Judea ha c'hwì hag a zo e Jeruzalem, intentit mad ar pez a dremen ha digorit ho tiskouarn da zelaou va homzou ; -15- Nann! ar re-mañ n'int ket mezo evel ma kav deoh. N'eo c'hoaz nemed nav eur diouz ar mintin. -16- Med amañ e tegouez ar pez e-neus lavaret ar profed Joel: en deveziou diweza, eme Doue, e teuin da skuilla va Spered war beb den; profeded e vezzo ho mibien hag ho merhed, ho yaouankizou o-dezo gweledigeziou, hag ho tud koz, sónjou. -18- Ya, war va zervicherien ha servicherez, en deveziou-ze, e skuillin va Spered; profeded a vo anezo. -19- Burzudou a rin e barr an nefñ ha sinou amañ war an douar: gwad, tan, moged o sevel. -20- E teñvalijenn e troio an heol hag e gwad al loar a-barz ma tégoezeo deiz an Aotrou, an deiz-meur, an deiz a hloar. -21- Hag e vo salvet an neb a halvo ano an Aotrou.

-22- «Juzevien, selaouit ar homzou-mañ : Jezuz a Nazared, an hini e-noa roet Doue da anaoud dre ar miraklou, ar burzudou, ar sinou e-neus greet drezañ en ho touez evel ma ouzoh, -23- an den-se, hervez ar pez e-noa divizet krenn, hag hervez ar pez a ouie en araog, c'hwì ho-peus e roet hag e lazet en eur lakaad tud difeiz d'e staga ouz ar groaz; -24- med Doue e-neus e zavet a varo da veo, en eur denna anezañ euz poaniou ar maro, rag n'helle ket chom dindañ galloud ar maro; -25- rag lavared a ra David diwar e benn : Gweled a reen dalhmad an Aotrou dirazon; rag a-zehou din ema, evid mired ouzin da horjella. -26- Setu perag e tride va halon hag e kane laouen va muzellou, ouspenn, va horv a ziskui-zo en esper. -27- Rag ne zilezi ket va ene e-touez ar re varo, ha ne lezi ket da vreina da zen santel. -28- Diskouezet az-peus din heñchou ar vuez ha leun e vezin a levez pa vezin dirazout.

-29- «Breudeur, me 'hell lavared deoh gand hardisegez : maro eo an Tad-meur David, sebeliet eo bet, hag amañ c'hoaz ema e vez. -30- Med profed e oa, hag e ouie e-noa Doue greet le da lakaad da azeza war e dron unan euz e lignez hag euz e ouenn. -31- Gwelet e-neus en araog dasorhidigez an Hrist, hag anezañ eo e-neus lavaret: n'eo ket bet dilezet e-touez ar re varo ha n'eo ket deuet e gory da vreina. -32- Jezuz eñ, Doue e-neus e zavet da veo, test om oll a gement-se. -33- Bet e-neus eta, digand an Tad, ar Spered Santel prometet hag e-neus e strewet evel ma welit ha ma klevit. -34- Rag David, ha n'eo ket, a dra-zur, savet d'an nefñ, a lavar koulskoude : an Aotrou e-neus lavaret d'am Aotrou : asez en tu dehou din, -35- beteg m'am-bo greet euz da enebourien eur skabell evid da dreid. -36- An oll Juzevien a dle gouzoud mad kement-mañ: greet e-neus Doue anezañ Aotrou ha Krist, eñ hag ho-poa staget ouz ar groaz.»

AR RE GENTA DEUET D'AR FEIZ

-37- Strafullet e oe o halon o kleved ar homzou-se hag e houleñnjont ouz Pèr hag an ebrestel all : «Petra on-eus-ni da ober?» -38- Hag e respountas Pèr :

«Cheñchit buez, ra vezò badezet peb hini ahanoù en an Jezuz Krist, evid kaoud ar pardon euz ho pehejou hag ho-pezo ar Spered Santel da zonezon.» -39- Ar bromesa a zo bet greet evidoh hag evid ho pugale hag iveau evid ar re a zo a-bell, ken niveruz ha ma plijo d'an Aotrou Doue o gelver.» -40- Kalz traou all a lavare c'hoaz dezo evid rei testeni ha kalon dezo: «Tehit, emezaf, diouz ar ouenn dud diroll-mañ.» -41- Ar re o doa greet degemer d'e gomzou a oe badezet hag e kreskas euz a dri mil niver ar gristenien. -42- Aketuz e tal-hent mad da gelennadurez an ebrestel ha d'an unvaniez, da lid ar bara torret ha d'ar pedennou. -43- An doujañs a greske e kalonou an oll, kalz burzudou ha si-nou a veze greet gand an ebrestel. -44- Ar re oll a oa deuet da gredi a veve una-net hag a lakee o feadra e boutin. -45- Gwerza 'reent o leve hag o madou evid lodenna ar priz kenetrezo oll, hervez ezommou peb hini. -46- Aketuz e vezent da vond bemdez asamblez d'an Templ. Terri a reent ar bara er gêr ha kemered o frejou e-kreiz al levenez hag a-wir-galon. -47- Meuli a reent Doue, deuet mad e oent d'ar bobl a-bez. Hag an Aotrou a lakee da greski bemdez an niver euz ar re a gave ar zilvidigez.

EUN DEN AMPECHET PAREET EN TEMPL

III -1- Pèr ha Yann a oa o pignad d'an Templ evid ar bedenn deir eur goude kreizteiz; -2- o tougenn edod di eun den a oa ganet ampechet. Bemdez e veze degaset e-kichenn dor an Templ anvet «Dor gaér» evid goulenn an aluzenn di-gand an dud a antree en Templ. -3- Pa welas Pèr ha Yann oh antreal en Templ e houlenas diganto an aluzenn. -4- Pèr neuze, ha Yann iveau, a zellas a-bann outañ hag a lavaras dezañ : «Sell ouzin.» -5- An den a zelle piz outo, war hed euz eun dra bennag euz o ferz. -6- Pèr a lavaras dezañ : «N'am-eus nag aour, nag arhant, med ar pez am-eus a roan dit : en an Jezuz Krist, an Nazarean, sav da vale!» -7- Hag o kregi en e zorn dehou, e lakeas anezañ da zevel; ker-kent e starteas e dreid hag e uverniou. -8- En eul lamm e oe en e zav hag e vallee. Antreal a reas ganto en Templ en eur vale, en eur lammed hag en eur veuli Doue. -9- Ar bobl a-bez a welas anezañ o kerzed hag o veuli Doue. -10- Anavezet e oa, eñ eo, a-dra-zur, a veze dirag «Dor gaér» an Templ o houlen an aluzenn; hag e chome an dud souezet maro ha saouzanet gand kement a oa c'hoarvezet gantañ.

PREZEGENN PER

-11- An den a zalhe tost da Bèr ha da Yann. Ar bobl a-bez estlammet a ziredas en-dro d>>, er porched anvet «Porched Salomon». -12- O weled kement-se e lavaras Pèr d'ar bobl : «Juzevien, perag beza souezet gand kement-se, ha perag sellad ouzom-ni, evel ma vefe dre on nerz on-unan, pe dre ar pedennou a reom, eo on-eus lakeet an den-mañ da vale? -13- Doue Abraham, Izaag ha Jakob, Doue on tadou, e-neus karget a hloar e zervicher Jezuz, an hini ho-peus

c'hwi droug-roet ha nahet dirag Pilat a oa en e zoñj frankiza anezañ. -15- C'hwi ho-peus nahet an hini santel ha just ha goulennet evidoh frankiz eur muntrer. -15- Mestr ar vuez, lakeet ganeoh d'ar maro, Doue e-neus e zavet a-douez ar re varo; test ez om-ni a gement-se. -16- Dre ar feiz e Ano Jezuz, an Ano-se e-neus kennerzet an den-mañ a welit hag a anavezit. Hag ar feiz ennañ e-neus pareet mad an den-mañ dirazoh oll.

-17- Mad, breudeur! Sklèr eo din, heb gouzoud deoh petra reeh eo ho-peus greet kement-se, c'hwi hag ar re a zo en ho penn. -18- En-araog e-noa Doue, dre gomzou an oll brofeded, diskleriet e-nefe ar Mesiàs da houzañv. Doue e-neus kaset kement-se da benn. -19- Neuze 'ta chenñchit buez ha troit ouz Doue evid ma vo lamet ho pehejou. -20- Evel-se e paro an amzer a beoh roet gand an Aotrou, pa zegaso en-dro ar Hrist prometet, Jezuz, an hini a rank beza degemeret en neñv, beteg ma vo adsavet an oll draou e-neus Doue komzet anezo dre gomzou ar brofeded santel a-wechall. -22- Da genta, Moizez e-neus lavaret : «An Aotrou a lakaio da zevel evidoh a-douez ho preudeur, eur profed eveldon-me, c'hwi a zelaouo anezañ war gement a lavaro deoh ; -23- ha kement den ha na zelaouo ket ar profed-se a vo tennet kuit euz a-douez ar bobl ; -24- hag an oll brofeded iveau, azaleg Samuel hag ar re a zo deuet war e lerh, o-deus komzet d'o zro evid rei da anaoud an deveziou a zo warnom bremañ.

-25- C'hwi eo a zo bugale ar brofeded, hag an Emgleo e-neus Doue greet gand ho tadou. -26- Evidoh-c'hwi da genta eo e-neus Doue savet ha kaset e zervicher evid ho penniga, peb hini ahanoh, ma teuit da drei kein d'hoh oberou fall.»

PER HA YANN DIRAG AR HUZUL-MEUR

IV -1- Pér ha Yann a oa c'hoaz o komz d'an dud pa zeuas daveto ar veleien gand gouarnour an Templ hag ar Saduseaned, -2- eet skuiz ouz o gweled o kelenn ar bobl hag oh embann diwar gomz Jezuz, adsao ar re varo da veo. -3- Lakaad a rejont kregi enno hag o zeurel er prizon beteg antronoz, rag deuet e oa dija an abardaez. -4- Kalz euz ar re o-doa klevet ar Gomz a oa deuet d'ar feiz, wårdro pemp mil a oa anezo.

-5- Antronoz eta eo e oe greet bodadeg gand ar vistri, ar gozidi hag ar skribed a oa e Jeruzalem. -6- Bez' e oa eno Anna ar beleg braz, Kaifas, Jonatan, Aleksandr hag an oll izili euz famillou ar veleien vraz. -7- Urz a rojont da zegas dirazo Pér ha Yann, hag e rejont goulennou outo : «Gand peseurt galloud, pe en ano piou ho-peus c'hwi greet kement-se?» --8- Karget euz ar Spered Santel e lavaras Pér dezo: -9- «Mistri ar bobl ha c'hwi Kozidi, gourhemenn a reer deom hirio, ablavour d'ar vad on-eus greet d'eun den ampechet, diskleria gand piou eo bet pareet an den-se. -10- Red eo deoh oll ha da bobl Israël a-bez gouzoud eo en ano Jezuz Krist a Nazared, ho-peus c'hwi staget ouz ar groaz; med savet eo bet gand Doue a-douez ar re varo; gras dezañ eo ema dirazoh pare, an den-mañ; -11- Èñ, ar meñ ho-peus c'hwi, ar zaverien tiez, taolet kuit, hag a zo deuet da vezar ar meñ-korn; -12- n'eus a zilvidigez dre hini all ebed, rag n'eus ket kinniget d'an dud dindan bolz an neñv ano all ebed hag a zeufe drezañ hebken ar zilvidigez.»

-13- Gweled a reent hardisegez Pèr ha Yann, ha mantret e choment rag ma ouient ez oant euz ar re a heulie Jezuz. -14- Sellent a reent ouz an den pare a oa en e zav dirazo, ha ne gavent netra da lavared. -15- Urz a rojont d'o has er mèz euz ar huzul-meur, hag e klaskent gweled kenetrezo petra da ober. -16- «Petric a raim d'an dud-se, a lavarent kenetrezo, rag anavezet mad eo ar burzud o-deus greet; eun dra sklér eo kement-se evid an oll e Jeruzalem. N'hellom ket henn nah.» -17- Koulskoude, evid mired na z'afe pelloh ar brud etouez an dud, gourdrouzom anezo evid ma ne gomzint mui euz an ano-se da zen ebed.»

-18- Lakaad a rejont o degas en-dro hag e oe divennet a-grenn outo komz pe gelenn an ano a Jezuz. -19- Pèr ha Yann avad a respontas dezo: «Ha just eo dirag Doue ho selaou, c'hwi, pe e zelaou eñ, Doue? Deoh da lavared ... -20- Evidom-ni avad ne hellom ket, a-dra-zur, tevel war ar pez on-eus gwelet ha klevet.» -21- Gourdrouzet e oent adarre ha lezet da vond, rag ma n'oa kavet netra da damall dezo, med ablamour d'ar bobl e oa, rag an oll a rente gloar da Zoue evid ar pez a oa c'hoarvezet; -22- rag an den a oa bet pareet evel-se a oa ouspenn daou ugent vloaz.

-23- Eur wech frankizet ez eas Pèr ha Yann da gavoud o henvreudeur ha da gonta dezo kement o-doa klevet gand ar veleien-vraz hag ar gozidi. -24- Goude beza o zelaouet, oll a-unan e savjont o mouez war-zu Doue evel-henn: «Mestr, te eo az-peus krouet an neñv hag an douar, ar mor ha kement a zo enno; -25- Te eo az-peus lakeet, dre ar Spered Santel, ar homzou-mañ war muzellou on tad David, da zervicher: Perag ar bayaned o fuc'ha, perag ar poblou oh irienna disterajou? -26- En em glevet o-deus rouaned an douar hag en em unanet ar vistri evid mond oll asamblez a-eneb an Aotrou, a-eneb an hini oleoet gantañ.»

-27- «Ya, en em vodet o-deus e gwirionez er gér-mañ, Herodez ha Pons-Pilat gand ar bayaned ha poblou Israël, a-eneb Jezuz da zervicher santel, bet oleoet ganit. -28- Evel-se o-deus kaset da benn kement menoz greet gand da zorn ha da volontez. -29- Ha bremañ, Aotrou, bez war evez ouz o gourdrouzou, ha rotro d'az servicherien da helloud embann da gomz gand hardisegez, -30- oh astenn da zorn evid ma vo greet pareañsou, sinou ha burzudou dre ano Jezuz, da zervicher santel.» -31- Pa oe echu ganto o fedenn, e krenas al leh m'edont ennañ. Oll e oent karget euz ar Spered Santel, ha gand hardisegez eh embenant Komz Doue.

BARNABAS, SAFIRA, ANANIAS

-32 - An niver braz a dud deuet d'ar feiz n'o-doa nemed eur galon hag eun ene. Den ne zoñje dezañ beza perhenn da dra pe dra euz e vadou. Er hontrol eo, kement tra o-doa a veze lakêt e boutin. -33- Gant galloud braz e roe an ebrestel testeni da adsav an Aotrou Jezuz, ha gwelet mad e oant oll. -34- En o zouez n'oa den ezommeg, rag ar re a oa perhenn a dachennou pe a diez a werze anezo, -35- hag a zegase ar priz e-harz treid an ebrestel. Ha peb hini en-deze e lod hervez e ezommou. -36- Evel-se Josef, lesanvet Barnabas gand an ebrestel,

da lavared eo «mab a frealzidigez», eul levit ginidig euz enez Chipr, e-noa eür park. -37- Gwerza 'reas e bark ha degas ar priz anezan evid e lakaad e-harz treid an ebrestel.

V -1- Eun den anvet Ananias, a-unan gand e bried Safira, a werzas eun tamm leve. -2- Kuzad a reas eul lodenn euz ar priz gand asant e wreg, hag e te-gassas al lodenn all da veza lakeet e-harz treid an ebrestel. -3- Med lavared a reas Pèr : «Ananias, perag e-neus Satan karget da galon? Gevier az-peus lavaret d'ar Spered Santel : dalhet az-peus ganit eul lodenn euz priz an dachenn; -4- daoust ha diéz oa dit e zelher heb e werza, pe ma werflez anezan, ober ar pez a garfes gand ar priz. Penaos az-peus soñjet en da galon ober an taol-se? N'eo ket d'an dud eo az-peus lavaret gevier, med da Zoue.» -5- Pa glevas kement-se e kouezas Ananias hag e rentas e huanadenn ziweza. Aon braz a grogas e kement hini a gleve kement-se. -6- Neuze e teuas an dud yaouank da zebelia ar horv ha da gas anezan ganto evid e zouara.

-7- Wardro teir eurvez goude-ze, eh antreas ar wreg heb gouzoud petra a oa c'hoarvezet. -8- Pèr he galvas : «Lavar din ha kement-mañ eo ho-peus gwerzet an dachenn? - Ya, emezi, kement-se eo.» -9- Penaoz 'ta, eme Bèr, ez oh en em glevet evid tenti Spered an Aotrou? Setu m'ema e toull an nor treid ar re a zo bet o touara da bried. Emaint o vond da gas ahanout ganto, te iveau.» -10- Kerkent e kouezas e-harz treid Pèr hag e rentas he huanadenn ziweza. Pa zeu-as tre an dud yaouank e kavjont anezzi maro; he has a rejont ganto evid he douara e-kichenn he fried. -11- Aon braz a grogas neuze en Iliz a-bez, hag e kement hini a gleve petra oa c'hoarvezet.

BURZUDOU AN EBESTEL

-12- Dre zaouarn an ebrestel e c'hoarvez kalz sinou ha burzudou greet e-touez ar bobl. Chom a reent oll unanet dindan porched Salomon. -13- Den all ebed ne grede mond ganto ha koulskoude ar bobl a veule anezo. -14- Muioh-mui e kreske an dud o-doa feiz en Aotrou, eur bern gwazed hag iveau merhed. -15- Dond a rejont da zegas ar re glaîv war ar plasennou, d'o lakaad war gweleou pe war gravazou evid ma teufe, pa dremenfe Pèr, e skeudenn da vianna da bara war hini pe hini anezo. -16- Direded a ree iveau eur bern tud euz ar hé-riou tro-war-dro da Jeruzalem, ganto tud klaîv pe dud gwallgaset gand droug-sperejou hag oll e kavent ar pare.

AN EBESTEL ER PRIZON HA FRANKIZET

-17- Neuze e savas ar beleg braz hag e oll genseurted, a oa euz kostezenn ar Saduseaned, dirollet e oant gand ar gred. -18- Urz a rojont da gregi en ebrestel, hag, a-wel d'an oll, e taoljont anezo er prizon.

-19- Med e-pad an noz e tigoras êl an Aotrou doriou ar prizon evid o degas er-mêz hag e lavarâs dezo: -20- «It, ha chomit en Templ hag eno embannit an oll gomzou a Vuez-se.» -21- Senti a rejont outaîn, ha kerkent ha goulou-deiz ez-ejont d'an Templ da rei o helennadurez.

Pa zegouezas ar beleg braz e genseurted, ar re-mañ a halvas ar Huzul-meur ha sened ar Juzevien a-bez, hag e lakadjont kerhed an ebrestel er prizon. -22- Med pa zegouesjont war al leh, ar zervicherien ne gavjont ket anezo er prizon. Pa oent dizroet e rentjont kont evel-henn: -23- «Kavet on-eus ar prizon prennet kloz, ar gwardou war evez dirag an dorojou, med, p'on-eus digoret, n'on-eus kavet den en diabarz.» -24- Pa glevas ar helou-se, Mestr an templ hag iveau ar veleien vraz a yeas en arvar diwarbenn an ebrestel, oh houllenn outo o-unan petra hellfe beza degouezet. -25- Mond a reas neuze unan da gemenn dezo : «An dud ho-poa taolet er prizon, setu m'emaïnt en templ o kelenn ar bobl.» -26- Mond a reas neuze Mestr an templ hag e zervicherien da gerhed an ebrestel, med n'eo ket dre forz koulskoude, gand aon na zeufe ar bobl d'o labeza. -27- Degas a rejont anezo dirag ar Huzul-meur, hag ar beleg braz a lavaras dezo: -28- «Divennet or-boa striz ouzoh, emezañ, kelenn an Ano-se, ha padal ho-peus skignet dre Jeruzalem ar gelennadurez-se, hag e fell deoh lakaad da gouza warnom gwad an den-se!» -29- Med respont a reas Pèr hag an ebrestel : « Red eo senti ouz Doue kentoh egod ouz an dud. -3- Doue on tadou e-neus adsavet a-douez ar re varo Jezuz ho-poa-c'hwi lakeet d'ar maro, o staga anezañ ouz ar hoad. -31- Hennez eo e-neus Doue uhelleet dre nerz e zorn dehou da veza rener ha Salver, evid ober da Israël chefich buez ha kaoud ar pardon euz ar pehejou; -32- test om a gement-se, ni hag ar Spered Santel roet gand Doue d'ar re a zent outañ.» -33- Fuloret o kleved kement-se, e soñjent o lakaad d'ar maro.

-34- Neuze e savas er Huzul-meur eur Farizian anvet Gamaliel, doktor war al Lezenn ha den a vrud vad e-touez ar bobl a-bez. Ober a reas kas er mêz, evid eur pennadig, ar re a oa tamallet hag e tisklerias: «Israëlite, taolit evez mad ouz ar pez emaoh o vond da ober d'an dud-se; -36- Nevez 'zo e savas Teudas, gwaz e oa war e veno, dastumet e-noa en-dro dezañ eur pevar hant den bennag; eñ, e-unan, a zo bet lazet hag ar re oll a oa eet d'e heul a zo eet a-gleiz hag a zéhou ha n'eus chomet netra war e lerh. -37- Goude-ze e savas Judas ar Galilean da vare an niveredigez hag e sachas eur bern tud de heul. Eñ iveau a zo tremenet hag ar re oll o-doa. heuliet anezañ a zo eet peb hini en e roud. -38- Neuze eta, m'henn lavar deoh, na vezit ket mui chalet gand an dud-se, lezit anezo da vond. Ma teu o menoz pe o hefridi a-berz an dud, e vo diskaret; -39- ma teu a-berz Doue, n'helloh ket o diskar. Diwallit da veza o stourm eneb Doue.» A-du ez ejont gantañ.

-40- Gelver a rejont a-nevez an ebrestel ha goude beza o skourjezet ha kemennet dezo chom heb lavared ano Jezuz, e oent lezet da vond. -41- An ebrestel a oe laouen o kuitaad ar Huzul-meur, da veza bet kavet din da houzañ dismegan-sou ablamour d'an Ano. -42- Bemdez en templ koulz hag en tiez, ne baouezent da gelenn ha da embann kelou mad Jezuz Krist.

AR SEIZ AVIELER

VI -1- En deiziou-se e kreske niver an diskibien hag e hrosmole ar Hresianed a-eneb an Hebreed, ablavour ma veze greet nebeutoh a stad ouz o intañvezed er zervich pemdezieg. -2- An daouezeg a halvas an diskibien d'eur vodadenn veur hag a lavaras dezo: «N'eo ket deread deom dilezel komz Doue evid servicha ouz taol; -3- klaskit kentoh en ho touez, breudeur, seized den brudet mad, leun a Spered Santel hag a furnez, ha ni a fizio enno ar garg-se. -4- Ni, diouz on tu, en em uestlo d'ar bedenn ha da zervich ar brezegèrèz..»

-5- Kement-se a oe kavet mad gand an oll, hag e oe dibabet Stevan, eun den leun a feiz hag euz ar Spered Santel, Filip, Prokor, Nikanor, Timon, Parmenas, ha Nicolas, eur prozelit euz Antiochia. -6- Degaset e oent dirag an ebrestel a asten-nas warno o daouarn en eur bedi. -7- Kreski a ree komz Doue ha niveruz kenañ e teue da veza an diskibien e Jeruzalem; ar veleien, eun niver braz anezo, a zu-je d'ar feiz.

-8- Stevan, leun a hraz hag a halloud, a ree burzudou ha sinou souezuz e-touez an dud. -9- War gement-se, tud euz eur zinagog anvet ar «Frankized», gand Sireneaniz hag Aleksandriz, tud euz ar Silisia hag euz an Azia a zeuas da dabutal gand Stevan. -10- Ha peogwir n'helltent ket stourm ouz ar furnez hag ar spred. -11- a oa en e gomzou, e touelljont tud da lavared : «Klevet on-eus anezañ o lavared komzou disakr a-eneb Moïzez hag a-eneb Doue.» -12- Isa a rejont ar bobl, ar gozidi hag ar skribed ha kregi e Stevan dre laer evid e gas dirag ar Huzul-meur. -13- Eno e oe degaset testou faoz: «An den-mañ, emezo, ne ra nemed komz a-eneb d'al Leh santel ha d'al Lezenn. -14- E gwirionez, e glevet on-eus o lavared e vefe gand ar Jezuz-se, an Nazarean, diskaret al Leh santel, cheñchet al lezennou roet deom gand Moïzez.» -15- Ar re oll a oa er Huzul-meur a zelle piz outañ hag a welas e zremm evel dremm eun êl.

PREZEGENN STEVAN

VII -1- Ar beleg-braz a houlennas outañ : «Ha gwir eo kement-se?» -2- Stévan a respontas :« Breudeur ha tadou, selaouit: an Doue a hloar a en em ziskouezas d'on tad Abraham en amzer m'edo e bro Mezopotamia araog dont da jom da Haran; -3- hag e lavaras dezañ: «Dilez da vro ha da famill ha kee d'ar vro a ziskouezin dit». -4- Neuze e kuiteas Abraham bro ar Haldeaned hag e teuas da jom da Haran. Ahano, goude maro e dad, Doue a lakeas anezañ da zond d'ar vro-mañ, el leh m'emaoh-c'hwi o chom bremañ. -5- Ne roas herez ebed dezañ er vro-mañ, na zoken an disterra tamm douar; roet e-noa dezañ ar bromesa e vefe ar vro dezañ ha d'e vugale war e lerh, daoust n'e-noa ket Abraham a vugale; -6- hag e komzas Doue evel-henn: «Tud e lignez a vevo war eun douar estren, lakeet e vezint da sklaved ha gwallgaset e-pad pevar hant vloaz. -7- Ar vroad hag hedo greet sklaved anezo, me, eme Doue, he barno. Goudeze ez aint kuit

hag eh adorint ahanon amañ. -8- Emgleo an amdroh a oe roet dezo; setu perag Abraham, deuet da veza tad da Izaag a amdrohas anezañ d'an eizved devez goude e hanedigez; Izaag, d'e dro, a reas kemend-all da Jakob, ha Jakob d'an daouzeg tad-meur.

-9- On tadou-meur, dre warizi outañ, a werzas Josef evid e gas d'an Ejipt. Med Doue a oa gantañ. -10- E denna a reas euz peb dienez, gras ha furnez a roas dezañ dirag Faraon; roue an Ejipt a lakeas anezañ da houarnour war an Ejipt ha war e diegez a-bez. -11- Hogen, naonegez a c'hoarvezas dre vro Ejipt a-bez hag e bro Kanaan. Braz e oe an dienez ha n'helle mui on tadou pourvei d'o ezommou: ne gavent ket a voued. -12- O veza klevet ez oa ed en Ejipt, Jakob a gasas on tadou di evid eur wech kenta; -13- d'an eilved gwech, Josef a roas da anaoud d'e vreudeur piou e oa, hag e ouenn a oe diskleriet d'ar Faraon. -14- Josef a lakeas neuze mond da gerhad Jakob, e dad, hag ar gerentiez a-bez, pemzeg ha tri-ugent a oa anezo. -15- Diskenn a reas Jakob d'an Ejipt, mervel a reas eno, hag on tadou iveau. -16- Kaset e oent da Zichem ha lakeet er bez e-noa prenet Abraham gand arhant digand bugale Emmor, tad Sichem.

-17- O veza ma tostee ar mare da zeveni ar bromesa touet gand Doue da Abraham, ez eas muioh-mui war gresk ar bobl, en Ejipt. -18- Beteg ma teuas en Ejipt eur roue all ha n'e-noa ket anavezet Josef. -19- Dre drubardèrez ar roue-se a glaskas trabas ouz tud or gouenn. Kement e-noa troet e venoz ouz om tadou ma 'z eas beteg ober dezo lakaad er-mêz ar vugale nevez ganet evid mired outo da jom beo. -20- D'ar mare-se eo e oe ganet Moizez, koant e qa dirag Doue. Epad tri Miz e oe savet e ti e dad. -21- Ha pa oe dilezet er mêz, merh Faraon a gemeras anezañ en he zi evel ma vije bet mab dezi. -22- Desket e oe da Voizez oll skianchou an Ejipsianed. Gallouduz e oa en e gomzou hag en e oberou.

-23- Pa oe deuet d'e zaou ugant vloaz echu, e savas c'hoant gantañ da vond da weled e vreudeur, an Israelites. -24- Hag o weled unan anezo gwallgaset, ez eas d'e zivenn, hag evid venji e vreur gwallgaset e skoas gand an Ejipsiad. -25- Soñjal a ree dezañ rei da intent d'e vreudeur eo dre e zorn eo e teue Doue da zavtei anezo; med ne gomprenjont ket. -26- Antronoz e oe gwelet o klask lakaad ar peoh etre tud a oa oh en em ganna: «Mignoned, emezañ dezo, c'hwi a zo breudeur, perag ober droug an eil d'egile?» -27- Med an hini a wallgase e vreur a zistokas Moizez evel-henn: «Piou e-neus da lakeed da vestr ha da varner war-nom? -28- C'hoant az-peus d'am laza evel m'az-peus lazet deh an Ejipsiad?» -29- War gement-se e tehas Moizez kuit, d'en em denna d'eur vro estren, e bro Vadian hag eno e oe ganet dezañ daou vab.

-30- Daou ugant vloaz goudeze e paras eun êl dirazañ, e flamm eur vodenn entanet, e goueleh ar menez Sinal. -31- Moizez, souezet o weled kement-se a glaskas tostaad da zelled. An Aotrou a roas da gleved e vouez: -32- «Doue da dadou on-me, Doue Abraham, Izaag ha Jakob.» Krena ree Moizez euz e oll izili, ken na grede mui sellec. -33- Neuze e lavar dezañ an Aotrou : «Tenn da zan-

dalennou euz da dreid, douar santel eo al leh m'emaout; --34- ya, gwelet mad am-eus reuz va fobl en Ejipt, klevet am-eus o hlemm. Diskennet on evid he frankiza. Ha bremañ deus, ma kasin ahanout d'an Ejipt.»

-35- Moizez, eñ, an hini o-doa distaolet dre ar homzou-mañ : piou e-neus da lakeet da vestr ha da varner? Eñ, end-eeun eo a oe kaset gand Doue evid beza o mestr hag o frankiza dre zikour an êl a baras dirazañ er vodenn. -36- Eñ eo e-noa greet dezo kuitaad an Ejipt dre ar burzudou ha sinou greet e bro Ejipt, er mor ruz hag er goueleh epad daou ugent vloaz. -37- Eñ, Moizez, eo e-neus lavaret d'an Israelited : «Doue a lakaio da zevel evidoh euz a-douez ho preudeur eur profed eveldon-me; -38- eñ a oae-doug ar vodadenn er goueleh,gand ho tadou hag an êl a gomze outañ war ar menez Sinai. Eñ eo a resevas komzou a vu-evid o rei deom. -39- On tadou avad ne falvezas ket dezo senti outañ, e gas a rejont diwar o zro ha dre o spered e tistrojont d'an Ejipt, -40- rag lavared a rejont da Aaron: «Gra deom doueou da vale en or penn, rag Moizez, eñ hag e-neus greet deom kuitaad an Ejipt, n'ouzom ket petra eo deuet da veza.» -41- Ober a rejont eul leue, en deiziou-se, ha kinnig eur zakrifis d'ar fals-doueou-se, hag e oe greet laouen gouel braz en enor da oberenn o daouarn. -42- Neuze Doue, d'e dro, o lezas d'en em rei da azeuli strollad an neñvou, evel m'eo skrijet e levr ar brofeded: «daoust ha kinniget ho-peus din anevedal epad daou ugent vloaz er goueleh? Douget ho-peus telennou Molok ha steredenn ho Toue Refan, skeudennou greet ganeoh evid o azeuli. Setu perag me ho harluo en tu all da Vabilon. -44- On tadou, er goueleh, o-doa telenn an test: an hini a gomze ouz Moizez e-noa gourhemennet sevel anezi diwar skouer an Hini e-noa gwelet.

-45- Goude beza resevet anezi, on tadou, renet gand Jozue, he degasas er vro gounezet war ar bayaned kaset kuit gand Doue en e raog hag e chomas eno beteg amzer David. -46- Hemañ a blijas da Zoue hag a glaskas kaoud eun demeurañs da Zoue Jakob. -47- Med Salomon eo a zavas eun ti dezañ. -48- Ha koulskoude ne vez ket an «Uhel-Meurbed» o chom e tiez savet gand an dud. Evel a lavar ar profed: -49- «An neñv a zo va zron d'in, hag an douar eur skabell dindan va Reid. Peseurt ti emaoch o vond da zevel d'in, eme an Aotrou, hag e peleh e hellin diskuiza? -50- Daoust ha n'eo ket va torn eo e-neus krouet peb tra?» -51- Pennou kalet, diamdroh a galon hag a skouarn, dallmad oh e-nebi ouz ar Spered Santel. Par d'ho tadou oh, c'hwi iveau.»

-52- Pehini euz ar brofeded n'eo ket bet gwallgaset gand ho tadou? Lazet o-deus zoken ar re a roe da anaoud en araog donedigez an Hini Just, an hini, end-eeun, oh bet trubard ha muntrer en e gefîver. -53- C'hwi hag a zo bet embannet deoh al Lezenn dre urz an Elez, n'ho-peus ket heuliet anezi.

STEVAN LABEZET

-54- O kleved kement-se, e skrije o halonou hag o dent a skrigne a-eneb Stevan;

-55- med eñ, karget euz ar Spered Santel, o trei e zaoulagad war-zu an neñv,

a welas gloar Doue ha Jezuz en e zav en tu dehou da Zoue. -56- «Setu, emezañ ma welan digor an neñvou, ha Mab an den en e zav en tu dehou da Zoue.» -57- Youhal a-bouez-penn a rejont en eur stouva o diskouarn, hag e sailljont warnañ oll asamblez. -58- Sacha a rejont anezañ er meñ euz kér ha staga d'e labeza. An testou q-doa lakeet o dillac e-harz treid eur pôtr yaouank anvet Saul. -59- E-pad m'edont ouz e labeza e ree Stevan ar bedenn-mañ: «Aotrou Jezuz, digemer va spered.» -60- Neuze e plegas zaoulin hag e youhas forz : «Aotrou, na damall ket dezo et pehed-mañ.» Ha neuze e kouskas er maro.

VIII -1- Paol, eñ, a oe a-du ganto evid e laza.

AR GRISTENIEN HESKINET

En deiz-se, end-eeun, e tarzas a-eneb Iliz Jeruzalem eur gwall heskineréz. An oll, nemed an ebrestel, en em strewas e méziou bro Judea ha bro Samaria. -2- Tud devod a zebelias Stevan hag a reas kañv braz dezañ. -3- Saul, eñ avad, a zraste an Iliz. Mond a ree en tiez ha sacha er méz gwazed ha merhed evid o zeurel er prizon. -4- Ar re eta a oa en em dennet kuit a yeas amañ hag ahont en eur embann kelou mad ar Gomz.

KOMZ DOUE E BRO SAMARIA

-5- Hag evel-se Filip, diskennet en eur gêr euz bro Samaria, a embanne eno ar Hrist. -6- Eur bobl tud, oll a-unan, a grede ar pez a lavare Filip, pa glevent anezañ o komz ha pa welent anezañ oh ober burzudou. -7- Kalz a sperejou hudur, en eur youhal fôrz, a dehe kuit euz an dud a oa en o dalh, ha kalz a dud seized pe ampechet a gavas ar pare. -8- Braz e oe al levenez er gér-se.

-9- Hogen, bez 'e oa dija e kér eun den anvet Simon, strobineller euz e vicher. Touella a ree pobl Samaria. Den e oa, war e veno, -10- hag oll, bian ha braz, a fizie ennañ: «An den , emezo, a zo galloud Doue, an hini a anver braz.» -11- Ma kendalhent evel-se da fizioud ennañ eo en abeg ma vezent pell a oa touellet gand e strobinellou. -12- Med pa oent deuet da gredi e Filip a roe dezo da anaoud ar Helou-mad euz Rouantélez Doue hag euz ano Jezuz, e resevijont ar vadeziant, gwazed ha merhed. -13- Simon, end-eeun, a zeugas ive da gredi, badezet e oe hag e talhe tost da Filip, ken estlammet e oa gand ar sinou hag ar burzudou a wele ober.

-14- An ebrestel chomet e Jeruzalem, o veza klevet he-doa iveau bro Samaria degejet Komz Doue, a gasas dezo Pèr ha Yann. -15- Pa oent diskennet eno, ar remañ a bedas evid ar Samaritaned, evid ma resevijent ar Spered Santel, -16- rag n'oa ket kouezet ar Spered Santel war hini ebed anezo. N'o-doa resevet nemed ar vadeziant en ano Jezuz. -17- Astenn a reas eta Pèr ha Yann o dorm warno hag e reseve ar Samaritaned ar Spered Santel.

-18- Simon avad, pa welas an ebrestel o rei ar Spered Santel oh astenn o daouarn, a ginnigas dezo arhant : -19- «Roit 'ta din, emezañ dezo, din-me iveau, ar halloud-se evid ma resevo ar Spered Santel ar re oll a astennin va daouarn war-no.» -20- «Ra 'z ay da arhant da fall, eme Bèr dezañ, ha te da heul, evid beza

soñjet dit e hellfed prena gand arhant donezon Doue.» -21- N'eus na lod, nag hîrez evidout e kement a dremen amañ, rag n'eo ket eeun da galon dirag Doue. -22- Bez keuz eta d'az fallagriez ha ped an Aotrou, ha marteze e vo pardonet dit ar zoñj a zo savet en da galon. -23- Rag gweled a ran ez out c'hvero-bestl ha liammet er fallagriez.» -24- «Pedit, c'hwi hoh-unan evidon, eme Simon, ma ne zegouezo ket ganin, netra euz ar pez ho-peus lavaret.»

-25- Ha neuze e tistroas Pèr ha Yann da Jeruzalem, roet ganto testeni, hag iveauz roet da anaoud komz an Aotrou, en eur embann ar Helou mad da veur a gêriadeenn euz bro Samaria.

FILIP HAG AR SPAZARD ETIOPIAD

-26- Eun êl d'an Aotrou a lavaras: da Filip: « Sav ha kerz warzu ar hreisteiz, dre an hent a ziskenn euz Jerusalem da vro Gaza; n'euz den warnañ. -27- Ha kerkent ez eas Filip an hent; ha setu m'edo o tond eur spazard Etiopiad, den a renk uhel euz tud Kandas, rouanez an Etiopia, merour-meur war he zeñzor. E perhiringa oa bet e Jeruzalem; -28- hag e tistroe d'ar gêr; azezet en e garr, edo o lenn ar profed Izaiaz. -29- «Tosta, eme ar Spered da Filip, da dizoud ar harr-se.» -30- Filip a redas beteg ar harr; kleved a reas ar spazard o lenn ar profed Izaiaz, hag e lavaras dezañ: «Ha kompreñ mad a rez ar pez a lennez?» -31- «Ha penaõz e rafen, ma n'eus den d'am sklerijenna?» Hag e pedas Filip da azeza en e gichenn. -32- O lenn edo ar pennad-mañ euz ar Skritur-zakr : «Heñvel ouz eun dañvad kaset da veza lazet; heñvel ouz eun oan mud dirag an hini a zo ouz e douza, evel-se iveauz ne zigor ket e henou. -33- Dre an izel ma oa, eo bet nahet outañ peb justis. E lignez, piou a gonto anezi? Rag dilamet eo bet e vuez diwar an douar.»

-34- Lavaret a reas ar spazard da Filip : «Mar plij, euz piou e komz evel-se ar profed? Diwarbennañ e-unan, pe diwarbenn unan all bennag?» -35- Filip a gomzas, ha diwar al lennadenn-se e roas dezañ da anaoud kelou mad Jezuz.

-36- O vond gand an hent e tegouezjont war eur poull dour. «Sell, eme ar spazard, amañ ez eus dour; petra virfe ouzin da veza badezet?» (37) -38- Urz a rôas da jom a-zav gand ar harr; o-daou e tiskennjont en dour, Filip hag ar spazard, ha Filip a vadezas anezañ. -39- Pa oent deuet er mêz euz an dour, Filip a oe tennet kuit gand Spered an Aotrou hag ar spazard ne welas mui anezañ, med kendelher a reas laouen gand e hent. -40- Filip, avad, en em gavas e Azot, hag ahano, en eur embann ar Helou mad dre gément kér ma 'z ee; e tegouezas e Sezarea.

SAUL GALVET GAND DOUE

IX -1- Saul, ha ne zoñje dalhmad nemed e gourdrouz ha lazèrèz e-keñver disbibien an Aotrou, -2- a yeas da houlenn digand ar beleg braz liziri evid ar sinagogou e Damas.

-3- Hag o veza m'edo o vond gand e hent, e tostee ouz Damas; en eun taol, e skedas en-dro dezañ eur sklerijenn deuet euz an neñv. -4- Koueza 'reas d'an

douar hag e klevas eur vouez o lavared dezañ : «Saul, Saul, perag va heskina?» -5- «Piou out-te, Aotrou, emezañ?» -«Jezuz on, an hini a heskinez, -6- med, sav en da zav, kee e kér, hag e vo lavaret dit petra da ober.» -7- Ar wazed a ree hent gantañ a oa chomet a-zav, dilavar gand ar spont. Klevet a reent ar vouez, med ne welent den ebed. -8- Saul a zavas en e zav diwar an douar; daoust ma oa digor braz e zaoulagad, ne wele mui netra ebed, hag e oe red rei an dorn dezañ evit antreal e Damas. -9- E-pad tri devez e chomas dall, heb eva na debri tamm.

-10- Bez' ez oa e Damas eun diskibl anvet Ananias. Doue, dre eur weledigez a halvas anezañ : «Ananias!» -«Setu me, Aotrou, emezañ.» -11- Hag an Aotrou adarre: «Sav ha kerz, emezañ, d'ar ru anvet «Ru eeun» hag e ti Judas, goulenn war-lerh eun den euz Tarz. -12- anvet Saul, rag o pedi ema hag o paouez gweled eun den anvet Ananias o tond davaet hag oh astenn e zaouarn evid renta dezañ ar gweled.» -13- «Aotrou, eme Ananias, klevet am-eus kalz tud o komz diwarbenn an den-se hag o lavared pegement a zroug e-neus greet d'az sent e Jeruzalem, -14- hag amañ e-neus peb galloud a-berz ar veleien vraz evit chadenna kement hini a en em erbed ouzit.» -15- «Kee, eme dezañ an Aotrou, rag an den-se a zo eur bafiveg dibabet ganin evid kas va hano dirag ar bayaned, ar rouaned ha bugale Israël, -16- rag me va-unan a ziskouezo dezañ kement e-no da houzañ en abeg d'am ano.» -17- Ananias a yeas, antreal a reas en ti hag astenn e zaouarn warañ : «Saul, va breur, emezañ, an Aotrou eo am dégas, Jezuz, eñ, an hini e-noa en em ziskouezet dit war an hent edos o tond gantañ, -evid ma kavi a-nevez ar gweled ha ma vezi karget euz ar Spered Santel.» -18- Evel kohennou a gouezas raktal euz e zaoulagad hag a-nevez e teuas dezañ ar gweled. Reseo a reas ar vadeziant. -19- Hag o veza debret, e teuas nerz dezañ.

PREZEGEREZ SAUL E DAMAS

Tremen a reas eur pennad amzer gand diskibien euz Damas. -20- Heb dale mui-oh, eh embannas er zinagogou eo Jezuz Mab Doue. -21- Souezet e chome ar re oll a gleve anezañ ha lavared a reent: «Ha n'eo ket eñ eo a oa en e wasa, e Jeruzalem, a-eneb ar re a bede an ano-se? Daoust ha n'oa ket deuet amañ netra nemed evid o has chadennet dirag ar veleien vraz.» -22- Med kreski a ree muioh-mui levezon Saul ha lakaad a ree ar Juzevien da devel e Damas, pa ziskouezo sklér oa Jezuz ar Mesias. -23- Goude eur pennad mad a amzer eo e teuas ar Juzevien d'en em gleved, evid e lakaad d'ar maro. -24- Saul avad a glevas ano a gement-se. Mond a reent beteg diwall doriou kér, noz-deiz, evid kaoud tro d'e laza. -25- Med eun nozvez, e ziskibien a gemeras anezañ hag e ziskennas en eur baner a-hed mogeriou kér.

SAUL E JERUZALEM

-26- Pa oe erruet e Jeruzalem, Saul a glaske darempredi an diskibien; med aon o-doa oll razañ, rag n'hellent ket dont da gredi e oa eñ eun diskibl. -27- Neuze Barnabas a gemeras anezañ gantañ, hag e gasas da gavoud an ebestel; displega 'reas dezo e-noa, war an hent, gwelet an Aotrou, e-noa hemañ komzet outañ, e-noa e Damas prezeget gand hardisegez en ano Jezuz. --28- Azaleg neuze, Paol a zaremprede anezo, ha ganto e kerze dre gér Jeruzalem. Hardiz e prezeg dirag an oll, en ano an Aotrou. -29- Divizoud a ree iveau gand Juzevien hag a

gomze Gresianeg hag tabutal ganto, med ar re-mañ a glaske e lakaad d'ar maro. -30- Ar vreudeur, o veza klevet kement-se, a ambrougas anezañ beteg Sezarea hag ahano a lakeas anezañ da vond da Darz.

-31- An Iliz, dre ar Judea, ar Halilea ha bro Samaria a-bez, a oa eta e peoh; kreski ha kerzed a ree muioh-mui en doujañs euz a Zoue, gand sikour ar Specred Santel.

PAREANS ENEAZ

-32- Pèr hag a veze dalhmad o vond hag o tond, a ziskennas ive e-touez ar zent e Lidda. -33- Kavoud a reas eno eun den anvet Eneas astennet war eur hravas abaoe eiz vloaz; seiset e oa. -34- «Eneas, a lavaras Pèr dezañ, Jezuz Krist a ro dit ar pare; sav ha gra da unan da wele.» ha kerkent e savas. -35- O veza gwelet anezañ, ar re oll a oa o chom e Lidda hag e plenenn Saron a droas gand an Aotrou. -36- Bez 'e oa e-touez diskibien Joppe, eur vaouez anvet Tabita (Dorkas e Gresianeg) da lavared eo heizezig; kalz oberou mad a ree ha mad oa da ober an aluzenn.

-37- Ha setu ma kouezas klañv d'ar mare-se hag e varvas. Gwalhet e oe dezi e horv ha savet d'ar gambr-uhel. -38- Hag o veza ma n'edo ket Lidda pell diouz Joppe, an diskibien, klevet ganto edo Pèr e Lidda, a gasas dezañ daou zen da lavared dezañ: «Deus beteg ennom dizale.» -39- Kerkent ez eas Pèr ganto. Pa oe degouezet e oe greet dezañ sevel d'ar gambr uhel; an oll intañvezed a oa eno o leñva. Diskouez a rejont an dillad, ar mantilli greet gand Dorkas pa oa beo. -40- Ober a reas Pèr dezo oll mond er mèz; hag eet war e zaoulin e pedas, ha goudeze, troet warzu ar horv e lavaras: «Tabita, sav!» Digeri a reas he daoulagad hag o weled Pèr e savas war he hoavez. -41- Astenn a reas dezi e zorn evid he zikour da zeval; gelver a reas ar zent hag an intañvezed hag e rentas anezi dezo beo. -42- Ar brud a gement-se a redas dre Joppe a-bez ha kalz a dud a gredas e Doue. -43- Chom a reas Pèr eur pennad brao e Joppe e ti eun den anvet Simon, kivijer a vicher.

KORNELI E SEZAREA

X -1- Bez e oa e Sezarea eun den anvet Korneli, kantener en eur gohortenn greet an «Italian» anezi; -2- eun den devod e oa, leun a zoujañs da Zoue, eñ hag e diegez a-bez; brokuz e veze e keñver ar Juzevien hag aketuz dalhmad da bedi Doue. -3- Eun deiz, wardro teir eur goude kreizteiz, e welas skler eun êl da Zoue o tond en e di, hag an êl a lavaras dezañ: «Korneli!» -4- Kroget ar spont ennañ, e zaoulagad o para war an êl, e respontas Korneli: «Petra 'zo, Aotrou?» -«Da bedennou ha da vadoberou a zo pignet beteg Doue evid m'e-no eñ, koun ahanout; -5- ha bremañ, kas tud da Joppe, da gerhad eun den anvet Simon, ha lesanvet Pèr; -6- o chom ema e ti eur Simon all, kivijer a vicher, a zo e di war ribl ar mor.» -7- Kerkent ha ma oe eet kuit an êl e-noa komizet outañ, Korneli a halvas daou euz e zervicherien hag unan euz e zoudarded, den devod anezañ, abaoe pell a oa dindannañ. -8- Konta 'reas dezo kement a oa c'hoarvezet, hag e kasas anezo da Joppe.

-9- Antronoz, endra m'edont-i en hent ha ma tosteent ouz kér, war-dro ar hreizteiz, Pèr a oa pignet war leur-doenn an ti da bedi. -10- Med naon a zéugas dezañ, ha c'hoant da zebri. O pourchas eur pred edod dezañ, pa zegouezas gantañ beza gourzavet. -11- Gweled a ra an neñv digor, hag eun dra, heñvel ouz eul liennenn vraz, o tiskenn war an douar, a-zistribill ouz he fevar horn, -12- enni an oll loened pevarzroadeg, hag ar re a stlej war an douar hag ar re a niñ en oabl; -13- hag e lavaras eur vouez dezañ: «Allo, Pèr, laz ha debr.» -14- «Biken, Aotrou, eme Bér, morse e-doug va buez n'am-eus debret netra hag a ve loudour pe zihlan.» -15- Med a-nevez, evid an eilved gwech, ar vouez a gomzas dezañ: «Ar pez, emezi, e-neus Doue glanneet, ne da ket, te, da lavared e ve di-hlan.» -16- Teir gwech e c'hoarvezas kement-se, ha raktal e oe savet al liennenn d'an neñv.

-17- N'oa ket deuet c'hoaz Pèr da intent petra oa ar weledigez e-noa bet, pa zegouezas dirag ar porz-rastell ar re e-noa kaset Korneli. Bet e oant amañ hag ahont o houlen e pe leh edo Simon o chom. -18- Staga 'rejont da grial evid gouzoud mad ha Simon, lesanvet Pèr a oa o chom en ti-ze. -19- Pèr a jome chalet gand ar pez e-noa gwelet. Med ar Spered a lavaras dezañ: «Tri den a zo aze ouz da glask.; -20- diskenn dioust, ha kerz en hent ganto, heb nehamant, rag me eo a zegas anezo.» -21- Diskenn a reas Pèr da gavoud an dud-se. «Setu, emezañ, me eo an hini a glaskit, da ober petra oh deuet?» -22- Respont a rejont: «Ar hantener Kornelii, eun den just ha leun a zoujañs ouz Doue, den a vrud vad e-touez un oll Juzevien, eun él santel e-neus lavaret dezañ la-kaad ahanout da zond d'e di, evid selaou ar pez az-peus da lavared.» -23- Neuze Pèr a roas digor dezo ha lojeiz evid an noz.

-24- Antronoz, end-eeun, ez eas en hent ganto, ambrouget gand hiniennou euz ar vreudeur a oa e Joppe. -25- D'an eil antronoz etegouezas e Sezarea, Korneli, diouz e du, a oa ouz o gortoz. Pedet e-noa da zond e gerentiez hag e wella mignonned. Pa zegouezas Pèr, ez eas Korneli en arbenn dezañ, gand doujañs ez eas d'an daoulin dirazañ evid e azeuli. -26- «Say en da zav», eme Bér dezañ, hag e sikouras anezañ da zevel, «me kennebeud n'on nemed eun den.» -27- Hag en eur gomz gantañ eh antreas; o weled neuze an niver braz a dud a oa, -28- e lavaras: «Gouzoud mad a rit eo eun torfed evid eur Juzeo darempredi eun den estren, ha pa ne ve nemed eur pennadig. Med din-me e-neus roet Doue da intent ne dleer ket diskleria den pe zen loudour pe zihlan. -29- Setu perag on deuet amañ dineh, p'ho-peus va galvet da zond. Med bremañ e karfen gouzoud perag ho-peus lavaret din dont.» -30- Respont a reas Korneli: «Tri devez a zo, d'ar mare-mañ end-eeuin, da deir eur goude kreisteiz, me a oa er gér o pedi, ha setu dirazon, en e zav, eun den gwisket gwenn kann; -31- hag e-neus lavaret din: Selaouet eo bet da bedenn, Korneli, ha da aluzennou a zo ar zoñj anezo dirag Doue; -32- kas eta unan bennag da Joppe evid pedi Simon lesanvet Pèr da zond amañ; o chom emañ war ribl ar mor e ti Simon ar hivijer. -33- Kerkent am-eus lakeet mond da gerhad ahanout hag ez-peus bet ar vadelez da zond. Bremañ eta ni a zo oll amañ dirazout evid selaou ar pez e-neus kemennet dit an Aotrou lavared deom.»

-34- Neuze e stagas Pèr da gaozealhag e lavaras: «e gwirionez, gweled a ran ne

ra ket Doue gwelloh da lod egéd da lod all, -35- e kément pobl a zo, an neb a zouj dezañ hag a heuill ar justis a zeu mad dezañ. -36- E Gomz e-neus kaset da dud Israel, kelou mad ar peoh deuet dre Jezuz Krist, eñ hag a zo Aotrou war an oll dud. -37- Gouzoud a rit petra c'hoarvezas dre vro Judea a-bez, warlerh bro Halilea, el leh m'edo d'ar penn kenta goude ar vadeziant prezeget gand Yann; -38- Jezuz, eñ, ginidig euz Nazared, c'hwi a oar e-neus Doue e zakret dre ar Spered Santel ha roet dezañ galloud. Tremen et e-neus en eur ober vad e peb leh hag o rei ar pare d'ar re oll a oa gwasket gand an droug-spered, rag Doue a oa gantañ. -39- Ni 'zo test euz kément e-neus greet e bro ar Juzevien hag e Jeruzalem; eñ, an hini o-deus lazet, o staga anezafñ ouz ar hoad, -40- Doue e-neus e zavet da veo d'an trede deiz, ha roet dezañ ar hrsas d'en em ziskouez, -41- n'eo ket d'ar bobl a-bez, med da destou bet dibabet en araog gand Doue: deom-ni hag on-eus debret hag evet asamblez gantañ, goude m'oa bet savet a-douez ar re varo. -42- Gourhemennet e-neus deom beza test hag embann kément-mañ: eñ eo e-neus Doue lakeet da varner war ar re veo hag ar re varo; -43- dezañ eo e ro an oll brofeded an testeni-mañ: dre e ano e resezo ar pardon euz e behejou kément hini a laka e feiz ennañ.» -44- Pèr a oa c'hoaz o tisplega kément a oa bet c'hoarvezet pa gouezaz ar Spered Santel war ar re oll o-doa selaouet ar Gomz.

-45- Sebezet e chomas an dud amdrohet a oa deuet da heul Pèr. Evel-se eta, beteg ar bayaned a ziskenne warno bremañ ar Spered Santel. -46- Klevet a reent an dud-se o komz e yeou all hag o kanveuli brazzer an Aotrou Doue. Pèr a gemeras adarre ar gomz: -47- «Daoust ha piou a hellfe mired na ve badezet en dour, ar re-mañ hag o-deus resevet ar Spered Santel eveldom-ni?» -48- Urz a roas d'o badezi en ano Jezuz Krist; hag int-i neuze a houennas digantañ chom c'hoaz eun nebeudig deveziou.

PER E JERUZALEM

XI -1- An ebrestel hag ar vreudeur a oa o chom e bro Judea a glevas lavared o-doa ar bayaned resevet d'o zro Komz Doue. -2- Pa bignas Pèr da Jeruzalem e savas tabut etre an dud amdrohet hag eñ. -3- «Eet out, emezo, e ti tud diamdrohet ha ganto az-peus debret.» -3- Neuze Pèr a stagas adarre da gonta dezo an traou penn-da-benn: -5- «Me a oa e kér Joppe o pedi, hag am-eus bet eur weledigez : evel eul liennenn vraz a-zistribill puz he fevar horn o tiskenn euz an neñv beteg ennon. -6- O para warni va daoulagad evid gweled petra oa, am-eus gwelet chatal pevarzroadeg, chatal gouez, ar re a stlej hag ar re a njij en oabl, -7- hag am-eus klevet eur vouez o lavared din: Allo, Pèr, laz ha debr.» -8- «Biken, Aotrou, emezon, morse em buez netra loudour pe zihlan n'eo bet eet em genou.» -9- Eur wech muioh, euz an neñv, e lavaras ar vouez: «Ar pez e-neus Doue glanneet, ne da ket, te, da lavared eo dihlaiñ.» -10- Teir gwech e tégouezas kément-se, hag e oe savet peb tra a-nevez d'an neñv.

-11- D'an ampoent, setu ma tégouezas tri den en ti ma edon, degaset davedon euz Sezarea. -12- Lavared a reas ar Spered din mond ganto heb nehi. Ar c'hweh breur-mañ a zeuas d'am heul hag ez om antreet e ti an den-se. -13- Konta 'reas deom penaor e-noa gwelet an él o tond en e di da lavared dezañ: «Kas unan

bennag da Joppe da gerhad Simon, lesanvet Pèr; -14- en a lavaro dit ar homzou a zegaso ar zilvidigez dit ha da oll dud da diegez.

-15- A-veh m'am-boa kemeret ar gaoz ma kouezas warno ar Spered Santel evel m'e-noa greet warnom-ni iveau er penn kenta. -16- Neuze e teuas din da zoñj ar pez e-noa lavaret an Aotrou: «Yann, emezañ, a vadezas en dour, med c'hwi a vo badezet er Spered Santel.» -17- Ha m'e-noa greet Doue dezo ken-koulz ha deom-ni, evid beza kredet en Aotrou Jezuz Krist, piou oan-me da helloud enebi ouz Doue?» -18- War gement-se e siouleas ar re a oa o selaou hag e rentjont gloar da Zoue. «Setu, emezo, m'e-neus Doue greet d'ar bayaned cheñch buez evid kaoud ar vuez.»

-19- Ar re a oa bet strewet, goude ar freuz savet diwarbenn Stevan, a oa eet beteg ar Fenisia, Chipr hag Antioquia, heb prezeg ar Gomz da zen ebed nemed d'ar Juzevien. -20- Lod anezo koulskoude, ginidig euz. Chipr pe Ziren, en em gavet e Antioquia, a brezegas d'ar Hresianed iveau Kelou mad Jezuz an Aotrou. -21- Skoazellet oant gand dorm an Aotrou, hag eun niver braz a dud a zeuas da gredi ha da drei a du gand an Aotrou.

-22- Ano a gement-se a zeuas beteg Iliz Jeruzalem hag e oe kaset Barnabas da Antioquia. -23- Pa zegouezas eno ha pa welas war al leh, al labour a ree gras Doue, e oe laouen hag e poanias warno da jom, a greiz kalon, fidel d'an Aotrou; -24- rag en e-unan a oa eun den leal, karget euz ar Spered Santel ha leun a feiz. Eun niver braz a dud a zeuas evel-se da gredi en Aotrou. -25- Mond a reas Barnabas goudeze da Dars da glask Saul. -26- E gavoud a reas hag e zegas da Antioquia. Chom a rejont eno da labourad asamblez epad bloaz penn-dabenn, ha da gelenn eun niver braz a dud. E kér Antioquia eo e oe roet evid ar wech kenta an ano a «Gristen» d'an diskibien.

-27- D'ar mare-se e teuas profeded euz Jeruzalem da Antioquia. -28- Unan anezo, anvet Agabus, sklerijennet gand ar Spered Santel, a roas da anaoud e tirollfe heb dale war ar bed eun naonegez vraz, ar pez a c'hoarvezas da amzer Glaoda. -29- An diskibien a zivizas neuze kas eur zikour, peb hini hervez ar pez e-noa, d'ar vreudeur a oa o chom e bro Judea. -3- Greet e oa kement-se; ar zikour a oe kaset, dre zaouarn Barnabas ha Saul, d'ar gozidi.

HESKINEREZ A-BERZ HERODEZ

XII -1- En amzér-se e teuas Herodez da heskina hinienou euz an Iliz. -2- Lakaad a reas dibenna Jakez, breur Yann. -3- O weled e plije an dra-ze d'ar Juzevien, e lakeas kregi iveau e Pèr. Kement-se a zegouezas e deiiziou ar bara-dihoeill. -4- Lakaad a reas kregi ennañ, e daoler er prizon, ha pevar rummad, a bevar zoudard peb hini, a oe lakeet d'o ziwall. En e zoñj edo degas anezañ dirag ar bobl goude goueliou Pask. -5- Pèr a oa eta er prizon. Med an Iliz ne ehane ket da bedi Doue evitañ.

-6- En noz araog ma tlee Herodez e zegas dirag ar bobl, Pèr, staget gand diou chadenn, a oa kousket etre daou zoudard ha gwardou a oa dirag an nor o tiwall ar prizon. -7- Ha setu, en eun taol, eh erruas él an Aotrou hag e oe an toull-bah karget a sklerijenn. An él, o skei Pèr en e gostez, a zihunas anezañ en eur la-

vared : «Sav buan!» Hag e kouezas ar chadennou euz e zaouarn. -8-«Lak da houriz ha da zandalennou», eme adarre an él; ar pez a reas. «Gwisk da vantell, emezañ, ha deus ganin». -9- Pèr a yeas er mèz d'e heul heb gouzoud e oa gwirion mad ar pez a oa greet gand an él. Kredi a ree dezañ kaoud eur weledigez. -10- Treuzi a rejont ar post-gward kenta, hag an eil, hag e tegouesjont dirag an nor-houarn a zigor war kér; anezi heh-unan e tigoras dirazo. Mond a rejont er-mèz, ha kerzed beteg penn ar ru hag en eun taol ez eas an él kuit dioutañ. -11- Neuze e teuas Pèr ennañ e-unan hag e lavaras : «En dro-mañ eh ouzom e-neus Doue degaset e él ha va zennet a-dre zaouarn Herodez hag euz kement edo ar Juvezien o hortoz.»

-12- Kavoud a reas e hent hag ez eas da di Vari, mamm da Yann, lesanvet Mark; meur a hini oa eno o pedi. -13- Pa skoas ouz an nor-dal, e teuas eur vatez yaouank, heh ano Rode, da zelaou. -14- Anaoud a reas mouez Pèr, ha dioustu, leun a joa, e-leh digeri an nor, e teuas d'ar red d'an ti da lavared edo Pèr er-mèz e toull an nor. -15- «Te 'zo sod», emezo oll, med hi a zalhe mort outo; «Neuze e él eo», emezo. -16- Med kendelher a ree Pèr da skei, ha digoret e oe dezañ pelloh. Souezet maro e oent. -17- Dre eur zin euz e zorn e reas dezo tevel, hag e kontas penaoz e-noa Doue lakeet anezañ da zond er-mèz euz ar pri-zon. «It, emezañ c'hoaz, da gas ar helou da Jakez ha d'ar vreudeur», ha goude-ze ez eas kuit evid mond d'eul leh all.

-18- Da houlou-deiz e oe trouz braz gand ar zoudarded : «Petra 'hellfe Pèr beza deuet da veza ?» -19- Herodez a reas ober enklask warnañ, med heb e gavoud. Gouleñnou a reas ouz ar gwardou hag e roas urz d'o lakaad d'ar maro. Goudeze e tiskennas da Zezarea hag e chomas eno eur pennadig.

-2- Eun dizemgleo kasaüz a oa etre Herodez ha tud Tyr ha Sidon. Ar re-mañ en-em glevas evid dont dirazañ. Sikouret gand Blastus, kambellan ar roue, a du ganto, e houleñnjont ar peoh, rag bevañs o bro a zeue euz hini ar roue. -21- D'an deiz merket, Herodez, gwisket gantañ e zillad a roue, a azezas war ar gador-varn, hag epad e brezegenn d'an dud, e youhe ar ré-mañ dezañ : «Mouez eun doue eo, ha n'eo ket hini eun den.» -23- Raktal e oe skoet gand eun él d'an Aotrou en abeg ma n'e-noa ket rentet gloar da Zoue. Mervel a reas, debret gand ar preñved. -24- War gresk ez ee Komz Doue, hag iveau niver ar gristenien. -25- Barnabas ha Saul, greet ganto o zervich, a zistroas euz Jeruzalem o tegas ganto Yann lesanvet Mark.

PAOL HA BARNABAS

XIII -1- An Iliz a oa e Antioquia a oa enni profeded ha keleñnerien: Barnabas, Simeon, lesanvet Niger, Lusius a Ziren, Manaen, breur mager da Herodez an tetrark, ha Saul. -2- Eun devez, endra m'edont gand lidou an Aotrou, hag o yun, e lavaras ar Spered Santel : «Lakit din a-gosteñ Barnabas ha Saul evid al labour am-eus da fizioud enno.» -3- Neuzé, goude beza pedet ha yunet hag astennet warno an daouarn, e lezjont anezo da vond. -4- Evel-se, o-daou, kaset e-giz misionerien gand ar Spered Santel, e tiskennjont e Seleusia hag ahano, dre vor, ez ejont da enez Chipr. -5- Pa oent degouezet e Salamina, eh em-

bannjont Komz Doue e sinagogou ar Juzevien. Yann a oa iveau asamblez ganto evid o skoazella.

-6- Treuzi a rejont an enezenn en he-fez beteg Pafos, hag e kavjont eur strobineller, profed war e veno, eur Juzeo e oa, Barjezus e ano, -7- unan euz an dud a veze o heulia ar prokonsul Serjius Paolus, hemañ eun den leun a furnez; pedi a reas Barnabas ha Saul da zond davetañ: c'hoant e-noa klevet komz Doue. -8- Med Elimas, ar strobineller, -evel-se e hell beza intentet e ano-, a enebbe outo hag a glaske distrei ar prokonsul diouz ar feiz. -9- Neuze Saul, pe gentoh Paol, karget euz ar Spered Santel, a droas warnañ e zaoulagad, -10- hag a lavaras dezañ: «Te, korvigellet ma 'z out ha leun a fallagriez, mab an diaoul, enebour touet d'ar justis, ne ehani ket eta da zistresa henchou e eün an Aotrou? -11- Ha bremañ, setu dorn Doue a zo warnout. Dall e vezi, hag e-pad eur pennad ne weli ket zoken an heol. » Kerkent e kouezas warnañ amhoulou ha teñvalijenn, hag e troe warnañ e-unan da glask unan bennag d'e vleina. -12- O vez a gwelet kement a oa c'hoarvezet, e teuas ar prokonsul d'ar feiz, ken estlammet eo bet gand kelennadurez an Aotrou.

-13- Paol hag e dud a lestrases e Pafos da baka Perge er Pamfilia. Neuze eo e kuiteas Yann anezo evid distrei da Jeruzalem. -14- Int-i, o tremen dre Bérje, a zegouezas e Antiochia ar Pisidia. Da zeiz ar zabad ez ejont d'ar zinagog hag eh azezjont. -15- Goude ma oe lennet al Lezenn hag ar brofeded, mistri ar zinagog a gemennas dezo: «Breudeur, m'ho-peus eun dra bennag da lavared d'ar bobl, evid e frealzi, deuit da gaozeal.» -16- Paol a zavas, a reas eur zin gand e zorn hag a lavaras:

«Tud Israël, emezañ, ha c'hwi, tud doujuz da Zoue, selaouit ahanon : -17- Doue or pobl Israël e-noa dibabet on tadou . Lakeet e-noa da greski niver an dud epad m'edont o veva e bro Ejipt, ha goudeze , dre nerz e vreh e-neus o zenet euz ar vro-se. -18- Epad daou ugent vloaz e-neus maget anezo er gouleñh. -19- Goudeze e-neus distruijet sez poblad e bro Kanaan ha roet o douarou da dud Izraël. -20- Kement-se oll a badas wardro pevar hant hanter kant vloaz. Goudeze e roas dezo barnerien beteg ar profed Samuel. -21- Neuze o-deus goulenet eur roue, ha Doue e-neus roet dezo Saül, mab Kis, eun den euz meuriad Benjamin, a renas epad daou ugent vloaz. -22- Goude bez a dilamet e gârg, digantañ, e roas Doue dezo David da roue, ha dezañ eo e-neus roet an testenemañ : «Kavet am-eus e David , mab da Jesse, eun den da blijoud din, hag a zento ouzin e peb tra..». -23- Eñ eo an hini e-noa Doue prometet dezañ e savje euz e lignez da Israël eur Zalver, Jezuz. -24- Araog e zonedigez, e-noa Yann embannet eur vadeziant a binijenn evid pobl Izraël a-bez, -25- ha pa edo warne echui e amzer e lavare: «N'on ket an hini a gred deoh e vefen. Med o tond war va lero'h emañ an hini n'on ket din da ziskoulma e zandalennou.»

-26- Va breudeur, c'hwi, bugale Abraham, hag ar re a zo en o touez, doujuz da Zoue, deom-ni eo bet roet ar helou-se a zilvidigez. -27- Tud Jeruzalem hag o mistri o-deus dianavezet Jezuz, hag o kondaoni anezañ, o-deus sevenet komzou ar brofeded a vez lennet beb sabad. -28- Heb beza kavet gwir abeg ebed evid e lakaad d'ar maro, o-deus goulenet digand Pilat lakaad laza anezañ. -29- Ha p'o-doa sevenet kement a oa bet skrivet diwar e benn, e tiskennjont

anezañ diouz ar hoad, d'e lakaad en eur bez. -30- Med Doue e-neus e adsavet a-douez ar re varo. -31- Hag epad meur a zevez e-neus en em ziskouezet d'ar re a oa pignet asamblez gantañ euz bro Halilea da Jeruzalem, int-i hag a zo bremañ testou dezañ dirag ar bobl.

-32- Ni iveau a zegas deoh ar Helou mad-mañ : ar bromesa greet d'on tadou, -33- e-neus Doue peursevenet evidom-ni o bugale, p'e-neus savet Jezuz a varo da veo, evel m'eo skrivet en eil salm: «Va mab out-te, me hirio am-eus da enge-hentet», -34- ha m'e-neus Doue e zavet a-douez ar re varo, ne zeuio ket ken da gouzeza er vreinadurez; an dra-ze end-eoun eo ar pez e-noa lavaret: «Me a roio deoh traou santel ha sur prometet da Zavid»; -35- ha setu perag en eul leh all e lavar: «Ne lezi ket da zervicher da houzañv ar vreinadurez». -36- Rag David, goude beza bet e doug e amzer servicher bolonteza Doue, a zo eet e kousk ar maro, lakeet eo bet e-kichenn e dadou, ha gwelet e-neus ar vreinadurez. -37- An hini avad e-neus Doue adsavet da veo, n'e-neus ket gwelet ar vreinadurez.

-38- Red eo deoh her gouzoud, breudeur, drezañ eo embannet deoh ar pardon euz ar pehejou, ya, euz an oll behejou ha ne heller ket beza justizet anezo dre Lezenn Voizez; -39- ennañ avad eo roet a-grenn ar justis da gement hini e-neus feiz. -40- Taolit evez eta na zegouezfe ganeoh ar pez a zo bet lavaret gand ar brofed : -41- «Sellit, c'hwi, an dud dicheg, bezit souezet ha tehit kuit, rag eun oberenn ez an da ober en hoh amzer na gredfeh ket enni ma vefe kontet deoh.» -42- Pa oent eet er mêz e teujod da bedi Paol ha Barnabas da gomz, da geñver ar zabad warlerh, diwar an traou-ze. -43- Pa oe eet an dud kuit, eun niver braz a Juzevien hag a brozelited azeulerien Doue, a yeas da ambroug Paol ha Barnabas, hag ar re-mañ, dre o homzou, a alie anezo da jom fi-del da hrs Doue.

-44- D'ar zabad warlerh, kér a-bez, koulz lavared, a zeuas da zelaou Komz an Aotrou. -45- O weloud ar bobl tud a oa, e fuloras ar Juzevien ha gwall responchou a rejont da gomzou Paol. -46- Hardiseet, Paol ha Barnabas a lavaras neuze: «Deoh-c'hwi da genta, eo e oa da veza kemennet Komz Doue, med peogwir ne fell ket deoh he degemeret ha ma kav deoh n'hoh ket din euz ar vuez peurbaduz, ni bremañ a dro war-zu ar bayaned. -47- Rag kement-se e-neus gourhemennet deom an Aotrou : «Da lakeet am-eus evid sklerijenna ar bobl, evid ma kasi ar zilvidigez beteg penn ar bed.» -48- Pa glevas ar bayaned kement-se, e oent laouen braz hag e rentent gloar da Gomz an Aotrou; dont a reas d'ar feiz ar re oll a oa merket evid ar vuez peurbaduz. -49- Evel-se Komz Doue en em skigne dre ar vro a-bez.

-50- Med ar Juzevien a atizas gwragez a renk uhel a adore Doue, hag iveau pen-nou-meur euz kér. Lakaad a rejont heskina Paol ha Barnabas, hag o has kuit euz o bro.

PAOL HA BARNABAS E IKONIUM

XIV -1- E Ikonium e tegouezas kemend-all : mond a reas Paol ha Barnabas da zinagog ar Juzevien. Ken mad e oe o homzou, ma teuas kalz da gredi,

Juzevien hag Gresianed. -2- Ar re avad euz ar Juzevien a oa chomet heb kredi a lakeas droukrañs da zevel e spered ar bayaned a-eneb ar vreudeur. -3- Koulskoude Paol ha Barnabas a jomas eno eur pennad. Hardiz e oant, rag an Aotrou a roe testeni, o lakaad anezo da ober, dre o daouarn, sinou ha burzudou.

-4- Disunvaniez a zavas etre tud kér, lod a oa a du gand ar Juzevien, lod all a du gand an ebrestel. -5- Payaned ha Juzevien a en em glevas gand o mistri evid gwällgas ha labeza an ebrestel. -6- Ar re-mañ, o weled penaoz ez ee an traou, a yeas da glask repu er hériou euz al Likaonia: Listr, Derbe, ha tro-war-dro. -7- Eno iveau eh embannent ar Helou-mad.

-8- E Listr e oa eun den ha n'helle ket chom war e dreid, ampechet ma 'z oa abaoe m'oa ganet, morse n'e-noa kerzet. -9- Eun deiz p'edo o selaou Paol o komz, hemañ a zellas mad outañ, hag o weled e-noa feiz da gaoud ar pare, -10- e savas e vouez da lavared: « Sav sonn war da dreid! » Lammed a reas an den, kerzed a ree.

-11- O weled ar pez edo Paol o paouez ober, mouzeiou e Likaoneg a zavas da lavared: « An doueou deuet da veza heñvel ouz tud a zo diskennet en on touez », -12- Barnabas a reent « Zeus » anezañ, hag « Hermes » euz Paol, peogwir eo eñ eo a veze o kaozeal. -13- Beleg an Doue « Zeus-rak-kér » a lakeas degas tirvi ha kurunennou dirag doriou kér, hag a-unan gand ar bobl, e felle dezañ kinnig eur zakrifis. -14- Pa glevjont kement-se, e rogas an ebrestel Paol ha Barnabas o mantilli hag ez ejont a-benn-herr d'an dud en eur grial: -15- « O! Oh ober petra emaoh aze? emezo; ni a zo tud tonket d'ar maro eveldoh. Ar Helou-mad a zegasom deoh eo ma tilezfeh ar zotonou-se evid trei ouz an Doue beo, krouer an neñv, an douar, ar mor ha kement a zo enno. -16- A-hed ar rummadou e-neuz lezet ar poblou payan da vond gand o hent o-unan, -17- heb paouez kouls-koude da rei testeni dezañ e-unan oh ober vad, o tegas deoh euz an neñv, glao-eier, amzer frouezuz; o rei deoh magadurez a-leiz-kov ha levenez a-leiz-kalon. » -18- A veh ma hellas ar homzou-se lakaad da zioulaad an dud, ha mired outo da ginnig eur zakrifis.

-19- Neuze e tégouezas Juzevien, o tond euz Antiochia hag Ikonium. Ar re-mañ a zégas an dud d'o menoz; labezet e oe Paol ha stlejet er mêz euz kér ha dilezet ganto, o soñjal ez oa maro. -20- Med pa oe bodet an diskibien en-dro dezañ, e savas hag eh antreas e kér. Antronoz gand Barnabas, ez eas da Zerbé. -21- Embannet o-doar Helou-mad e Derbé, ha greet eun niver braz a ziskibien, ha goude-ze e teujont war o hiz, dre Listr, Ikonium hag Antiochia. -22- Startaad a reent kalon an diskibien hag o alia a reent da zelher mad d'o feiz. « Red eo deom, emezo, gouzañv kalz trubuilou, evid antreal e rouantelez Doue. » -23- E peb Iliz o-doar astennet o daouarn war ar gozidi, ha goude beza pedet ha yu-net, o-doar fiziet anezo en Aotrou, an hini o-doar lakeet ennañ o feiz.

-24- Treuzi a reont neuze dre vro Pisidia evid mond da vro Pamfilia. -25- Goude beza prezeget ar Gomz e Perjé, e tiskennjont da Atalia. -26- ha mond goudeze dre vor da Antiochia, ahano eo e oant deuet, hag eno e oent bet fiziet e gras Doue evid al labour kaset bremañ da benn. -27- A veh degouezet, ha bodet

Eun novez, Paol e-noe eur weledigez: Dirazañ, en e zav, ez oa eur Makedoniaid hag a aspede anezañ: «Treuz d'ar Makedonia, deus war or zikour.» -10- Warlerh ar weledigez e-noa bet Paol, on-eus raktal klasket an tu da vond d'ar Makedonia, rag kredi stard a reem e-noa Doue or galvet da vond di da embann ar Helou mad.

-11- O veza lestret e Troas on-eus skoet war eeun da Zamotras, hag antronoz da Neapolis; -12- ahano ez om eet da Filip, brasa kér e oa e bro Makedonia, trevadenn roman. Chomet om eno eur pennad amzer. -13- Da zeiz ar zabad ez om eet er mèz euz kér, evid mond war ribl eur ster beteg eul leh a zoñje deom beza eul leh a bedenn. Eet war on azez, on-eus komzet ouz ar merhed a oa eno bodet. -14- Unan anezo anvet Lidia, eur varhadourez moug euz kér Tiatir hag a adore dija Doue, a zelaoue gand evez, rag an Aotrou e-noa digoret he halon evid ma vefe war evez ouz komzou Paol. -15- Pa oent bet badezet, hi ha tud he zi, e pedas ahanom evelhen: «peogwir ho-peus kredet am-eus feiz en Aotrou, deuit d'am zi da loja.» Red e oe deoom senti outi.

-16 Eun deiz m'edom o vond d'ar bedenn, eur vatez yaouank, e dalm eur spe red a zivinèrèz a zeusas en arbenin deom; dre he oraklou e houneze arhant braz d'he mistri. -17- Atao e veze war ol lerh, da Baol ha deoom-ni hag e youhe: «Ar wazed-mañ a zo servicherien d'an Doue uhel-meurbed, diskouez a reont deoh hent ar zilvidigez». -18- É-pad meur a zevez e reas evel-se. Hegaset ganti, a-benn ar fin, Paol a zistroas warzu enni hag a lavaras d'ar spered : «En ano Jezuz Krist, me a gemenn dit: deus er mèz euz ar vaouez-mañ». Ha raktal ez eas ar spered er mèz.

-19- He mistri avad, o weled o vond da fall ar fizian's o-doa da hounid arhant, a bakas peg e Paol hag e Silas, hag o hasas ganto war ar blasenn vraz dirag mistri braz kér. -20- Ha dirag ar bretored e lavarjont: «Ar wazed-mañ a zo o lakaad trouz en or hér, Juzevién int. -21- Alia 'reont heulia reolennou a vuez ha ne hellom ket, ni Romaned ma 'z om, na degemeret, nag heulia.» -22- Hag e tirollas ar bobl a-eneb dezo. Ar bretored a lakeas diframma o dillad diwarro hag o skourjeza. -23- Goude beza roet kalz taoliou dezo, e taoljont anezo er prizon. Greet e oe d'ar gwardou teurel evez outo. -24- Ha peogwir e-noa resevet an urz se, e taolas anezo en toull donna, o zreid stardet e pejou koad.

-25- Wardro hanter-noz, Paol ha Silas a oa o pedi hag o kana meuleudi da Zoue hag ar brizonidi all a oa ouz o zelaou. -26- A greiz toud e oe eur seurt kren douar, ma vrallas diazezou an ti-gward. Digeri a reas kerkent an oll dorojou ha terri liammou ar brizonidi. -27- O veza dihunet, ar gward a welas digor dorojou ar prizon, kavoud a ree dezañ oa teheth ar brizonidi. Tenna 'reas e gleze; o vond d'en em laza edo. -28- Med Paol a zavas e vouez da grial dezañ: «Na ra droug ebed dit da-unan, rag oll emaom amañ.» -29- Ar gward a houlennas goulou hag a yeas a-benn-herr en toull-bah, hag en eur grenad euz e oll izili, eh en em daolas e-harz treid Paol ha Silas. -30- O has a reas er mèz hag e houlennas outo: «Aotronez, petra am-eus da ober evid beza salvet?» -31- Respond a rejont dezañ: «Bez feiz en Aotrou Jezuz hag e vezi salvet, te ha da dud.» -32- Neuze e rojont da anaoud Komz Doue dezañ ha d'ar re all a oa o chom en e di. -33- D'an eur-ze, end-eeun, e-kreiz an noz, ar gward o hasas da walhi o

gouliou, ha goudeze, heb dale pelloh, e resevas ar vadeziant, eñ hag oll e dud.
 -34- Pedi a reas goudeze Paol ha Silas da vond d'e di; eur pred a bourchansas dezo, hag eñ hag e famill a oe laouen asamblez o veza kredet e Doue.

-35- Pa deus an deiz, ar bretored a gasas liktored da lavared d'ar gward: Laosk an dud-se da vond.» -36- Ar gward a roas kement-mañ da anaoud da Baol: «Ar bretored a gemenn din rei deoh ho frankiz; it eta er mêz ha kerzit e peoeh.»

-37- Paol avad a lavaras: «Lakeet o-deus or skourjeza dirag an oll heb barnedigez ebed, ni hag a zo sitoyan Rom, taolet o-deus ahanom er prizon, ha bremañ e fell dezo or has er mêz dre guz; n'ez aio ket an traou evel-se; n'o-deus nemed dont o-unan d'or frankiza.» -38- Al liktored a yeas da lavared kement-se d'ar bretored; ar re-mañ a grogas aon enno o kleved ez oant sitoyaned roman.

-39- Dond a rejont da houllenn beza didamallet; o frankiza a rejont, en eur bedi anezo da guitaad ar gér. -40- Pa oant deuet er mêz euz ar prizon, Paol ha Silas a yeas da Lidia; gweled a rejont ar vreudeur evid rei kalon dezo. Hag ez ejont adarre pelloh.

DIESTERIOU E SALONIKA

XVII -1- O veza tremenet dre Amfipolis hag Apollonia, e tegouezjont e Tesalonika, el leh m'o-doa ar Juzevien eur zinagog. -2- Evel m'oa boazet d'henn ober, Paol a yeas d'o havoud hag epad tri devez sabad diouz renk, e tivizas ganto; -3- o tisplega ar Skrituriou e tiskoueze e oa red d'ar Mesiaz gouzañv ha sevel a-douez ar re varo, «hag, emezañ, ar Mesiaz eo Jezuz, an hini end-eun a embannan deoh.» -4- Lod euz ar Juzevien a zeuas da gredi, desevet gand Paol ha Silas, hag eveldø ives kalz a Hresianed, prozelited hag eun niver braz a verhed a renk uel..

-5- Med ar Juzevien leun a gred, a zavas diwar plasennou kér, eur vandenn hailloned da lakaad trouz da zevel e-touez ar bobl, ha dizurz e kér. Mond a rejont neuze da di Jason, da glask Paol ha Silas, a felle dezo degas dirag ar bobl. -6- O veza ma n'o-doa ket o havet, e tegajont ganto Jason hag hiniennou euz ar vreudeur dirag ar bolitarked : «Amañ ema, emezo, en eur youhal forz, ar re o-deus lakeet freuz dre ar bed a-bez, -7- ha Jason e-neus roet degemer dezo; ar re-ze a ya oll a-eneb urziou an impalaer, lavared a reont ez eus eur roue all; Jezuz. -8- Strafuillet e oe ar bobl hag ives ar bolitarked o kleved kement-all, -9- hag e oe red da Jason ha d'ar re all rei kred dezo araog o lezel da vond kuit.

-10- Kerkent, e-kreiz an noz, e reas ar vreudeur dezo kuitaad evid mond da Bere. Pa oent degouezet ez ejont da zinagog ar Juzevien. -11- Ar re-mañ, sevennoh eged tud Tesalonika, a zegemeras ar Gomz gand kalz a volontez vad ha bemdez e sellent piz er Skrituriou evid gweled hag evel-se edo an traou e gwirionez. -12- Kalz anezo a zeuas da gredi hag ives Gresianezed a renk uhel hag eun nebeud mad a wazed. -13- Med kerkent ha ma klevas Juzevien Tesalonika edo Paol e Bere ives oh embann komz Doue, e tegouezjont evid lakaad freuz ha fourgas eno ives e-touez ar bobl. -14- Raktal ar vreudeur a lakeas Paol da vond kuit beteg ar mor, endra ma chome eno Silas ha Timote. -15- Ar re a oa oh ambroug

Paol a yeas beteg Atena ha goudeze e teujont en-dro gand urz da lavared da Zilas ha da Dimote dont beteg ennañ kenta ma hellfent.

- 16- E-pad m'edo Paol ouz o gortoz e Atena, e-noe eur galonad o weled ar gêr-se goustled d'ar fals-doueed.. -17- Divizoud a ree eta er zinagog gand ar Juzevien hag ar prozelited, ha bemdez, war al leur-gêr, gand ar re a zegouez gan-tañ.-18- Dond a ree zoken filozofed, epikourianed ha stoisioned da gaozeal gantañ. Lod a lavare , «Petra e-neus c'hoant da lavared ar chaoker-se ?», ha lod all :«Hennez a dle beza prezeger doueed estren». Paol, gwir eo, a brezeg Jezuz hag an adsao da veo. -19- Kroget e oe ennañ d'e gas dirag an «Areopaj» - «Ha gouzoud a hellfem, emezo, petra eo ar gelennadurez nevez a zisplegez ? -20- Rag hegaset om gand da gomzouz iskiz hag e fell deom eta gouzoud petra dalvezont?»-21- Red eo henn lavared : an oll dud euz Atena ha kement estren a oa o chom eno ne reent euz o amzer nemed konta pe zelaou ar heleier nevesa.
- 22- Paol, en e zav e-kreiz an Areopaj, a lavaras :«Atenis, emezañ, d'am zoñj din-me, c'hwi ho-peus, evel pa lavarfen, re a relijon. -23- Dre ma 'z an gand ruiou kér e welan ho savaduriou sakr, ha zoken eun aoter skrivet warnañ «d'an Doue dianav». An Doue a enorit eta heb e anaoud, me a zo o vond d'e gemenn deoh. -24- An Doue e-neus krouet ar bed ha kement a zo ennañ, eñ, mestr an neñv hag an douar, n'ema ket o chom e templouz savet gand an dud ; -25- Evid e zervich n'e-neus ket ezomm kennebeud euz daouarn tud, evel m'e-nefe ezomm euz tra pe dra, eñ hag a ro d'an oll buez, lusk hag an oll draou all. -26- Diwar eun den hebken e-neus krouet an oll bobblou, evid pobla an douar a-bez, merket e-neus dezo da be vare dont hag e peleh beva, -27- evid klaske Doue, ha martete zoken e hellfent e gavoud dre zastorn eñ ha n'ema ket e gwirionez pell diouz peb hini ahanom, -28 - rag ennañ on-eus bezafis, lusk ha buez, evel m'o-deus lavaret hiniennou euz ho parzed, rag ni a zo iveauz e ouenn dezaf. -29- Neuze 'ta, peogwir ez om euz gouenn Doue, ne dleom ket soñjal e vefe an douselez heñvel ouz aour, arhant pe varbr kizellet hervez ijin ha faltazi an den.
- 30- Ha Doue bremañ, heb delher kont euz an amzer ma oent dianaoudeg, a embann d'an dud o-deus oll hag e peb leh da jeñch buez. -31- Rag merket e-neus an deiz ma teuio da varn ar bed gand justis, dre an hini e-neus dibabet. An asur a gement-se e-neus roet d'an oll o sevel anezañ a-douez ar re varo. -32- O kleved ano euz adsao ar re varo, lod a reas goap, lod all a lavaras :«Ni da glevo war gement-se eun dro all bennag». -33- Evel-se eo e kuiteas Paol anezo. -34- Lod koulskoude a jomas gantañ hag a zeuas d'ar feiz, evel Denez an Areopajad, hag eur vaouez anvet Damaris, ha re all c'hoaz ganto.

DIAZEZADUR AR FEIZ E KER GORINT

XVIII -1- Pa guiteas Atena, Paol a yeas da Gorint. -2- Eno e tegouezas gand eur Juzeo anvet Akuila, ginidig euz ar Pont, hag e bried Prisilla, nevez deuet euz Rom, rag Glaoda e-noa kemennet d'an oll Juzevien o-doa da guitaad Rom. Paol o darempredas, -3- ha peogwir e-noa ar memez micher, - teltennerien e oant, - e teuas da jom ganto ha da labourad asamblez. 4- Da geñver peb sabad e tivize er zinagog hag e klaske degas d'ar feiz Juzevien ha Gresianed.

-5- Med pa oe degouezet Silas ha Timote, deuet euz ar Makedonia, Paol ne reas mui nemed prezeg o tiskleria fraez dirag ar Juzevien e oa Jezuz ar Mesiaz.
 -6- Med ar re-mañ a zislavare hag a valloze ha setu perag Paol a hejas e zillad hag a lavaras dezo :«Ra gouezo ho kwad war ho penn ! Direbech on, hiviziken ez in daved ar bayaned». -7- En eur vond kuit ez eas e ti eur prozelit anvet Titius Justus, a oa e di e-kichenn ar zinagog.-8- Krispus, rener ar zinagog, a gredas en Aotrou ha gantañ e oll dud ; hag eun niver braz a Gorintianed, o selaou Paol, a zeuas d'ar feiz hag a oe badezet. -9- Eun novez, en eur weledigez, an Aotrou a lavaras da Baol : «Bez dinéh, kendalh da brezeg, arabad dit tevel, -10- rag me a zo ganit, ha den na grogo ennout evid ober droug dit, rag eun niver braz a dud er gêr-mañ a zo galvet da veza din.» -11- Epad bloaz hanter e chomas Paol eno dalhmad o prezeg komz Doue.

PAOL DIRAG AR PROKONSUL GALLION

-12- D'ar mare m'edo Gallion prokonsul en Akaia, e savas an oll Juzevien a-eneb Paol, hag e tégasjont anezañ dirag al lez-varn : -13- «An den-mañ, emezo, a zegas an dud da zervicha Doue en eun doare ha n'eo ket hervez al Lezenn». -14- Paol a oa o vond da respont, pa lavaras Gallion d'ar Juzevien : «Ma vije bet ano euz eur gwall daol bennag, pe euz eun dra mezuz, am-befe degemeret ho klemm deoh, Juzevien, evel just. -15- Med peogwir e sav trouz etrezoh diwarbenn kellenadurez, geriou, diwar ho Lezenn deoh, an dra-ze a zell ouzoh. Ne fell ket din barn war draou evel-se. -16- Hag e kasas anezo er mêz euz al lez-varn. -17- Neuze e teuas an oll da gregi e Sosten, rener ar zinagog. Kanna 'rejont anezañ dirag al lez-varn. Gallion avad ne gemeras tamm perz ebed e kement-se. -18- Paol a jomas c'hoaz eur pennad mad a amzer e Korint ; goudeze e kuiteas ar vreudeur hag e kemeras al lestr evid mond d'ar Siria. Prisilla hag Akuila a oa asamblez gantañ. Eur gouestl e-noa greet ; setu perag e-noa lakeet touza e vleo e Sankrea.

PAOL DISTRO DA ANTIOKIA

-19- Degouezoud a rejont e Efez. Eno e kimiadas diouz e genvreudeur. Eñ avad a yeas d'ar zinagog hag e tivizas gand ar Juzevien. -20- Goulennet e oe digantañ chom pelloh ganto, med ne asantas ket. -21- O huitaad a reas en eur lavared dezo : «Distrei a rin c'hoaz davedoh, mar plij gand Doue». E Efez e lestras, -22- evid mond da zouara e Sezarea, pignad a reas da zaludi an Iliz hag e tiskennas da Antioquia, -23- el leh ma chomas eur pennad amzer. Goudeze ez eas adarre en hent hag e welas bro Galatia ha bro Frijia an eil goude eben evid kalonekaad an oll ziskibien. -24 - Eur Juzeo, anvet Apollos, ginidig euz Aleksandria, a oa degouezet e Efez ; eun den helavar e oa hâ gwizieg war ar Skrituriou. -25- Desket oa bet dezañ Hent an Aotrou, ha gand eur galon virvidig e prezege hag e kelenne heb fazi war gement a zelle ouz Jezuz, daoust ma ne anaveze nemed badeziant Yann. -26- Gant hardisegez e stagas da brezeg er zinagog med p'o-devoa e glevet, Prisilla hag Akuila a gemeras anezañ en e bart-e-unan evid diskouez dezañ sklerroh c'hoaz Hent Doue. -27- Hag o veza m'edo en e zonñ mond da

Akaia, ar pez a gavas mad ar vreudeur, ar re-mañ a skrivas d'an diskibien evid ma rafent eun degemer mad dezañ. Pa oe degouezet, e oe, dre hrsas Doue eur zi-kour vad evid an dud fidel, -28- rag galloud e lavariou a zeue a-benn euz ar Juzevien dirag an oll, pa zeue dre ar Skrituriou da ziskouez oa Jezuz ar Mesias.

DISKIBIEN YANN VADEZOUR E EFEZ

XIX -1- Epad m'edo Apollos e Korint eo e tégouezas Paol e Efez. Tremenet e-noa dre horre ar vro. Kavoud a reas eno eun nebeud diskibien, -2- hag e hou-lennas outo : «Ha resevet ho-peus ar Spered Santel pa oah deuet d'ar feiz ?» - «Med, emezo dezañ, n'on-eus ket klevet zoken ober ano euz Spered Santel.» -3- Goulenn a reas Paol ,«Peseurt badeziant ho-peus eta resevet ?» - «Badeziant Yann, emezo.» -4- Ha Paol adarre :«Eur vadéziant evid cheñch buez eo a roe Yann, eñ a houlenne digand ar bobl kredi en hini a zeufe war e lerh, da lavared eo e Jezuz.» -5- E zelaou a rejont, hag e oent badezet en ano an Aotrou Jezuz. -6- Astenn a reas Paol e zorn warno, hag ar Spered Santel a ziskennas warno. Staga rejont da gomz e yezou ha da brofedi . -7- Bez' ez oa anezo oll eun da-ouzeg gwaz bennag.

-8- Mond a reas Paol d'ar zinagog, hag epad tri miz, gand hardiségèz e tivizas di-warbenn Rouantèlez Doue. Dalhmad e veze o klask degas d'ar feiz ar re anezo a veze ouz e zelaou. -9- Hag o veza ma teue eun nebeud anezo da galeti ha ma choment diskredig ha ma'z eent beteg gwall-gomz euz an Hent dirag an dud, Paol o dilezas hag e kemeras e ziskibien en o fart-o-unan evid divizoud ganto bemdez e ti-skol Tirannos. -10- Daou vloavez e padas an traou evel-se, ken na hellas pobl an Azia a-bez, Juzevien ha Gredianed, kleved komz an Aotrou.

-11- Ober a ree Doue dre zaouarn Paol burzudou dibaod, -12- ken na veze ke-meret, evid o lakaad d'ar re glañv, mouchouerou ha lienajou o devoa stoket ouz e gorv. An dud-se neuze a gave ar pare, hag an droug sperezou a yee kuit. -13- Argaserien diaoulou, Juzeo, o vond hag o tond dre ar vro, a stagas, d'o zro, da hervel, war ar re o-doa droug sperezou, ano an Aotrou Jezuz. Lavared a reent «Me ho ped dre ar Jezuz-se embannet gand Paol.» -14- Seiz mab d'eur beleg Juzeo, anvet Seva, a glaske ober evel-se. -15- An droug spered a respontas dezo : «Jezuz, me anavez anezañ, goûd a ouzon piou eo Paol, med piou oh-c'hwi ?» -16- Hag e saillas warno ken feulz an den dalhet gand an droug spered ma reas e vestr dezo oll, ha ma rankjont tehet euz an ti en noaz ha goleet a houliou. -17- An oll dud, e kér Efez, Juzevien ha Gresianed, a glevas ano euz ar pez a oa c'hoarvezet, aon a groge enno oll, hag e oe meulet brazder an Aotrou Jezuz. -18- Kalz euz ar re o-devoa krebet a zeue da anzav a vouez uhel o zroiou fall. -19- Eun niver braz a dûd, en em roet d'an achantouriez, a reas eur bern gand o leoriou evid o devi dirag an oll. Pa oe greet ar gont e oe gwelet ez oa anezo talvoudégez hanter kant mil pez arhant. -20- Evel-se, dre halloud an Aotrou, e teue ar Gomz da greski ha da grênaad.

-21- Diwar gement-se Paol a zivizas, er Spered, mond da Jeruzalem o tremen dre ar Makedonia hag an Akaia. Lavared a ree : pa vezin bet du-ze, e vo red din c'hoaz mond da Rom. -22- Kas a reas d'ar Makedonia daou euz e škoazellerien, Timote hag Erast.Eñ a-vad,a jomas eur pennadig en Azia.

-23- D'ar mare-se eo e savas freuz braz awalh diwarbenn an Hent ; -24- rag eun orfebour, anvet Demetrius, a ree templou arhant da Artemiz, hag evel-se e lakee artizaned da gaoud gounidou braz. -25- Boda a reas an artizaned-se hag ar re o-doa eur vicher damheñvel, hag e lavaras : «Her gouzoud a rit, gwazed, mar de-maom en on éz eo ablamour d'al labour-se, -26- hogen, gweled a rit pe gleved, n'eo ket hebken e Efez, med dre goulz lavared an Azia a-bez, e teu ar Paol-se da lakaad esmae en eur bern tud, o rei dezo da gredi, evel ma lavar, n'eo ket doueou an doueou a zeu euz a dre on daouarn. -27- N'eo ket hebken or micher eo a zo e riskl da veza taolet diskred warni, med templ an doueoz vraz Artemiz a hellfe iveau bez a dilezet ha buan awalh diskaret euz ar renk uhel, azeulet ma 'z eo e-touez an dud oll a zo en Azia ha dre ar bed a-bez». -28- Ar homizou-se a lakeas an dud da fulori ha ne ehanent ket da youhal : «Braz eo Artemiz Efez !» -29- Ar freuz en em skignas dre gér a-bez, hag an dud a yeas diwar-herr, ha ni-veruz kenañ d'an teatr ; en eur vond, e oe skrapet Kaius hag Aristark, kompa-gnuned da Baol. -30- Greet mad e-noa Paol e zoñj da vond d'ar vodadenn, med ne oe ket lezet gand an diskibien. -31- Aziarked euz e vignoned, lod anezo, a la-keas iveau e zizalia da riskla mond d'an teatr.

-32- Peb hini evel-just a youhe, med n'oa ket daou o youhal ar memez tra, di-zurz a zayas er vodadenn ; an darn vrasa zoken ne ouient ket perag e oant bo-det. -33- Euz a greiz an engroez, e kemennas tud da Aleksandr petra c'hoarveze, hag eñ, poulzet gand ar Juzevien, a ziskouezas gand e zorn e felle dezañ diskleria e venoz dirag an oll. -34- Pa oe gouezet e oa Juzeo e stagas an oll da youhal asamblez epad tost da ziv eur : «Braz eo Artemiz Efez !» -35- Ar sekretour a zeus a-benn da lakaad ar bobl da zioulaad. «Efezianed, emezañ, ha bez e vefe unan bennag ha ne ouesfe ket eo kér Efez, kér zantel an Artemiz vraz ha kér an delwenn kouezet euz an neñv ? -36- Peogwir eo sklér ar respont, eo red deoh sioulaad ha diwall da fazia war an hent da gemer. -37- Degaset ho-peus amañ tud ha n'o-deus greet netra disakr ebed, na komzet dizoujuz a-eneb on doueoz. -38- Ma sav trouz etre hini pe hini ha Demetrius hag ar vicherourien a ya d'e heul, breujou a zo, prokonsuled a zo, n'eus nemed mond dirag al lez-varn. -39- Ha ma klaskit eun dra all bennag, e vezoz gwelet kement-se en eur vodadenn le-zenneg. -40- E riskl emaoz da veza tamallet da lakaad dispah ablamour d'or bo-dadenn greet ganeom hirio, rag n'eus abeg ebed da helloud diskleria or boa eun digarez vad evid ober ar vodadenn-mañ ha m'or befe da renta kont anezo, ne hellfem ket henn obert». War-ze e tigouviaz an dud.

EUZ EFEZ DA DROAZ DRE AR GRES HAG AR MAKEDONIA

XX -1- Echu ar freuz, e lakeas Paol e ziskibien da zond hag e kennerzas anezo. Goudeze e kimiadas diouto hag ez eas en hent da vond d'ar Vakedonia. -2- Goude beza tremenet dre ar broiou-se, e kemeras kalz a amzer evid kennerza ar vreudeur hag en em gavas er Grès. Tri miz e chomas eno. -3- Pa oe deuet ar poent dezañ da dreuzi ar mor evid mond d'ar Siria, en abeg ma'z oa Juzevien oh irienna a-eneb dezañ, e tivizas distrei en-dro dre ar Vakedonia. -4- Ambrouget e oe gand Sopatros, mab Pirrus euz Bere, Aristark ha Sekundus euz an Desalonika, Gaius euz Bere ha Timote, hag iveau Trichika ha Trofima euz rann-vro an

ganto an Iliz, o-doa diskleriet dezo kement e-noa Doue greet drezo, ha penaoz o-doa digoret dor ar feiz d'ar bayaned. -28- Tremen a rejont eur pennad amzer gand an diskibien.

TABUT DIWARBENN AN AMDROH

XV -1- Eun nebeud tud a ziskennas euz ar Judea evid klask kentelia ar vreudeur: «Ma ne fell ket deoh, emezo, beza amdrohet, hervez Lezenn Voizez, n'hellit ket beza salvet». -2- Trouz ha tabut a zavas etre Paol , Barnabas hag int-i. Neuze e oe divizet ez afe Paol ha Barnabas hag eun nebeud re all, beteg Jeruzalem, da houlenn o ali digand an ebrestel hag ar gozidi war ar gudenn se. -3- Pourvei a reas Iliz Antiokia da gement a oa red evid o beach. Tremen a rejont dre ar Fenisia hag ar Samaria , en eur gonta e troe ar bayaned war-zu Doue, ar pez a lakee kalz a levenez e-touez ar vreudeur. -4- Pa oent degouezet e Jeruzalem, e oent degemeret gand an Iliz, an ebrestel hag ar gozidi, hag e kont-jont dezo kement e-noa Doue greet drezo.

-5- Tud deuet d'ar feiz euz rumm ar Farizianed a zeusas neuze da lavared e ranker amdroha ar bayaned , ha lakaad anezo da heulia Lezenn Voizez. -6- An ebrestel hag ar gozidi a reas eur vodadenn da studia kenetrezo ar gudenn-se. -7- Med o veza ma teue an tabut da drenka, e savas Pêr da lavared: «Breudeur, emezañ, gouzoud a rit eo azaleg ar penn kenta, hag en ho touez, dre an dibab greet gand Doue, o-deus ar broiou payan klevet ganin-me komz an Aviel, ha greet dezo testeni, o rei dezo, evel deom-ni, ar Spered Santel; -9- heb ober kemm ebed etrezo ha ni, e-neus dre ar feiz, glanneet o halonou. -10- Neuze 'ta perag beza dicheg e-keñver Doue, o lakaad war jouk an diskibien, eur yeo ha n'o-deus ket gellet on tadou dougenn, na ni kennebeud. -11- Eur wech c'hoaz, dre hrs an Aotrou Jezuz, her hredi a reom, eo ez om bet salvet eveldo o-unan.» -12- Sioul e chomas ar vodadenn a-bez, hag e oe selaouet Barnabas ha Paol o tisplega an oll zinou hag ar burzudou greet drezo gand Doue e-touez ar bayaned.

-13- P'ho-doa ehanet, Jakez a lavaras d'e dro : «Breudeur, selaouit ahanom : -14- Simeon e-neus displeget deom eo fellet da Zoue azaleg ar penn kenta, kemeret a-doucez ar bayaned eur bobl evid e ano; -15- kement-se a zegouez mad gand komzou ar brofeded, rag skrivet eo: goude-ze e teuin da adsevel telenn David kouezet en he foul. An dismantrou anez a adsavin hag e lakin anez en e zav. -17- Neuze ar peurrest euz an dud a vo war glask euz an Aotrou gand an oll boblou payan a zoug va ano. Setu ar pez a lavar an Aotrou, eñ hag a gas da benn e vennadou -18 bet anavezet a oll-viskoaz. -19- D'am zoñj din-me eta ne ve ket mad deom samma ar re euz ar bayaned hag a dro ouz Doue, -20- med skriva da lavared dezo dioueri kement a zeu diwar azeulèrèz ar fals-doueou, an dizonestiz, ar hig chatal mouget hag ar gwad. -21- A rumm-da-rumm e-neus Moizez prezegerien e peb kériadenn, peogwir e vez lennet da beb sabad er zinagogou.»

-22- An ebrestel hag ar gozidi a-unan gand an Iliz a-bez a zivizas neuze dibab en o zouez tud da gas da Antiokia asamblez gand Paol ha Barnabas ; Jud, lesanvet Barsabas, ha Silas, o-daou galloudeg e-touez ar vreudeur. -23- Fiziet e oe enno

al lizer-mañ: «An ebrestel, ar gozidi hag ar vreudeur, d'ar vreudeur deuet adouez ar bayaned hag a zo o chom e Antiokia, er Siria hag er Silisia, salud deoh! -24- Klevet on-eus ez eus eet tud euz on touez deom-ni d'ho strafuilla gand o homzou heb beza bet urz ebed euz or perz, hag o-deus evel-se lakeet douetañs en ho spered. -25- Setu perag on-eus divizet, oll a-unan, dibab kannaded da gas davedoh gand or breudeur ker Paol ha Barnabas. -26- Tud int hag o-deus gouestlet o buez da zervich Jezuz Krist on Aotrou. -27- Kas a reom eta Jud ha Silas evid displega deoh. dre o homzou ar memez tra. -28- Rag ar Spered Santel ha ni on-eus divizet chom heb lakaad samm all ebed warnoh nemed kement-mañ hag a zo red : -29- chom heb debri kig bet proved d'an idolou, heb eva gwad, heb debri kig chatal bet mouget, heb ober hudurnez. Diwallit ouz kement-se hag e reoh mad. Salud deoh.»

-3- Ar re-mañ pa oent digouvet a ziskennas eta da Antiokia, hag eno e oe bo-det an dud, evid rei dezo al lizer. -31- Laouen e oent, ha nerz-kalon a roe dezo kleved e lenn. -32- Jud ha Silas diouz o zu, peogwir ez oant profeted, a gomzas aliez d'ar vreudeur da gennerza anezo ha d'o skoazella. -33- Epad eur pennad e chomjont eno, hag ar vreudeur a gimiadas diouto en eur reketi dezo ar peoh evid distrei warzu ar re o-doa o degaset. -34- Silas a zivizas chom ha ne 'z eas kuit nemed Jud. -35- Paol ha Barnabas, avad, a jome e Antiokia; gand meur a hini all e kelennent hag eh embannent kelou mad Komz an Aotrou.

-36- Goude eur pennadig amzer e lavaras Paol da Varnabas: «Distroom 'ta da weled ar vreudeur e kement kér on-eus roet enni da anaoud Komz an Aotrou; ni a welo e peseurt stad emaint. -37- Barnabas e-noa c'hoant kas iveau ganto Yann, lesanvet Mark. -38- Paol avad ne felle ket dezañ kemered adarre eun den hag e-noa o huiteet er Pamfilia, ha n'e-noa ket eta kemeret perz en o labour. -39- Ken braz e teuas da veza an dizengleo etrezo ma 'z ejont peb hini diouz e du. Barnabas a gemeras Mark gantañ hag a lestras warzu enez Chipr. -40- Paol avad a gemeras gantañ Silas hag a guiteas, o veza bet fiziet gand ar vreudeur e gras an Aotrou. -41- En eur vond euz an eil tu d'egile dre vro Siria ha bro Silisia, Paol a gennerze an Ilizou.

PAOL , SILAS HA TIMOTE

XVI -1- Degouezoud e reas evel-se e Derbe hag e Listr. Setu ez oa eno eun diskib anvet Timote, e vamm a oa eur Juzevez deuet d'ar feiz, e dad eur Gresian. -2- Brud vad e-noa e-touez ar vreudeur e Listr hag e Ikonium. -3- Paol e-noa c'hoant d'her has d'e heul. E gemered a reas, hag eh amdrohas anezañ, rag ar Juzevien a oa o chom en andread-se a ouie oll oa e dad eur Gresian. -4- E kement kériadenn a veze gwelet ganto, Paol ha Silas a roe da anaoud ar reolennou bet divizet gand an ebrestel ha kozidi Jeruzalem, hag e houllennent ma vefe sentet outo. -5- Startaad a ree eta muioh-mui ar feiz en Ilizou, hag e kreske an niver anezo euz an eil devez d'egile.

-6- Treuzi a rejont ar Frijia ha bro ar Halated, rag miret oa bet outo, gand ar Spered Santel, mond da embann ar Gomz en Azia. -7- Pa oent degouezet war harzou ar Misia, e klaskjont mond da Vitinia, med ar Spered Santel n'o lezas ket d'henn ober. -8- Treuzi a rejont neuze bro Misia ha diskenn e Troas. -9-

Azia. -5- Ar re-mañ hag a oa eet en or raog o-doa or gortozet e Troaz. -6- Ni avad, on-eus kuiteet Filip goude deiziou ar bara-dihuell hag on-eus lestret evid degouezoud ganto pemp devez goudeze, hag eno om chomet epad eur zizun.

DASORHIDIGEZ EUTIKA E TROAZ

-7- D'an deiz kenta euz ar zizun, pa oam bodet evid terri ar bara, Paol hag a dlee kuitaad antronoz, a zivizas gand ar vreudeur ; astennet e-noa e gomz beteg wardro hanter-noz ; -8- n'eo ket lampou a ree diouer er gambr uhel, el leh m'e-dom bodet. -9- Eur pôtr yaouank azezet war rizenn ar prenest en em roas da gousked-mort, endra ma kendalhe Paol da zivizoud. En e gousk e kouezas euz an trede estaj, ha pa oe klasket e zevel, ez oa maro. -10- Diskenn a reas neuze Paol, a-benn-herr ez eas davetañ hag e kemeras anezañ etre e zivreh. «Arabad eo deoh strafuilla, beo eo». -11- Pignet en-dro, Paol a dorras ar bara, debri a reas ha delher da brezeg beteg goulou-deiz ; ha neuze ez eas kuit. -12- Ar pôtr avad a oe degaset beo d'ar gêr, ar pez a oe eur frealzidigez vraz.

EUZ TROAZ DE VILET

-13- Ni a yeas kuit araog ar re all, hag on-eus lestret evid mond da Asos, e leh m'or-boa da gemered Paol, greet gantañ ar menoz da zond eno war e droad. -14- Pa oe en em gavet ganeom e Asos, ni on-eus e zégemeret er bourz evid mond da Vitilën. -15- Ahano ez om eet antronoz, dre vor, beteg beza dirag Kio ; d'an eil antronoz on-eus treuzet warzu Samos, ha peder eur war'n ugent diwezatoh, goude eun ehan e Trogilion, ez om degouezet e Milet. -16- Paol e-noa divizet tremen dirag Efez, gand aon da goll amzer en Azia; n'e-noa ken mall nemed da erruoud e Jeruzalem, ma ve posubl, evid gouel ar Pantekost.

-17- Euz Milet, Paol a halvas da zond davetañ kozidi Iliz Efez. -18- Pa oent degouezet e lavaras dezo : «Goûd a ouzoh petra eo bet va darempredou ganeoh abaoe m'on degouezet en Azia. -19- Servichet am-eus an Aotrou gand eur galon izel, e-kreiz an daerou hag an trubuillou deuet din dre droiou kamm ar Juzevien. -20- N'on bet morse lezireg war gement a helle ober vad deoh, er hontrol eo, prezeget am-eus, kelennet am-eus, koulz dirag an oll hag en ho tiez. -21- An testeni a roen a halve ar Juzevien koulz hag ar bayaned da jenñch buez, da drei ouz Doue ha da gaoud feiz e Jezuz an Aotrou. -22- Ha bremañ me, dalhet gand ar Spered, a zo en hent da vond da Jeruzalem. N'ouzon ket petra zeuin eno da veza. -23- Med, n'eus forz penaoz, ar Spered Santel a gemenn din, euz an eil gêr d'eben, ez eus chadennou ha trubuill ouz va gortoz. -24- Va buez vanan, n'he-deus evidon talvoudegez ebed, klask a ran kas da benn va redadenn hag ar zervich bet fiziet ennon gand Jezuz an Aotrou : rei testeni da Aviel gras Doue. -25- Hiviziken, her gouzoud mad a ran, ne weloh mui va dremm, c'hwi oll hag am-eus tremenet en ho touez en eur embann ar Rouantelez. -26- Setu perag e hellan rei hirio an testeni-mañ : divlamm on euz gwad an oll. -27- Morse n'on bet lezireg, er hontrol eo, mennad Doue en e bez an-eus roet deoh da anaoud.

-28- Evesait warnoh hoh-unan ha war an dud a zo fiziet ennoh ; evito e-neus ar Spered Santel greet ahanoh episkobed evid beza pastored Iliz Doue, dasprenet gantañ dre e wad e-unan. -29- Gouzoud mad a ran e teuio en ho touez bleizi kriz pa vezin eet kuit, ha n'o-do damant ebed d'an dropell. -30- Euz ho touez zoken e savo tud, dezo komzou fallagr evid sacha ganto diskibien d'o heul. -31- Bezit war evez eta, dalhit soñj n'am-eus ehanet, noz-deiz e-pad tri bлоaz, gand daerou, da guzulia peb 'ini ahanoh. -32- Ha bremañ e fizian ahanoh e Doue hag e komz e hras, gouest da zevel an Iliz ha da rei o hêrez d'ar re oll a zo santelleet. -33- N'am-eus c'hoanteet nag arhant nag aour, na dillac den ebed. -34- An daouarn-mañ, her gouzoud a rit hoh-unan, o-deus pourvect da va ezommou ha da re va hompagnuned. -35- Henn diskouezet am-eus deoh dalhmad eo evel-se, o poania, eo e tleer dont war zikour an dud dinierz ha delher soñj euz ar homzou e-noa lavaret an Aotrou e-unan : «Brasoh levenez a vez o rei eged o reseo». -36- Goude ar homzou-se, ez eas war e zaoulin, asamblez ganto oll, hag e pedas. -37- An oll neuze a zirollas da ouela, hag ez eent a-dro-vriad gand Paol evid pokad dezañ. -38- Glaharet e oant dreist oll ablavour m'o-doa e glevet o lavared ne welfent mui e zremm. Goudeze e oe ambrouget beteg al lestr.

PAOL O PIGNAD DA JERUZALEM

XXI -1- P'or-boa gellet en em ziframma diouto ha mond en donvor, on-eus skoet eeun da Gos hag antronoz da Rod, hag ahano da Vatara. -2- O veza kavet eul lestr a oa war-nes loh da vond da Fenikia, ez om savet er bourz hag ez om eet er mor -3- Pa oem degouezet dirag enez chipr e lezjom an... enezenn e baborz evid ober hent war-zu ar Siria hag on-eus douaret e Tir, rag eno eo e-noa al lestr da ziskarga e lestrad marhadourez. -4- Seiz devez oam chomet eno, rag diskibien or-boa kavet eno. Poulzet gand ar Spered Santel e lavare ar re-mañ da Baol chom heb pignad da Jeruzalem. -5- Pa oe echu ganeom on amzer da jom eno, ez om eet en hent hag e-keid ha ma 'z eem, e teuent oll d'on heul, gwragez ha bugale zoken, beteg er-mèz euz kér. Eno, daoulinet war an aod, on-eus pedit. -6- P'or-boa kimiadet diouto, ez om savet er vag hag int-i a zo distroet d'ar gér.

-7- Ni avad on-eus treuzet ar mor azaleg Tir hag a zo degouezet e Ptolemais, hag eno, goude beza saludet ar vreudeur, ez om chomet eun devez asamblez ganto. -8- Antronoz ez ejom adarre en hent hag eh errujom e Sezarea. Mond a rejom da di Filip, an avieler, unan euz ar seiz, hag ez om chomet eno. -9- Peder merc'h e-noa, gwerhezed ha profedezed anezo. -10- Epad an deveziou niveruz or-boa tremenet eno, e tegouezas eur profed anvet Agabus a oa o tond euz bro Judea. -11- Dond a reas d'or havoud ha kemered gouriz Paol, liamma 'reas ganti e dreid e-unan hag e zaouarn hag e tisklerias : «Setu petra larvar ar Spered : Anden a zo ar houriz-mañ dezañ, setu aze penaoz e vo staget gand ar Juzevien ha lakeet etre daouarn ar bayaned. -12- O kleved kement-se, ni hag ar vreudeur euz kér a bedas stard Paol da jom heb pignad da Jeruzalem. -13- Neuze e respontas deom : «Peraq e ouelit hag e rannit din va halon ? Prest on-me, n'eo ket hebken da veza liammel med da verval e Jeruzalem evid ano Jezuz an Aotrou». -14- Ha peogwir n'hellec ket kaoud e asant, n'on-eus ket pouezet muioh war-

nañ : «Ra vo greet bolontez an Aotrou, a lavarem». -15- E dibenn an deveziouse, on eus greet or pourchasou hag ez om pignet da Jeruzalem. -16- Diskibien euz Sezarea, o vond di iveau asamblez ganeom, o-deus or haset da loja da di Mnas, ginidig euz enez Chipr, eun diskibl euz an deiziou kenta.

PAOL HA JAKEZ E JERUZALEM

-17- Pa zegouezjom e Jeruzalem e oe greet deom eun degemer laouen gand ar vreudeur. -18- Antronoz ez eas Paol ha ni da di Jakez ; ar gozidi a oa oll eno iveau. -19- P'e-noa o zaludet e tisplegas dre ar munut kement e-noa greet Doue e-touez ar bayaned dre e zervich. -20- Ar re a oa o selaou a rentas gloar da Zoue hag a lavaras da Baol : «Gweled a hellez, breur, ez eus a vilierou tud fidel e-touez ar Juzevien, hag oll emaint stard a -du gand al Lezenn. -21- Hogen, goûd a ouzom ar vrud a red diwar da benn : o teski emaout d'ar Juzevien a zo o veva e-touez ar bayaned, dilezel Moizez. Lavared a rez dezo chom heb amdroha ar vugale hag heb heulia ar reolennou. -22- Petra da ober ? A dra-zur e klevint emaout amañ. -23- Gra eta ar pez emaom o vond da lavared dit : pevar den on-eus amañ dalhet gand eur uestl ; -24- kemer anezo ganit, bez glanneet asamblez ganto ha kemier ar mizou war da gont evid ma hellint lakaad touza o bleo hag eh intento an oll ne dalv netra ar pez o-deus klevet diwar da benn hag e chomez, te iveau, fidel d'al Lezenn. -25- Evid ar bayaned deuet da gredi, ni on-eus skrivet dezo ar pez on-eus divizet : en em vired euz ar hig bet kinniget e sakrifisou payan, euz ar gwad, ar hig bet mouget hag an hudurnez». -26 En deiz warlerh e kemeras Paol gantañ ar wazed-se hag o kregi gand lidou ar hlanedigez, ez eas asamblez ganto d'an Templ evid lavared pe da zeiz, pa vo echu o hlanedigez, e vo kinniget ar brovadenn evid peb-hini anezo.

-27- Ar seiz devez a oa o vond da echui pa zeuas Juzevien an Azia, hag o-doа e welet en Templ, da isa ar bobl a-bez a-neeb dezañ, hag e pakjont krog ennañ. -28- Youhal a reent , « Tud Israel, sikour deom ! Hemañ eo an hini a stourm a-neeb or pobl, al Lezenn hag al léh-mañ, dre ar gelennadurez a ro e peb leh ha da beb den. Degaset e-neus Gresianed zoken en Templ ha disakreet evel-se al leh santel-mañ». -29- Rag e welet o-doа, e kér, asamblez gand Trofim a Efez heg e soñje dezo e-noa Paol e zegaset en Templ. -30- Kér a-bez en em zavas, hag an dud en em vodas niveruz kenañ: Kroget e oe e Paol hag e oe stlejet er mêz euz an templ, hag serret an doroujou raktal. -31- O klask e laza edod, pa zeuas ar hellou-mañ da gomendant ar gohortenn : birvill a zo e Jeruzalem a-bez. -32- Raktal e vodas soudarded ha kantenerien hag e lakeas sailla war ar bobl. Pa oe gwelet ar homendant hag ar zoudarded e oe ehanet da skei gand Paol. -33- Neuze e tosteas outañ ar homendant, e krogas ennañ hag e roas urz d'e jadenna gand diou jadenn, ha goudeze e klaskas gouzoud piou e oa ha petra e-noa greet. -34- Med e-kreiz ar bobl, peb hini a youh, hemañ eun dra, egile eun dra all. Ha peogwir ar homendant ne helle ket, ablamour d'ar jolori, gouzoud frêz ar pez a oa c'hoarvezet, e houlenñas kas Paol er hastell-kreñv. -35- Pa oe degouezet hemañ war dereziou ar skalier e oe red d'ar zoudarded dougen anezañ, ken dirollet oa ar bobl, -36 rag ar bobl a-bez a yee d'e heul en eur youhal : «d'ar maro !»

-37- D'ar mare m'edod war-nes e lakaad da vond er hastell-kreñv, e lavaras Paol d'ar homandant : « ha posubl e ve din lavared eur ger dit ? » - « Te oar Gresianeg ? a respondas eñ. -38- N'eo ket te eta eo an Ejipsiad e-neus lakeet en deveziou-mañ pevar mil forban d'en em zevel ha da vond d'ar goueleh ? » -39- « Me, eme Baol, a zo eur Juzeo, euz Tarz, er Silisia, sitoian euz eur gér ha n'eo ket brud a vank dezi, lez ahanon da gomz d'ar bobl ». -40- Aotreet e oe, ha Paol, en e zav war ar skalierou, a reas sin d'ar bobl gand e zorn. Sioul e chomas an oll, hag e komzas dezo en Hebreeg.

PAOL O KOMZ D'AR JUZEVIEN

XXII -1-«Breudeur ha tadou, selaouit eta a pez am-eus da lavared deoh evid en em zivenn». -2- Sioulaad a reas c'hoaz an dud pa oe klevet Paol o komz dezo en Hebreeg : -3- «Juzeo on, ganet e Tarz, er Silisia, med amañ, er gér-mañ, on bet savet, hag am-eus desket e-harz treid Gamaliel, en eun doare striz, Lezenn on Tadou. Leun a feulz e oan evid Doue, evel ma'z oh oll hirio. -4- Heskinet am-eus an Hent-se, lakeet am-eus chadenna ha teurel er prizon gwazed ha mer-hed. -5- Ar beleg braz ha kuzul ar pennou-meur a-bez a hell beza test : diganto o-unan am-boa bet liziri evid or breudeur pa oan eet da Zamas evid degas da Je-ruzalem, chadennet, ar re a oa, du-ze, ma vefent kastizet.

-6- Kendelher a reen eta gand va hent ha tostaad ouz Damas pa 'zeuas a daol trumm, wardro kreizteiz, eur sklerijenn vraz o tond euz an neñv da skedi endro din. -7- Kouenza a ris d'an douar hag e klevis eur vouez o lavared din : «Saul! Saul ! perag am heskinez» ? -8- «Piou out, eme-ve» ? hag ar vouez adarre : «Me eo Jezuz an Nazarean, me eo a heskinez». -9- Ar re a oa ganin a welas mad ar sklerijenn, med ne glevjont ket ar vouez a gomze ouzin. -10- Me a houleñnas : «petra am-eus da ober, Aotrou» ? Hag e respondas an Aotrou din : «Sav en da zav ha kee da Zamas, hag eno e vo lavaret dit kement tra a zo merket dit da ober». -11- Med o veza ma ne welen netra diwar goust sked ar sklerijenn-se, on bet renet gand dorn va henvreudeur evid mond da Zamas. -12- Bez e oa eno eun den devod, anvet Ananias, sentuz ouz al Lezenn, brud vad dezañ e-touez ar Juzevien : eno edo o chom. -13- Dond a reas d'am havoud, ha neuze e lavaras din : «Saul, va breur, ra zeuio dit en-dro ar gweled», ha kerkent e teuas din ar gweled, hag e welis anezañ. -14- Lavared a reas din : «Doue on tadou e-neus da zibabet evid anaoud e volontez, gweled an Hini just ha kleved e vouez dezañ. -15- Te a vezoz test dezañ dirag an oll dud euz kement az-pezo gwelet ha klevet. -16- Perag gortoz pelloh ? Alo ! Reseo ar vadeziant, ha bez glanneet euz da behejou en eur bedi e Ano».

-17- Pa oen distroet da Jeruzalem, e-pad m'edon o pedi en templ, e tegouezas ganin beza gourzavet ; -18- hag e welis an Aotrou, lavared a reas din : «Kuita buan Jeruzalem, rag ne zègemerint ket an testeni a roi din». -19- Med, Aotrou, eme-ve, gouzoud mad a reont eo me eo a yee er zinagogou, evid lakaad teurel er prizon ha skourjeza ar re a gred ennout. -20- Ha pa oe skuillet gwad Stevan, eun test dit, me iveau a oa eno, a-du edon gand ar vuntreren hag o tiwall o dil-lad. -21- Med lavared a reas din : «kerz, rag war-zu ar poblou payan, pell-pell, e kasin ahanout».

-22- Ar juzevien hag o-doa selaouet Paol beteg ar homzou-se, a stagas neuze da youhal forz : «Ra vo dilamet diwar an douar eur seurt den. Ne dle ket chom beo». -23- Hag o veza ma youhent, ha ma hejent o mantilli, ha ma taolent poultrenn en êr, -24- komendant ar gohortenn a lakeas kas Paol er hastell-kreñv hag e vourrevia gand ar fouet evid gouzoud frêz perag ar youhadennou-se a eneb dezañ. -25- Pa edod o vond da astenn anezañ evid e skourjeza, e lavaras Paol d'ar hantener a oa diouz servich : « eur sitoian roman ha n'eo ket bet barnet zoken, daoust hag aotré ho-peus d'e skourjeza »? -26- O veza klevet kement-se, ar hantener a yeas da gavoud komendant ar gohortenn evid rei kement-se dezañ da houzoud : «Petric edos o vond da obert, rag an den a zo sitoian roman». -27- Ar homendant a zistroas da houllenn ouz Paol : «Lavar din ha gwir eo ez out sitoian roman ? - Ya, eme Baol». -28- Ar homendant a lavaras c'hoaz : «Me, emezañ, am-eus ranket rei eur yalhad vad evid kaoud ar gwir-se. - Ha me, eme Baol, am-eus anezañ abaoe m'on ganet». -29- Ar re a oa o vond d'e vourrevia a lezas anezañ raktal. Ar homendant a oa kroget aon ennañ, o houzoud enoa dalhet en ereou eur sitoian roman. -30- Anfronez, komendant ar gohortenn a c'hoanteas gouzoud heb douetañs ebed a betra oa tamellet Paol gand ar Juzevien, urz a roas da zijdenna anezañ ha da voda ar veleien vraz gand ar Huzulmeur a-bez ha diskenn Paol da vond dirazo.

PAOL DIRAG AR SANEDRIN

XXIII -1- Paol, e zaoulagad o para war ar Sanedrin, a zisklerias : «Breudeur, beteg-henn am-eus renet va buez dirag Doue gand eur goustiañs direbech». -2- Med ar beleg meur Ananias a roas urz d'e skoazellerien da skei gantañ war e henou. Ha Paol dezañ neuze : -3- «Te eo a zo o vond da veza skoet gand Doue, moger gwennet, azezet out evid va barn hervez al Lezenn hag en desped d'al Lezenn e roez urz da skei ganin». -4- «Taol-evez, eme dezañ ar skoazellerien, gwall gomz a rez da veleg-meur Doue». -5- «Ne ouien ket, breudeur, eme Baol, e oa eñ ar beleg-meur, rag skrivet eo : ne wallgomzi ket a-eneb mestr da bobl.

-6- Goûd a ouie ez oa dirazañ diou gostezenn : hini ar Saduseaned hag hini ar Farizianed, neuze e youhas e-kreiz ar Huzul-meur : « Breudeur, farizian on, mab da farizianed ; ablamour d'am espérañs en adsao ar re varo da veo eo ez on degaset dirag al lezvarn ». -7- A-veh m'e-noa echu da ziskleria kement-se, ma savas dizemgleo etre Farizianed ha Saduseaned hag e oe disparti etre an dud. -8- Hervez ar Saduseaned, n'eus nag adsao da veo, nag èlez, na spered, e-leh ar Farizianed a gelenn ez eus anezo. -9- Neuze e savas eur pez karnach. Hiniennou euz ar skribed diouz kostezenn ar Farizianed a zavas hag a zisklerias stard : «Ne gavom netra da rebech d'an den-mañ... ha m'e-nije komzet eur spered outañ pe eun êl! -10- Hag o veza ma 'z ee an traou gwasoh gwaz, ar homendant, gand aon na ve draillet Paol ganto, a roas urz d'ar zoudarded da ziskenn evid e denna euz o zouez hag e gas a-nevez d'ar hastell-kreñv. -11- En noz warleh, an Aotrou a zeus dirag Paol hag a lavaras dezañ : «Dahl mad ! rag emaout o paouez rei din testeni e Jeruzalem hag e ranki rei din iveau testeni e Rom.

-12- Pa oe deuet an deiz, ar Juzevien a iriennas hag a douas chom heb debri nag eva ken n'o-defe lazet Paol. -13- Ouspenn daou ugant e oant o kemered perz en

irienn-se. -14- Mond a rejont da weled ar veleien vraz hag ar gozidi hag e lavar-jont dezo : «Touet on-eus, dre eul le meur, chom heb kemered tamm araog beza lazet Paol. -15- Neuze, diouz ho tu, a-unan gand ar Huzul-meur, kinnigit d'ar homandard e zegas deoh war zigarez ober gwelloh enklask war e gont, ha ni a zo prest d'e laza araog ma vo degouezet». -16- Med mab c'hoar Paol a glevas ano euz ar stign edont oh antella ; mond a reas d'ar hastell-krefñv, antreal a reas e-barz ha rei kelou da Baol. -17- Gelver a reas Paol unan euz ar hantenerien ha lavedez dezañ : «Kas ar pôtr yaouank-mañ d'ar homandard, eun dra bennag e-neus da lavared dezañ». -18- Ar hantener a gemeras anezañ gantañ hag e gas d'ar homandard. «Ar prizoniad Paol, emezañ, e-neus va galvet, ha gouennet diganin degas dit ar pôtr yaouank-mañ ; eun dra bennag e-neus da lavared dit». -19- Ar homandard a grogas en e zorn hag a yeas gantañ a gostez hag a houlen-nas outañ : «Petric az-peus da lavared din ?» -20- «Ar Juzevien, eme dezañ ar pôtr yaouank, a zo en em glevet evid gouenn diganit degas Paol warhoaz dirag ar Sanedrin, war zigarez ober sklerroh enklask diwar e benn. -21- Gand a ri, arabad dit fizioud enno ; ouspenn daou ugent e vezint, kuzet evid e spia ; touet o-deus chom heb dibri nag eva ken n'o-dezo e lazet ; prest int bremañ, ne hor-tozont nemed da asant». -22- Ar homandard a zigouviaz ar pôtr yaouank ; «Na laver de zen ebed, a gemennas dezañ' ez-peus diskuilhet din an irienn-se.

PAOL KASET DA ZEZAREA

-23- Gelver a reas neuze daou euz ar gantenerien, hag e lavaras dezo : «Grit ma vo prest da vond da Zezarea, kerkent ha nav eur diouz an noz, daou hant soudard, deg marheg ha tri-ugent ha daou hant skoazeller ; -24- ra vo prest kezeg iveauz evid kas Paol yah ha dibistig da Felisius ar gouarnour. -25- Skriva 'reas eul lizer, kement-mân a lavaras : -26- Klaodiis Lisiás, d'ar gouarnour mad meur-bed, salud ! -27- Ar Juzevien o-doa kroget en den a gasan dit hag edont o vond d'e laza pa c'hoarvezis gand soudarded evid e denna diganto, rag edon o paouez kleved ez oa eur sitoian roman. -28- Felloud a ree din gouzoud a betra e oa tamallet, setu perag am-eus lakeet e zegas dirag ar Huzul meur. -29- Gweled am-euz ez oa tamallet dezañ e zizemgleo e-keñver traou euz o feiz, med heb na vefe netra hag a dalfe ar maro pe ar chadennou. -30- Kemennet eo bet din edod o pourchas eur gwall daol a-eneb an den-se. Kas a ran anezañ dit en eur gemenn d'e damallerien o-doa da zougenn klemm dirazout a-eneb dezañ. Salud !

-31- Ar zoudarded a reas ar pez a oa bet gourhemennet dézo, hag e-pad an noz e kasjont Paol da Antipatris ; -32- Antronoz, ar zoudarded a lezas ar varheien da gendelher asamblez gantañ hag a zeus war o giz d'ar hreñv-lêh. -33- Kerkent ha ma oent degouezet e Sezarea, ar varheien a roas al lizer d'ar gouarnour hag a zegasas Paol dirazañ. -34- Ar gouarnour a lennas al lizer hag a houlenas euz peseurt rann-vro ez oa ginidig. Pa glevas ez oa euz ar Silisia : -35- «Me zelaouo ahanout, emezañ, pa vo degouezet amañ iveauz ar re a zo ouz da damall». Hag e roas urz da zelher anezañ e pretordi Herodez.

PREZEGENN TERTULLUS

XXIV -1- Pemp devez goudeze e tiskennas ar beleg braz Ananias gand kozidi hag eun alvokad anvet Tertullus. Dougenn a rejont klemm dirag ar gouarnour

a-eneb Paol. -2- Hemañ a oe galvet da zond, ha Tertullus a stagas evel-hen gand e damallou : «A drugarez dit ha da gement az-peus bet ar vadelez da adreiza evid ar bobl-mañ, eo e hellom beva e peoh. -3- E peb leh hag e peb amzer, Felisius mad meurbed, gand leun a anaoudegez e resevom ar madoberou-se. -4- Evid mired na jomin re bell da derri dit da benn, va frezegenn a vo berr. Bez, mar plij, ar vadelez da zelaou anezi gand da lealded brudet mad. -5- Deuet om da houzoud ez oa an den-se eur vosenn o lakaad freuz ha reuz e-touez oll Juzevien ar bed, eur penn-stourmer eo euz rann-gredenn an Nazareaned. -6- Klasket e-neuz zoken disakra an. Templ, ha neuze on-eus lakeet harz warnañ. -8- Te hello, da-unan, oh ober goulenenn outañ, gweled eo gwir an oll rebechou a reom dezañ. -9- Ar Juzevien a gavas mad e gomzou hag a lavaras edo an traou evel-se.

PREZEGENN PAOL DIRAG AR GOUARNOUR

-10- Ar gouarnour, gand eur zin, a bedas Paol da gaozeal. Paol a lavaras : «Goûd a ouzon e lakeez ar justis da ren en or bro abaoe kalz a vloaveziou a zo. A galon vad eta ez an d'en em zidamall. -11- Ez eo dit her gouzoud, n'eus ket ouspenn daouzeg devez abaoe m'on pignet da Jeruzalem, evid adori. -12- Ha, nag en Templ, nag er zinagogou, nag e kér n'e-neus kavet den ahanon o tabutal gand unan pe unan pe o lakaad freuz e-touez an dud. -13- An dud-mañ n'int ket gouest, tamm ebed, da ziskouez eo gwir an tamallou a reont din bremañ. -14- Setu amañ ar pez a anzavañ dit : e servich Doue on tadou emaon hervez an Hent a zo, diouz o zoñj dezo, eur rann-gredenn. Me 'gred e kement a zo skrivet el Lezenn hag er Brofeded. -15- An esperafñ-mañ am-eus e Doue, hag ar re-mañ iveau a hortoz kemend-all, e vo eun adsao da veo evid ar re just hag evid ar beherien, -16- ha setu perag e klaskan, me iveau, delher dalhmad va houstiañ direbech dirag Doue ha dirag an dud. -17- Deuet e oan en-dro goude kalz a vloaveziou da zegas aluzennou ha provou da dud va bro, -18- Neuze eo e oen kavet en Templ e dibenn va glanidigez, n'oa nag engroez, na freuz... -19- Eun nebeud Juzevien euz an Azia hebken... Ar re-ze eo a dilefe beza deuet dirazout evid tamall ahanon, m'o-doa da vianna eun dra bennag da rebech din. -20- Pe neuze, n'o-deus ar re-mañ nemed lavared pe-seurt taol fall o-deus kavet pa oen galvet dirag ar sandedrin, -21- daoust hag e ve kement-mañ, am-boa youhet euz va zav en o-zouez : «ablamour da adsao ar re varo eo e teuan hirio dirazoh evid beza barnet ?» -22- Felisius hag a ouie mad-tre kement a zell ouz an Hent a apellas : «Me varno an dra-mañ, emezañ, pa vo diskennet amañ ar homendant Lisiás». -23- Urz a roas d'ar hantener da zelher Paol er prizon, med da vezra mad outañ heb mired ouz hini ebed euz e dud da renta servich dezañ.

PAOL ER PRIZON

-24- Eun nebeud deveziou goudeze, Felisius en em gavas asamblez gand Druzil-la e bried, eur Juzevez anezi. Gelver a reas davetan Paol, hag e selaouas ànezañ o komz euz ar feiz er Hrist Jezuz. -25- Med o veza ma troe o divizou warzu ar justis, ar gwall youlou da reiza hag ar varnedigez da zond, Felisius, kroget aon ennañ, a lavaras da Baol : «Evid an dro-mañ en em denn kuit, me da halvo a-nevez eun dro all.» -26- Kendelher a ree koulskoude da esperoud e rofe Paol

arhant dezañ, ha setu perag e lakee anezañ da zond d'e weled, aliez awalh zo-ken. -27- Daou vloaz goudeze, warlerh Felisius e teus Portius Festus hag he-mañ, c'hoant dezañ plijoud d'ar Juzevien, a lezas Paol er prizon.

PAOL DIRAG FESTUS. APELL DA ZEZAR

XXV -1- Tri devez goude beza degouezet en e rann-vro, e pignas Festus euz Sezarea da Jeruzalem. -2- Ar veleien vraz ha pennou braz ar Juzevien a zeusas dirazañ da zougen klemm a-eneb Paol. -3- Dre drubardérrez e pedont hag e hou-lennont e-nefe ar vadelez da zegas paol da Jeruzalem, med e gwirionez o zoñj a oa evel-se kavoud tro da ober eur gwall daol evid e laza e-pad e veach. -4- Festus a-vad a respontas eo e Sezarea edo Paol er prizon, hag ouspenn, n'eus forz penaizo, eñ a oa war-nes kuitaad. -5- «Ar re ahanoh eta, emezañ c'hoaz, hag o-defe da weled war gement-se, n'o-deus nemed diskenn asamblez ganin da Zezarea, ha ma 'z eus en den-se tra,pe-dra ha na vefe ket eeun, dezo da zougen klemm a-eneb dezañ».

-6- Festus ne jomas ket ganto ouspenn eun eiz pe zeg devez. Eur wech disken-net da Zezarea, ez eas, antronoz, d'al lez-varn hag e roas urz da zegas Paol. -7- Pa oe erruet Paol, ar Juzevien, diskennet euz Jeruzalem, en-dro dezañ, a reas dezañ eur bern tamallou grevuz, med n'oa anezo nemed tamallou goullo. -8- Paol a gendalhe d'en em zivenn :«N'am-eus greet torfed ebed, nag a-eneb Le-zenn ar Juzevien, nag a-eneb an Templ, nag a-eneb an Impalaer». -9- Gand ar c'hoant da veza deuet mad d'ar Juzevien, Festus a ginnigas kement-mañ da Baol :«A-du emaout da zavel da Jeruzalem evid ma vo barnet da brozez eno dirazon ?» -10- Med Paol a respontas :«Dirag lez-varn an impalaer emaon, aze eta eo e tlean beza barnet. Ar Juzevien, n'am-eus greet droug ebed dezo, her gouzoud a rez da-unan. -11- Ma 'z on kabluz e gwirionez, m'am-eus greet eun torfed bennag, din a varo, ne fell ket din tehed rag ar maro, med ma n'ez-euz nemed tamallou goullo gand ar re-mañ, n'e-neus den gwir d'am lakaad etre o daouarn. Ober a ran galv d'an Impalaer. -12- Festus a houlenas neuze o ali digand e guzulerien hag a respontas :«Greet az-peus galv d'an Impalaer, mond a ri dirag an Impalaer».

PAOL DIRAG AGRIPA

-13- Eun nebeud deveziou goudeze, ar roue Agrippa ha Berenis, deuet da zaludi Festus, a zégouezas e Sezarea. -14- Ha peogwir e taleent eno eur pennad, Festus a gomzas d'ar roue diwarbenn Paol. «Amañ, emezañ, ez-eus eun den bet dalhet er prizon gand Felisius. -15- Epad m'edon e Jeruzalem, ar veleien vraz ha kozidi ar Juzevien a zo deuet d'am havoud da zougenn klemm a-eneb dezañ ha gouleññ ma ve kondaonet. -16- Responent am-eus dezo n'oa ket kustum ar Romaned da rei eun den tamallet heb na vefe bet lakeet dirag e damallerien ha roet tro dezañ d'en em zivenn a-eneb an tamallou greet dezañ. -17- En em ga-vet int eta amañ, hag heb dale tamm, antronoz end-eeun, am-eus kemeret plas el lez-varn ha roet urz da zegas an den-se. -18- Pa oant bodet endro dezañ, an damallerien n'o-deus kavet da damall dezañ netra euz an traou grevuz edon o

hortoz. -19- N'o-doa da rebech dezañ, n'ouzon ket petra diwar-benn o hredennou dezo ha dreist oll diwarbenn eun den anvet Jezuz hag a zo maro, med hervez Paol a zo beo atao. -20- O veza ma ne ouien ket penaõz dirouestla ar gudenn-se, am-eus kinniget dezañ mond da Jeruzalem evid beza barnet eno war gement-se, -21- Med Paol e-neus greet galv da varnedigez e veurded an Impalaer, ha me am-eus roet urz d'e zelher er prizon beteg ma vo kaset dirag an Impalaer». -22- Neuze e lavaras Agripa da Festus : «Me am-eus c'hoant d'am zro klevet an den-se». «Kerkent ha warhoaz e klevi anezañ», a oe respontet dezañ.

-23- Antronoz e tegouezas Agripa ha Berenis, digoradur ganto ; antreal a rejont e sal al lez-varn, ganto ofiserien euz ar re uhella ha pennou braz kér. Festus a roas urz da zegas Paol hag hemañ a oe degaset. -24- Festus a lavaras : «Roue Agripa, ha c'hwi oll hag a zo ganeom, gweled a rit an den-mañ ; pobl Israël abez a zo deuet d'am gweled diwar e benn, e Jeruzalem ha beteg amañ, en eur grial ne helled ket e lezel da veva pelloh. -25- Evidon-me, n'am-eus kavet er pez e-neus greet netra evid e varn d'ar maro, med peogwir n'am-eus netra resis da skriva diwar e benn d'ar mestr meur, am-eus e zegaset dirazoh, dirazout-te dreist-oll, roue Agripa, evid ma hellin skriva dezañ warlerh ar breudou-mañ. -27- Diskiant e ve, d'am zoñj din, kas eur prizonier heb na ve diskleriet an tamallou greet dezañ.

PREZEGENN PAOL DIRAG AGRIPA

XXVI -1- Agripa a lavaras da Baol :«Aotre az-peus da zivenn da gaoz». -2- Neuze Paol a astennas e zorn hag evid en em zivenn a lavaras :« Eüruz on, Roue Agripa, da gaoud tro hirio d'en em zivenn dirazout euz an oll damallou -3- savet a-eneb din gand ar Juzevien, rag te a anavez mad o boazamañchou ha kement a zo leh a dabut etrezo. Bez eta ar vadelez d'am zelaou gand pasianted. -4- Azaleg va yaouankiz, al lodenn genta euz va buez, am-eus tremenet e Jeruzalem, e-touez tud va bro, an oll Juzevien a anavez anezi. -5- Abaoe pell 'zo e ouzont hag e hellont rei testeni a gement-se, da vianna ma fell dezo, am-eus bevet hervez ar pez strisa euz or relijon, e-giz farizian, -6- ha bremañ on degaset dirag al lez-varn, en abeg m'am-eus esperâns er bromesa greet gand Doue d'on tadou, -7- ar bromesa ema heb ehan, noz-deiz, dre o fedennou, an daouezeg meuriad, o hortoz ma vefe sevenet. En abeg d'an Esperâns-se eo, o Roue, ez on tamallet gand ar Juzevien. -8- Perag e sofijer en ho touez n'heller ket kredi e teu Doue da adsevel ar re varo ?

-9- Evidom-me, a grede din, oa va dever stourm ar pez ma hellen ouz ano Jezuz an Nazarean. -10- Hag an dra-ze eo am-eus greet e Jeruzalem ; me va-unan am-eus taolet er prizon eun niver braz a zent, dre ar galloud roet din gand ar veleien vraz, hag am-eus roet va mouez evid o has d'ar maro. -11- En eur vond dre an oll zinagogou, ne ehanen ket da vernia warno kastiz war gastiz, evid o lakaad da vallozi, hag e va gwasa kounnar e reden war o lerh beteg ar hêriou estren. -12- Eun deiz edon war hent Damas, peb galloud ha peb kemennadurez am-boa bet digand ar veleien vraz ; -13- en hent edon, o Roue, pa welis o tond euz an neñv, skedusoh eged an heol eur sklerijenn hag a hronnas ahanonne hag ar re a ree hent ganin. -14- Oll ez-om kouezet d'an douar hag e klevis

eur vouez o lavared din : «Saul ! Saul ! perag e teuez d'am heskina ? Kalet eo dit rebarbi ouz ar broud.» -15- «Piou out, Aotrou eme-ve ? Hag an Aotrou a-nevez : «Jezuz on, me eo a heskinez ; -16- sav dres war da dreid, sed-amañ perag am-eus en em ziskouezet dit : te a zervicho da dest euz ar weledigez ahanon emaout o paouez kaoud hag euz ar re all az-pezo c'hoaz. -17- Da ziwall a ran dija diouz ar bobl ha diouz ar bayaned. War-zu enno eo e kasan ahanout -18- evid digeri dezo o daoulagad, o distrei euz an défivalijenn d'ar sklerijenn, euz galloud Satan da Zoue, evid m'o dezo ar pardon euz o fehejou ha perz en hèrez gand ar zent dre ar feiz ennon.»

-19- Azaleg neuze n'on ket bet difiziuz ouz ar weledigez-se deuet euz an neñv.

-20- Er hontrol eo, prezeget am-eus da genta da dud Damas ha da dud Jeruzalem, e bro Judea a-bez, ha goudeze d'ar poglob payan am-eus roet da anaoud oa red dezo cheñch buez hag en em drei ouz Doue, en eur jeñch an oberou.

-21- Kement-se eo ar penn-kaoz m'o-deus ar Juzevienn kroget ennon, pa edon en Templ, ha klasket va laza. -22- Gant nerz Doue ouz va diwall. beteg henn e kendalhan eta da rei testeni dirag ar re vian hag ar re vraz. Ar brofeded ha Moizez o-doa diouganet ar pez a dlee erruoud ; ne lavaran ket muioh. -23- Ar Hrist e-neus gouzañvet, hag eñ, ar henta da veza savet a-douez ar re varo, a dlee embann ar sklerijenn d'ar Bobl ha d'ar bayaned.»

-24- Aze e oa degouezet Paol gand e brezegenn pa lavaras Festus a vouez kreñv :

«Na te a zo diskiant, Paol, gand da oll zeskadurez emaout o koll da benn.» -25- «N'on ket diskiant, Festus enoruz, eme Baol, da glevet e roan komzou a wirionez hag a skiant vad. -26- Ar roue emaoñ o komz outañ gand hardisegez a anavez mad, a-dra-zur, an traou-se hag e kredan stard ne jom netra dianav evitañ, rag n'eo ket en eur horn douar bennag kuz ha distro eo bet degouezet an traouse. -27- Ha kredi a rez er brofeded, roue Agripa ? Me oar e kredez enno.» -28-

Neuze e lavaras Agripa da Baol : «C'hoaz eun nebeud hag e ri din da gredi az-peus greet eur hristen.» -29- «C'hoaz eun nebeud pe galz, eme Baol, plijet gand Doue e teufes, n'eo ket te hebken med ar re oll a zo hirio ouz va zelaou heñvel poch ouzin-me,... heb ar jadennou a zougan ! -30- Ar roue a zavas hag iveau ar gouarnour ha Berenix hag ar re o oa azezet en-dro dezo. -31- En eur guitaad, e komzent kenetrezo : «An den-se, emezo, ne ra netra din a varo pe a jadennou.

-32- Agripa neuze da Festus : «An den-se a vije gellet frankiza paneved m'e-neus greet galv d'an Impalaer.»

EN HENT DA VOND DA ROM

XXVII -1- Goude ma oe bet divizet on lestra evid mond d'an Italia, e oe fiziet Paol hag eun nebeud prizonidi all en eur hantener anvet Julius euz kohortenn Aogusta. -2- Pignet om neuze e bourz eul lestr euz Adramision war-nes loh da vond war-zu aochou an Azia, hag ez om eet er mor. Bez' ez oa ganeom eur Makedonian euz Tessalonika, Aristark e ano. -3- Antronoz, e-pad eun ehan e Sidon, Julius, hag a oa hegarañ e-kenver Paol, a roas aotre dezañ da vond da weled e vignoned ha da gaoud sikour diganto. -4- Ahano, eet er mor adarre, on-eus greet hent e gwasked enezenn Chipr, rag avel a-eneb or-boa. -5- Neuze e treuzjom ar mor a sko war ar Silisia hag ar Pamfilia, hag on-eus dilestret e Mir,

el Lisia. -6- Ar hantener a gavas eno eul lestr euz Aleksandria a oa o vond d'an Italia hag a lakeas anahom da zeval er bourz. -7- E-pad eun nebeuddevezioù ez ejom gouestadig, ha n'eo ket heb poan e tegouezjom dirag Knid, hag o veza m'or boa avel a-benn on-eus tremenet izelloh eged enez Kreta, troet warzu ar beg douar Salmone. -8- ha p'or-boa tremenet dirazañ e tegouezjom en eul leh anvet Porziou-mad tost da gêr Lasaya.

-9- Med eur pennad mad a amzer a oa tremenet ; mond er mor a zeue bremañ da veza riskluz, peogwir oa tremenet amzer ar yun. Paol a c'hoanteas lavared e zoñj : -10- «Mignoned, emezañ dezo, kavoud a ra din e tegouezzo gaou braz o vond er mor, ha n'eo ket hebken gand al lestr hag al lestrad, med iveau ganeomi. -11- Ar hantener, koulskoude, e-noa muioh a fizian a habitenn hag e kannad ar paramantour egod er pez a gemenne Paol. -12- Ha peogwir n'oa ket ar porz euz ar re wella evid goañvi, an darn vrasa a oa a-du da zistrei er mor, gweled e vefe hag e hellfed tizoud Feniz, eur porz euz enez Kreta troet d'ar mervent ha d'ar walarn, ha goañvi eno.

AR WALL AMZER

-13- eun ézennig a oa savet da c'hwezenza euz ar hreizteiz hag e soñje dezo e hellfent dont a-benn da zeveni o mennad ; an eor a oe savet hag e klaskjont mond a-hed aochou enez Greta. -14- Med raktal, koulz lavared, e tiollas warno, o tond euz an enezenn, eur gorventenn, an hini a anver «Eurakillon». -15- Al lestr a yeas gand an avel, heb gelloud herzel outi, hag o lezel da vond ez eem gand red ar mor. -16- Gand tiz e tremenjöm en izel d'eun enezennig anvet Klaoda, gellet on-eus koulskoude gand poan suja ar vagig. -17- P'or-boa savet anezi e rajom ar pez a hellêm gand ar pez or-boa : kelhia al lestr gand kerdin, ha gand aon da vond da ober pense war ar Sirtenn, lezel da gas an eor neuñ hag on-eus kendalhet evel-se da vond gand red ar mor. -18- Antronoz, peogwir e kendalhem da veza gwäll hejet gand ar wall-amzer e oe taolet fred er mêz. -19- Ha d'an trede deiz, ar vartoloded gand o daouarn o-unan a ziskaras ar herdin. -20- Abaoe meur a zevez ne veze gwelet nag heol, na steredenn. Ar gorventenn a bade ken gwaz ha biskoaz. Kollet or-boa peb fizian da veza saveeteet. -21- N'or-boa debret netra, pell a oa, pa zeugas Paol en e zav en o zouez da lavared dezo : «Gweled a rit, va mignoned, red e vefe bet deoh va zelaou : chom en enez Kreta kuit da gaoud ar gaou hag ar holloc on-eus bet. -22- Med bremañ e pedan anahon da jom kaloneg, rag hini ebed anahon ne gollo amañ e vuez, al lestr hebken a vo kollet ; -23- en noz-mañ, end-eeun, eun êl d'am Aotrou, an hini a zervichan a zo deuet dirazon, -24- hag e-neus lavaret din : «bez dienkrez, Paol, mond dirag an Impalaer a rankez ha Doue a ro dit dre hraz iveau buez ar re oll a zo war vor ganit». -25- Bezit kaloneg eta, mignoned, fizian am-eus e Doue, an traou a yelo evel m'eo bet lavaret din. -26- Steki a rankom war eun enezenn.

-27- D'ar pevarzegved nozvez, ha ni kaset ha degaset gand youl ar mor Adriantel, wardro hanter-noz, ar vartoloded a zeugas douetañs dezo, edom o tostaad ouz an douar en eun tu bennag ; -28- teurel a rejont ar zond hag e kavjont

ugent gourhedad ; eet eun tammig pelloh e sondjont adarre hag e kavjont pemzeg. -29- Gand aon da vezä taolet war eur garreg bennag e taoljont er mor peder eor ar penn-adrefîv ; mall braz o-doa da weled an deiz o tond. -30- Med, war zigarez delher al lestr war an eoriou araog, ar vartoloded a glaske tehed euz al lestr hag a lakee ar vagig er mor. -31- Paol a lavaras neuze d'ar hantener ha d'ar zoudarded : «Ma ne jom ket an dud-se er bourz, c'hwi ne helloh ket beza saveteet.» -32- Neuze ar zoudarded o deus trohet kerdin ar vagig ha lezet anezi da vond. -33 - Da hortoz an deiz, Paol a alias an oll da zebri ,«Setu, emezañ, ar pevarzegved devez m'emaoh en anken, war yun, -34- kredit ahanon, debrit bremañ, evid ho silvidigez eo an dra-ze. Eur wech c'hoaz, hini ebed ahanoh ne gollo eur vlevenn euz e benn.» -35- War gement-se e kemeras bara hag en em roas da zebri. -36- An oll neuze, deuet nerz kalon dezo adarre, a zebras d'o zro. -37- Daou hant c'hwezeg ha tri ument a oa ahanom en oll er bourz. -38- P'o-doa torret o naon, evid skañvaad ar vag e oe taolet ar gwiniz er mor. -39- Pa oe deuet an deiz, ar vartoloded ne anavezjont ket an douar, med gweled a rejont eun aod gand eur riblennad trêz, hag e tivizjont ma ve possabl dezo mond da steki eno. -40- Neuze o-deus lezet an eoriou da vond dre ar penn-araog, endra ma oe distaget ereou ar sturiou a-drefîv. Sevel a rejont neuze ar mizan ballouin hag o-deus skoet war-zu an aod. -41- Med steki a rejont en eun drêzenn, al lestr a jomas sanket eno, ar penn-araog spieg en trêz, e-keid ha ma oe distammet an diadreñv gand an tonnou. -42- Ar zoudarded a deuas dezo ar zoñj da laza ar brizonidi, gand aon na zeufent da dehed war neuñv. -43- Med ar hantener, c'hoant dezañ savetei Paol, a viras outo da zeveni o mennad ; d'ar re a ouie neuñve roas urz da lammed en dour da genta ha da vond en douar. -44- Ar re all her grafe war bleñch pe goatachou all euz ar vag. Hag evel-se eo e teguezjont oll en douar yah ha dibistig.

PAOL EN ENEZ MALT

XXVIII -1- Pa oem e savete, on-eus gouezet oa Malt ano an enezenn. -2- Tud ar vro a zo bet hegarad evidom, evel ral a gaver. Greet o-doa eun tan braz ha pedet ahanom da dostaad outañ, rag deuet oa ar glao da gouenza ha yen oa an amzer. -3- Paol e-noa dastumed eur vriad keuneud sêh, hag edo o teurel ar heu-neud en tan pa grogas en e zorn eun naer a oa teheth araog ar gwrez. -4- P'o-doa gwelet al loen-stlej a istrubill ouz e zorn, tud ar vro a lavare kenetrezo : «Heb douetañ ebed an den-se a zo eun torfedour, saveteet eo bet euz ar mor, med justis Doue ne lez ket anezañ da veva.» -5- Paol avad a hejas an naer en tan ha n'e-noe diêzamant ebed. -6- Int-i a oa o hortoz gweled anezañ o koeñvi pe o koueza maro-mik ; med goude beza gortozet hir amzer ha gwelet ne zégouez gantañ droug ebed, e cheñchjont soñj hag e lavarjont :«Eun Doue eo !»

-7- Demdost ahano ez oa douarou a oa d'an den a renk uhella a oa en enezenn, e ano Publius ; on degemeret e-noa ha roet repu deom, en eun doare hegarad, epad tri devez. -8- E dad a oa d'ar mare-se war e wele, klañv gand an derzienn hag ar red-korv. Paol a yeas d'e weled, ha dre ar bedenn hag oh astenn warnañ e zaouarn e pareas anezañ. -9- Goudeze e teuas beteg ennañ oll glanvourien all an enezenn hag e oent pareet ives. -10- Enoriou a beb seurt o-deus greet deom ha pa oem eet adarre er mor, o-doa pourveet d'on ezommou.

EUZ ENEZENN MALT DA ROM


-11- Tri Miz diwezatoh eo ez om eet adarre er mor e bourz eul lestr euz Alek-sandria, e arouez a oa an «Dioskoured», goañvet e-noa en enezenn. -12- Di-lestra rejom e Sirakouz, evid tri devez ehan. -13- Ahano, en eur vond ahed bord an douar, eh errujom e Reggio. Antronoz e c'hwezas an avel euz ar su hag e daou zeveziad e tegouezjom e Pouzol. -14- Eno e kavjom breudeur a bedas aha-nom da dremen eur zizunvez ganto. Setu aze penaoyez ez om eet da Rom. -15- Euz ar gêr-se e teuas en arbenn deom, beteg forum Appius hag an deir davarn, ar vreudeur o-doa klevet ez oam degouezet. Ouz o gweled, Paol a rentas gloar da Zoue. Fiziañs a zeuas dezañ en-dro. -16- Pa oem en em gavet e Rom e oe roet aotre da Baol da jom en e di e-unan gand eur zoudard evid e ziwall.


-17- Tri devez warlerh e pedas ar pennou braz euz ar Juzevien da zond dave-tañ. Pa oent degouezet e lavaras dezo : «Va breudeur, me, daoust n'am-eus greet netra a-eneb ar bobl, nag a-eneb al lezennou deuet deom digand on Tadou, a zo er prizon abaoe m'on bet lakeet e Jeruzalem etre daouarn ar Roma-ned. -18- Goude beza greet gouleñnou ouzin, e felle dezo rei din va frankiz, o veza ma n'oa netra war va hont hag a verite ar maro. -19- Med peogwir edo ar Juzevien a-eneb din, anñ-eus ranket gelver an Impalaer da varner, n'eo ket avad m'am-befe bet difiziañs euz tud va bro ; -20- setu perag am-eus goulenet ho kweled ha komz ganeoh, rag ablamoù da Esperañs Israel eo e tougan ar chadennou-mañ». -21- «Evidom-ni, emezo dezañ, n'on-eus resevet lizer ebed euz bro Judea diwar da benn ; hini ebed euz ar vreudeur a zegouëze amañ n'e-neus komzet deom euz eur skrid pe eur helou bennag a vefe fall evidout. -22- Med gouleñn a reom a-avad klevoud ahanout o tisplega, te, da-unan, ar pez a zo en da zoñj, rag evid ar pez a zell ouz da dreuz-kredenn, ni a oar e kav avel a-benn dirazi e peb leh».

-23- Deiziet e oe ar vodadenn, hag e teujont niverusoh c'hoaz d'al leh m'edo o loja. Dre e gomzou e rente testeni da rouantelez Doue, hag euz ar mintin beteg an noz e klaskas o degas d'ar feiz en eur gomz euz Jezuz azaleg lezenn Voizez hag ar brofeded. -24- Lod a oe desevet gand ar pez a lavare, lod all ne felle ket dezo kredi. -25- Pa zeuas ar mare dezo da vond kuit, n'oant ket deuet c'hoaz d'en em glevet Paol ne lavaras netra muioh, nemed an dra-mañ : «Pegen gwir eo komzou ar Spered Santel pa lavare d'on Tadou dre ar profed Izaias :

-26- Kee da gavoud ar bobl-se ha lavar dezi :
 Kaer ho-po kleved, ne intentoh ket
 Kaer ho-po sellid, ne weloh ket
 -27- Rag kaledet eo kalon an dud er vro-se,
 Pounner-glev int deuet da veza,
 Mouchet o-deus o daoulagad,
 Evid chom heb gweled gand o daoulagad
 Heb kleved gand o diskouarn
 Heb intent gand o halon
 Heb trei ouz Doue,
 Ha me a roio dezo ar pare..»

-28- Red eo deoh gouzoud eo d'ar bayaned eo bet kaset ar zilvidigez int-i a zelaouo -29-30- Epad daou vloaz penn-da-benn e vevas Paol evel-se, diwar e goust e-unan hag e roe degemer da gement-hini a zeue d'e gavoud. -31- Embann a ree rouantelez Doue, gand hardisegez ha gand frankiz e kelenne kement a zelle ouz Jezuz Krist an Aotrou.





LIZIRI
sant paol

LIZER d'ar Romaned



ROMANED

A-wel d'eur veaj e-neus soñj da ober e Rom heb dale war dro ar bloavez 57-58, Paol a gas al lizer hir-mañ d'an Iliz a zo er gêr-se, evid displega ar menosiou pouezusa euz e Aviel. Diskouez a ra eo dre ar feiz er Hrist, maro hag adsavet da veo, ha dre ar Vadeziant e teu an oll dud - hag int-i pêherien-, da vez a justizet hag e resevont ar Spered-Santel a ra dezo beva e bugale da Zoue frankizet euz al lezenn juzeo hag euz dalh ar pehed. Israel, gwir eo, ar bobl dibabet, n'eo ket deuet da heulia an urz-se a zilvidigez dre ar feiz: dre e faot eo ha n'eo ket dre faot Doue.

Ar pez a zo erruet, en a-beg d'an dinah-se, eo ez eo bet ar Helou Mad roet da anaoud buannoh d'ar bayaned.

Ouspenn, eun deiz a zeuio hag e vo salvet an Israel gwirion.

LIZER D'AR ROMANED

D'an oll dud vuia karet Doue a zo e Rom, peoh ha gras a-berz Doue.

I -1- Paol, servicher Jezuz-Krist, galvet da Abostol, dibabet evid Aviel Doue ; -2- an Aviel-se, bet embannet en araog gantañ dre ar brofeded ha dre ar Skrituriou sakr, -3- a zo diwarbenn e Vab, ganet hervez e natur-den euz gouenn David, -4- lakeet Mab da Zoue gand galloud, hervez Spered ar zantèlez dre e adsav a-douez ar re varo, eñ, Jezuz-Krist, on Aotrou. -5- Drezañ on-eus resevet ar hras da veza ebrestel ; deom-ni, evid enor e ano, da zegas on oll bayaned da zenithidigez ar feiz. -6- C'hwi ives a zo anezo hag a zo galvet gand Jezuz-Krist. -7- D'an oll dud vuia-karet Doue, o chom e Rom, kér hag a zo da Zoue, ha galvet da veza sent, deoh, gras ha peoh a-berz Doue an Tad hag an Aotrou Jezuz-Krist.

Paol ha kristenien Rom

-8- Da genta e lavaran bennoz d'am Doue,dre Jezuz-Krist evidoh oll, peogwir e vez embannet ho feiz dre ar bed a-bez. -9- Rag test eo Doue din, eñ hag a zervichan em spered o prezeg Aviel e Vab, e ran eñvor ahanoh heb ehan, -10- o houleñn atao em fedennou, m'am-bo dizale tro vad, eur wech, da vond beteg ennoh gand e volontez. -11- C'hoant braz am-eus d'ho kweled evid rei perz deoh en eun donezon spirituel bennag d'ho kennerza, -12- da lavared eo evid kaoud frealz en ho touez, an eil e ser egile dre ar feiz a zo ennom oll, hoh hini ha va hini. -13- Ne fell ket din, breudeur, e chomfeh heb gouzoud am-eus greet aliez ar menoz da vond beteg ennoh, - miret eo bet ouzin beteg henn, - evid das-tum eun tammig frouez en ho touez, koulz hag e-touez ar bayaned all. - 14- Dleour on e keñver ar Gresianed, hag ives ar Varbarec, e keñver an dud desket hag ives an dud dizesk. -15- Evel-se ema ennon ar menoz da brezeg an Aviel deoh-hwi ives a zo o chom e Rom. -16- Rag, n'am-eus mez ebed euz an Aviel, eun nerz euz Doue eo evid ar zilvidigez, evid an neb a gred, evid ar Juzeo da genta hag evid ar Gresian. -17 - Rag diskouezet eo ennañ justis Doue, euz ar feiz d'ar feiz, hervez ma 'z eo skrivet , «An neb a zo just, euz ar feiz e-no buez».

Pehed ar Bayaned

-18- Rag en em ziskouez a ra kounnar Doue euz lein an neñv war beb diffeizded, peb falloni an dud a zalh ar wirionez dindan galloud ar fallentez, -19- peogwir eo sklér enno ar pez a heller anaoud diwarbenn Doue, rag Doue e-neus henn diskleriet dezo. -20- Rag, ar pez ne heller ket gweled e Doue, abaoe m'eo krouet ar bed, a hell spered an den her gweled en e oberou , e halloud peurbadel hag e zoueelez. N'o-deus eta digarez vad ebed, -21- peogwir, daoust dezo anaoud Doue, n'o-deus rentet dezañ, e-giz Doue, na Gloar, na Trugarez. Er hontrol eo, dibiolet int bet en o divizou ha teñvaleet eo o halon diskiant. -22- Hag int-i, tud fur war o meno, a zo deuet da veza foll. -23- Troket o-deus Gloar an Doue divarvel ouz eur skeudenn heñvel ouz an den, ouz evned, anealed pevarzroadez, pe loened stlej. -24- Setu perag e-neus Doue o lezet gand youlou fall o halonou, d'en em rei d'an hudurnez a zizenor o horvou enno o-unan. -25- Int-i hag o-deus troket gwirionez Doue ouz ar gaou, adoret ha servichet an traou krouet e-leh ar Hrouer ; ra vez o hemañ benniget da virviken. Amen ! -26- Setu perag e-neus Doue o lezet da heulia c'hoantegeziou mezuz : o merhed o-deus troket darempredou hervez an natur ouz ar re a-eneb an natur. -27- Er memez doare, ar wazed, dilezet ganto an darempredou hervez an natur gand ar vaquez, entanet gand o youlou fall an eil evid egile, o-deus grêt traou mezuz, gwazed gand gwazed, en eur reseo ar gopr a oa red evid o diroll ; -28- hag o veza n'o-deus ket bet skiant da vired Doue dre an anaoudégez anezañ, e-neus Doue o lezet da vond d'o spered direiz, da ober ar pez ne dleent ket ober. -29- Leun int a beb zireisded, a fallagriez, a c'hoantegez diroll, a zrougiez, leun a avi, a vuntrez, a rendael, a douellerez, a falloni, a zrougprezegerez, -30- a wall vruderez ; enebourien da Zoue, dicheg, ourgouilluz, lorhuz, klaskerien droug, disent ouz o zud, -31- diskiant, disleal, digalon, didruez. -32- Daoust dezo anaoud mad me-noz Doue hag a ziskleir eo din a varo ar re em ro da zeurt traou, n'eo ket a-walh dezo ober anezo, med a-du emaint gand ar re a ra kement-se.

Barnedigez leal an Aotrou Doue

II -1- N'az-peus eta digarez vad ebed, te hag a varn, piou bennag e vefes, rag o varn ar re all, eh en em gondaonez da-unan, peogwir e rez kemend-all, te hag a varn. -2- Ha ni a oar mad, hervez ar wirionez, ez a barnedigez Doue a-eneb an dud a ra ar seurt traou-se. -3- Ha kredi a ra dit, te hag a varn ar re a ra an traou-se, hag a ra eveldo, e helli en em ziwall ouz barnedigez Doue ? -4- Ha dispriz az-pefe evid ar brokuz m'eo e vadelez, e largentez, e habaskted, heb dont da añzav e poulz e drugarez ahanout da jefich buez. -5- O veza ma'z out kaledet, ha ma ne jefich ket da galon, e tastumez evidout eur barrad kounnar a-benn an deiz ma tiskouezo Doue e gounnar hag e varnedigez just, -6- a rento da beb hini hervez e oberou : -7- buez peurbaduz d'ar re a glask gloar, enor ha treh d'ar maro,

o telher stard d'an oberou mad, -8- kounnar ha fulor d'ar re a zisent ouz ar wirionez hag a zent ouz ar falloni, -9- trubuill hag anken da gement hini a ra an droug, d'ar Juzeo da genta, d'ar Gresian da houde, -10- gloar, enor ha peoh da gement hini a ra ar mad, d'ar Juzeo da genta, d'ar Gresian da houde, -11- rag Doue ne ra da zen ebed diouz an doare anezañ, -12- rag ar re o-do pehet, heb al Lezenn, a yelo iveau heb al Lezenn da goll, ar re o-deus pehet dindan al Lezenn a vo barnet dre al Lezenn -13- rag n'eo ket ar re a zelaou al Lezenn eo a zo just dirag Doue, ar re a vir al Lezenn eo a vo kavet just. -14- Rag ar bayaned, int-i ha n'o-deus ket a Lezenn, pa viront, dre natur, gourhemennou al Lezenn, a zo evito o-unan eul Lezenn, int-i ha n'o-deus ket a Lezenn. -15- Diskouez a reont eo skrivet en o halon oberenn al Lezenn, a gement-se e ro o houstians iveau testeni, hag o zoñjou enno o-unan a zeu d'o zamall pe d'o dizamall, -16- evid an deiz ma teuio Doue, hervez va Aviel, da varn oberou kuzet an dud. -17- Med te, hag a zoug an ano a Juzeo, hag a laka da fiziañs el Lezenn ha da lorh e Doue, -18- te, hag a anavez e volontez hag a oar anaoud petra eo ar gwella, kelennet ma'z out gand al Lezenn, -19- te, hag a gred stard d'it beza heñicher an dud dall, sklerijenn ar re a zo en defñalijenn, -20- keleñner an dud dizesk, mestr-skol ar vugale, war zigarez m'az-peus al Lezenn, reolenn ar ouisiegez hag ar wirionez, -21- te, eta, hag a ro kelennadurez d'ar re all ha ne roez ket dit da-unan, te hag a brezeg eo divennet laerez ha da-unan, heugi a rez ouz an doueou faoz hag e laerez traou sakr, -23- da lorh a lakez el Lezenn hag e tizenorez Doue o vresa al Lezenn, -24- ablamour deoh e vez mallozet ano Doue e-touez ar bayaned, evel m'eo skrivet ; -25- talvoudeg eo evidout, sur a-walh an amdroh, ma virez al Lezenn, med ma torrez anezi, emaout deuet evel diamdroh, daoust dit beza amdrohet. -26- Ma teu, eta, eun den diamdroh da viret oberou mad al Lezenn, daoust hag e ziamdroñ ne dalvezo ket dezañ da amdroh ? -27- Hag hennez, diamdroh en e gorv, hag a vir gourhemennou al Lezenn, a varno ahanout-te, ha goude dit kaoud al Lezenn hag an amdroh, a zo eur breser Lezenn, -28- rag n'eo ket ar pez a weler eo a ra ar Juzeo, nag ar gleizenn a weler er horv eo a ra an amdroh, -29- med ar pez a zo kuz eo a ra ar Juzeo, hag an amdroh eo hini ar galon, hervez ar Spered ha n'eo ket hervez al Lezenn : eñ a reseo meuleudi, n'eo ket digand an dud, med digand Doue.

Disentidigez an dud

III -1- Petra eo eta emzav ar Juzeo ? Peseurt servich a ro an amdroh ? -2- Braz eo e peb doare ! Rag, da genta, enno eo bet fiziet lavarou Doue. -3- Ha petra 'ta ! Ma 'z eus bet lod difeiz, daoust hag o difeizded a gaso da fall fealded Doue ? -4- N'eo ket a-dra-zur ! Bez' ez eo Doue gwirion, ha gaouiad kement den a zo, evel m'eo skrivet : ra vezi anzavet just en da gomzou, ra hounezi pa vezi barnet. -5- Med ma teu or fallagriez deom-ni da lakaad da splannaad justis

Doue, petra 'lavarim ? Ha n'eo ket Doue fallagr, o lezel e gounnar da skei ? E-doare an dud eo e komzan. -6- N'eo ket a-dra-zur ! Rag neuze penaoz e varno Doue ar bed ? -7- Med ma 'z eo deuet gwirionez Doue diwar va gaou da splannaad evid e hloar, penaoz eta e vezin-me kondaonet evel peher ? -8- N'eo ket hervez ar pez a zo bet rebechet deom, nag hervez ar pez a zo bet tamallet deom : da lavared eo e rafem an droug evid ma teuio ar mad. Just eo d'ar re-ze beza kondaonet.

-9- Ha petra 'ta ? Ha bez' ez om tud dreist ? N'om ket a-dra-zur. Juzevien ha Gresianed, oll om bet en araog tamallet da veya dindan ar pehed, -10- evel m'eo skrivet : «n'eus den just ebed, n'eus ket eun unan, -11- n'eus den fur ebed, n'eus ket eun unan o klask Doue, -12- oll int troet fall hag eet da fall, n'eus den ebed oh ober ar mad, n'eus ket eun unan, -13- eur bez digor eo o horzaillenn, gand o zeod e hadont an douellèrèz, eur binim naer aspig a zo dindan o muzel-lou, -14- o genou a zo leun a valloziou hag a drenkadurez, -15- prim eo o zreid evid mond da skuill ar gwad, -16- war o hent ema ar rivin hag ar gwaleur, -17- hag euz hent ar peoh, n'o-deus anaoudègèz ebed, -18- n'ema ket doujañs Doue dirag o daoulagad.

-19- Hag, her gouzoud a reom, kement a lavar al Lezenn, d'ar re a zo dindan al Lezenn eo henn lavar, evid ma vo serret peb genou, ha ma sujo ar bed oll da varnedigez Doue, -20- rag ne vo justizet den ebed dirazañ dre oberou al Lezenn ; ne zeu, dre al Lezenn, nemed an anaoudègèz euz ar pèhèd.

Ar justis a zeu euz ar feiz

-21- Bremañ a-vad, heb al Lezenn, e-neus en em ziskleriet justis Doue : al Lezenn hag ar brofeded a zoug testeni dezi ; -22- justis Doue, deuet dre ar feiz d'ar re oll a gred, rag n'eus kemm ebed etre an dud ; -23- oll o-deus pehet, diouer o-deus oll a hrsas Doue, -24- med justizet int bremañ evid netra dre hrsas Doue, dasprenet ma'z int bet e Jezuz-Krist. -25- En eo e-neus o dibabet, pell araog, evid gounid truez Doue dre e wad, dre ar feiz evel-se e tiskouez Doue petra eo ar justis, o veya m'e-noa lezet digastiz ar pehejou a-wechall -26 - e amzer e bariant ; ha diskouez a ra e justis en amzer-mañ evid beza just e-unan hag evid justiza an neb e-neus feiz e Jezuz.

-27- Euz peleh tenna lorh? Ano ebed ! A-berz pe Lezenn ? Hini an oberou ? Tamm ebed, med a-berz Lezenn ar feiz, -28- rag ni a gred deom e teu an den dre ar feiz da veya justizet heb Lezenn an oberou, -29- Doue, hag en a vefe d'ar Juzevien kebken ? Daoust ha ne vefe ket iveau d'ar bayaned ? Eo a-vad, d'ar bayaned iveau, -30- peogwir n'eus nemed eun Doue hebken hag a justizo dre ar feiz an dud amdrohet, ha dre ar feiz an dud diamdroh. -31- Daoust ha terri a reom al Lezenn dre ar feiz ? N'her greom ket a-dra-zur, he startaad eo a reom.

Abraham, den a feiz

IV -1- Petra 'lavarim eta diwarbenn Abraham, on tad-meur, petra e-neus bet hervez an natur-den ? -2- Mar deo bet Abraham justizet dre e oberou, e-neus leh da fouseal, n'eo ket a-vad dirag Doue, -3- rag petra 'lavar ar Skritur ? Abraham a gredas e Doue hag e oe kontet an dra-ze dezañ da justis. -4- An hini a ra eun oberenn ne vez ket kontet ar gopr dezañ evel eun donezon med evel eun dra dleet ; -5- er hontrol, an hini ne ra oberenn ebed, med a gred en hini a zeu da justiza ar peher, e feiz a zo kontet dezañ da justis. -Evel-se David a gan eürusted an den a laka Doue ar justis en e gont heb delher kont euz e oberou : -7- «Eüruz an den ha ne zalho ket an Aotrou tamm kont ebed euz e behed».

-9- Daoust hag an eürusted a zo evid an dud amdrohet nemedken , pe iveau evid tud diamdroh ? Rag lavared a reom, eo bet kontet da Abraham e feiz da justis. -10- Penaoz eta eo bet kontet dezañ ? E stad an diamdroh pe e stad an amdroh? N'eo ket e stad an amdroh med e stad an diamdroh, -11- hag e resevas sin an amdroh evel siell ar justis a zeu dre ar feiz, resevet e stad an diamdroh ; evel-se e teuas da veza war eun dro tad an oll dud a gredo e stad an diamdroh evid ma vefe kontet dezo da justis, -12- ha tad ar re ha n'int ket bet amdrohet hebken, med a gerz war roudou feiz on tad-meur pa edo e stad an diamdroh, -13- rag n'eo ket dre al Lezenn e teuas da Abraham ha d'e lignez ar bromesa da gaoud ar bed da hêrèz, med dre justis ar feiz, -14- rag ma 'z eo heritour tud al Lezenn, dinerset eo ar feiz ha kaset ar bromesa da netra, -15- rag diwar al Lezenn e sav ar gounnar ; el leh n'eus ket a Lezenn ne vez ket breset al Lezenn.

-16- Diwar ar feiz eo eta e teuer da veza heritour, hag evel-se eo dre hrs, evid ma talvezo ar bromesa da lignez Abraham, eñ hag a zo tad d'an oll, -17- evel m'eo skrivet : «Grêt am-eus ahanout tad eun niver braz a boblou» ; tad eo dirag an Hini e-neus kredet ennañ, Doue, eñ hag a ro buez d'ar re varo, hag a halv da veza ar pez n'oa ket anezañ. -18- Eñ, oh esperoud, a-eneb peb espérañs, e-neus kredet, deuet eo da veza tad eun niver braz a boblou, hervez ar pez a oa bet lavaret dezañ : «evel-se e vo da lignez». -19- Heb bralla en e feiz e soñjas en e gory dinerset, - tost da gant vloaz e-noa, - hag e korrk dizeh Sara ; -20- Dirag promesa Doue, ne gouezas e douetañs ebed, med kennerzet e oe gand ar feiz, hag e rentas gloar da Zoue, -21- hag o veza ma krede stard e oa Doue gouest da zeveni e bromesa, -22- hag evel ma laver c'hoaz ar Skritur : «Ablamour d'e feiz e-neus Doue justizet anezañ». -23- Koulskoude, n'eo ket evid Abraham hebken eo bet skrivet kement-mañ : «kement-se a oe lakeet war e gont», -24- med evidom-ni iveau a zo war wel da veza lakeet ar feiz war or hont, peogwir e kredom en Hini e-neus savet Jezuz, on Aotrou, a-douez ar re varo, -25- roet evid or pehejou ha dasorhet evid ar justizadeg.

An den justizet hag e peoh gand Doue

V -1- Justizet eta dre ar feiz, bezom e peoh gand Doue dre Jezuz-Krist, on Aotrou, -2- roet e-neus deom kaoud perz, dre ar feiz, er hras m'emaom stard enni. Ol lorph eo hag on esperañs e gloar Doue. -3- N'eo ket hebken a-vad en on trubuillou zoken e lakom ol lorph, o houzoud e sav pasianted diwar an drubuill, -4- ha diwar ar basianted, vertuz amprouet, diwar vertuz amprouet, esperañs, -5- hag an esperañs ne ro ket a gerse, peogwir eo bet skuillet karantez Doue en or halon gand ar Spered Santel a zo bet roet deom. -6- Ya ! d'ar mare ma 'z oam c'hoaz dinierz, neuze, d'an eur merket gand Doue, e varvas ar Hrist evid tud dizakr; -7- rag a-veh e varvfed evid eun den just ; marteze evid eun den mad e kredfed mervel. -8- Doue a-vad a ziskouez fréz e garantez evidom ; mervel a reas an Aotrou Krist evidom d'ar mare ma 'z oam c'hoaz pehérien ; -9- kent-a-ze eta, bremañ, pa 'z om justizet dre e wad-dezañ, e vezim salvet gantañ euz ar gounnar ? -10- Ma 'z eo gwir, e oem bet lakeet e peoh gand Doue dre varo e Vab, kent-a-ze iveau, bremañ p'emaom e peoh gantañ, e vezim salvet dre e vuez, -11- gwelloh c'hoaz ! on lorph a lakom e Doue, dre or Zalver Jezuz-Krist, e-neus on lakeet bremañ dija e peoh gand Doue.

Adam ha Jezuz-Krist

-12- Ablamour da-ze, evel m'eo antreet ar pehed er bed dre eun den hebken, ha dre ar pehed ar maro, evel-se ar maro e-neus taget an oll dud en abeg m'o-deus oll pehet, -13- rag bez e oa pehed er bed araoig al Lezenn ; med ar pehed ne hell ket beza rebechet pa ne vez Lezenn ebed ; -14- koulskoude, renet e-neus ar maro azaleg Adam beteg Moizez, zokenn war ar re n'o-doa ket pehet o tisenti evel Adam, eñ hag a zo skeudenn an Hini da zond.

-15- Med kemm a zo etre ar pehed ha donezon ar hras, rag ma 'z eo marvet an oll dud dre behed unan hebken, eo deuet war an oll dud gras Doue hag e zonezon dre hras eun den hebken : Jezuz-Krist -16- hag etre an donezon ha pehed unan hebken ez eus kemm : pehed unan hebken a ra kondaoni, med gras Doue a lam pehejou niveruz evid ar justizadeg, -17- rag evel m'eo deuet ar maro da ren dre unan hebken, dre faot unan hebken, e tevio kalz muioh c'hoaz ar re a reseo puill gras ha donezon ar justis da ren dre unan hebken, dre Jezuz-Krist.

-18- Evel m'eo deuet eta an oll da veza kondaonet dre faot unan hebken, evel-se iveau, oberenn justis unan hebken a zegas d'an oll eur justizadeg a ro buez. -19- Rag m'eo bet lakeet an oll da veza peher dre zisentidigez unan hebken, evel-se iveau e vo lakeet an oll da veza just dre zentidigez unan hebken.

-20- Al Lezenn a zo antreet da lakaad ar pehed da vond war wasaad, med el leh m'eo eet ar pehed war wasaad, eo bet ar hras kalz puillioh c'hoaz. -21- En doarese, evel m'e-noa renet ar pehed evid ar maro, evel-se e ren ar hras dre ar justis evid ar vuez peurbaduz, dre Jezuz Krist, on Aotrou.

MERVEL HA BEVA GAND JEZUZ

VI -1- Ha petra lavared neuze? Ha chom a raim er pehed evid ma vo puilloh ar hrs? -2- Ne raim ket! Peogwir ez om, ni oll, marvet d'ar pehed, penaoz e vevfem c'hoaz ennañ? -3- Ha n'ouzoh-c'hwi ket eta, eo en e varo eo ez om bet badezet, ni oll hag a zo badezet e Jezuz Krist ? -4- Sebeliet om bet eta a-unan gantañ er maro dre ar Vadeziant evid ma renfem ni iveau evez nevez, evel m'eo adsavet da veo an Aotrou Krist dre hloar an Tad; -5- ha ma 'z om bet imboudet warnañ en eur maro hefivel ouz e hini, e vezim iveau en eun adsao da veo hefivel ouz e hini.

-6- Goud a reom: an den koz ennom a zo staget ouz ar groaz a-unan gantañ evid ma vefe dinerzet an natur-den douget d'ar pehed ha ne vefem mui sklaved d'ar pehed, -7- rag an neb a zo maro a zo frankizet euz ar pehed. -8- Med ma 'z om tremenet dre ar maro gand ar Hrist, e kredom e vevim iveau gantañ. -9- Rag her gouzoud a reom : an Aotrou Krist, adsavet da veo a-douez ar re varo ne varv mui; ar maro warnañ ne ra mui e vestr. -10- Rag, eñ hag a varvas, a varvas d'ar pehed, eur wech evid mad; -11- evel-se, c'hwi iveau, sonjitet oh maro d'ar pehed hag e vevit evid Doue e Jezuz Krist.

-12- Ne reno eta mui ar pehed war ho korv marvel, o lakaad ahanoh da blega d'e youlou. -13- Na rit ket euz hoh izili armou a falloni evid ar pehed, med en-em ginnig hoh-unan da Zoue evel tud beo savet a-douez ar re varo ha kinnig hoh izili, evel armou ar justis, da Zoue. -14- Rag ar pehed ne vo ket mestr deoh, peogwir n'emaoh ket dindan al Lezenn, med dindan ar hrs.

-15- Ha petra neuze? Ha pehed a raim, peogwir n'emaom ket dindan al Lezenn, med dindan ar hrs? Ha n'eo ket avad! -16- Ha n'ouzoh ket an dra-mañ: oh en-em ginnig evel sklaved evid senti, e vezit sklav an hini a zentit outañ, pe ar pehed evid ar maro, pe ar zentidigez evid ar justis.

Meuleudiou da Zoue

-17- Gras Doue eo: sklav ma 'z oah d'ar pehed, ho-peus sentet a-greiz kalon da reolenn ar gelennadurez ez oh bet fiziet enni; -18- frankizet euz ar pehed ez oh deuet da zervicha ar justis, -19- Komz a ran deoh e-doare an dud, ablamour ma 'z eo dinerz ho natur-den, evel m'ho-peus kinnig hoh izili evel sklaved an hudurnez hag an dizurz, evid an dizurz, evel-se kinnig bremañ hoh izili evel sklaved ar justis evid ar zanteler. -20- Pa oah sklaved d'ar pehed, e oah frank e-keñver ar justis ! -21- Ha peseurt frouez eta a zeue deoh neuze? Mez ho-peus anezo bremañ, rag o zermen eo ar maro; -22- bremañ a-vad, frankizet euz ar pehed ha deuet da veza sklaved da Zoue, c'hwi ho-peus douget frouez evid ar zanteler hag an termen eo ar vuez peurbaduz. -23- Rag gopt ar pehed eo ar maro, med donezon Doue eo ar vuez peurbaduz dre Jezuz Krist, on Aotrou.

AR HRISTEN FRANKIZET EUZ AL LEZENN

VII -1- Ha n'ouzoh-hwi ket, breudeur, - da dud gouizieg war al lezenn eo e komzan,- eo al lezenn mestrez an den e-keid ha ma vev? -2- Rag ar vaouez dimezet a zo sujet d'he gwaz, dre al lezenn e-keid ha m'eo eñ beo, med ma teu avad d'ar gwaz mervel, ema-hi frankizet euz al lezenn e-keñver he gwaz. -3- Evel-se eta ma teu dezi mond gand eur gwaz all e-pad m'eo beo he gwaz, e vo greet avoultrerez anezi, med ma teu d'he gwaz mervel, e vo hi frankizet euz al lezenn e-doare ma ne vo ket avoultrerez en eur vond gand eur gwaz all. -4- Evel-se, c'hwi iveau, breudeur, a zo marvet d'al lezenn dre gorv an Aotrou Krist, evid beza da unan all, d'an Hini a zo savet a varo da veo evid ma tougfem frouez evid Doue. -5- Pa vevem hervez an natur-den, e laboure en on izili youlou fall or pehejou, diwar goust al Lezenn, da ober deom dougen frouez a varo. -6- Bremañ a-vad om bet frankizet euz al Lezenn, marvet ma 'z om d'ar pez on dalhe sujet, deom da zervicha e-doare nevez ar Spered ha n'eo ket e-doare koz al lezenn.

Kefridi al Lezenn

-7- Petra lavarim eta? Daoust ha pehed e vefe al Lezenn? N'eo ket a-dra-zur! Med n'am-eus bet anaoudegez euz ar pehed nemed dre al Lezenn, rag n'am bije ket anavezet ar c'hoantegéz fall, ma n'he dije ket lavaret al Lezenn :«arabad dit c'hoantaad e fall». -8- Tro a gemeras ar pehed da zila ennon peb c'hoantegéz fall dre ar gourhemenn; rag heb al Lezenn eo maro ar pehed. -9- Me a-vad a veve heb lezenn gwechall. Med erruet ar gourhemenn, ar pehed a zo deuet a-darre buez ennañ, -10- me a-vad a zo marvet. Evidon, ar gourhemenn, -douget eñ evid ren d'ar vuez, - a zo degouezet dezañ kas ahanon d'ar maro. -11- Rag ar pehed, kemeret tro gantañ dre ar gourhemenn, e-neus va zouplet ha kaset ahanon drezañ d'ar maro. -12- Evel-se, santel eo al Lezenn; santel, just ha mad ar gourhemenn.

An den dindan ar pehed

-13- Deuet e vefe eta an dra vad da veza eur maro evidon? N'eo ket a-dra-zur, med ar pehed eo; evid en-em ziskleria pehed, gand eun dra vad e-neus roet din ar maro, evid ma teufe ar pehed da veza drougoberiu en e wasa dre ar gourhemenn. -14- Rag goûd a ouzom eo speredel al Lezenn; me ia-vad a zo denel, gwerzet evel sklav d'ar pehed. -15- Ne intentan ket ar pez a ran : ar pez am-eus c'hoant da ober, ne ran ket, med ober a ran ar pez a gasaan. -16- Ma ran eta ar pez n'am-eus ket c'hoant da ober, eh anzavan gand al Lezenn eo hi mad. -17- Neuze, n'eo ket ken me eò a ra kement-se, med ar pehed a zo o chom ennon. -18- Rag goûd a ran, n'ema ket ar mad o'chom ennon, -lavaret a ran em natur-den, - c'hoant da ober ar mad a zo em galloud, med henn ober n'ema ket, -19- rag ne ran ket ar mad am-eus c'hoant da ober, med ober a ran an

droug n'am-eus ket c'hoant da ober. -20- Ma ran eta ar pez n'am-eus ket c'hoant da ober, n'eo ket me eo her gra, med ar pehed a zo o chom ennon. -21- Me hag am-eus c'hoant da ober ar mad, a gav eta al lezenn-mañ : an droug eo a zo em galloud, -22- rag plijout a ra din Lezenn Doue hervez va galloud-den, -23- med em izili e welan eul lezenn all o stourm a-eneb lezenn va spered, hag o telher ahanon e gwask dindan lezenn ar pehed a zo em izili. -24- Eun den maleüruz ez on-me eta. Piou am diframmo euz an natur-den-se hag a gas d'ar maro? -25- Gras Doue dre Jezuz Krist on Aotrou ! Setu me va-unan a zouj Lezenn Doue dre ar spered, ha lezenn ar pehed dre an natur-den.

BEZA FRANKIZET DRE AR SPERED

VIII -1- Bremañ eta n'eus mui a gondaonedigez evid ar re a zo e Jezuz Krist, -2- rag Lezenn ar Spered hag a ro buez he-deus da frankizet euz al Lezenn, ar pehed hag ar maro, -3- ar pez n'helle ket ober al Lezenn, -dihalloud e oa dre an natur-den-, Doue a-vad, o kas e Vab e-unan en eur stad heñvel ouz an natur-den a behed ha diwar-benn ar pehed, Doue e-neus kondaonet ar pehed en natur-den, -4- evid ma vo sevenet penn-da-benn justis al Lezenn ennom-ni hag a gerz, n'eo ket hervez an natur-den, med hervez ar Spered.

-5- Rag ar re a vev hervez an natur-den, int-i a blij dezo traou an natur-den' med ar re a vev hervez ar Spered, int-i a blij dezo traou ar Spered, -6- rag plijadureziou an natur-den a gas d'ar maro, ha plijadureziou ar Spered a zo buez ha peoh, -7- peogwir plijadureziou an natur-den a ya a-eneb Doue, rag ne zout-jont ket Lezenn Doue, n'hellont ket zoken henn ober; -9- c'hwi a-vad, ne vevit ket hervez an natur-den, med hervez ar Spered, ma 'z eo gwir ema Spered Doue o chom ennoh, med an hini n' e-neus ket Spered an Aotrou Krist , hennez n'eo ket dezañ. -10- Mar dema eta an Aotrou Krist ennoh, ar horv a zo sujet d'ar maro, ablamour d'ar pehed, med ar Spered a zo buez ablamour d'ar justis, -11- ha ma chom ennoh Spered an Hini e-neus adsavet Jezuz a-douez ar re varo, hennez hag e-neus adsavet an Aotrou Krist euz a varo da veo, a roio buez iveauz dre ar Spered a zo o chom ennoh, d'ho korvou marvel.

-12- Dleour om eta, breudeur, med n'eo ket d'on natur-den evid beva hervez an natur-se, -13- rag ma vevit hervez an natur-den, e kerzoh d'ar maro, med, ma kasit d'ar maro, dre ar Spered, oberou an natur-den, c'hwi a vevo; -14- ar re oll a vez renet gand Spered Doue, a zo bugale da Zoue, -15- rag n'ho-peus ket resevet adarre eur spered a sklav evid beva en aon, med resevet ho-peus Spered ar mibien perhennet a laka ahanoh da grial : Abba! Tad! -16- Ar Spered-Santel e-unan gand or spered-ni , a ro testeni ez om bugale da Zoue, -17- ma 'z om bugale ez om iveauz kenheritourien gand an Aotrou Krist, ma 'z eo gwir e houzañvom poaniou a-unan gantañ evid kaoud perz a-unan gantañ en e hloar.

- 18- Rag me a zoñj din, n'eo ket poaniou an amzer-mañ par d'ar hloar a zo o vond da veza diskleriet ennom. -19- O hortoz ema ar grouadélez, gand ar brasa mall, an diskleriadur-se euz bugale Doue, -20- rag dindan douellerez eo bet la-keet ar grouadélèz, - n'eo ket dre e youl, med dre halloud an Hini e-neus he la-keet-, gand an esperâns -21- e vezò ivez ar grouadelez heh-unan er stad-se, frankizet euz sklavaj an dirolladur evid kaoud frankiz ha gloar bugale Doue. -22- Rag her gouzoud a reom, ar grouadelez a-bez a zo o hirvoudi hag o hou-zañv poaniou ar gwilioudi beteg bremañ, -23- n'eo ket hi hebken, med ni i-vez hag on-eus donezon kenta ar spered, ni ivez a zo o huanadi ennom on-u-nan da hortoz ma vefem perhennet bugale da Zoue ha dasprenet on natur-den, -24- rag en esperâns hebken om bet salvet, hogen esperoud en eur weled, n'eo ket ken an esperâns, rag an hini a wel, penaooz dezañ esperoud? -25- Med ma'h esperom ar pez na welom ket, kement-se a hortozom gand pasianted.
- 26- Evel-se, ar Spered ivez a skoazell or zempladurez, rag n'ouzom ket gou-lenn er bedenn evel m'eo dleet. Med ar Spered e-unan a asped evidom gand hua-nadennou diéz da zisplega. -27- An hini a wel e goueled ar halonou a oar me-noziou ar Spered, peogwir e ped hervez Doue evid ar zent.
- 28- Her goûd a ouzom, evid ar re a gar Doue e tro peb tra d'o mad, galvet ma 'z int bet hervez e venoz, -29- rag ar re e-neus anavezet a-ziarao, e-neus ivez merket a-ziarao da zond da veza heñvel ouz skeudenn e Vab, evid ma vo he-ñañ ar henta euz eun niver braž a vreudeur, -30- ar re e-neus anavezet a-ziarao, ar re-se ivez e-neus galvet, ar re e-neus galvet, ar re-se ivez e-neus justizet, ar re e-neus justizet, ar re-se ivez e-neus karget a hloar.

MEULGAN DA GARANTEZ DOUE

- 31- Petra lavarim goude-ze? Mar dema Doue ganeom, piou a vo a-eneb deom?
- 32- Eñ avad n'e-neus ket damantet d'e Vab dezañ e-unan, evidom oll e-neus ro- et anezañ. Penaooz war eun dro gantañ ne rofe ket deom an oll hrsasou? -33-Piou a damallo an dud galvet gand Doue p'ema Doue o justiza anezo? -34- Piou a gondaono, pa 'z eo Jezuz Krist marvet, gwelloh c'hoaz, adsavet da veo, eñ hag a zo en tu dehou da Zoue, hag a asped evidom?
- 35- Piou on distago diouz karantéz an Aotrou Krist? Ar waskérèz, an anken, an heskinérèz, an naon, an dienez, ar riskl, ar hlez? -36- Hervez m'eo skrivet: «Ablamour dit-te e vezim lakeet d'ar maro a-hed an deiz, kemeret evid deñved mad d'ar gigérèz». -37- N'eo ket! E kement-se ema ouspenn an treh ganeom dre an Hini e-neus or haret.
- 38- Ya ! Sur om euz kement-mañ ! Nag ar maro, nag ar vuez, nag an élez, nag an oll galloudegeziou kuzet, nag an amzer a-vremañ, nag an amzer da zond,
- 39- nag ar stered, nag an neñvou, nag an donderiou, na tra krouet ebed, ne-tra ne hello on distago diouz karantez Doue a zo e Jezuz Krist on Aotrou.

ISRAEL DIBABET GAND DOUE HA DIZENT OUTAN

IX -1- Ar wirionez a lavaran en Aotrou Krist, ne lavaran ket a hevier, o veza ma rent iveau va houstiañs testeni din er Spered Santel. -2- Eur hlahañ vraz am-eus hag eur boan dibaouez a zo em halon, -3- rag me va-unan, a garfe mond da goll, distag diouz Jezuz Krist, evid mad va breudeur a ouenn hervez an natur-den, -4- int-i hag a zo bugale Israël, dezo ar hrsas da veza perhennet, dezo ar hloar, an emgleviou, al Lezenn, dezo al lidou sakr, ar promesaou, -5- dezo an tadou-meur, hag anezo, hervez an natur-den, eo ganet an Aotrou Krist, eñ hag a zo dreist peb tra, Doue benniget da viken. Amen !

-6- N'eo ket a-vad eet da fall komz Doue, rag n'int ket Israël, ar re oll a zo euz gouenn Israël, -7- ha n'eo ket ablamour ma 'z int euz lignez Abraham eo ez int oll bugale dezañ, -8- med dre Izaag e savo dit eul lignez : evel-se n'eo ket ar vu-gale hervez an natur a zo bugale da Zoue, med n'eus nemed bugale ar bromesa da veza kontet evid lignez; -9- setu amañ komzou ar bromesa : «d'ar mare-mañ e teuin endro hag he-do Sara eur mab». -10- Kaeiroh c'hoaz gand Rebeka dou-gèrèz euz gevelled euz on Tad-meur Izaag, -11- a-raog dezo beza gānet, araog dezo beza greet netra, mad pe fall, evid ma chomfe mennad Doue savet diwar e zibab, -12- stag, n'eo ket ouz an oberou, med ouz an Hini a halv, e oa lava-ret dezi: ar brasa :a zujo d'ar bianna», -13- hervez ma 'z eo skrivet : «karan-tez am-eus bet ouz Jakob ha kas ouz Ezaü».

-14- Petra lavarim? Daoust ha mankoud a rafe Doue d'ar justis? Ne ra ket a-dra-zur! -15- Rag lavared a ra Moïzez: «trugarez am-bo ouz an hini a blij d'in kaoud trugarez outañ, ha truez am-bo ouz an hini a blij d'in kaoud truez outañ»; -16- evel-se eta ne zeu ket kement-se diwar bolontez an den na diwar e oberou, med diwar trugarez Doue. -17- Rag lavared a ra ar Skritur d'ar Faraon: «Evid kement-mañ am-eus da halvet, evid diskouez ennout va galloud hag evid ma vo embannet va ano dre ar bed a-bez», -18- Evel-se eta, e-neus truez ouz an hini a fell dezañ hag e laka da galedi an hini a fell dezañ.

-19- Te lavarou neuze : perag dezañ klemm c'hoaz, rag d'e volontez piou e-neus dalhet penn? -20- Piou ez out eta, o den, evid rebarbi ouz Doue? Daoust hag an oberenn a lavarou d'ar micherour: perag az-peus greet ahanon evel-se? -21- Daoust ha n'eo ket ar poder mestr war e bri-prad, evid ober gand ar memez tamm eul lestr a briz hag eul lestr disterroh? -22- Ha m'e-neus Doue, gand ar c'hoant da ziskouez e gouunnar ha da rei da anaoud e halloud, gouzañvet gand kalz a basianted, listri a gouunnar dare da vond da goll, -23- ha kement-se iveau evid rei da anaoud braster a hloar e-keñver al listri a drugarez e-noa preparet en araog evid e hloar. -24- Rag ni, bet galvet gantañ, n'eo ket hebken a-douez ar Juzevien, med c'hoaz a-douez ar bayaned. -25- Evel ma lavar dre Ozea : «An hini n'oa ket va fobl, a anvin va fobl, hag an hini n'oa ket ar vuia-karet a anvin ar vuia-karet»; -26- hag el leh m'oa bet lavaret dezo : «N' oh ket va

fobl», e vezint anvet mibien an Doue beo-buezeg. -27- Izaiäz, diouz e d'embann diwarbenn Israël : «Goude ma vefe mibien Israël par da drézei, ar mor, ar restad eo a vezó salvet», -28- hag an Aotrou a zeveno e Gomz krak-ha-berr war an douar, -29- evel m'e-neus iveau diouganet Izaiäz : «M'e-nije ket an Aotrou, Doue an Armeou, dalhet deom eur restad a lignez, e vijem deuet da vezá par da Zodom hag heñvel ouz Gomor».

-30- Petra da lavared 'ta? Kement-mañ: ar bayaned int-i ha n'edont ket war glask euz ar justis, o-deus resevet ar justis, ar justis euz ar feiz. -31- Med Israel o klask eul lezenn a justis euz an oberou, n'e-neus ket kavet eur seurt lezenn, -32- ha perag? O klask ar justis euz an oberou, ha n'eo ket euz ar feiz, e-neus strebotet ouz ar mén-skoill; -33- hag evel m'eo skrivet : « Setu ma lakan e Sion eur mén strebotérèz, eur mén-skoill hag an hini a gred ennañ n'e-no ket da gaoud mez».

AR MEMEZ DOUE O-DEUS AR JUZEVIEN HAG AR BAYANED

X -1- Breudeur, c'hoant va halon ha va-fedenn evito eo e vefent salvet, -2- rag test on o-deus int-i gred evid Doue, med n'eo ket hervez ar ousiegez, -3- rag o tianaoud justis Doue, hag o klask seveni o hini o-unan, n'o-deus ket pleget da justis Doue; -4- termen al Lezenn eo an Aotrou Krist evid ma vo justizet kement den a gred, -5- rag Moïzez a skriv diwarbenn ar justis a zeu euz al Lezenn: «an den he miro a vevo drezi» .

-6- Med ar justis a zeu euz ar feiz a gomz evel-henn : «Na lavar ket en da galon: piou a bigno d'an neñv», an dra-se a vije lakaad ar Hrist da ziskenn anezañ ; -7- na kennebeud : piou a ziskenno en islong, an dra-se a vije lakaad ar Hrist da zevel a-douez ar re varo. -8- Petra 'lavar eta? «Tost dit ema ar Gomz, war da deod hag en da galon», da lavared eo, komz ar feiz a embannom, -9- rag ma teu dit anzav gand da deod, eo Jezuz an Aotrou, ha kredi en da galon e-neus Doue savet anezañ a-douez ar re varo,, e vezi salvet, -10- rag kredi a wir galon a ren d'ar justis, ha diskleria ar feiz gand an teod, a ren d'ar zilvidigez. -11- Rag lavared a ra ar Skritur : « An hini a gred ennañ n'e-no ket a gerse», -12- rag n'eus kemm ebed etre eur Juzeo hag eur Gresian, rag oll o-deus ar memez Aotrou, brokuz e-keñver ar re oll a halv anezañ, -13- rag kement hini a halv ano an Aotrou a vo salvet.

-14- Penaoz e halvint an Hini n'o-deus ket kredet ennañ, ha penaoz e kredit heb na ve embann ebed? -15- Ha penaoz eh embannint ma ne vezont ket kaset, evel m'eo skrivet : «Na kaer eo treid ar re a embann ar helou mad!» -16- Med n'o-deus ket sentet oll ouz an Aviel, rag Izaiäz a lavar: «Piou e-neus kredet o selaou ahanon?» -17- Ar feiz eta a zeu dre ar brezegèrèz hag ar brezegèrèz diwar komz an Aotrou Krist.

-18- Lavared a ran eta : daoust ha n'o-deus ket klevet? - Eo! «Dre ar bed a-bez eo eet trouz o mouez hag o homzou beteg penn pella ar bed», -19- hag e lavaran : ha n'e-nije ket bet Israel anaoudégèz ? Moïzez en da genta a lavar : «Mé raio dezo avia ar re n'int ket eur bobl, ha kaoud droug ouz eur bobl diskiant». -20- Izaïaz a gred lavared : «Kavet on bet gand ar re n'edont ket ouz va hlaske, en em ziskouezet am-eus d'ar re ne glaskent netra euz va ferz.» -21- Da Israël eta e lavar: «A-hed an deiz am-eus astennet va daouarn warzu eur bobl diskredig ha disuj.»

N' E-NEUS KET DOUE DILEZET ISRAEL

XI -1- Lavared a ran eta : Daoust ha Doue e-neus troet kein d'e bobl? N'e-neus ket a-dra-zur! Rag me va-unan a zo Israelad, euz lignez Abraham, euz meuriad Benjamin. -2- Doue n'e-neus ket troet kein d'e bobl e-noa anavezet en araog. Ha n'ouzoh ket petra 'lavar ar Skritur dre Eliaz, pa glemm ouz Doue a-eneb Israël ? -3- « Aotrou, lazet o-deus ar brofeded, dismantret da aoteriou, ha setu m'on bet lezet va-unan, hag e klaskont va lakaad d'ar maro. » -4- Ha petra 'lavar dezañ mouez Doue? « Dalhet am-eus evidon. eur restad a zeiz mil den, ar re n'o-deus ket pleget o glin dirag Baal ». -5- Evel-se eta en amzer-mañ iveau ez eus savet eur restad dibabet dre hrsas, . -6- M'ar deo dre hrsas, n'eo ket hervez an oberou; a-hend-all ar hrsas n'eo ket mui gras.

-7- Petra' ta? N'eo ket deuet Israël da gavoud ar pez a glask, ar re zibabet avad a zeu deuet a-benn, hag ar re all a zo deuet da galedi, -8- hervez m'eo skrivet : « Dezo e-neus roet Doue eur Spered poud, daoulagad evid chom heb gweled, diskouarn evid chom heb kleved, beteg an deiz a hirio ». -9- David a lavar: « Ra vo o zaol eur pej evito, eur roued, eur mén skoill hag eur hastiz; -10- ra zeuio o daoulagad da deñvalaad, evid chom heb gweled; gra d'ho hein plega dalhmad ».

-11- Hag e lavaran eta : « Daoust ha n'o-deus ket streboret evid koueza da vad? Nann a-dra-zur ! Med dre o fehed eo deuet ar bayaned d'ar zilvidigez evid lakaad Israël da avia anezo; -12- hogen, m'e-neus o fehed degaset pinvidigez d'ar bed hag o diskar pinvidigez d'ar bayaned, petra 'c'hoarvezo pa vezint distro da vad? -13- Deoh- 'hwi ar bayaned e lavaran, e kement ha má 'z on abostol ar bayaned, eh enorin va ministrèrèz -14- evid ma lakin, mar deo posUBL, tud va gouenn da gaoud avi ha ma salvin lod anezo, -15- rag m'e-neus o distaoL greet emgleo ar bed, petra vo pa vint degemeret en-dro? Netra nemed ar vuez o tond a-douez ar re varo.

-16- Mar deo santel an tamm kenta, santel eo iveau an toaz a-bez, ha mar deo yah ar wrizienn, yah iveau ar skourrou. -17- Mar deo bet distaget lod euz ar skourrou, te a-vad, olivez houez ma 'z oas, a zo bet imboudet warno, ha deuet da veza lod ganto e gwrizienn hag e seo druz an olîvezenn. -18- Ne da ket da

ober fae war ar skourrou distaget; ma teufe dit disprijoud anezo, dalth soñj n'eo ket te eo a zoug ar wrizienn, med ar wrizienn eo a zoug ahanout. -19- Te 'lavaroo moaravad: skourrou a zo bet distaget evid ma vefen-me imboudet. -20- Mad-tre! Distaget int bet dre o diouer a feiz, ha te a-vad dre ar feiz eo e talhez mad, diwall ouz soñjou lorhuz, bez en aon kentoh; -21- rag m'ar deo bet Doue dizamant ouz ar skourrou natur', e vezoo iveau dizamant ouzit-te. -22- Gwel eta madelez ha ruster Doue : ruster diouz eun tu e-keñver ar re a zo kouezet, madelez en da geñver-te, ma chomez er vadélèz-se ha-hend-all e vezi distaget teivez. -23- Med int-i iveau, ma ne jomont ket en diskred, a vezoo imboudet iveau, rag gouest eo Doue d'o imboudi endro. -24- Rag ma 'z out te bet distaget diouz eun olivezenn houez dre natur ha ma 'z out bet imboudet, a-eneb natur, war eun olivezenn vad, kalz gwelloh e vo ar re-mañ imboudet hervez natur war o olivezenn dezo o-unan.

-25- Rag ne fell ket din, breudeur, e chomfeh heb kaoud anaoudegez euz ar mister-mañ, gand aon na gredfeh beza fur drezoh hoh-unan; kaledet eo bet lod euz Israel, beteg ma vo antreet ar braz euz ar bayaned, -26- hag evel-se Israel a vo salvet evel m'eo skrivet: euz Sion e teuio ar frankizer, pellaad a raio ar falagriez diouz Jakob; -27- hag evel-se e vo an emgleo a rin ganto pa lamin o fehejou».

-28- Hervez an Aviel ez int enebourien ablamour deoh, hag hervez galvadenn Doue ez int karet ablamour d'an tadou-meur, -29- rag n'eus keuz ebed da zonezonou ha da halvadenn Doue, -30- rag evel m'ho-peus disentet gwechall ouz Doue, ha bremañ kavet truez ablamour d'o disentidigez dezo, -31- evel-se int-i iveau a zo disent bremañ, ablamour ma 'z eus bet truez ouzoh, evid ma vo evel-se iveau truezet outo bremañ. -32- Rag lakeet e-neus Doue an oll dud e dalth an disentidigez evid kaoud truez outo oll.

-33- Na pegen don eo pinvidigez, furnez ha skiant Doue, nag ez eo dreist galloud furchall e zivizou hag heulia roudou e venoziou! - 34- Rag piou e-neus anavezet menoz Doue? Piou 'zo bet o kuzulia anezañ? -35- Piou e-neus roet dezañ da genta hag a resefe gopr digantañ? -36- Rag anezañ, drezañ hag evitañ eo peb tra, dezañ ar hloar da virviken. Amen !

AR VUEZ NEVEZ

XII -1- Breudeur, ho pedi stard a ran eta, dre drugarez Doue, da ginnig ho korv evel eur brovadenn veo, santel, plijuz da Zoue: setu aze evidoh an azeulèrèz speredel. -2- Arabad deoh kemeret doare ar bed a-vremañ, med ra vo cheñchet ho stumm dre an nevezadur euz ho spered, deoh neuze da anaoud sklêr petra eo bolontez Doue, ar pez a zo mad ha plijuz dezañ ha kaer meurbed.

-3- Rag en aho ar hrsas a zo bet roet din, e lavaran da beb hini ahanoh : árabad deoh kaoud soñjou uhelloc eged n'eo dleet; red eo kaoud soñjou en doare ma vint soñjou fur, peb hini hervez ar muzul a feiz a zo bet roet dezañ gand Doue.
 -4- Rag evel m'on-eus izili niveruz en eur horv hebken ha ne ra ket an oll izili-se ar memez tra, -5- evel-se, daoust deom beza niveruz, n'ez om-ni nemed eur horv en Aotrou Krist, o veza ma 'z om peb hini ahanom ezel an eil euz egile..
 -6- Donezonou disheñvel on-eus a-vad hervez ar hrsas a zo bet roet deom: Mar deo ar brofediez, o heulia reolenn ar feiz; -7- mar deo donezon ar zervich, o servicha; mar deo an donezon a gelenner, o kelenn; -8- mar deo an donezon a guzulier, o kuzulia; mar deo an donezon a aluzenner, o rei en onestiz; an donezon a rener, o ren gand aked; an donezon a vadoberour, oh ober vad gand joa.

-9- Ra vo ar garantez heb trubarderez, tehit diouz an droug gand euz, bezit stag ouz ar mad. -10- Kenvreudeur, bezit karantezuz an eil e-keñver egile; evid ar pez a zell ouz an enoriou, lakit ar re all da dremen en ho raog deoh; -11- greduz heb leziregez, birvidig dre ar Spered, troet da zervich an Aotrou Doue, -12- laouen dre an esperañs, kalet ouz an drubuill, aketuz d'ar bedenn; -13- kemerit ar garg euz ezommou ar gristenien, kendalhit heb paouez da ober degemer vad d'an dud, -14- bennigit ar re a wask ahanoh, bennigit ha na vallozit ket, -15- bezit laouen gand ar re a zo laouen, gouelit gand ar re a ouel; -16- bezit unanet kenetrezoh en ho soñjou; diwallit ouz ar soñjou uhel, lakit ho soñj en traou izel, na zoñjit ket e vefeh tud a furnez; -17- na rentit da zen ebed an droug evid an droug; klaskit ober ar vad a-wel d'an oll; -18- mar deo posUBL, diouz ma vo ho kalloud, bevit e peoh gand an oll.

-19- Muia karet, arabad deoh en-em venñji, lezit kement-se gand kounnar Doue, rag skrivet eo :« din-me eo venñji, din-me eo digoll, eme an Aotrou». -20- Med ma teu da enebour da gaoud naon, ro dezañ da zebri; m'e-neus sehed, ro dezañ da eva; oh ober evel-se e tastumi glaou-tan war e benn; -21- Arabad dit beza tréhet gand an droug, med bez treh d'an droug dre ar mad.

KELENNADUREZ DIWARBENN AR RE A ZO E KARG

XIII -1- Ra vo doujuz peb den d'ar re o-deus galloud da houarn, rag n'eus galloud ebed nemed a-berz Doue; euz e berz e teu kement galloud a zo. -2- Evel-se an neb en em zav a-eneb ar galloud, en em zav a-eneb an urz savet gand Doue, hag ar re en em zav evel-se a zacho kondaonidigez warno o-unan, -3- rag ar houarnourien n'eus ket da gaoud aon razo, pa reer ar mad, nemed pa reer an droug. Ha c'hoant az-peus da jom heb kaoud aon rag an dud a halloud ? Gra ar mad hag e resevi meuleudi diganto, -4- rag servicherien Doue dit ez int, evid ar mad; ma teu dit ober droug, bez aon, rag n'eo ket en aner e tougont ar hlez, rag servicherien Doue e vezont o kastiza, evid diskouez kounnar a-eneb an dud a ra an droug; -5- setu perag eo red suja, n'eo ket hebken ablavour

d'ar gounnar, med iveauz ablamour d'ar goustañs, -6- rag ablamour da-ze iveauz e paeit an taillou, rag servicherien Doue int iveauz an dud karget d'o dastumm; -7- rentit eta da beb hini ar pez a zo dileet dezañ : da baotr an taillou, an tail-lou; da baotr an druaj, an druaj; d'an den a deer dezañ enor, an enor.

-8- Na vezit ket war zle e-keñver den ebed euz netra, nemed a garantez an eil ouz egile, rag an hini a ziskouez karantez e-neus miret al Lezenn en he fez. -9- Rag kement-mañ : na ri ket avoulttriez, na lazi ket, na laeri ket, na c'hoantai ket e gaou ha peb gourhemenn all a vefe evel-se, a zo dastumet en dra-mañ: kared a ri da nesa eveldout da-unan. -10- Ar garantez ne ra ket a zroug d'an ne-sa; dre ar garantez e vez miret al Lezenn en he fez.

-11- Ha gouzoud a rit e peseurt mare emaom? Poent eo deoh bremañ dihuna euz ho kousk, rag tostoh ez eo deom bremañ ar zilvidigez egéd pa oam deuet d'ar feiz. -12- Echu eo an noz, tost eo an deiz; dilezom eta oberou an defñavali-jenn ha gwiskom armou ar sklerijenn, -13- evel e-kreiz an deiz, kerzom en eun doare deread; o tiwall da zebri na da eva re, tehom diouz ar ribodèrèz hag an hudurnez, ar rendael hag an avi, -14- med gwiskom an Aotrou Krist; n'it ket da gaoud preder gand ho korv, beteg heulia e youlou.

NERZ HA DINERZ

XIV -1- Degemerit mad an hini a zo dinerz en e feiz, heb barn e venoziou: -2- unan a gred dezañ e heller debri a beb tra; egile, dre zempladurez, ne zebr nemed legumaj, arabad eo dezañ barn an hini a zebr, rag Doue e-neus roet degemer dezañ. -4- Piou out-te evid barn servicher unan all, dirag e vestr e-unan? Pe e chom en e zav, pe e kouez, an dra-ze a zell ouz e vestr, med en e zav e chomo, rag gouest eo Doue d'e zelher; -5- unan a gav kemm etré eun devez hag eun devez all, unan all a gav heñivel peb devez, ra vezo peb hini starteet en e venoz; -6- an hini a zali kont euz an devez, her gra evid an Aotrou, an neb a zebr euz peb tra, her gra evid an Aotrou, peogwir e lavar bennoz da Zoue. -7- Rag nikun ahanom ne vev evitañ e-unan, ha nikun ne varv evitañ e-unan, -8- rag ma vevom, e vevom evid an Aotrou, ma varvom, e varvom evid an Aotrou; en or buez hag en or maro ez om d'an Aotrou, -9- rag evid kement-mañ eo marvet an Aotrou Krist ha savet da veo : evid beza Aotrou war ar re veo hag ar re varo. -10- Med te, perag e varnez da vreur? Pe c'hoaz, perag e tisprizez da vreur? Rag oll ez aim dirag lezvarn Doue, -11- rag skrivet eo : «Ken gwir ha ma 'z on beo bue-zeg, eme an Aotrou, peb glin a blego dirazon ha peb teod a rento gloar da Zoue». -12 Evel-se eta peb hini ahanom a rento kont da Zoue evitañ e-unan.

-13 Ehanom eta d'en em varn an eil egile; klaskit kalz muioh mired da lakaad ho preur da strebotti, da veza skoillet; -14- me a oar hag a gred stard, dre an Aotrou Jezuz Krist, n'eus netra dihlan drezañ e-unan; med ma kred da unan

bennag eo dihlan eun dra bennag, evitañ eo dihlan, -15- rag ma rez poan d'az preur dre ar pez a zebrez, ne gerzez ket hervez ar garantez; arabad dit diwar goust boued, kas da goll an hini eo maro ar Hrist evitañ.

-16- Arabad eta e teufe ar frankiz a zo ho lod da veza eun abeg a zroug-komz, 17- Rag n'eo ket rouantelez Doue boued hag evaj, med justis, peoh ha levenez er Spered Santel, -18- rag an hini a zervich an Aotrou Krist evel-se a blij da Zoue hag a zo prizet gand an dud, -19- Evel-se eta, klaskom madou ar peoh ha mad ar skouer-vad an eil evid egile. -20- Arabad dit, diwar goust ar pez a zebrez, distruij oberenn Doue. Glan eo peb tra, med fall eo d'an den, o tebri tra pe dra, la-kaad ar re all da strebotti. -21- Kaer eo chom heb debri kig, heb eva gwin, heb ober netra a lakfe da vreuer da gouenza.

-22- Da feiz, dalmad mad dezi dirag Doue. Eüruz an hini n'en em varn ket hervez ar pez a gred dezañ a zo mad. -23- Med an hini a zebr, daoust dezañ beza en arvar, a zo kondaoned peogwir kement-se ne zeu ket diwar ar feiz, rag kement ne zeu ket diwar ar feiz a zo pehed.

DEVERIOU AN DUD KRENV

XV .-1- Eun never eo deom-ni, an dud kreñv, samma sempladurez ar re a zo dinnerz, e-leh ober ar pez a blije deom; -2- ra boanio peb hini ahanom da ober ar pez a blije d'an nesa evid ar mad, ma vo skoueriet mad an oll; -3- rag an Aotrou Krist kennebeud, n'e-neus ket klasket ar pez a blije dezañ e-unan, med, evel m'eo skrivet: « Dismegañsou ar re a zismegañs ahanout, warnon a zo kouezet». -4- Rag kement a zo bet skrivet en araog a zo bet skrivet evid or helennadurez, evid ma teufem da gaoud an esperañs dre ar basianted hag ar frealz a ro ar Skrituriou , -5- ra zeuio Doue ar basianted hag ar frealz da rei deoh kaoud an eil evid egile ar memez santimañchou en Aotrou Krist, -6- evid ma rentfeh gloar da Zoue, Tad or Zalver Jezuz Krist, gand an heveleb kalon hag an heveleb mouez.

Digemeret ar vreudeur

-7- Ablamour da-ze, grit degemer vad an eil d'egile evel m'e-neus an Aotrou Krist ho tegemeret mad evid gloar Doue, -8- rag lavared a ran e-neus an Aotrou Krist en em lakeet da zervicher an dud amdrohet, evid diskouez ar gwirion m'eo Doue, ha seveni mad ar bromesaou greet d'on tadou; -9- hag ar bayaned, int-i, a rento gloar da Zoue evid e drugarez hervez m'eo skrivet: «Setu perag eh anzavin va feiz ennout e-touez ar bayaned hag e kanin salmou evid enor da ano». -10- C'hoaz e lavar : «Bezit laouen, payaned, a-unan gand ar bobl santed», ha c'hoaz: -11- «C'hwi oll, payaned, meulit an Aotrou, ma teuio an oll boblou da gana e veuleudi». -12- Izaïaz a lavar c'hoaz: «Dond a ray ar greskenn diwar Jesse, an hini a zav evid ren war ar bayaned, ennañ e lakaio ar bayaned o esperañs»; - -13- ra zeuio Doue an esperañs d'ho karga a beb levenez hag a beoh er feiz , evid ma vo leun-barr hoh esperañs dre nerz ar Spered-Santel.

Ministrerez Sant Paol

- 14- Evid ar pez a zell ouzoh, kredi a ra din stard, va breudeur, ez oh c'hwí ives leun a vadelez, leun a beb anaoudegez ha gouest da rei ali an eil d'egile. 15- Koulskoude, gand kalz a hardisegez, am-eus awechou skrivet deoh evid degas deoh da zoñj hervez ar hras bet roet din gand Doue : -16- beza ministr Jezuz Krist, evid mad ar bayaned, gouestlet da zervich sakr Aviel Doue, evid ma teuio ar bayaned da veza eur brouadenn blijuz da Zoue, santelleet gand ar Speréd Santel.
- 17- Leh am-eus eta da fougeal e Jezuz Krist gand al labour greet evid Doue,
- 18- rag ne gredin ket lavared grig, nemed euz ar pez e-neus greet an Aotrou Krist drezon, evid degas ar bayaned d'ar zentidigez dre gomz ha dre ober, -19- dre nerz sinou ha burzudou, dre halloud ar Spered Santel. Kenkoulz ha trá, m'am-eus roet da anaoud Aviel Jezuz Krist azaleg Jerusalem hag en eur vond euz an eil tu d'egile beteg an Illiria. -20- Med laket am-eus va enor da brezeg an Aviel netra nemed el leh n'oa ket anavezet ano Jezuz, kuit da zevel war eun diazez greet gand unan all, -21- med hervez m'eo skrivet : «Gweled a raint ar re n'o-deus ket bet kelou diwar e benn, hag intent a raint ar re n'o-deus ket klevet.»
- 22- Setu ar pez e-neus miret ouzin da vond beteg ennoh; -23- bremañ avad, peogwir n'am-eus ket a labour er broiou-mañ ha m'am-eus youl da vond davedoh, abaoe meur a vloaz a zo, -24- fiziañs am-eus, pa 'z in da vro-Spagn, d'ho kweled ha da veza heñchet ganeoh warzu eno, ma vezan kennerzet araog eun tammig ganeoh. -25- Bremañ a-vad. ez an da Jerusalem, da zervich ar zent, -26- rag plijet eo da dud Makedonia hag Akaïa dont war zikour ar beorien a zo e-touez ar zent e Jerusalem, -27- rag plijet eo dezo, - ha dileour int en o heñver, - rag m'o-deus bet perz en o madou spirituel, e tle ives ar bayaned servich anezo en o ezommou a gorv. -28- Eur wech echuet kement-se, ha lakeet ar gest etre o daouarn, e kerzin dre ho pro d' ar Spagn. -29- O vond davedoh eh ouzon ez in gand bennoz leun-barr an Aotrou Krist.
- 30- O pedi a ran eta, breudeur, dre an Aotrou Jezuz Krist ha dre garantez ar Spered, da stourm ganin dre ar pedennou a gasit evidon da Zoue, -31- evid ma vezin diframmet a dre daouarn tud difeiz Judea ha ma teuio ar zervich da renta e Jerusalem da blijoud mad d'ar zent. -32- Evel-se, o tond davedoh, el levelez, dre volontez Doue e hellin kemered eun tamm diskuez ganeoh. -33- Ra vo Doue ar peoh ganeoh oll. Amen !

SALUDOU SANT PAOL DA DUD ROM

XVI -1- Goulenn a ran diganeoh beza mad e-keñver Febe, or c'hoar, diagonnez euz Iliz Kenkrea, -2-Degemerit anezhi en Aotrou en eun doare din euz ar zent. Roit skoazell dezi ekement ha m'he-defe ezomm ahanoh, rag gwarezet he-deus meur a hini ha me va-unan.

-3- Saludit Prisca hag Akuila o-deus labouret ganin e Jezuz Krist; -4- evid save-tei din va buez, o-deus risklet o fenn. N'emaon ket va-unan o renta bennnoz dezo, med oll Ilizou ar bayaned a zo iveau. -5- Saludit iveau an Iliz en em vod en o zi; saludit va mignon mad Epinetoz, eñ, ar frouezenn genta d'ar Hrist euz an Azia.

-6- Saludit Maria, he-deus kemeret kalz poan ganeoh; -7- Saludit Andronikoz ha Yunia, kar din, ha bet ganin er prizon. Bez 'ez int prizet mad e-touez an ebestel hag araozon int bet iveau d'an Aotrou Krist. -8- Saludit Ampliatoz, mignon din en Aotrou. -9- Saludit Urban, e-neus labouret ganeom en Aotrou, ha Stakiz, mignon din. -10- Saludit Apollos bet amprouet er Hrist, saludit ar vreudeur euz ti Aristoboulous. -11- Saludit Herodion, a zo kar din. Saludit ar re euz ti Nar-kizoz, a zo breudeur en Aotrou. -12- Saludit Trifén ha Trifoz o-deus kemeret poan en Aotrou; -13- Saludit Rufus, bet dibabet en Aotrou hag e vamm a zo iveau mamm din. -14- Saludit Asynkrit, Flegon, Hermès, Patrobaz, Hermaz hag ar vreudeur a zo ganto. -15- Saludit Filolog ha Julia, Nere hag e c'hoar, Olympaz hag an oll a zo ganto. -16- Kenetrezoh, saludit an eil egile gand eur pok santed, oll Ilizou ar Hrist ho salud.

-17- Goulenn a ran diganeoh, va breudeur, en em ziwall ouz ar re a laka da zevil ar rendaelou pe ar skoillou a-eneb ar gelennadurez ho-peus c'hwi desket, ha tehit diouto. -18- Rag ar seurt tud-se ne zervichont ket an Aotrou Krist, med o hov, ha dre o homzou flour troet brao, e touellont kalon an dud divalis. -19- Rag ho sentedigez deoh a zo anavezet gand an oll. Joa a gemeran eta diwar ho penn, med c'hoant am-eus e vefeh fur evid ober ar mad, dispege krenn diouz an droug; -20- Doue ar peoh a flastro dizale Satan dindan ho treid, ra vo ganeoh gras an Aotrou Jezuz.

-21- Va henlabourer, Timote, ho salud hag ive Lusiuz, Jazon ha Sosipatroz, tud kar din. -22- Me ho salud, me Tersiuz hag em-eus skrivet al lizer-mañ en Aotrou. -23- Ho saludi a ra Kaiüz, an hini am reseo, me hag an Iliz a-bez; ho saludi a ra Erast, teñzorier kér, hag iveau Kouartuz or breur. -24- Gras an Aotrou Krist ra vezo ganeoh oll.

Gloar ha meuleudi da Zoue

-25- D'an hini e-neus galloud d'ho kreñvaad hervez an Aviel a embannan o prezeg Jezuz Krist hervez diskleriadur eur mister dalhet kuzet en amzer dremenet, diskleriet bremañ dre skridou ar brofedet, hervez menoz an Doue peurbadel, ha roet da anaoud d'an oll bayaned evid o degas da zentedigez ar feiz; da Zoue ha n'eus nemetañ leun a furnez, dre Jezuz Krist, dezañ gloar da virviken. Amen.

kenta lizer d'ar GORINTIANED



I KORINTIANED

Er bloavez 50, e-noa Paol savet an Iliz er porzmor braz Korint. Er gêr bayan-se, el leh ma oa braz an dizursiou kalz kristenien, nevez deuet d'ar feiz, ne zeuent ket a-benn d'en em zizober euz ar menoziou payan (da skouer war adsao ar horvou da veo), ha muioh c'hoaz da drei kein da zoareou payan da veva. Hag ahano e teue skoueriou fall: dizunaniez, gadaliez, orgedèrèz, evadegou, pe diboellèrèz a beb seurt er bodadegou

Paol e-noa bet kelou a gement-se hag a felle dezañ merka ar pez a zo da gredi hag an doareou-buez a zo da ren.

KENTA LIZER D'AR GORINTIANED

I. SALUD HA BENNOZ

-1- Paol, galvet da veza abostol Jezuz Krist, dre volontez Doue, ha Sosten or breur, -2- da lliz Doue a zo e Korint, d'ar re a zo bet santelleet en Aotrou Krist ha galvet da veza sent, evel d'ar re oll a halv. Ano Jezuz Krist on Aotrou, e-neus forz peleh e vefem, int-i ha ni, -3- deoh gras ha peoh a-berz Doue on Tad hag a-berz Jezuz Krist on Aotrou. -4- Trugarekaad a ran Doue bepred ablavour deoh evid gras Doue a zo bet roet deoh et Hrist Jezuz. -5- Peogwir oh bet pinvidikeet ennaf e peb tra, e peb komz hag e peb gouziegez, -6- evel ma 'z eo bet starteet en ho touez an testeni roet d'ar Hrist.. -7- Evel-se ne vank gras ebed deoh endra ma hortozit diskuliadur an Aotrou Krist; -8- Eñ iveauz a zalho mad ahanoh beteg penn, deoh da veza direbech pa erruo Deiz an Aotrou Krist. -9- Feal eo Doue, eñ hag e-neus ho kalvet da veva en unaniez gand e vab Jezuz Krist an Aotrou.

DIZUNANIEZ EN ILIZ

-10- Hoh aspedi a ran, va breudeur, en ano on Aotrou Jezuz Krist, lavarit ar memez tra, diwallit na ve dizunaniez en ho touez, bezit unanet stard er memez spered, er memez menoz, -11- rag diskouezet eo bet din diwar ho penn, breudeur, gand tud Kloe, ez eus rendaelou etrezoh. -12- Setu amañ va soñj : peb hini ahanoh a lavar: me 'zo evid Paol, me 'zo evid Apollos, me evid Kefas, me evid ar Hrist. -13- Daoust ha rannet eo ar Hrist? Daoust ha Paol a zo bet staget ouz ar groaz? Daoust hag en ano Paol ez oh bet badezet? -14- a drugarez Doue n'am-eus badezet nikun ahanoh nemed Krispus ha Kaius. -15- Evel-se ne hell den lavared e vefeh bet badezet em ano. -16- Ha c'hoazi! Badezet am-eus ive famill Stefanas, a-hend-all, n'ouzon ket ha badezet am-befe unan bennag all. -17- rag ar Hrist n'e-neus ket kaset ahanon da vadezi, med da embann ar Helou-mad, ha n'eo ket gand komz ar furnez, en aon na vefe kaset da netra kroaz ar Hrist.

FURNEZ HA FOLLENTEZ

-18- Rag komz ar groaz a zo e gwirionez follentez evid ar re a zo en argoll, med evid ar re a zo salvet, evidom-ni, ez eo galloud a Zoue. -19- Rag skrivet eo: distruj a rin furnez ar re fur ha kas da netra skiant an dud skiantek. -20- E peleh ema an den fur? E peleh an doktor war al lezenn? E peleh rendaeler ar bed-mañ? Daoust ha n'e-neus ket Doue lakeet furnez ar bed-mañ da bennfolli? -21- Rag peogwir n'e-neus ket ar bed, gand ar furnez, anavezet Doue e furnez Doue, ez eo plijet da Zoue salvi ar re a gred, dre follentez an embannadur. -22- P'ema ar Juzevien o houlenn burzudou hag ar Hresianed o kask furnez, -23- ni a-vad, a embann eur Hrist staget ouz ar groaz, eur skoill evid ar Juzevien, eur follentez evid ar bayaned. -24- Med evid ar re a zo galvet gand Doue, koulz Juzevien ha Gresianed, ez eo ar Hrist nerz Doue ha furnez Doue, -25- rag follentez Doue a zo furroh eged an dud, ha gwanded Doue kreñvoh eged an dud.

-26- Komprenit, breudeur, piou ez oh, c'hwi hag a zo bet galvet gand Doue, rag gwelit, n'eus ket en ho touez, kalz a dud fur hervez ar bed, na kalz a dud galloudeg, na kalz a dud a lignez uhel. -27- Med dibabet e-neus Doue ar pez a zo foll evid ober mez d'an dud fur, ar pez a zo gwan er bed-mañ evid ober mez d'an dud kreñv, -28- ha dibabet e-neus Doue ar pez a zo a lignez izel, ar pez a zo disprizet, ar pez n'eo netra, evid kas da netra ar pez a zo anezañ, -29- evid na zeuio den da lorha dirag Doue, -29- rag drezañ emaoch e Jezuz Krist deuet da veza evidom, dre hrsas Doue, furnez, justis, santelez ha dasprendur. -31- Evel-se, evel m'eo skrivet, an den lorheg, dezañ lakaad e lorh en Aotrou.

II PAOL O PREZEG E KORINT

-1- P'on deuet davedoh n'eo ket gand levezon ar gomz pe ar furnez eo ez on deuet da embann deoh mister Doue. -2- En ho touez n'eo ket fellet ganin anaoud netra all ebed nemed Jezuz Krist ha Jezuz Krist bet staget ouz ar groaz. -3- Disterig, aonig ha krenidig on degouezet en ho touez. -4- Va homzou ha va embannadur ne zeue ket o nerz euz ar furnez, med diskuiu a reent eo nerz Doue ha galloud ar Spered eo a bare enno, -5- evid ma vefe diazezet ho feiz n'eo ket a-vad war furnez mab den, med war galloud Doue. -6- Koulskoude eo euz furnez e vez ano ganeom pa gomzom dirag ar gristenien peurvad, med n'eo ket a-vad euz furnez ar bed, nag euz hini ar re a ra o mistri war ar bed hag a zo o vond da goll. -7- Komz a reom er hontrol euz furnez Doue er mister dalhet kuzet, pourchaset gand Doue araog ar hantvejou evid rei deom or gloar. -8- Eur furnez eo ha n'eo ket anavezet gand hini ebed euz mistri ar bed-mañ, rag m'o-defe anavezet anezi, morse n'o-defe staget an Aotrou a hloar ouz ar groaz. -9- Hervez ar Skritur, ar pez n'e-neus morse an den gwelet gand e zaou lagad, na klevet gand e ziskouarn, ar pez n'eo ket bet diwanet en e galon, kement-se a zo bet greet gand Doue, evid ar re o-deus karantez evitañ.

1a Korintianed -II-III

-10- Deom-ni eo e-neus Doue o diskuliet dre ar Spered, rag ar Spered a wel peb tra beteg donderiou Doue zoken. -11- Pehini euz an dud a anavez ar pez a zo en den nemed ar spered-den a zo ennañ. Evel-se ives ne anavez den ar pez a zo e Doue nemed spered Doue. -12- Ni a-vad. n'eo ket spered ar bed on-eus resevet, med ar Spered a zeu euz a Zoue, evid rei deom da anaoud an donzeon a zeu deom dre hrsas Doue. -13- Hag ano a vez ganeom anezo n'eo ket gand komzou desket diwar or furnez-døn, med diwar komzou a zeu deom euz ar Spered, o tisplega evel-se an traou speredel gand komzou speredel. -15- An den speredel avad a intent peb tra ha n'eo intentet gand den. -16- Rag piou e-neus anavezet menoz an Aotrou da helloud e gentelia? Ni avad a zo ganim menoz ar Hrist.

LABOUR PREZEGERIEN AR FEIZ

III. -1- Evidon-me, breudeur, n'am-eus ket gellet komz deoh evel da dud hag a zo ganto ar Spered, med netra nemed evel da dud ha n'eus ganto nemed o natur-den, evel da vugaligou ar Hrist. -2- Léz eo am-eus roet deoh da eva ha n'eo ket boued sasun, ne vefeh ket bet gouest d'e houzañv. Ha bremañ c'hoaz ne vefeh ket gouest d'henn ober., -3- rag ma 'z oh c'hoaz troet gand an natur-den: peogwir ez eus en ho touez gwarizi ha rendael, daoust ha n'emaoh ket dindan beli an natur, ha ne renit-hu ket ho puez en eun doare denel? -4- Pa ziskler unañ : me a zo evid Paol, hag unañ all: me a zo evid Apollos, daoust ha ne vevit ket en eun doare denel?

-5- Petra eo Apollos? Petra eo Paol? Servicherien hag o-deus degaset ahanoh d'ar feiz. Peb hini e-neus labouret hervez an donezonou bet roet dezañ gand an Aotrou. -6- Me am-eus plantet; Apollos e-neus douret; med Doue eo an hini e-neus lakeet da greski. -7- Evel-se an hini a blant n'eo netra; netra an hini a zour. Doue hebken a gont: an hini a laka da greski. -8- Planta pe zoura a zo heñvel, ha peb hini a resevo e-hopr hervez al labour e-no greet, -9- rag asamblez e labourom e labour Doue, ha c'hwí eo ar park labouret gand Doue, an ti ema o sevel.

-10- Evel eun ijnour-tiez, ampart gand sikour ar hrsas e-neus roet Doue din, am-eus lakeet an diazezou. Unan all a gendalho gand al labour, med da beb hini teurel evez e pe zoare e sav an ti. -11- Ar fondasionou, ne hell den diazeza re all, er méz euz ar re a zo dija anezo; ar Hrist eo ar fondasionou-se. -12- Kenedher a heller da zevel, gand aour. arhant ha mein kaer, gand koad, foenn ha plouz, -13- med labour peb hini a vo lakeet er sklerijenn. Deiz ar varn a roio anezañ da anaoud, rag dre an tan e vo diskuliet, hag an tan a verko petra dalv labour peb hini. -14- An hini a jomo e labour en e zav, hennez a resevo eur gopr. -15- Med an hini a vo devet e labour, n'e-no ket; eñ, e-unan, a vo salvet, med evel ma vezet a-dreuz an tan.

-16- Ne ouzoh ket ez oh templ Doue hag ema Spered Doue o chom ennoh?
-17- An hini a ziskar templ Doue a vo d'e dro diskaret gand Doue, rag santel

eo templ Doue ha c'hwi eo an templ-se. -18- Arabad fazia war gement-mañ : ma 'z eus unan bennag ahanoh hag a zonj dezañ beza fur hervez doare ar bed, ra zeuio da veza foll evid gounid ar furnez; -19- rag furnez ar bed-mañ a zo follementez dirag Doue; rag ar skritur a laver: «Tapoud a rei an dud fur el lasou stignet ganto o-unan.» -20- hag iveau: «An aotrou a anavez menoziou an dud fur, gouzoud a ra n'int nemed avel ha moged». -21- N'ho-peus ket eta da den-na lorf euz an dud. -22- Med deoù eo peb tra : Paol, Apollos, Pèr, ar bed, ar vuez, ar maro, an amzer vremañ hag an amzer da zond; med c'hwi a zo d'ar Hrist, hag ar Hrist a zo da Zoue.

N'EUS BARNER ALL EBED WAR AN EBESTEL, NEMED AN AOTROU.

IV -1- Ni a dle beza kemeret evid servicherien an Aotrou Krist, karget da evezia war misteriou Doue. -2- Hogen, petra hortozer diouz merourien, nemed beza feal en o harg? -3- Evidon-me, ne ran van ebed evid beza barnet ganeoh pe gand eul lez-varn euz ar bed-mañ, ne gredan ket kennebeud va barn va-unan. -4- Rebech ebed na ra din va houstiañs, gwir eo, med n'eo ket an draze eo a zeu d'am justiza, va barner eo an Aotrou. -5- Setu perag na varnit ket araog ar mare, araog ma teuio an Aotrou; eñ a lakay sklerijenn da bara war ar pez a zo kuzet en deñvalijenn hag a zizoleio menoziou kuzet ar galon. Neuze e resevo peb hini digand Doue ar veuleudi dleet dezañ.

-6- Ablamour deoù, va breudeur, am-eus displeget an traou-se en eun doare-all, ouz o lakaad war gont Apollos ha war va hont din va-unan, deoù da zeski, diwar ar skouer a room, chom heb kemer lorf o sevel gand unan a-eneb egile. -7- Rag piou a ra dit beza disheñvel? Petra az-peus ha n'az-pefe ket resevet? Ha m'az-peus resevet, perag kemer lorf ahano evel ma n'az-pefe ket resevet? -8- Bremañ dija ho-peus bet ho kont! Dija ez-oh pinvidig! Hebdom ez oh rouaned! Salv e vefeh, ma hellfem ni iveau beza rouaned ganeoh, -9- rag me a zonj din e-neus Doue on lakeet, ni ebrestel, er plas diweza, evel tud barnet d'ar maro, roet da arresti d'ar bed, d'an élez koulz ha d'an dud. -10- Ni a zo foll ablamour d'ar Hrist, med c'hwi a zo fur e Jezuz Krist, ni a zo gwan, med c'hwi leun a nerz, c'hwi a zo enoret, ha ni disprizet. -11- Bremañ c'hoaz on-eus naon, on-eus sehed, emaom en noaz, gwallgaset, o foeta-bro; -12- poan a germerom o labourad gand on daouarn. Komzou dismagañsuz a vez distaget ganeom, hag e respontom gand bennoziou; heskinet e vezom hag e houzañvom; droug prezeget e vez diwar or penn ha ni a glask frealzi. -13- Beteg bremañ e heller lavared ez om lastez ha lostennajou ar bed.

-14- N'eo ket evid ober mez deoù e skrivan kement-se, med evid ho repren evel va bugale müia-karet, -15- rag, ha goude m'ho-pefe deg mil mestr keleñner er Hrist, n'ho-peus nemed eun tad, me an hini eo a zo bet tad deoù e Jezuz Krist dre an Aviel. -16- Hoh alia a ran eta :«Kemerit skouer diwarnon». -17- Evid an dra-se end-eeun, am-eus kaset davedoh Timote, va meurbed karet ha

feal en Aotrou. Degas a raio soñj deoh er pez a zo evidon an doare beva er Hrist, evel m'her prezegan e peb leh, en oll ilizou. -18- Rag, o kredi dezo ne zistrofen ket davedoh, lod a zo deuet da c'hweza gand an ourgouill. -19- Padal, ez in heb dale, ma plij gand an Aotrou, hag e ouezin da vad petra eo an dud-se, n'eo ket diouz o homzou, med diouz o oberou. -21- Petra 'zo gwelloh ganeoh? Ez afen davedoh gand eur skourjez em dorn, pe gand karantez ha dousder?

EUR SKOUER A VUEZ FALL.

V. -1- E peb leh e vez klevet lavared e kaver en ho touez skoueriou a vuez fall, skoueriou ha na gaver ket e-touez ar bayaned zoken: unan ahanoh a zo o veva gand gwreg e dad ; -2- hag ez oh karget a ourgouill! Red e vefe deoh beza kemeret ar hañv, evid ma vefe taolet er-méz euz ho touez an hini e-neus greet kement-se. -3- Evidon-me, pell diouzoh a gory, med ganeoh a spered , am-eus dija barnet evel ma vijen bet war al leh, an hini e-neus greet kemend-all; -4- en ano an Aotrou Jezuz Krist ha gand e halloud, e-kerz eur vodadenn, ma vezin-me unanet ganeoh a spered, -5- ra vo eur seurt den lakeet e dalm Satan, ma vo e gory distrujet evid ma vo salvet e ene da zeiz an Aotrou.

-6- N'eo ket kaer an abeg ho-peus da gaoud ourgouill, c'hwi a oar mad eo eun nebeudig goell a laka an toaz a-bez da hoi. -7- Taolit kuit ahanoh ar goell koz, deoh da veza toaz fresk, peogwir n'eus ket a hoell ennoch, rag lakeet eo bet d'ar maro an Oan Pask, an Aotrou Krist. -8- Ablamour da-ze, greom gouel, n'eo ket gand goell koz, goell brein an droug hag ar pehed, med gand baraennou dihoell, nét a beb loustoni ha leun a wirionez. -9- Skrivet am-boa deoh, em lizer, chom heb darempredi an dud gadal, -10- ne zoñjen ket, dre vraz, en dud gadal a zo er bed pe en dud troet da zastum, da laerez pe da azeuli an doueou faoz, rag neuze e vefe red deoh kuitaad ar bed. -11- Nann, skrivet am-eus deoh chom heb kaoud darempred gand eun den hag a zoug an ano a gristen, ma 'z eo gadal, troet gand an arhant, touet d'an doueou faoz, droug-prezeger, mezvier, laer, ha zoken da jom heb debri gand eur seurt den. -12- Daoust ha d'in-me eo barn an dud a ziavéz? daoust ha n'eo ket ar re a-ziabar eo ho-peus da varn? -13- An dud a-ziavéz, Doue o barno; tennit an den fallagr euz ho touez.

PROSEZ ETRE BREUDEUR

VI. -1- Pa zav tabut etrezoh, penaoy eta e kredit goulenn barnedigez ar bayaned ha n'eo ket hini ar zent? -2- N'ouzoh-hwi ket eo ar zent a varno ar bed? Ha ma 'z eo ganeoh e tle ar bed beza bñarnet, ha ne vñeh ket gouest da varn traou dister? -3- Ha n'ouzoh-hwi ket e varnou an ñelez? Kentoh a-ze neuze traou ar vuez-mañ. -4- Neuze 'ta, pa vez seurt tabutou da renka, e halvit da varn tud hag he-deus an Iliz dispriz evito. -5- Evid ober mez deoh eo e lavaran kement-se. Evel-se ne vije en ho touez den ebed fur awalh evid beza gouest da

varn etre e vreudeur? -6- Med prosezi a reer, breur eneb breur, ha kement-se dirag tud difeiz. -7- N'eus forz penaoz, kaoud prosezou etrezoh a zo dija evidoh mond war ziskar. Perag ne gavit ket gwelloh e vije greet gaou ouzoh? Perag ne gavit ket gwelloh ez afe ho peadra gand al laer? -8- Padal, c'hwi eo a ra gaou hag a laer, ha diwar goust breudeur.

-9- Ha n'ouzoh-hwi ket n'o-do an dud disleal lod ebed e Rouantelez Doue? Na faziat ket! Na gadaled, nag idolerien, nag avoultrieren, nag an dud orgeduz gand bugale, -10- na laeron, na skraperien arhant, na mezvieren, na droug-prezegerien, na filouterien, n'o-dezo perz e Rouantelez Doue. -11- Setu ar pez ez oah, lod ahanoz, med gwalhet oh bet, santelleet oh bet, justizet oh bet en ano an Aotrou Jezuz Krist ha dre Spered on Doue.

-12- Aotre am-eus da ober peb tra, med n'eo ket mad peb tra din. Aotre am-eus da ober peb tra, med ne fell ket din koueza e dahl netra. -13- Ar boued a zo evid ar horv, hag ar horv evid ar boued. Doue o distrujo an eil hag egile; med ar horv n'eo ket evid an hudurnez med evid an Aotrou hag an Aotrou evid ar horv. -14- Rag Doue hag e-neus savet an Aotrou a varo da veo a adsavo ahanom-ni iveauz dre e halloud. -15- Ha n'ouzoh-hwi ket eo ho korvou izili ar Hrist? Ha me a gemerfe izili ar Hrist evid ober anezo izili eur vaouez a vuez fall? A nann a-vad! -16- Ha n'ouzoh-hwi ket ne ra an hini a ya gand eur vaouez a vuez fall nemed eur horv ganti, rag skrivet eo: «ne vezoo anezo o-daou nemed eur horv hebken». -17- Hogen an hini a zeu d'en em unani gand an Aotrou a zo eun heveleb spered gantañ. -18- Tehit diouz an hudurnez. An oll behejou a vez greet a-hend-all gand an den a zo en diavez euz e gorr, med an den gadal a beh a-eneb d'e gorr e-unan. -19- Pe n'ouzoh-hwi ket eo ho korv templ ar Spered Santel a zeu ennoh hag a zeu deoh a-berz Doue? N'oh ket perhenn deoh hoh-unan. -20- Rag unan bennag a zo bet a paea priz ho tasprenadur. Rentit eta gloar da Zoue dre ho korv.

RESPONCHOU DA HOULENNOU GREET DIWARBENN AR BRIEDELEZ

VII -1- Ha bremañ ar respont diwar-benn ar pez ho-peus skrivet din. Mad eo d'ar gwaz chom heb mond gand eur vaouez. -2- Koulskoude, evid diwall diouz peb dizurz, da beb gwaz kaoud e-wreg ha da beb maouez kaoud he gwaz. -3- D'ar gwaz ober e zever e keñiver e wreg ha d'ar wreg kemend-all e keñiver he gwaz. -4- N'eo ket d'ar wreg ober evel ma vije dezzi he horv, med d'he gwaz; en heveleb doare n'eo ket d'ar gwaz ober evel ma vije dezañ e gorr, med d'e wreg. -5- Na nahit ket an eil d'égile ho tever, nemed hag a-du e vefeh ho-taou, hag evid eur pennad nemed-ken, evid en em rei d'ar bedenn. Ha goudeze it endro an eil gand egile, gand aon n'e-nefe Satan tro d'ho touella diwar an di-halloud ma vefeh da veya treh warnoh hoh-unan. -6- O komz evel ma ran eo eun aotre eo a roan deoh ha n'eo ket eur gourhemenn. -7- Me 'garfe e vefe an oll eveldon-me, med peb hini a reseo digand Doue, hemañ an donezon-mañ, egile unan all.

-8- D'an dud dizimez eta ha d'an intañvezed e lavaran eo mad dezo chom er stad-se eveldon va-unan. -9- Med, ma n'int ket gouest da drehi warno o-unan, dezo dimezi, rag gwelloh eo dimezi eged leski. -10- D'ar re a zo dimezet e roan ar gouhemenn-mañ, n'eo ket me, med an Aotrou : arabad eo d'ar vaouez disparia 'iouz he gwaz. -11- Mar deo dispartiet,dezi chom heb dimezi en-dro pe dont en-dro gand he gwaz. Arabad d'ar gwaz kas kuit e wreg.

-12- D'ar re all e. lavaran, hag euz va ferz eo, ha n'eo ket a-berz an Aotrou : ma 'z eus eur wreg hag he-deus eur gwaz difeiz hag a-du evid chom ganti, arabad eo dezañ he has kuit, -14- rag ar gwaz difeiz a vez santelleet gand e wreg, hag ar wreg difeiz a vez santelleet gand he gwaz. A-hend-all e vefe dihlans ho pugale ha padal ez int santel. -15- Ar pried difeiz, ma fell dezañ ober disparti, dezañ henn ober. Pa vez kont evel-se ar breur pe ar c'hoar n'int ket dalhet, da veva e peoh eo ez oh bet galvet gand Doue. -16- Ha gouzoud a rez, maouez, ha te a zalvo da waz? Ha gouzoud a rez, gwaz, ha te a zalvo da wreg?

-17- A-hend-all ra vevo peb hini hervez ar stad m'edo p'eo bet galvet gand Doue. Setu ar pez a hourhemennan en oll ilizou. -18- Hemañ a oa amdrohet p'eo bet galvet ? Arabad eo dezañ kuzad kement-se. Egile a oa diamdroh? Arabad eo dezañ beza amdrohet. -19- Beza amdrohet pe ziamdroh, an dra-ze n'eo netra, ar pez a gont eo mired gourhemennou Doue. -20- Ra jomo eta peb hini er stad m'edo p'eo bet galvet. -21- Ha sklav e oas p'out bet galvet? Ne da ket d'en em jala, ar hontrrol eo, ha goude ma hellfes beza frankizet, tenn da vad kentoh euz da stad a sklav. -22- Rag eur sklav hag a zo bet galvet gand an Aotrou a zo eur frankizad d'an Aotrou. Evel-se iveau an hini a oa frank p'eo bet galvet a zeu da veza sklav d'ar Hrist. -23- Unan a zo hag e-neus paeet priz ho tasprendenn : na zeuit ket da veza sklaved d'an dud. -24- Da beb hini eta, breudeur, chom dirag Doue er stad m'edo p'eo bet galvet gand Doue.

-25- Diwarbenn an dud dizimez ,n'am-eus ket a hourhemenn a-berz an Aotrou; eun ali eo a roan deoh, ali eun 'den din da veza kredet dre drugarez an Aotrou. -26- D'am zoñj eo mad ar stad-se en abeg d'on amzer ankeniuz; ya, kre-di a ra din eo mad d'an den chom evel-se. -27- M'ar dout dimezet gand eur vaouez, na glask ket an disparti; ma n'out ket dimezet gand eur yaouez, na glask ket a wreg. -28- Koulskoude ma teu dit dimezi, ne rez ket a behed, ha ma teu d'eur werhez dimezi, ne ra ket a behed. Med an dud dimezet o-do trubuilou braz da houzañ en o horv ha me a garfe ho mired outo. -29- Lavared a ran deoh, breudeur, berr eo an amzer. Ahanta! Neuze d'ar re o-deus gwreg beza evel ma n'o dije ket, -3- d'ar re a ouel, evel ma ne ouéljent ket, d'ar re a zo eüruz, evel ma ne vijent ket, d'ar re a bren, evel ma n'o-dije netra dezo, -31- d'ar re a denn gounidegez euz ar bed, evel ma ne rajent ket. Rag ar bed, evel m'her gwelom, a zo o vont da get.

-32- Me 'garfe ho kweled dibreder; an den dizimez e-neus preder gand aferiou an Aotrou. Klask a ra an doare da blijoud da Zoue. -33- An den dimezet e-neus

preder gand traou ar bed. Klask a ra an doare da blijoud d'e wreg ha setu eo daouhanteret e galon. -34- Evel-se iveauz, ar vaouez dizimez pe ar plah yaouank a gemer preder gand aferiou an Aotrou; c'hoanthe-deus beza santel a gorr hag a spered, an hini a zo dimezet a gemer soursi gand traou ar bed. Klask a ra an doare da blijoud d'hegwaz. -35- o lavared kement-se e klaskan ho mad, n'eo ket evid ho paka en eur stign, med evid digeri deoh hent ar mad hag evid ma vefeh unanet heb mired netra gand an Aotrou Krist.

-36- Ma z' eus unan bennag hag a gred dezañ n'eo ket deread dezañ lezel e verh dizimez, mar deo dija eet er mêz a oad hag eo e zever ober evel-se, dezañ ober ar pez a gar; ne beh ket, dezo dimezi. -37- An hini avad e-neus divizet stard en e galon heb beza poulzet gand netra hag euz e benn e-unan, da zelher gantañ e-verh, hennez a ra mad. -38- Evel-se an neb a zimez e verh a ra mad, an hini ne zimez ket anezi a ra gwelloh c'hoaz. -39- Ar wreg a zo unanet gand he gwaz dre al lezenn e-keid ha m'eo hemañ beo. Ma teu d'ar gwaz mervel, he-deus frankiz neuze da zimezi gand an neb a blij dezi, gand ma vo kristen. -40- Eurusoh e vo koulskoude, d'am zoñj, ma chom evel m'ema, hag e kred din ema Spered Doue ganin iveauz.

KIGOU BET KINNIGET D'AN IDOLOU

VIII- -1- Evid ar pez a zell ouz kigou bet kinniget d'an idolou, ni oll, her gouzoud a reom, on-eus anaoudegez a gement-se. Hag an anaoudegez a zeu ourgouill diwarni, ar garantez a-vad a zo skouer vad. -2- Ma kred da unan bennag anaoud eun dra bennag, ne anavez ket c'hoaz evel ma tlefed anaoud. -3- Med ma kar unan bennag Doue, eñ a zo anavezet gantañ. -4- Neuze 'ta, daoust hag aotre a zo da zebri kigou bet kinniget d'an idolou? Goûd a reom n'eus Doue faoz ebed er bed, ha n'eus Doue all ebed nemed unan, -5- rag daoust ma 'z eus en neñv ha war an douar ar pez a vez anvet doueou, dre fazi, -rag e gwirionez ez eus evel-se meur a zoue ha meur a aotrou, -6-n'eus, d'or menoz-ni, nemed eun Doue hebken, an Tad a zeu peb tra anezañ hag ez eom d'avetañ, hag eun Aotrou nemed ken, Jezuz Krist a zo drezañ peb tra ha ni iveauz a zo drezañ. -7- Med n'eo ket an oll o-deus an anaoudegez. Lod, merket gand an darempredou o-deus bet n'eus ket pell c'hoaz gand an doueou faoz, a zebri kig ar zakrifisou evel ma vefe kinniget e gwirionez d'an doueou faoz, hag o houstiañs, gwan anezi, a vez louzet. -8- N'eo ket boued pe voued eo a-raio deom tostaad ouz Doue: ma ne zebrom ket, ne vo ket eur holl evidom, ma tebrom, ne vo ket eur gounid. -9- med diwallit na zeufe ar frankiz-se hag a zo ho lod da veza eur skoill evid an dud sempl. -10- Rag, ma vezes-te gwelet ouz taol en eun templ doueou faoz, te ha n'emaout ket heb gouzoud, daoust ha ne vo ket douget ganit da zebri kig bet kinniget d'an doueou faoz, an hini a zo sempl a goustiañs. -11- Hag ablamour d'an anaoudegez m'eo da hini ez a da goll an hini a zo sempl, ar breur-se dit m'eo maro ar Hrist evitañ. -12- O pehi evel-se a-eneb ho preudeur hag o hloaza o houstiañs , a zo gwan anezi, a-eneb ar Hrist eo e

pehit. -13- Setu perag, ma teu eur boued hag a zebran da lakaad va breur da goueza, e chomin heb debri kig da viken kentoh eged beza eur skoill a lakay va breudeur da goueza.

PAOL A DRO KEIN D'E WIRIOU

IX..-1- Daoust ha me n'on ket libr? Daoust ha n'on ket abostol? Ha n'am-eus me met gwelet Jezuz on Aotrou? Ha ma n'on ket abostol, evid tud a zo, evi-doh-hwi da vianna ez on, rag c'hwi hoh-unan a zo ar merk anad euz va labour a abostol, en Aotrou. -3- Setu aman ar respont d'ar re a damall ahanon. -4- Daoust ha n'on-eus ket droad da zebri ha da eva? -5- Daoust ha n'on-eus ket droad da gas ganeom eur vaouez kristen evel an ebrestel all, breudeur an Ao-trou ha Kefas? -6- Daoust ha ne veze nemed-on ha Barnabas ha n'on-dije ket ar gwir da jom heb labourad? -7- Piou a zo bet soudard diwar e goust e-unan? piou a labour eur winieg o chom heb debri frouez anezi? Piou a gas eun tro-pell loened da beuri hag a jom heb eva euz e léz?

-8- Ha ne vije an dra-ze nemed eur mod e-touez an dud, pe lavared a rafe al le-zenn ar memez tra? -9- Evid gwir, skrivet eo e Lezenn Voizez : «Ne laki ket ar vinell d'an ejenn a zo o vresa ar greun». Ha daoust eo gand ejenned eo darbaret Doue? -10- Daoust ha n'eo ket evidom-ni eo e komz? Ya, evidom-ni end-eeun eo bet skrivet kement-se. rag fiziañs a dle kaoud an hini a labour an douar, ha fiziañs iveau da gaoud e lod an hini a zorn ar greun. -11- Peogwir on-eus hadet evidoh ar madou sprededel, daoust ha re e vije deom gortoz diouzoh madou danvezel? -12- Peogwir ez eus lod tud o kemer ar gwir-se warnoh, daoust ha re e vije deom gortoz diouzoh madou danvezel? -12- Peogwir ez eus lod tud o kemer ar gwir-se warnoh, perag ne rafem-ni ket muioh c'hoaz? Koulskoude n'on-eus ket kemeret ar gwir-se. Ar hontrol eo, gouzañv a reom peb tra evid chom heb beza eur skoill evid Aviel ar Hrist.. -13- Ha n'ouzoh-hwi ket e vev di-war goust an templ ar re a zo e servich an templ, hag o-devez lod euz ar provou kinniget war an aoter ar re a zo e servich an aoter. -14- Evel-se iveau e-neus an Aotrou roet urz d'ar re a brezeg an Aviel da veva diwar goust an Aviel.

-15- Me avad n'am-eus ket kemeret hini ebed euz ar gwirioù-se; ha n'eo ket evid o gouleñn eo e skrivan an dra-mañ. Kentoù mervel! Ne denno den diganin an abeg-se a ourgouill. -16- Ma prezegan an Aviel, n'am-eus ket leh da fouseal a gement-se, eun dra red eo evidon; gwaz-a-ze din ma ne brezegan ket an Aviel! -17- M'her grafen euz va ferz va-unan, am-befe gwir da gaoud digoll, med n'eo ket ahanon va-unan eo her gran, med hervez ar garg fiziet ennon. -18- Peseurt digoll eo eta va hini? Prezeg a ran an Aviel heb klask digoll ebed, heb lakaad e kont ar gwir am-eus vel prezeger an Aviel.

-19- Rag libr e keñver an oll, am-eus greet ahanon sklav an oll, evid gounid an muia posubl euz an dud, -20- gand ar Juzevien ez on bet evel eur Juzeo evid gounid ar Juzevien ; gand ar re a zo dindan al Lezenn, evel ma vijen bet me va-unan - daoust ma n'emaon ket, - evid gounid ar re a zo dindan al Lezenn ; -21-

gand ar re a zo heb lezenn, evel ma vijen heb lezenn, -daoust ma n'emaon ket heb lezenn e keñver Doue peogwir eo ar Hrist va lezenn, - evid gounid ar re a zo heb lezenn. -22- Dister gand ar re zister, evid gounid ar re zister. En em roet am-eus penn-da-benn d'an oll evid savetei, kousto pe gousto, hiniennou. -23- Ha kement-se evid an Aviel, evid kaoud va lod ennañ.

-24- Ha n'ouzoh-hwi ket e red an oll rederien war al lis ha n'eus nemed unan o hounid ar priz. Redit eta e-doare da hounid anezañ. -25- Ar re oll a glask priz war al lis a rank dioueri kalz, hag int-i eo evid gounid eur gurunenn hag a wenvo, ha ni evid eur gurunenn ha ne wenvo ket. -26- Me, eta, eo evel-se eo e redan, n'eo ket mouchet va daoulagad, hag e tistagan taoliou n'eo ket e goullo. -27- Rust on evid va horv hag e zelher a ran em dalh gand aon na vefen laket er mèz va-unan goude beza prezeget d'ar re all.

SKOUER ISRAEL ER GOUELEH

X -1- Ne garfen ket e chomfeh heb gouzoud, breudeur, penaoz eo bet on tadou gwechal, p'o-doa kuiteet Bro-Egypt ; oll on tadou a zo bet goloet gand ar goabrenn, oll o-deus treuzet ar mor ; -2- oll int bet, dre Voizez, badezet er goabrenn hag er mor ; -3- oll o-deus debret an heveleb boued a oa hini ar spred ; -4- oll o-deus evet an heveleb evaj, a oa iveau euz ar spred, rag eva reent dour euz ar roh a gerze d'o heul hag ar roh-se oa ar Zalver. -5- Ha koulskoude ar peb brasa anezo o-deus displijet da Zoue, hag ez int bet diskaret er goueleh.

-6- Kement-se a zo degouezet ganto evid rei kentel deom hag herzel ouzom da hoantaad an droug, evel m'o-doa greet ar re-ze. -7- Na droit ket gand an doueou faoz, evel m'o-deus greet lod, hervez m'eo skrivet : «Azeza a reas ar bobl evid debri hag eva ha goudeze e savjont da ebatî.» -8- N'en em room ket kennebeud d'an hudurnez, evel lod anezo ma kouezas en eun devez hebken tri mil war 'n ugent anezo. -9- Na glaskom ket amproui an Aotrou, evel ma reas lod anezo, ma oent lazet gand an naered. -10- Na hrosmolit ket a-neeb Doue, evel m'o-doa greet lod anezo hag a zo bet lazet gand an el destrujer. -11- Oll an traou a oa c'hoarvezet ganto a oa ken aliez a genteliou evidom, ha laket int bet dre skrid evid or sklerijenna, ni hag a zo en em gavet e fin an amzeriou. -12- Rag-se eta, an hini a zoñj dezañ beza stard en e zav, taoler evez da goueza. -13- N'eus kouezet warnoh tentadur ebed hag a vije en tu all d'ho nerz-den ; feal eo Doue, ne houzañvo ket e vefeh tentet en tu all d'ho nerz. Da heul an tentadur e roio deoh an tu d'en em denna hag an nerz da herzel outañ. -14- Setu perag, va breudeur muia-karet, tehit diouz an idolerez. -15- Komz a ran deoh evel da dud fur ; grit ho soñj hoh-unan war ar pez a lavaran. -16- Benniga ar halir a vennoz, daoust ha n'eo ket evidom kemer perz e kovr ar Hrist ? -17- Peogwir n'eus nemed eur bara hebken, n'eus ahanom nemed eur horv, daoust ma 'z om niveruz, rag oll on-eus perz en eur bara hebken. -18- Sellit ouz bugale Israel war an douar : daoust hag ar re a zebr euz kig ar zakrifis n'emaint ket e komunion gant an aoter ? -19- Petra 'fell din lavared ? e vefe eun dra bennag ar hig kinniget d'an doueou faoz, hag eun dra bennag an doueou faoz ? -20- N'int ket, med peogwir eo d'an droug-sperejou ha n'eo ket da Zoue eo e vez kinniget

ar zakrifisou-se, ne fell ket din ho-pefe unvaniez gand an droug-sperejou. -21- N'hellit ket eva war eun dro euz kalir an Aotrou hag euz kalir an droug-sperejou ; n'hellit ket mond ouz taol an Aotrou hag ouz taol an droug-sperejou ; -22- pe felloud a rafe deom hega an Aotrou. Daoust ha krefivoh egetañ e ve-fem ? -23- Aotreet eo peb tra, med peb tra n'eo ket mad evidom. Aotreet eo peb tra, med peb tra ne ro ket skouer vad. -24- Na glasko nikun e vad e-unan, med hini ar re all. -25- Kement a vez gwerzet er marhad, debrit anezañ heb beza chalet gand ho koustiañs, -26- rag an douar ha kement a zo ennañ a zo d'an Aotrou.

-27- Ma teu eun den difeiz d'ho pedi ha ma kavit mad mond, debrit euz kement a vo kinniget deoh heb klask petra lavar ho koustiañs. -28- Med ma lavar unan bennag deoh : «an dra-mañ a zo kig bet provet d'an idolou», na zebrit ket anezañ ablavour d'an hini e-neus henn lavaret deoh hag ablavour d'ar goustiañs, ha n'eo ket euz ho koustiañs eo e komzan amañ, med euz e hini dezañ, -29- rag perag e ve barnet va houstiañs gand koustiañs unan all ? -30- Ma kemeran boued en eur drugarekaad, perag tamall ahanon evid ar pez a rentan gloar evitañ ?

-31- Pe e vefeh eta o tebri, pe oh eva, pe ho ober tra pe dra, grit peb tra evid gloar Doue. -32- Na roit tro da goueza da zen ebed, na d'ar Juzevien, na d'ar Gresianed, nag eta da Iliz Doue. -33- Er giz-se eo e klaskan-me plijoud d'an oll e peb tra heb klask n'eo ket va mad va-unan med hini kalz a dud evid ma ve-zint salvet.

AR GWAZ HAG AR VAQUEZ DIRAG DOUE

XI -1- Kemerit skouer diwarnon evel ma kemeran skouer diwar ar Hrist. -2- Meuleudi a roan deoñ en-abeg m'ho-pevez soñj ahanon bepred, ha ma virit ar boazamañchou koz evel m'am-eus roet anezo da anaoud. -3- Felloud a ra din koulskoude e ouezfeh kement-mañ : peb gwaz e-neus ar Hrist da benn, ar vaouez he-deus he gwaz da benn hag ar Hrist e-neus Doue da benn. -4- Kement gwaz a bed pe a brofed goloet e benn a zizenor e benn. -5- Kement maouez a-vad a bed pe a brofed digabell a zizenor he fenn, rag an dra-ze a zo evel ma vije bet touzet he bleo dezi. -6- Ma ne zoug ket ar vaouez eur ouel, dezi neuze lakaad touza he bleo ; med mar deo eur vez evid eur vaouez kaoud he bleo trohet pe douzet, dezi neuze lakaad eur ouel. -7- Ar gwaz a-vad ne dle ket golei e benn, o veza ma 'z eo skeudenn ha gloar Doue, med ar vaouez a zo gloar ar gwaz, -8- rag n'eo ket ar gwaz a zo bet tennet euz ar vaouez, med ar vaouez euz ar gwaz, -9- Ha n'eo ket ar gwaz a zo bet krouet evid ar vaouez, med ar vaouez evid ar gwaz. -10- Setu perag e tle ar vaouez dougen war he fenn ar merk euz he zujidigez ablavour d'an élez. -11- Koulskoude en Aotrou, eur gwaz ne da ket heb ar vaouez nag ar vaouez heb ar gwaz. -12- Rag, mar deo bet tennet ar vaouez euz ar gwaz, ar gwaz a vez ganet gand ar vaouez ha peb tra a zeu euz a Zoue. -13- Ennoh hoh-unan eo barn : daoust ha deread eo d'eur vaouez pedi Doue hag hi digabell. -14- Daoust ha ne zesk ket deoh an natur eo eur vez evid ar gwaz kaoud bleo hir, -15- pa 'z eo eun enor evid ar vaouez, rag ar bleo a zo roet dezi e-giz gouel ; -16- ha neuze, ma 'z eus hini pe hini hag a blij dezañ rendaeli a-eneb, n'om ket kustum a gement-se, na ni, nag Ilizou Doue kennebeud.

-17- A-hend-all, n'am-eus ket d'ho meuli, ar bodadegou a rit a ra muioh a zroug egod a vad, -18- rag da genta, war a glevan, p'en em vodit e-giz Iliz e vez disparti etrezoh, hag e kav din n'eo ket gevier penn-da-benn ; -19- rag red eo e savje disrann en ho touez evid ma vo diskuliet pere ahanoh a zalh mad. -20- Med p'en em vodit oll asamblez, n'eo ket pred an Aotrou eo a gement. -21- Rag peb hini a zo mall gantañ kemer e bred e-unan e doare m'e-neus hemañ naon ha m'eo egile mezo. -22- Daoust ha n'ho-peus ket ho tiez evid debri hag eva ? pe fae a rit war Iliz Doue, ha mez d'ar re n'o-deus netra. Petra lavarin deoh ? Rei meuleudi deoh ? ne rin ket war ar poent-se, -23- rag kement-mañ am-eus resevet digand an Aotrou hag am-eus roet deoh : an Aotrou Jezuz, en nozvez end-eun ma oe gwerzet, a gemeras bara, -24- ha goude beza greet eur bedenn a drugarez, e torras ar bara hag e lavaras : «va horv eo hemañ, roet evidoh, grit kement-mañ da ober koun ahanon». -25- Evel-se e reas c'hoaz evid ar halirad goude koan en eur lavared : «Bez' ez eo ar halirad-mañ an emgleo nevez em gwad, bewech ma 'h evoh anezañ, grit kement-mañ da ober koun ahanon.» -26- Rag beweh ma tebriet ar bara-mañ ha ma 'h evit ar halirad-mañ, eh emban-nit maro an Aotrou beteg ma teuio en-dro.

-27- Setu perag an neb a zebro bara an Aotrou pe a evo e galirad, heb beza din, en em rento kabluz e keñiver korv ha gwad an Aotrou. -28- Da beb hini eta sell-ed mad ennañ e-unan araog debri euz ar bara-se hag eva euz ar halirad-se, -29- rag an neb a zeb hag a ev heb kompreñ eo korv an Aotrou, a zeb hag a ev e gondaonidigez e-unan. -30- Setu perag ez eus en ho touez kement a dud klapñv hag a dud gwan, hag ez eus maro meur a hini. -31- Ma kärfem en em varn on-unan, ne vefem ket barnet. -32- Med an Aotrou or barn evid or hentelia e-doare ma ne vefem ket kondaonet a-unan gand ar bed.

-33- Evel-se eta, breudeur, p'en em vodit evid ar pred, en em hortozit an eil egile. -34- M'e-neus unan bennag naon, ra zebro er gêr evid miret d'en em voda evid ho kondaonidigez.

DONEZONOU AR SPERED

XII -1- Evid ar pez a zell ouz an donezonou speredel, ne fell ket din e vefeh diouizieg diwar o fenn. -2- Pa oah payan, her gouzoud a rit, e vezeh poulzet warzu an idolou mud. -3- Setu perag e tisklerian deoh, n'eus den ebed o komz dre Spered Doue hag a larvarfe : «Milliget ra vo Jezuz», ha n'hell den lavared «Jezuz eo an Aotrou» nemed dre ar Spered Santel.

-4- Liez seurt donezonou a zo, med ar memez Spered eo. -5- Liez karg disheñvel a zo iveau, med ar memez Aotrou eo. -6- Liez seurt obériadou a zo, med ar memez Doue oh oberia peb tra en oll. -7- Evid mad an oll e vez roet da beb hini e zonezon evid ma vo diskuliet ar Spered. -8- Da unan e vez roet, gand ar Spered, komz ar furnez, da unan all, dre ar memez Spered komz ar ouziegez ; -9- Da unan all, er memez Spered, donezon ar feiz, pe c'hoaz, dre ar Spered n'eus memetañ, an donezon da rei ar pare ; -10- Da unan all da ober burzudou, da unan all da brofed, da unan all da zigemma ar sperezou, da unan all da gomz e yezou a beb seurt, da unan all da ziskleria ar yezou-se. -11- An oll zonezonou-se a zeu euz ar memez Spered ha n'eus nemetañ, o ingala a ra war beb hini evel ma kar.

-12- Da skouer, lakom ar horv : n'eus anezañ nemed eur horv hebken, ha kouls-koude e-neus kalz izili, med an oll izili, kaer o-deus beza niveruz, n'eus anezo nemed eur horv. Evel-se ema kont gand an Aotrou Krist ; -13- rag en eur spered hebken om-ni oll bet badezet da veza eur horv hebken, koulz Juzevien ha Gresianed, koulz sklavet ha tud libr, bet deom or gwalc euz an heveleb Spered, -14- rag sklér eo, n'eo ket greet ar horv gand eun ezel hebken, med gand meur a hini. -15- Ma lararfe an troad : me n'on ket an dorn, n'on ket eta euz ar horv, daoust ha ne vefe ket c'hoaz euz ar horv ? -16- Ma teufe ar skouarn da lavared : me n'on ket lagad, n'on ket eta euz ar horv, daoust ha ne vefe ket c'hoaz euz ar horv ? -17- Ma ne vefe euz ar horv nemed lagad, e peleh e vefe ar hleved. Ma ne vefe anezañ nemed diskouarn, e peleh e vefe ar c'hwsa ? -18- Med Doue e-neus greet an izili ha roet e blas da beb hini er horv, e-giz ma felle dezañ. -19- Ma ne vefe ar horv a-bez nemed eun ezel, e peleh e vefe ar horv ? -20- Med meur a ezel a zo, ha koulskoude eur horv hebken.

-21- N'hell ket eta al lagad lavared d'an dorn : «N'am-eus ket ezomm ahanout» riag ar penn kennebeud lavared d'an treid : «N'am-eus ket ezomm ahanoh». -22- Kalz gwelloh c'hoaz : an izili euz ar horv hag a gavom-ni ar re zisterra a zo iveau red evidom, -23- hag ar re a lakom er renk izella eo ar re a enorom ar muia. Evel-se on izili dizonest a vez greet kalz dereatoh outo. -24- An izili onest n'o-deus ket ezomm a gement-se. Doue e-neus renket ar horv e-doare da rei muioh a enor d'ar re o-deus diouer, -25- evid ma ne vo ket a freuz er horv, med, er hontrol, evid ma vo an izili prederiet an eil gand egile. -26- Ha gouzañ poan a ra eun ezel ? An oll izili a houzañ gantañ ; hag enor a zeu d'eun ezel ? an oll a gemer perz en e levenez.

-27- Hogen bez ez oh korv an Aotrou Krist, hag izili anezañ peb hini evid e lod. -28- Darn a zo bet lakeet gand Doue en Ilij, da genta Ebestel, d'an eil prezegerien, d'an trede kelennerien, goudeze e teu an donezonou da ober burzudou, da barea, da skoazella o breudeur, da houarn, da gomz e yezou. -29- Daoust hag ez int oll ebrestel, oll prezegerien, oll kelennerien ? daoust hag oll o-deus an donezon d'ober burzudou, -30- da barea, da gomz e yezou pe da zisplega ? -31- Klas-kit gand gred an donezonou gwella, hag ouspenn emaon o vond da ziskouez deoh eun hent dispar.

MEULGAN AR GARANTEZ

XIII : -1- Ha goude ma oufen komz yezou an dud ha re an êlez, ma n'am-eus ket ar garantez, n'on nemed arem o seni pe simbalenn o tregermi. -2- Ha goude m'am-befe an donezon a brofed, goude ma h'anavezfen an oll misteriou hag ar ouisiegez a-bez, -3- ha goude ma rofen va oll vadou en aluzenn, pe ma taolffen va horv en tan da zevi, ma n'am-eus ket ar garantez ne dalvez da netra. -4- Ar garantez a zalh mad, ar garantez a zo madelezuz hag heb avi, ar garantez ne zeu ket da fougeal na da c'hweza gand an ourgouill. -5- Ne ra ket troiou kamm, ne glask ket he mad heh-unan, ne zeu ket da daeri, ne zalh ket kont euz an droug, -6- ne gemer ket plijadur o weled ober gaou, med kavoud a ra he flijadur er wirionez, -7- peb tra a zidamall, peb tra a gred, peb tra a esper, peb tra a houzañ.

-8- Ar garantez n'eus diskar ebed dezi ; an donezon a brofed ? da netra ez ay ; hini ar yezou ? ehana a ray ; pe hini ar ouziegez a Zoue ? da netra ez ay iveau, -9- rag eul lodenn hebken a hellom gouzoud, eul loden hebken a hellom profedi. -10- Setu, pa vo degouezet ar pez a zo klok, ar pez n'eo nemed eul lodenn a yelo da netra. -11- Evel-se pa oan bugel, evel eur bugel e komzen, evel eur bugel e soñjen, evel eur bugel eh intêñten ; med deuet da veza eur gwaz, am-eus dilezet troiou-lavar ar bugel. -12- Bremañ e welom a-dreuz eur melezour en eur damskeud, med neuze e welim war-eeun. Bremañ eh anavezom eul lodenn, neuze eh anavezim evel m'om anavezet. -13- Breman eta e chom an teir-ze : ar feiz, an esperâns hag ar garantez, med ar vrasa anezo eo ar garantez.

DONEZONOU AR SPERED EVID DIORREN AN OLL

XIV -1- Bexit war glask euz ar garantez, klaskit gand gred an donezonou speredel, -2- rag an neb a gomz e yezou ne gomz ket ouz an dud, med ouz Doue, n'eus den ebed evid e intent, rag d'ar Spered eo e lavar traou misteriu. -3- Er hontrol, an neb a vez o profedi a gomz d'an dud evid sevel anezo, o hentelia, o hennerza. -4- An neb a gomz e yezou en em uhela e-unan, med an neb a brofed a uhela an Iliz.

-5- Me 'garfe e teufeh oll da gomz e yezou, med muioh c'hoaz da brofedi. Brasoh eo an hini a brofed eged an hini a gomz e yezou, nemed ha displega rafe hemañ e-unan ar pez a lavar ma hellfe evel-se an Ilizad beza santelleet. -6- Lakkom bremañ, breudeur, e teufen d'ho kweled hag e komzfen e yezou, peseurt vad a rafen d'oh, ma ne zeu deoh diwar va homzou na diskuliadur , na gouisiégez, na profesi, na kelennadurez.

-7- Evel-se ema kont gand ar binviou soneréz, evel ar fleüt, ar gitar, ma ne zeu ket ganto soniou disheñvel, penaoz gouzoud petra c'hoari ar fleüt pe ar gitar ? -8- Ha ma ne zeu ket gand an drompill eur zon sklér, piou a raio e bourchasou evid an emgann ? -9- Evidoh-hwi eo heñvel, ma ne zeu ket gand ho teod komzou hag a heller intent, penaoz e vo intentet ar pez a lavarit ? En aner eo e komzoh. -10- Na ped ger a zo er bed ha peb hini e-neus e dalvoudegez. -11- Med ma ne anavezañ ket talvoudegez ar ger, e vezin eun den a yez dianav evitañ, hag eñ, eun den a yez dianav evidon. -12- C'hwi iveau, klaskit kaoud, ar muia posubl, donezonou speredel peogwir e hoantait o haoud, med ra vezo evid diorroadur an Iliz.

-13- Setu perag e tle an neb a gomz e yezou pedi evid kaoud an donezon d'o displega. -14- Ma pedan e yezou, va spered a bed, med va skiant ne denn frouez ebed ahano. -15- Petra zo da ober eta ? Pedi a rin gand va spered, med me a bedo iveau gand va skiant ; kanmeuli a rin gand va spered, med me a ganmeulo iveau gand va skiant. -16- Rag ma rentez bennoz da Zoue gand da spered hebken, penaoz e vo gouest da respont AMEN ar re n'int ket c'hoaz desket mad pa ne intentont ket ar pez a lavarez ? -17- Kaer kenañ eo moarvad da bedenn a drugarez, med egile n'eo ket diorroet.

-18- A drugare Doue, me a gomz e yezou muioh egedoh oll. -19- Med en eur vodadenn e kavan gwelloh lavared pemp ger êz da intent gand va skiant, evid keleñ ar re all iveau, kentoh eged deg mil e yezou. -20- Breudeur, na vezit ket bugale e-keñver ar skiant vad. E-keñver an droug ya, bezit bugaligou, med e-keñver ar skiant vad, bezit tud vraz. -21- Skrivet eo el Lezenn : komz a rin d'ar bobl-mañ dre dud a yez estren hag evel-se zoken n'am zelaouint ket, eme an Aotrou. -22- Evel-se ar yezou a zo eur zin, n'eo ket evid ar re a gred, med evid ar re ne gredont ket ; e-leh ar brofediez a zo eur zin n'eo ket evid ar ne gredont ket, med evid ar re a gred.

-23- Ma teufe, lakom, en eun ilizad tud bodet, an oll da gomz e yezou, ar re ne reont nemed selaou, pe an dud diffeiz a zeufe da antreal, daoust he ne gredfe ket dezo ho-pefe kollet ho skiant-vad. -24- Er hontrol, ma teuont oll da brofe-di, an den diffeiz pe an den ne ra nemed selaou hag a zeu da antreal en em gay tarmallet gand an oll, barnet gand an oll ; -25- sekrejou e galon a zo dizoloet ; en em deurel a raio, e benn d'an douar, azeuli Doue ha diskleria ema Doue e gwirionez en ho touuez.

-26- Petra 'ta da ober neuze, breudeur ? Pa vez bodadenn ganeoh, peb hini ahanoñ a hell kana eur hantik, rei da houzoud eur gelenadurez pe eun diskuliadur, komz e yezou pe rei diskleriadur ; ra vo greet peb tra evid diorroadur an oll. -27- Pa vez komzet e yezou, ra vo greet gand daou zen, gand tri d'an hirra, ha peb hini d'e dro, hag unan bennag da ziskleria. -28- Ma n'eus den da ziskleria, ra jomo sioul ar breur er vodadenn, dezañ da gomz outañ e-unan hag ouz Doue. -29- Pa vez profedet, ra gomzo daou pe dri, d'ar re all lavared o zoñj. -30- Ma teu eun diskuliadur da unan pe unan euz ar zelaouerien, ra baouezo an hini a zo o komz. -31- Profedi a hellit oll, en eil goude egile, evid ma vo kenteliet an oll ha starteet en o menoñ. -32- Ar profed a zo mestr war ar spered a brofediez a zo ennañ, -33- rag Doue n'eo ket eun Doue a zizurz med eun Doue a beoh.

-34- Evel ma vez greet e oll ilizou ar zent, ra davo ar merhed en ilizou, rag n'o-deus ket autre da gomz, dezo chom en o flas, evel ma lavar al Lezenn. -35- M'o-devez c'hoant da veza kenteliet war dra-pe-dra, n'o-deus nemed goulenn ouz o gwaz er gêr ; n'eo ket deread d'eur vaouez komz en eur yodadenn. -36- Daoust hag euz ho ti eo bet savet komz Doue ? Daoust ha n'eus nemedoh hag ho-pefe he resevet ? -37- Ma 'z eus unan bennag hag a gred dezañ beza profed pe beza resevet eun donezon speredel bennag, dezañ anzav eo ar pez a skriwan deoh eur gourhemenn a-berz an Aotrou. -38- Ma 'z eus unan bennag ha n'henn anzav ket, hennez e-unan n'eo ket anavezet gand Doue. -39- Evel-se, breudeur, klaskit kaoud an donezon a brofediez : ha na virit ket e vefe komzet e yesou. -40- Med ra vo greet peb tra deread hag en urz vad.

AR HRIST SAVET A VARO DA VEO

XV. -1- Bremañ am-eus da zisplega deoh an Aviel am-eus prezeget deoh, ho-peus degemeret hag a zalhit dezañ : -2- Dre an Aviel-se e vezoh saveteet gand ma viroh anezañ evel m'am-eus e brezeget deoh ; a-hend-all eo en aner ho-pefe kre-

det. -3- Ar pez am-eus desket deoh araog peb tra hag am-eus-me desket va-unan, eo kement-mañ : ar Hrist a zo maro evid or pehejou, evel ma oa lavaret er Skrituriou, -4- lakeet eo bet er bez, ha d'an trede deiz eo adsavet da veo evel ma oa lavaret iveau er Skrituriou ; -5- en em ziskouezet e-neus da Bér ha goude d'an daouzez ; -6- goudeze eo bet gwelet gand ouspenn pemp kant a vreudeur war-eun-dro, a zo beo c'hoaz an darn vuia anezo, med lod a zo maro. -7- Goudeze eo bet gwelet gand Jakez, ha goude gand an oll ebrest.

-8- D'an diweza toud, eo en em ziskouezet din-me evel d'ar paour-kêz kollidig, -9- rag an disterra on euz an ebrest : n'on ket din zoken da veza anvet Abostol, o veza m'am-eus gwallgaset Iliz Doue. -10- Med dre hrsas Doue ez on ar pez ma 'z on, hag e hrsas ennon n'eo ket chomet difrouez, pell ahano : muioh egeto oll am-eus lakeet va foan, n'eo ket me eo, a-vad, med gras Doue ganin. -11- Evel-se 'ta, int-i koulz ha me, setu ar pez a brezegen, setu ar pez ho-peus kredet. -12- Ma prezeger eo savet an Aotrou Krist a-douez ar re varo, penaoz e hell lod ahanoh lavared n'eus ket a adsav evid ar re varo ? -13- Ma n'eus adsav ebed evid ar re varo, ar Hrist kennebeud n'eo ket adsavet da veo, -14- ha ma n'eo ket adsavet ar Hrist eo goullo or prezegerez ha goullo iveau or feiz. -15- Dond a reom zoken da veza testou faoz e-keñver Doue, peogwir on-eus douget testeni faoz o lavared e-neus Doue adsavet ar Hrist da veo pa n'e-neus ket e adsavet, mar deo gwir n'eus adsav ebed evid ar re varo. -16- Ma ne adsav ket ar re varo, neuze an Aotrou Krist kennebeud n'eo ket adsavet da veo, -17- ha ma n'eo ket adsavet an Aotrou Krist, n'eo diazezet ho feiz war netra, hag emaoz c'hoaz en ho pehejou. -18- Neuze iveau ar re a zo maro en Aotrou Krist a zo kollet. -19- Ha ni, ma 'z eo evid ar vuez-mañ nemed ken on-eus lakeet on espérañs en Aotrou Krist, ez eo or stad ar reuzeudika a hell beza.

-20- Med bremañ, setu ar wirionez : an Aotrou Krist a zo savet a varo da veo, en ar henta a-douez an dud tremenet. -21- Evel-se, koulz ha ma oa deuet ar maro dre eun den, dre eun den iveau e teu an adsao da veo. -22- Evel ma varv an oll e Adam, an oll iveau o-do ar vuez er Hrist ; -23- med peb hini en e renk : an Aotrou Krist da genta-penn, goudeze ar re 'vo d'an Aotrou Krist, da gefiver e zistro. -24- Da houde e vo echu peb tra, pa lako ar rouantelez etre daouarn Doue an Tad, goude beza diskaret peb domaniez, peb galloud, peb nerz, -25- rag dezañ eo ren beteg m'e-no lakeet e oll enebourien dindan e dreid, -26- Hag an diweza enebour da veza diskaret eo ar maro, -27- rag lakeet e-neus peb tra dindan e dreid. Med pa lavaro : «peb tra a zo sujet» skler eo, n'ema ket da lakaad er gont an hini e-neus lakeet peb tra da zuja dezañ e-unan. -28- Ha goude ma vo bet lakeet peb tra da zuja dezañ, ar mab e-unan a blego d'an hini e-no lakeet peb tra da zuja dezañ, evid ma vo Doue peb tra e kement tra.

-29- A-hend-all petra glaskfe ar re a reseo ar vadéziant leh ar maro ? Ma n'eus adsao ebed evid ar re varo perag neuze beza badezet en o leh ? -30- Ha ni on-unan, perag ez eus riskl evidom dalhmad ? -31- Bemdez e vez riskl a varo evidon, ken gwir ha ma 'z oh evidon, breudeur, eun abeg a lorh e Jezuz Krist or Zalver. -32- Da betra e-nefe servichel din en em ganna ouz al loened e Efez ma vije bet evid kaoud gloar dirag an dud ? Ma n'eus ket evid ar re varo

a adsao d'ar vuez : debrom hag evom, rag warhoaz e varvim. -33- N'it ket da fazia : an darempredou fall a vrein an onestiz. -34- Deuit en-dro d'eur vuez eeuñ hag onest ha na behit mui ; rag lod ahanoh ne anavezont ket Doue, lava-red a ran ez eo eur vez evidoh.

-35- Med lavared e vo : penaõz eh adsao ar re varo da veo ? Gand peseurt korv e teuint en-dro ? -36- Diskiant a zen : ar pez a hadez-te ne zeu ket buez ennañ nemed ha mervel a rafe da genta. -37- Hag ar pez a hadez, n'eo ket eur blantenn a dle sevel med eur hreunenn noaz, eur winizenn pe eun dra ben-nag all. -38- Doue a ro korv dezi evel ma fell dezañ ha da beb hadenn he doare dezi. -39- Kig ebed n'eo ar memez hini gand unan all. Kemm a zo etre hini an dud, hini al loened, hini al laboused, hini ar pesked. -40- Bez ez eus korvou en neñv, ha korvou war an douar ha n'o-deus ket ar memez sked. -41- Kemm a zo etre sked an heol ha sked al loar, pe hini ar stered : kemm a zo zoken etre sked eur steredenn ha sked eur steredenn all.

- 42- Evel-se ema kont iveau evid adsao ar re varo : hadet evel eun dra tonket da vreina, ar horv a zav a varo divarvel : - 43- hadet evel dismeganis, e sav leun a hloar ; hadet evel sempladurez, e sav leun a nerz ; - 44- hadet evel korv douarel, e tazorh korv speredel ; ma 'z eus eur horv douarel, ez eus iveau eur horv spirituel. - 45- An den kenta, Adam, evel ma lavar ar Skritur, a zo bet eur horv roet buez dezañ ; an eil Adam, Jezuz Krist a zo eur spered hag a ro buez. - 46- Ar pez a zeu da genta, n'eo ket buez ar spered, med buez naturel an den, ha goude e teu hini ar spered. - 47- An Adam kenta, tennet euz an douar, a zo douar, e-leh an eil a zeu euz an neñv ; - 48- par d'an hini douarel, an oll dud iveau a zo douarel, ha par d'an hini deuet euz an neñv, an oll dud iveau a zo an neñv o bro. - 49- Setu perag, evel m'on-eus douget ennom poltred an hini douarel, e tleom dont da denna iveau d'an hini deuet euz an neñv. -50- Setu ar pez a zisklerian, breudeur : ar hig hag ar gwad n'hellont ket kaoud da hérez rouantelez Doue, nag ar pez a zo brein kaoud da hérez ar pez a jom heb breina.


-51- Mond a ran da rei deoh da anaoud eur mister : ne varvim ket oll, med oll e cheñchim doare ; -52- En eun taol-kont, amzer eur wilhadenn, ouz son an drompill ziweza - rag simi a ray an drompill -, ar re varo a zavo da veo divreinuz, ha ni a jeñcho doare, -53- rag red eo e teufe ar horv breinuz-se da veza divreinuz, hag ar horv marvel-mañ da veza divarvel, neuze e teuio da wir komzou ar Skritur : An treh a zo deuet a-benn euz ar maro. -55- E peleh, maro, ema da dreh ? e peleh ema da vroud ? -56- Broud ar maro eo ar pehed ha galloud ar pehed eo al Lezenn. -57- Bennoz da Zoue a ro deom an treh dre an Aotrou Jezuz Krist. -58- Evel-se, va breudeur ker, bezit stard, divrall, kit atao war well, ne vo ket ho poan didalvoud en Aotrou.

AR GEST EVID ILIZ JERUZALEM

XVI -1- E keñver ar gest greet evid ar zent, c'hwi a viro, c'hwi iveau, ar gour-hemennou am-eus roet da Ilizou Galasia. -2- D'an deiz kenta a beb sizun, peb hini a lakaio a-gostez en e di ar pez e-no gellet espern, evel-se ne vo ket gortozet e vefen distro evid ober ar gest. -3- Pa vezin degouezet, e kasin, gand liziri euz; va ferz, ar re ho-po dibabet da gas ho tonezonou ûa Jeruzalem. -4- Mar deo deread ez afen me va-unan, e raint hent ganin.

-5- Mond a rin davedoh o tremen dre Vakedonia, rag ne rin nemed treuzi ; -6- du-ze e chomin ganeoh eur pennad, marteze zoken a-hed ar goañv, evid ma teufeh d'am zikour da vond pelloh, da gendelher gand va hent ; -7- rag er wechmañ ne fell ket din ho kweled netra nemed en eur dremen dre ho kér, fiziañs am-eus da jom ganeoh eur pennad amzer, mar deo bolontez Doue. -8- Med e Efez e chomin beteg ar Pantekost, -9- rag eun nor a zo digor braz d'am labour ha niveruz eo an enebourien. -10- Ma teu Timote, lakit evez ma vo dienkreñ en ho touez, rag eveldon-va-unan e labour e servich an Aotrou. -11- Arabad eo da zen eta kaoud dismegafis evitañ ; grit gantañ ar pez a zo red evid ma hello dond en-dro beteg ennon, rag gortoz a reom anezañ, ar vreudeur ha me. -12- Evid ar pez a zell ouz Apollos, or breur, e aliet am-eus stard da vond davedoh gand ar vreudeur, med ne fell ket dezañ, a briz ebed, mond bremañ, mond a raio p'e-nezo tro vad.

-13- Bezik war evez, bezik stard er feiz, bezik gwazed, bezik nerzuz. -14- Grit peb tra gand karantez. -15- Eun dra all a gemennan deoh, breudeur : gouzoud a rit eo Stefanas hag e famill ar re a zo deuet da genta d'ar feiz e bro Akaia, o-deus en em lakeet e servich ar zent. -16- Bezik eta leun a zoujañs evid tud ken kaloneg hag evid kement hini a gemer lod en o labour hag en o foan. -17- Eüruz on e vefe ganin Stefanas, Fortunatoz hag Akaikoz, dalhet o-deus em hichenn ho plas- 'hwi, -18- frealzet o-deus va spered hag hoh hini, deoh eta prizoud seurt tud. -19- O saludi a ra Ilizou Azia. O gwella gourhemennou a gas deoh, en Aotrou, Akuilas ha Priska hag iveau an Iliz en em vod en o zi. -20- O saludi a ra an oll vreudeur ; en em zaludit gand eur pok sanctel. -21- Ar zalud-mañ a zeu euz va dorm-me, Paol. -22- Ma 'z eus unan bennag ha ne gar ket an Aotrou, ra vo milliget ! Marana tha. -23- Gras an Aotrou Jezuz ra vo ganeoh. -24- Ho kared a ran, c'hwi oll e Jezuz Krist.



EL LIZER D'AR GORINTIANED



KORINTIANED II

Goude al lizer kenta kaset dezi gand Paol e sav eur pennad birvill e Iliz Korint. Afer a glasker zoken ouz Paol. Tamallet eo da veza hedro, douetañs a zav war e renk a abostol; dister e vez kavet e-skoaz «an ebestel all».

Daoust ma ne bliij ket kement-se dezañ, Paol en-em garg d'en em ziveññ e-unan. Ya, abostol e gwirionez, gwir ha reiz eo e Aviel, koulz hag e labour a abostolèrèz, kalet e sko d'en em zivenn; med startoh c'hoaz eh embann e garantez evid ar Gorintianed hag ar joa e-neus outo.



EIL LIZER SANT PAOL D'AR GORINTIANED

I -1- Paol, abostol ar Hrist Jezuz, dre volontez Doue, hag ar breur Timote da Iliz Doue a zo e Korint ha d'an oll zent a zo en Akaia a-bez, -2- deoh, gras ha peoh a-berz Doue on Tad hag an Aotrou Jezuz Krist. -3- Ra vo benniget Doue, Tad an Aotrou Jezuz Krist, Tad an oll drugarez ha Doue peb frealzidigez ;

Frealzidigez ha trubuillou

-4- Frealz a ro deom en on oll drubuillou, evid rei deom galloud da frealzi kement-hini a zo en drubuill, dre ar frealzidigez a resevom-ni on-unan digand Doue. -5- Rag evel ma 'z eo puill ennom poaniou ar Hrist, evel-se iveau, dre ar Hrist, e vo puill or frealzidigez. -6- Hag en drubuill emaom ? Evid ho frealzidigez hag ho silvidigez an hini eo ; hag er frealz emaom ? Evid ho frealzidigez e ra deoh gouzañv an heveleb poaniou a ziwaskom ni iveau. -7- Hag on esperañs diwar ho penn a zo stard : ni a oar ho-po lod en or frealzidigez, c'hwi hag ho-po kemeret lqd euz or poaniou.

-8- Rag ne fell ket deom, breudeur, ho lezel heb gouzoud : an enkrezou on-eus gouzañvet en Azia o-deus or gwasket kenañ, dreist on nerz, ken na oan mennet da goll esper euz ar vuez zoken. -9- Ya, ennom on-eus santet ez oam barnet d'ar maro. Hag evel-se n'hellec ket lakaad or fiziañs ennom on-unan, med e Doue a zav ar re varo da veo. -10- Eñ eo e-neus on tennet euz eur seurt maro hag on tenno c'hoaz. Ennañ on-eus lakeet or fiziañs : on tenna a raio c'hoaz aneañ. -11- C'hwi ho-po sikouret iveau dre ho pedennou evidom ; evel-se ar hrsas-se on-eus bet dre bedennou eun niver braz a dud a zeuio da veza evid kalz a dud eur bedenn a drugarez evidom.

-12- Rag ar pez a laka stad ennom eo an testeni-mañ euz or houstiañs : en on darempredou er bed ha dreist-oll en ho keñver-c'hwi, ez om bet atao didroidell ha leal dirag Doue, n'eo ket a-vad hervez eur furnez-den med hervez gras Doue. -13- Rag ne skrivan deoh netra all ebed nemed ar pez a lennit hag a intentit. Med fiziañs am-eus eh intentit mad kenañ. -14- Peogwir ho-peus intentet ahan-non, evid eul lodenn dñ vianna : ni a zo evidoh eun abeg a enor evel ma 'z oh c'hwi evidom da zeiz an Aotrou Jezuz.

-15- Eur seurt asurañs ennon, edo em zoñj mond beteg ennoh da genta evid m'ho-pefe eur hrsas all muioh ; -16- goudeze, ahano mond da Vakedonia hag erfin distrei euz Makedonia beteg ennoh evid ma rafeh kement a zo red evid va beach e Judea.-17- O tivizoud kemend-all n'am-eus ket marteze pouezet mad peb tra ? Pe n'eo va mennadou nemed mennadou deuet en doare ma vefe ennom war eun dro ar ya hag an nann. -18- Ken gwir ha m'eo Doue feal, n'oa ket ar homzou am-eus lavaret deoh «ya» ha «nann» war eun dro,-19- rag mab Doue, ar Hrist Jezuz, on-eus prezeget en ho touez, Silvan, Timote ha me, n'eo ket bet «ya» ha «nann» war eun dro, n'eus bet ennañ nemed «ya». -20- Hag oll bromesaou Doue o-deus kavet ennañ o «ya». Setu perag iveau eo dre ar Hrist e lavarom «amen» da Zoue evid e hloar. -21- An hini a ra deom beza kreñv evid an Aotrou Krist, a-unan ganeoh, an hini e-neus or zakret eo Doue. -22- Eñ e-neus or merket gand e ziell ha roet deom da hêrez ar Spered Santel en or halonou. -23- Evidon-me, a gemer Doue da dest war va buez, dre zamant evidoh eo n'on ket distroet da Gorint. -24- Nann, ne glaskom ket ober or mestr war ho feiz med dont war zikour ho levez eo a reom, rag evid ar feiz e talhit mad.

II -1- Evidon-me am-eus divizet kement-mañ : ne zistroin ket davedoh gand an dristidigez a zo warmon. -2- Rag ma vezan eun abeg a dristidigez evidoh, piou a roio din laouenidigez nemed an hini am-eus greet poan dezañ a vefe ? -3- An dra-ze eo a glaskan gand va lizer : mired na vefen poaniet gand ar re a dlefe rei din laouenidigez pa zégouezin. Kredi a ra din stard evid ar pez a zell ouzoh-hwi, eo va laouenidigez hoh hini deoh-hwi iveau oll. -4- Setu perag, ankeniet va halon, eo am-eus skrivet deoh, an dour em daoulaged, n'eo ket a-vad evid doania ahanoh, med evid ma ouezfeh pegen braz eo ar garantez am-eus evidoh.

Paol a ro ar pardon

-5- M'e-neus unan bennag greet poan da unan all, n'eo ket din-me eo, med, en eun doare, - arabad eo mond re hir, - deoh-hwi oll. -6- Evid eur seurt den, a-walh eo ar rebech greet dezañ gand an darn-vuia. -7- Er hontrol zoken, pardonit dezañ ha frealzit anezañ gand aon na gouezfe e re vraz tristidigez. -8- Alia a ran ahanoh da zelaou mouez ar garantez en e geñiver, -9- rag va zoñj a oa, o skriva deoh, gweled ha gwirion e oa ho sentidigez e peb tra. -10- D'an hini a bardonit c'hwi dezañ e pardonan me iveau. M'am-eus me pardonet, e kement ha m'am-eus bet d'henn ober, evidoh-hwi eo am-eus her greet, ar Hrist o weled ahanon, -11- evid na vefem ket touallet gand Satan. Rag n'emaom ket heb gouzoud o klask petra ema.

Paol enkrezet ha divehiet

-12- Setu me erruet e Troaz evid prezeg Aviel ar Hrist ha daoust ma oe digoret frank an nor din gand an Aotrou, -13- n'edo ket va spred e peoh o veza n'am-boa ket kavet Tit, va breur. Ha me kimiada diouto ha mond da Vakedonia. -14- Meuleudi da Zoue, e-neus bepred dre ar Hrist roet deom kaoud an treh gantân hag a skuill drezon, e peb leh, c'hwez vad an anaoudegez anezañ. -15- Rag bez'

ez om, e gwirionez, evid Doue, c'hwez vad ar Hrist, evid ar re en em zavete hag ar re a ya da goll. -16- Evid lod, eur c'hwez a varo a gas d'ar maro, evid re all eur c'hwez a vuez a gas d'ar vuez. Med evid eur seurt labour piou a zo den a-walh ? -17- Rag n'om ket heñvel ouz kalz re all ha na brezegont ket komz Doue en e gwir. Ni eo gand lealded a-berz Doue, er Hrist, eo e komzom.

Ministrèrèz an Emgleo Nevez

III -1- Daoust hag emaom adarre o vond d'en em veuli on-unan, pe ezomm on-eus, evel lod 'zo, euz eul lizer-kred da ziskouez, pe da gaoud diganeoh ? -2- C'hwi hoh-unan eo al lizer-ze skrivet en or halonou, hag a hell an oll lenn hag anaoud. -3- Sklér eo ez oh al lizer deuet a-berz ar Hrist ha fiziet ennom, skrivet n'eo ket gand liou, med gand spered an Doue beo, n'eo ket war daolennou-mén, med war daolennou kig ho kalonou. -4- Setu an asurañs on-eus dre ar Hrist dirag Doue. -5- Drezom on-unan, n'om ket gouest da lakaad tra pe dra war or hont .. evel ma vefe ahanom on-unan. Nann, euz a Zoue eo e teu or galloud. -6- Eñ eo e-neus rentet ahanom gouest da veza ministred an Emgleo nevez, ha n'eo ket hini al lizerenn eo med hini ar Spered ; rag al lizerenn a ro maro, ar Spered a ro buez.

-7- Hogen m'e-neus ar ministrèrèz a varo engravet war vén, skedet gand kement a hloar ma ne helle ket an Israelited para o daoulagad war dremm Voizez ablamour d'ar hloar, tremenuz koulskoude, euz an dremm-se, -8- pegement muioh n'e-no ket ministrèrèz ar Spered ? -9- Ha mar deo bet leun a hloar ministrèrèz ar gondaonedigez, pegement muioh ne vo ket ministrèrèz ar justis ? -10- Nann, ar pez a zo bet merket neuze en eun doare gand ar hloar, n'eo netra e kichenn ar hloar-se divuzul. -11- Rag mar deo bet merket a hloar ar pez ne ra nemed tremen, pegement muioh ne vo ket ar pez a zo paduz ?

-12- Kennerzet gand eur seurt esperañs, ez on leun a asurañs. -13- Ne reom ket evel Moizez, a lakee eur ouel war e zremm evid na welfe ket bugale Israel ar fin euz ar pez ne ree nemed tremen. -14- Med teñval eo eet o sperezou ! Beteg hirio pa lenner an Testamant Koz, ar ouel-se a jom. N'eo ket savet, rag ne vez savet kuit nemed er Hrist. -15- Ya, beteg an deiz a hirio, beb gwech ma lennont Moizez, ez eus eur ouel war o halon. -16- Ne gouez ar ouel nemed gand an distrei d'an Aotrou. -17- Rag ar Spered eo an Aotrou, hag el leh m'ema Spered an Aotrou, eno ema ar frankiz. -18- Ha ni oll, dizolo on dremm, gloar an Aotrou, o skedi warnom ni a zeu da veza ar skeudenn-se end-eeun gand eur hloar atao splannoh-splanna dre an Aotrou a zo Spered.

IV -1- Ha peogwir eo deom, dre drugarez, ar ministrèrèz-se, ne fallgalonom ket. -2- Troet on -eus kein d'an troiou kuzet pe vezuz, pell diouzim an doareou gwidreuz, ha ne zistresom ket Komz Doue, er hontrol eo, oh embann ar wirionez eo e klaskom gounid fiziañs an oll dud dirag Doue. -3- Ha ma chom eur ouel war an Aviel eo evid an dud difeiz, -4- dallet o spered gand doue ar bed-mañ, evid mired na welfent sked Aviel an Aotrou Krist, eñ hag a zo ar skeudenn a Zoue. -5- Nann, n'eo ket ni on-unan eo a brezegom, med Jezuz Krist an Aotrou ; evidom-ni, ni a embann beza servicherien deoh ablamour da

Jezuz. -6- Rag an Doue e-neus lavaret : «Ra darzo ar sklerijenn euz an deñvalijenn», eo an hini e-neus skedet en or halonou, da lakaad da splanna an anaoudegez euz e hloar a sked war dremm ar Hrist.

-7- Med an teñzor-se a zougom ennom evel e listri-pri, evid ma vo sklêr n'eo ket ahanom e teu ar galloud burzuduz-se med euz Doue. -8- A beb tu ez om gwasket, med pas fastret, nehet gand on hent, med pas nehet en or halon, -9- heskinet, med pas dilezet, diskaret, med pas kaset da netra. -10- Dalhmad e tougom en or horv maro Jezuz, evid ma vo buez Jezuz, hi iveau, roet da anaoud en or horv. -11- Rag ni, ar re veo, a vez dalhmad taolet d'ar maro ablamour da Jezuz, evid ma vo buez Jezuz, hi iveau, roet da anaoud en or horv tonket d'ar maro. -12- Evel-se ema ar maro o labourad ennom, hag ar vuez ennoh. -13- Koulskoude, douget gand ar spered a feiz hervez m'eo skrivet er Skritur : «Kredet am-eus ha setu perag am-eus komzet», ni iveau on-eus ar feiz ha setu perag e komzom. -14- Rag her gouzoud a reom ervad, an hini e-neus adsavet an Aotrou Jezuz da veo, on adsavo, ni iveau, a-unan gand Jezuz hag on lakaio ganeoh en e gichenn. -15- Kement a reom a zo ablamour deoh, evid ma teuio grasou puill en eur greski da lakaad da greski an anaoudegez vad e kalonou eun niver brasoh a dud.

-16- Setu perag ne fallgalonom ket, ha daoust ma' z a da fall ennom an den diavêz, e talk an den diabars ahanom da nevesaad euz an eil devez d'egile.

-17- Ya, on trubuillou er bed-mañ, a zo buan tremenet ha skañv e-skoaz an digoll a hloar heb par ha peurbaduz a bournhasont deom. -18- Setu perag, n'eo ket war an traou a weler eo paret or zellou, med war an traou na weler ket.. Ar re a weler n'int ket da badoud, med ar re na weler ket a zo peurbaduz.

V -1- Her gouzoud a reom ; ma teu on demeurañs war an douar, ha n'eus anezi nemed eun deltenn, da veza diskaret, on-eus en neñvou eun ti savet gand Doue, ha n'eo ket diwar zorn an den, eun demeurañs peurbaduz, -2- hag eh hirvoudom gand ar c'hoant braz da wiska war horre egile on ti neñvel, -3- gand ma vefem kavet gwisket ha n'eo ket en noaz. -4- Rag ni hag a zo en deltenn-mañ, huanadi a reom, gwasket ; e gwirionez, ne fell ket deom fila on dillac, med lakaad eur wiskamant all war egile evid ma vo lonket gand ar vuez ar pez a zo marvel ennom. -5- An hini e-neus or greet evid an amzer-se da zond eo Doue, eñ hag e-neus roet deom arrez ar Spered.

-6- Evel-se eta ez om atao leun a fiziañs, daoust ma ouzom emaom en harlu, pell diouz ti an Aotrou, e-keid ha m'emaom o veva en or horv. -7- Evel-se, leun a fiziañs e kerzom, n'eo ket dre ar gweled anezañ... -8- Ya, bez' ez om leun a fiziañs, ha kalz gwelloh e kavom diloja euz ar horv-mañ evid mond da veva gand Doue. -9- Or brasa preder eo plijoud dezâñ, pe e vefem o chom en on demeurañs pe kuiteet or-befe anezi. -10- Rag oll e rankim en em ziskouez evel m'emaom evid beza barnet gand or Zalver, ha reseo peb hini en e gory kement e-no gounezet, mad pe fall.

-11- Oh anaoud eta an doujañs dleet d'an Aotrou e klaskom sacha an dud d'ar wirionez ; ha dirag Doue n'eus netra ahanom hag a vefe kuzet, ha fiziañs am-eus n'eus ahanom netra guzet en ho koustiañsou. 12- N'en em veulom ket eur wech

c'hoaz dirázoh, med tro a room deoh da veza lorf ennoh ganeom, evid ma hellfeh respont d'ar re a denn o lorf euz ar pez a vez gwelet ha n'eo ket euz ar pez a zo er galon. -13- Ma 'z om bet diboell eo evid Doue, ma 'z om fur eo evidoh. -14- Karantez or Zalver ne lez diskuij ebed ganeom pa zonjom en dra-mañ : ma 'z eo bet marvet unan evid an oll, an oll eta a zo tremenet dre ar maro. -15- Marvet eo or Zalver evid an oll, evid ma teuio ar re a zo beo da veva, n'eo ket evito o-unan, med evid an hini a zo bet maro hag adsavet da veo evito.

-16- Evel-se ni, diwar vremañ, n'on-eus mui anaoudegez euz den ebed hervez doareou ar bed, ha p'on-defe bet anavezet or Zalver hervez doareou ar bed, bremañ avad n'eo ket mui ar memez tra. -17- Setu perag kement hini a zo en Aotrou Krist a zo greet anezaf eun den nevez, ar bed koz a zo eet e-biou, setu ganet ar bed nevez. -18- Peb tra a zeu euz a Zoue e-neuz greet ar peoh dre ar Hrist hag e-neus fiziet ennom ministrerèz ar peoh. -19- Rag e peb doare Doue eo a ree ar peoh etrezañ hag ar bed, o chom heb lakaad o fehejou e kont an dud hag o lakaad ennom komz ar peoh. -20- En ano ar Hrist eta ez on bet kaset, ha prezom eo Doue e-unan, e gwirionez, a zeu d'ho kelver. En ano ar Hrist e teuom d'hoh aspedi, lezit ar peoh d'hoh unani gand Doue.

VI -1- Peogwir emaom o labourad asamblez gantañ, ho pedom da jom heb lezel difrouez ar hras resevet digand Doue. -2- Rag lavared a ra : da vare an drugarez am-eus da zelaouet ha da zeiz ar zilvidigez am-eus da zikouret. Setu bremañ amzer wella an drugarez, setu bremañ deiz ar zilvidigez. -3- Ne fell ket deom, e doare ebed, rei sikour fall da zen evid ma vo didamall or ministrerèz. -4- Er hontrol eo, ni a fell deom beva e peb doare evel ministred da Zoue dre ar perz da herzel e-kreiz an trubuillou, an enkadennou, an ankeniou, -5- an tao-liou, ar prizoniou, an taoiou dispah, ar skuizder, ar yunou, ar beillacdegou, -6- dre ar burentez, ar ouisiegez, ar perz da houzañv, ar vadelez, dre ar Spered Santel, er garantez wirion, -7- dre ar gomz a wirionez, dre halloud Doue, dre armou ar justis da skei ha d'en em zivenn, -8- enoret pe dismegafiset, brudet mad pe fall, lakeet e renk touellerien ha ni gwirion koulskoude, -9- e renk tud dianav ha ni anavezet mad, dare da verval ha ni beo koulskoude, kastizet ha ni o chom heb mervel -10- evel tud glaharet ha ni laouen atao, evel peorien ha ni o lakaad meur a hini pinvidig, evel tud dibourvez krenn, ni hag on-eus peb tra koulskoude. -11- Komzet on-eus didroidell, Korintianed, n'on-eus kuzet netra. -12- N'hoh ket enket en on touez, ennoh hoh-unan eo ez oh enket. -13- Neuze 'ta, bezit evidom ar pez ez om bet evidoh ; komz a ran deoh evel d'am bugale, digorit frank ho kalonou, c'hwi iveau.

-14- Na zachit ket, c'hwi, war ar memez karr gand an dud difeiz ; penaoz lakaad asamblez ar justis hag ar fallagriez ? Peseurt unvaniez etre ar sklerijenn hag an déñvalijenn ? -15- Peseurt emgleo etre ar Hrist ha Belial ? Peseurt da-rempred etre an den a feiz hag an den difeiz ? -16- Petra a gaver kenkouz e templ Doue hag en idolou ? Rag bez ez om-ni templ an Doue beo, evel m'e-neus Doue lavaret : «En o zouez e teuin da jom hag e kerzin. Me a vez o Doue, hag int-i a vez va fobl. -17- Deuit kuit euz a-douez an dud-se, hag en

em lakin disparti, eme an Aotrou. Na douchit ket ouz netra zihlan ha me a roio degemer deoh. -18- Me a vez ovidoh eun Tad, ha c'hwi a vez ovidon mibien ha merhed, eme an Aotrou oll-halloudeg.»

VII -1- Peogwir on-eus ar promesaou-ze, breudeur karet, en em nêtaom euz peb saotr euz ar horv hag euz ar spered ; peurechuom da zantellaad en doujañs a Zoue. -2- Grit deom plas en ho kalonou ; n'on-eus greet gaou ouz den ebed, n'on-eus rivinet den ebed, n'om ket bet dizonest e kenver den ebed. -3- N'eo ket evid ho kondaoni eo e lavaran kement-se, henn lavaret am-eus dija, en or halonou emaoch, beo pe varo. -4- Braz eo va hardizegez en ho kenver, braz eo al lorf am-eus ganeoh, karget on a frealzidigez, leun-barr on a levez e-kreiz on oll drubuillou.

-5- E gwirionez, pa 'z om degouezet er Makedonia, n'on-eus ket bet a ziskuiz, kentoh kalz a drubuillou, stourmajou en diavêz, ankeniou en diabarz. -6- Med Doue, an hini a ro frealz d'an dud izel, e-neus or frealzetz dre zonedigez Tit. -7- N'eo ket hebken dre e zonedigez med dre ar frealzidigez e-noa bet diganeoh, rag diskleriet e-neus deom ho c'hoant braz, ho taerou, ho youl vad evidon ken n'eo bet kresket c'hoaz va levez. -8- M'am-eus glaharet ahanoh gand va lizer, n'am-eus keuz ebed. Ha m'am-befo bet keuz, al lizer-se a welan e-neus glaharet ahanoh ha pa n'e-vefe bet nemed evid eur pennadig. -9- Laouen on bremañ, n'eo ket a-vad ablamour m'hoh bet glaharet, med ablamour d'ar heuz a zo savet diwar ho klahar. Rag ho tristidigez a oa hervez Doue ; -10- Rag ar hla-har hervez Doue a zeu ganti eur heuz hag a gas d'ar zilvidigez, ha ne zeu ket a gerse war he lerh. An dristidigez hervez ar bed a ro ar maro. Gwelit kentoh petra he-deus greet deoh. Ya a-vad, peseurt hast ouzin, peseurt digareziou, peseurt taerijenn, peseurt nehamant, peseurt c'hoant, peseurt gred, peseurt kas-tiz ; n'eus forz penaoz, diskouezet ho-peus hoh-unan ez oh direbech en afer-se. -12- M'am-eus skrivet deoh, n'eo ket ablamour d'an dismeganer pe d'an hini a zo bet dismeganet, med evid diskleria dirazoh ha dirag Doue ar gredouz ma 'z oh en or heñver. -13- Setu petra e-neus or frealzetz. Ouspenn ar frealz-se deom, ez eus bet muioh a levezenn ennom c'hoaz gand ar joa e-neus bet Tit, a zo bet kennerzet e spered ganeoh oll. -14- Rag m'am-eus diskouezet dirazañ beza lorf ennon ganeoh, n'am-eus ket bet da gaoud mez, med evel m'on-eus lavaret deoh ar wirionez bepred, evel-se al lorf on-eus diskouezet diwar ho penn dirag Tit, a zo deuet da veza ar Wirionez. -15- Kreski a ra c'hoaz ar garantez e-neus evidoh pa zeu da zoñj dezañ euz ho sentidigez deoh oll, gand pebez doujañs ha pebez resped ho-peus e zegemeret. -16- Levez a zo ennon o veza ma hellan e peb tra konta warnoh.

VIII -1- Felloud a ra deom, breudeur, rei deoh da anaoud ar hrs e-neus roet Doue da Ilizou ar Makedonia. -2- E-kreiz an trubuillou niveruz o-deus o am-prout, karget a levezenn, ha paour-raz, ez int bet brokuz dreist da rei, -3- hervez ar pez a hellent, euz o fenn o-unan, ha dreist zoken, test on a gement-se ; -4- goulenet o-deus stard diganeom ar hrs da gemer lod er zikour-se roet d'ar zent. -5- En tu all zoken d'on esperañs, o-deus en em roet o-unan da genta d'an Aotrou ha goude deom-ni dre volontez Doue. -6- Setu perag on-eus

poaniet war Tit evid ma kasou da benn, en ho keñver iveau, an oberenn-se a garantez evel m'e-noa staget ganti. -7- Med peogwir ez oh pinvidig a beb seurt traou : feiz, prezegèrèz, mall da ober peb tra vad, karantez silet ganeom en ho kalonou, bezit eta ken brokuz all en dro-mañ.

-8- N'eo ket eun urz a roan deoh ; med o rei da anaoud deoh gred ar re all, e roan tro deoh da weled ha gwirion eo ho karantez. -9- Gouzoud a rit beteg pegeid eo eet Jezuz Krist, on Aotrou, eñ pinvidig a zo en em lakeet paour ablamour deoh evid ma vefeh pinvidikeet diwar e baourentez. -10- Eun ali eo a roan deoh war ar poent-se : ar pez a zo dereum evidoh peogwir oh bet ar re genta, n'eo ket hebken o tegas da vad an oberenn-se, med c'hoaz o tivizoud ober anezi warlene dija. -11- Bremañ eta kasit anezi da benn ; evel-se e vo greet hervez ho kalloud an traou kaer ho-poa divizet ober. -12- Pa vez e gwirionez bolontez vad, e vezet resevet mad gand ar pez a vez, n'eus forz ar pez n'on-eus ket. -13- N'eo ket da lavared evelato e tleit kouenza en dienez evid dizamma ar re all, med beza par an eil d'egile. -14- En amzer a vremañ, ar pez ho-peus a re a zeuio war zikour dienez ar re all evid ma teuint d'o zro gand ar pez o-deus war zikour ho tienez deoh ; hag evel-se e vo kement ha kement d'an oll, -15- hervez m'eo skrivet : an hini e-noa dastumet kalz n'e-noa netra a re, hag an hini e-noa dastumet nebeud ne ree netra diouer dezañ.

-16- Bennoz da Zoue da lakaad e kalon Tit ar memez gred en hoh andred. -17- Plijet eo gantañ respont d'or houviadenn ha muioh c'hoaz a brez warnañ ez eo eet davedoh euz e benn e-unan. -18- Kaset on-eus gantañ ar breur a gan an oll Ilizou e veuleudi e keñver an Aviel. -19- Gwelloc'h c'hoaz, eñ eo an hini a zo bet astennet warnañ an daouarn gand an Ilizou evid beiji ganeom, en oberenn-se a garantez en em roomdezi evid gloar an Aotrou e-unan ha kas da vad or gwella menoziou. -20- Evez braz a lakom evid na vo kavet netra da rebech deom war ar pez a reom gand an arhant braz a vez fiziet ennom. -21- Preder a gemerom gand ar mad, n'eo ket hebken hervez menozi Doue, med iveau hervez menozi an dud.

-22- Gand ar gannaded on-eus kaset iveau or breur, an hini on-eus aliez hag e meur a dra gwelet pegen gredouz e oa ha bremañ her gwelom gwelloh, rag fiziañs braz e-neuz ennoch. -23- Tit a zo o veva ganin hag o labourad ganin en ho servich ; or breudeur a zo kannaded an Ilizou, gloar ar Hrist, -24- roit dezo eta, dirag an Ilizou, ar merk euz ho karantez hag euz an abeg mad on-eus bet da gaoud lorh ennoch.

IX -1- War ar pez a zell ouz ar zervich da rei d'ar zent, ezomm ebed din da skriva deoh. -2- Gouzoud a ran e klaskit ober euz ho kwella, ha war ar poent-se am-eus diskouezet va lorh dirag ar Vakedonianed : «Bro Akaia, - a lavarenne dezo, - a zo prest abaoe warlene hag ho kred deoh. 'hwi e-neus entanet an darn-vuia. -3- Ar vreudeur am-eus kaset deoh evid na vo ket kaset da netra, war ar poent-se, al lorhuz ma 'z om ahanoù, evid ma vefeh e gwirionez prest evel ma lavaren. -4- Aon am-befe, ma teu Makedonianed ganin, ha ma ne vefeh ket prest, e teufe mez deom ha deoh-c'hwi iveau, e leh ar fiziañs-se. -5- Soñjet am-eus eta e oa eun never evidon pedi ar vreudeur da vond davedoh en or raog ha

da reiza ho tonezonou. An donezonou brokuz ho-peus prometet a vezoz gwir largentez pa vezint dastumet ha n'eo ket pizoni.

-6- Gouezit an dra-mañ : «Piz a hado, treud a eosto, Frank a hado, puill a eosto». -7- Da beb hini rei hervez m'e-no divizet en e galon, heb keuzi na dre heg, rag Doue a blij dezañ ar re a ro gand laouenidigez. -8- Doue a zo en e halloud rei deoh a-fonn a beb deurt grasou evid m'ho-pefe bepred ar pez a zo red e peb doare hag eun dra bennag ouspenn evid oberou mad a beb seurt, -9- evel m'eo skrivet : «ingalet e-neus, roet e-neus d'ar beorien, e justis a bado da viken». -10- An hini a bourvez had d'an hader ha bara dezañ da zebri a roio deoh iveau an had, a lakaio anezañ da greski, ha da greski iveau frouez ho justis. -11- Pinvidikeet e vezoh e peb doare ha gand a beb seurt donezonou a lakaio da zevel dre on daouarn ar grasou warzu Doue. -12- Rag ar gest-se n'eo ket hebken herzel ouz ezommou ar zent eo a raio, med ouspenn, lakaad da greski ar grasou rentet da Zoue. -13- Prizoud a reont talvoudegez ar zervich-se hag e rentont gloar da Zoue evid ar sentuz ma 'z oh e keñver Aviel ar Hrist hag evid ar brokuz ma 'z oh en o heñver hag e keñver an oll, -14- ha dre o fedennou evidoh e tiskouezint deoh o harantze ablavour d'ar grasou puill roet deoh gand Doue. -15- Ra vo rentet grasou da Zoue evid e zonezon dreist-lavar !

X -1- Me, Paol, me va-unan, a houlenn diganeoh dre zouster ha madelez ar Hrist, me ken izel a galon pa vezan en ho touez ha ken hardiz pa vezan pell diouzoh ; -2- Me ho ped, pa vezin ganeoh, grit ma n'am-bo ket a dro da implijoud an hardizegez a zo em zoñj implijoud a-zevri gand ar re a gred dezo e renom or buez hervez an natur-den. -3- Rag en natur-den e vevom, med n'eo ket hervez an natur-den eo e stourmom. -4- Nann, on armou deom-ni ne zeuont ket ahanom on-unan. O galloud a zeu euz a Zoue evid dismantr kestell, diskar a reom fals menoziou pabored a zo, -5- ha kement penn uhel leun a lorh en em zav a-eneb an anaoudegez euz Doue hag a lakom en on dalh kement spered a zo evid e lakaad da zenti ouz ar Hrist. -6- Ha ni a zo prest da gastiza peb disentidigez, kerkent ha ma vo ho santelez deoh-hwi deuet da veza peur-vad.

-7- Sellit piz ouz an traou, ma 'z eus unan bennag hag a gred stard dezañ beza d'ar Hrist, ra zeuio da gompreñ, eur vech evid mad, evel ma 'z eo d'ar Hrist, ni iveau kement hag eñ. -8- Ouspenn, ha goude ma vefe re a lorh ennon gand ar galloud roet gand an Aotrou evid ho tiorren ha n'eo ket evid ho koll, n'am-bo ket mez ebed, -9- ne fell ket din klask ho sponta gand va liziri -10- rag «e liziri, a lavarer, o-deus pouez ha nerz, med pa vez war al leh, e vez dister e zoare ha gwall zister e gomz !» -11- Ra gompreño mad an den-se kement-mañ : evel ma vezom dre or homzou hag euz a-bell en on liziri, evel-se iveau e vezim en on Oberou pa vezim war al leh.

-12- Rag n'om ket hardiz awalh evid en em lakaad keñver-ha-keñver gand tud a zo hag en em veul o-unan, ar re-ze a goll o fenn oh en em gemered o-unan da skouer ha da batrom. -13- Ni avad, ne 'z aim ket dreist muzul gand al lorh a ziskouezim, ni a gemero da vuzul ar reolenn merket deom gand Doue, o tegas ahanom beteg ennoh. -14- Rag ne 'z eom ket en tu all d'on tachenn, evel ma ne vijem ket bet deuet dija davedoh. E gwirionez, ni a zo bet erruet beteg ennoh

gand Aviel ar Hrist. -15- N'eus ket ennom eul lorf heb muzul, savet diwar labour ar re all, fiziañs on-eus a-vad, gand ho feiz o vond war gresk, e teuim da greski muioh-mui en ho touez o heulia an dachenn merket deom, -16- hag e hellim mond da brezeg an Aviel da vroiou pelloh eged ho re, heb kemer lorf euz labouriou kaset da benn war dachennou re all. -17- An hini a gemer lorf, dezañ lakaad e lorf en Aotrou. -18- N'eo ket an hini a ro meuleudi dezañ e-unan a ziskouez eo gouest, med an hini a ro an Aotrou meuleudi dezañ.

XI -1- A ! ma hellfeh gouzañv euz va ferz eun tamm follentez ! Ya, c'hwi am gouzañv. -2- Oazuz on en ho keñver, kement ha Doue ; ho timezet am-eus d'eur pried unik evid ho kinnig d'ar Hrist evel eur werhez hlan ; -3- med aon am-eus, - evel ma teuas ar zarpant da zeseo Eva dre widre, - e teufe ho soñjou da drei fall ha da goll ho lealded e-keñver ar Hrist. -4- Ma teu hini pe hini, n'eus forz piou e vefe, da embann deoh eur Jezuz Krist all ha n'eo ket an hini on-eus-ni embannet deoh ; pe ma roit degemer vad d'eur spered disheñvel diouz an hini ho-peus resevet, pe d'eun Aviel disheñvel diouz an hini ho-peus degemeret, e kavit mad an dra-ze. -5- Me a gred din koulskoude n'on, e netra, disterroh eged an ebestel dreist-se. -6- Diampart evid ar prezeg, ne lavaran ket, evid ar skiant a-vad n'eo ket ar memez tra. Henn diskouezet on-eus deoh e peb tra hag e peb doare.

-7- Daoust ha pehed am-eus oh en em izellaad evid hoh uhellaad, pa embannen deoh evid netra Aviel Doue ? -8- Ilizou all am-eus dibourhet diwar ho koust, o reseo diganto peadra da veva evid gelloud ho servicha. -9- Ha pa edon en dienez, en amzer m'edon en ho touez, n'am-eus goulennet sikour digand den, rag breudeur deuet euz ar Makedonia o-deus pourvezet d'am ezommou, hag e peb tra n'am-eus goulennet sikour digand den, hag en em vired a rin d'henn ober. -10- Dre wirionez ar Hrist a zo ennon, henn diskleria a ran, ne vo ket greet din kuzad an dra-ze, hag a ra va lorf, e broiou an Akaia. -11- Ha perag ta ? Ablamour ma ne garan ket ahanoh ? Doue her goar. -12- Ar pez a ran, a rin c'hoaz, evid lemlel peb digarez digand ar re a garfe kaoud hini pe hini evid en em veuli euz ar memez traou ha ni. -13- Ar re-ze a zo fals-ebestel, mevelien ar gaou deuet da veya drevezierien Ebestel ar Hrist. -14- Netra souezuz ebed aze : Satan e-unan a gemer neuz eun êl a sklerijenn. -15- Netra souezuz eta ma teu e zervicherien da gemer neuz servicherien ar justis. Diouz o oberou e vo an termen diweza.

-16- Henn lavared a ran c'hoaz, arabad eo kredi deoh e vefen eet diskiant ; peotramant neuze lakit ez on diskiant, ma hellin, me iveau, fouseal eun tammig. -17- Ar pez ez an da lavared, n'eo ket hervez an Aotrou eo henn lavaran, med evel dre follentez, ken asur on da gaoud peadra da gemered lorf. -18- Peogwir ez eus kalz tud o lorha euz o ferziou a zen, me iveau a lorho. -19- Ya, laouen e houzañvit an dud foll, c'hwi an dud fur. -20- Gouzañv a rit e vefe greet sklaved ahanoh, e vefeh debret, e vefe skrapet ho peadra, ez afed deoh gand rogentez, e vefe roet fasadou deoh. -21- Evid or mez e lavaran kement-se, evel ma vefem bet re laosk. Ar pez a greder lavared, evel eur foll e komzan, henn lavaran me iveau.

-22- Hebreed int? Me iveau ! Israelited ? Me iveau ! Euz gouenn Abraham ? Me iveau ! -23- Ministred ar Hrist int ? eur zotoni emaon o vond da lavared, - me muioh egeto ! El labouriou, muioh egeto, er prizoniou, muioh egeto, gand an taoliou warnon, kalz muioh egeto, e riskl ar maro, meur a wêch. -24- A-berz ar Juzevien am-eus resevet pemp gwech an nao daol skourjez ha tregont. -25- Teir gwech on bet bazatet, eur wech labezet, teir gwech am-eus greet peñse eun devez hag eun novez on chomet er mor ; -26- Beajou war droad aliez, risklou war ar steriou, risklou a-berz al laeron, risklou a-berz va henvroiz, risklou a-berz ar bayaned, risklou e kér, risklou er hornadou digenvez, risklou er mor, risklou a-berz ar fals-vreudeur, -27- poan ha skuizder, beilladegou aliez, naon ha sehed, yun aliez, yenien ha diouerou ; -28- heb ober ano euz ar peurrest, va zamm pemdezieg, ar zoursi euz an oll Ilizou. -29- Piou a zo sempl heb na vefen sempl ? Piou a gouez heb na vefe an dra-ze eun deo evidon?

-30- Ma ranker fouseal, e lakin va fouse em zempladurez. -31- Doue ha tad an Aotrou Jezuz Krist, benniget anezañ da viken, a oar ne lavaran ket gevier. -32- E Damas, gouarnour ar roue Aretaz e-noa lakeet diwall kér Damas evid lakaad krog ennon. -33- Med dre eur prenest e oen diskennet en eur baner a-hed ar mogeriou hag eh en em dennis a-dre e zaouarn.

XII -1- Fouseal ? Ne daly ket ar boan ! Koulskoude e teuio ano ganin euz gweledigeziou ha diskuliaduriou an Aotrou. -2- Anaoud a ran eun den er Hrist, bremañ ez eus pevarzeg vloaz, an den-se a zo bet savet beteg an trede neñv ; en e gorr e oa ? n'ouzon ket, er mèz euz e gorr ? n'ouzon ket, Doue a oar. -3- Hag her gouzoud a ran, an den-se gand e gorr pe heb e gorr, n'ouzon ket Doue a oar. -4- An den-se a oe douget beteg ar baradoz hag a glevas komzou ha n'heller ket lavared ha n'eo ket bet aotreet da zen o distaga. -5- Evid an den-se e hellan lorha ; med evidon-me a-vad ne fell ket din lorha nemed euz va zempladurez. -6- Ma karfen lorha, ne vefen ket diskiant, ne lavarfen nemed ar wirionez, med diwall a ran d'henn ober gand aon na lakfe unan bennag ahanon dreist ar pez a wel ennon pe a glev diwar va fenn.

-7- Hag ablamour d'ar gweladennou dreist am-eus bet digand Doue, evid mired ouzin d'en em zevel re, ez eus bet lakeet din eur flemm em horv, eun él da Satan da rei din javedadou, evid mired ouzin d'en em zevel re. -8- Diwarbenn hennez am-eus, etre teir gwech, pedet an Aotrou Krist ma 'z afe pell diouzin. -9- Med lavaret e-neus din : « tra-walh az-peus gand va gras, er zempladurez eo e teu va nerz en he haerra.» A greiz kalon eta e kemerin lorh er zempladureziou, evid ma tiskenno ennon nerz an Aotrou Krist. -10- Ablamour da-ze eh en em blijan er zempladureziou, en dismegerisou, en diouerou, en heskinou, en enkreziou gouzañvet evid ar Hrist. Rag pa vezan dinierz, neuze eo e vezan kreñv.

-11- Setu me eet da zod, c'hwi a zo bet penn-kaoz a gement-se. C'hwi eo a dlefe beza va harpet, rag n'on e netra disterroh eged an « dreist-ebestel-se » daoust ma n'on netra. -12- Sinou ar gwir abostol a zo bet greet en ho touez : pasianted e peb keñver, sinou, marzenou, burzudou. -13- Petra ho-peus bet a nebeutoh eged an Ilizou all ? Nemed evid ar pez a zell ouzin, n'am-eus ket sammet ahanoh. Pardonit din ar gaou-se a-eneb ar justis ! -14- Setu m 'z on prest da vond davedoh evid an trede gwech. Ne glaskin ket kaoud netra diga-

neoh. N'eo ket ho madou emaon o klask, med c'hwi hoh-unan ; rag n'eo ket d'ar vugale lakaad a-gostez evid o herent, med d'ar gerent evid o bugale.-15- Evidon-me, a greiz kalon eo e tispignfen peb tra hag en em zispignfen va-unan evid hoh eneou. Ha m'ho karan muioh daoust ha nebeutoh e vin karet ? -16- Lakom 'ta, me va-unan n'on ket bet eur garg evidoh, med, toueller ma 'z on, am-eus tapet ahanoh dre widre. -17- Kemerit n'eus forz pehini euz ar re am-eus kaset davedoh, daoust ha tennet am-eus ganin eun dra bennag diwar ho koust drezo ? -18- Goulenet am-boa stard digand Tit mond, ha kaset am-boa gantañ ar breur a ouzoh, daoust ha Tit e-neus tennet eun dra bennag diwar ho koust ? Daoust ha n'on-eus ket heuliet an heveleb spered o tispenn ar memez roudou ?


-19- Pell-zo e soñjit e klaskom en em zidamall dirazoh. Dirag Doue, er Hrist eo e komzom, ha kement-se, breudeur karet, evid ho skoueria mad. -20- Aon am-eus n'ho kavfen ket, pa zegouezin, evel ma karfen e vefeh, ha ma ne vefen ket kavet ganeoh evel ma karfeh e vefen, na vefe en ho touez rendael, gwarizi, drougrañs, dizemgleo, drougkomzou, glabousèrez, lorhajou, dizursiou. -21- Aon am-eus na rafe Doue mez din ganeoh pa zistroin ha n'am-befe da ouela war veur a hini bet peher araog ha chomet heb ober pinijenn euz o hudurnez, o ribodèrèz hag o hadaliez.

XIII -1- An trede gwech eo din mond beteg ennoh ; war lavar daou pe dri dest e vezò divizet peb afer. -2- Henn lavaret am-eus dija hag, evel d'an eil beach, henn lavaran hirio adarre pa n'emaon ket ganeoh, d'ar re a zo bet peher araog ha d'ar re all : ma teuan en-dro e vezin dizamant, -3- peogwir e fell deoh kaoud eur brouenn ema ar Hrist o komz ennon. En n'eo ket sempl en ho keñver, med diskouez a ra e halloud ennoh. -4- Staget eo bet ouz ar groaz en e zempladurez, med beo eo dre halloud Doue. Ha ni iveauz a zo sempl ennañ, med beo e vezim gantañ dre halloud Doue en ho keñver.

-5- Ennoh hoh-unan gwelit hag er feiz emaoh, en em amprouit hoh-unan ; ha ne gred ket deoh e vefe Jezuz Krist ennoh, nemed ha trei a rafe an amprouenn eneb deoh. -6- Anzav a rit moarvad ez om bet kavet mad. -7- Pedi a reom Doue na rafeh netra fall ebed. Ne fell ket deom diskouez ez om aprouet, med c'hoant on-eus e rafeh c'hwi ar pez a zo mad hag e seblantfe an amprouenn beza a-eneb deom. -8- Rag ni a zo dihaloud eneb ar wirionez, n'on-eus galloud ebed nemed evid ar wirionez. -9- Laouen e vezom seul wech ma vezom-ni dinnerz ha c'hwi nerzuz. Setu ar pez a glaskom dre or pedennou : ma teufeh da zantellaad. -10- Setu perag e skrivan kement-se deoh, bremañ p'emaon pell diouzoh evid mired, pa vezin war al leh, da veza kriz en ho keñver hervez ar galloud e-neus roet an Aotrou din evid diorren ha n'eo ket evid diskar.

-11- A-hend-all, breudeur, bevit er joa, poaniit da zantellaad, roit kalon an eil d'egile, bezit unan a spered, bevit e peoh, hag an Doue a garantez hag a beoh a vezò ganeoh. -12- Roit ho salud an eil d'egile dre eur pok sanctel. An oll zent ho salud. -13- Gras an Aotrou Jezuz Krist, karantez Doue ha kommu-nion ar Spered Sanctel ra vint ganeoh oll.

lizer d'ar halated



GALATED

Paol e-noa savet an Iliz e-touez ar Halated, eur bo-blad Keltiek, annezet en Azia-Izella. Lod kris-tienien a oa mennet da zistrei d'o boazamañchou Juzeo ha da lavared e oa red o heulia, evid beza salvet. A-unan gand an ebestel all ha gand Iliz Jeruzalem, Paol a embañ e-neus ar Hrist or frankizet euz al lezenn Juzeo hag eo dre ar feiz ennañ e teu deom an donezon doueel hag ar zil-vidigez. Ha neuze, al lezenn Juzeo heh-unan a ge-menn dija an urz a zilvidigez dre ar feiz.

Al lizer-mañ a gavom ennañ, e berroh, komzou ar gelennadurez displeget hirroh el lizer d'ar Romaned.

LIZER DAR HALATED

I -1- Me, Paol, abostol n'eo ket a-berz an dud, na dre zorn eun den, med dre Jezuz Krist ha Doue an Tad e-neus e adsavet a-douez ar re varo, -2- hag iveauz an oll vreudeur a zo ganin, da Ilizou Galatia, -3- deoh bennoz ha peoh a-berz Doue an Tad hag a-berz an Aotrou Jezuz Krist, -4- e-neus en em roet en a-beg d'or pehejou evid on diframma euz ar bed-mañ a fallagriez hervez bolontez Doue, eñ hag a zo on Tad. -5- Dezañ ra vo ar hiloar da virviken. Amen.

-6- Souezet on ho-pefe dilezet ken buan all an hini e-neus ho kalvet, dre hrsas ar Hrist, evid tremen d'eun aviel all. -7- E gwirionez, ne lavaran ket e vije unan all, n'eus nemed lod tud o taoler trubuill en ho touez hag a fell dezo chefich Aviel ar Hrist. -8- Med ma teufe unan bennag, ha goude ma vefen me va-unan pe eun el euz an neñv, da brezeg deoh eun Aviel disheñvel diouz an Aviel on-eus prezeg get deoh, ra vo milliget!

-9- Henn lavaret on-eus dija ha bremañ henn lavaran adarre: ma teu unan bennag da brezeg deoh eun aviel disheñvel diouz an hini ho-peus resevet, ra vo milliget! -10- Daoust ha beza deuet mad d'an dud eo a glaskan bremañ, pe beza deuet mad da Zoue? Däoust ha plijoud d'an dud eo a glaskan? Ma vefen bremañ c'hoaz o klask plijoud d'an dud, ne vefen ket servicher ar Hrist.

-11- Henn diskleria a ran deoh: An aviel ez on bet o prezeg deoh, n'eo ket bet awenet gand den pe zen. -12- Ha me kennebeud, n'eo ket digand eun den am-eus bet anezañ hag am-eus e zesket, med digand Jezuz Krist deuet d'en em ziskouez din. -13- Klevet ho-peus lavared penaoz e heulien gwechall relijion ar Juzevier, pegen dirollet e oan da ober droug da Iliz Doue ha d'he diskar. -14- Juzeo e oan, ha gwelloh gwella Juzeo e teuen da vez, ha treh e oan war ar poentse d'ar peb muia euz tud va gouenn en oad ganin, o vez startoh divennour ke-lennadurez va zadou.

-15- Med Doue e-noa va lakeet a gostez araog ma oan ganet, ha va galvet e-neus dre hras e vadelez -16- ha dont a reas an eur ma plijas gantañ diskouez din e Vab, evid ma 'z afen da embann ar helou mad anezañ d'ar poblou payan. -17- Dioustu neuze, heb kemer kuzul digand den, heb pignad zoken da Jeruzalem da gavoud ar re a oa ebrestel em-raog, ez on eet da vro-Arabia, ha goudeze on deuet en-dro da Zamas. -18- Tri bloaz diwezatoh, ez on pignet da Jeruzalem evid ober anaoudegez gand Pèr hag ez on chomet pemzeg devez gantañ. -19- Hini all ebed euz an ebrestel n'am-eus gwelet, nemed Jakez, an hini a oa kar d'ar Zalver. -20- Ar pez a skrivan deoh aze, me henn asur dirag Doue, n'eo ket gaou a lavaran. -21- Goudeze ez on eet diouz kostez ar Siria hag ar Silisia. -22- Med va dreemm a oa dianav da Ilizou ar Hrist e bro judea. -23- N'o-doa greet nemed beza klevet : an hini on heskine gwechall a embann bremañ ar feiz edo o tiskar d'ar mare-se, -24- ha diwar va fenn, e lavarent gloar da Zoue.

II -1- Goudeze, a-benn pevarzeg bloaz, ez on pignet en-dro da Jeruzalem gand Barnabas, kas a ris ives Tit ganin. -2- Hogen, goude eun diskuliadur amboia bet, e oan pignet, ha me displega dezo an Aviel a embannen e-touez ar bayaned ; e zisplega a ris ives o tivizoud a-gostez gand eun nebeud tud ar muia prizet, gand aon da redig pe da veza redet en aner. -3- Med Tit e-unan, ya hom-pagnun, eur Gresiañ anezañ, ne oa ket bet rediet dezañ beza amdrohet. -4- Ne vije bet nemed ablamour d'ar falz-vreudeur deuet en on touez a-eneb peb gwir, en em zilet evid spia or frankiz, an hini a zeu deom digand Jezuz Krist, evid ober sklaved ahanom. -5- An dud-se n'on-eus ket-ni pleget dezo, goude ma ne vije bet nemed evid eun nebeudig amzer, evid ma vefe miret gwirionez an Aviel evidoh. -6- Med evid ar pez a zell ouz ar pennadureziou, - ar pez a oant neuze ne vern ket din, «Doue ne zalh ket kont euz ar renkou», - n'o-deus ket goulennet netra muioh diganin. -7- Er hontrol eo, gweled a rejont oa bet fiziet ennon aviela an dud diamdroh evel m'oa bet fiziet e Pèr henn ober d'an dud amdrohet. -8- Rag an hini e-neus greet euz Pèr abostol an dud amdrohet, eo ives an hini e-neus greet ahanon abostol an dud diamdroh. -9- Neuze, o weled ar hras a oa bet roet din, Jakez, Pèr ha Yann, kemeret gand an oll evel kolonennou, a astennas deom o dorm, din-me ha da Varnabas, e merk an unvaniez evid ma 'z afem-ni daved ar bayaned hag int-i daved an dud amdrohet. -10- Deom-ni avad dont war zikour ar beorien, ar pez om bet aketuz da ober.

-11- Med pa zeuas Kefas da Antioquia, am-eus dalhet penn dezañ war eeun, dirag an oll, rag fazia a ree. -12- Rag, araog ma oa deuet lod euz tud Jakez, e kemere e brejou gand ar bayaned ; med goude ma oant degouezet, e stagas d'en em denna kuit hag e chome a-gostez gand aon rag ar re amdrohet. -13- Hag ar Juzevien all a reas eveldañ, ken na oe sachet Barnabas e-unan en o falsentez. -14- Med pa welis ne gerzent ket euen hervez gwirionez an Aviel, e lavaris da Gefas dirag an oll: ma teuez te hag a zo Juzeo da veva evel ar bayaned, ha n'eo ket evel ar Juzevien, penaoz e helles redia ar bayaned da veva evel ar Juzevien? -15- Ni a zo, ni, Juzevien a ouenn ha n'eo ket payaned evel ar beherien-se. -16- Goûd a ouzom koulskoude, ne vez ket justizet an den dre oberou al Lezenn, med dre ar feiz e Jezuz Krist nemed ken. Ni on-eus kredet, ni ives e Jezuz Krist, evid beza justizet dre ar feiz en Aotrou Krist, ha n'eo ket dre oberou al Lezenn, ablamour ma ne vo den justizet dre oberou al Lezenn.

-17- Med ma 'z om bet kavet peher ni iveau klask beza justizet er Hrist, daoust hag ar Hrist a vefe ministr ar pehed ? N'eo ket a-dra-zur. -18- Rag ma teuan da zevel en-dro ar pez am-eus diskaret, me vanan en em laka da veza peher. -19- Rag me, dre al Lezenn eo ez on maro d'al Lezenn evid beva evid Doue. Gand ar Hrist ez on eun den staget ouz ar groaz. -20- Beva a ran, med n'eo ket me a vev, ar Hrist eo a vev ennon. Rag va buez a-vremañ em horv, he beva a ran er feiz e Mab Doue e-neus va haret hag e-neus roet e vuez evidon. -21- Ne lakan ket gras Doue da veza didalvez, rag ma teuer da dizoud ar justis dre al Lezenn, en aner e vefe eta maro ar Hrist.

III -1- O Galated diskiant, piou e-neus boemet ahanoh goude m'eo bet lakeet dindan ho taoulagad Jezuz Krist stag ouz ar groaz ? -2- Sklerijennit ahanon netra nemed war ar poent-ma : daoust hag eo en abeg m'ho-peus selaouet kemen-nadurez ar feiz ? -3- Daoust ha ken diskiant-se e vefeh, c'hwi hag ho-peus kemeret da genta hent ar Spered ? Daoust hag e teufe bremain ar horv d'ho ren d'ar zantelez ? -4- Beza bet kement a hrsasou evid netra ! Ha c'hoaz ma vefe bet en aner ! -5- An hini eta a ro deoh ar Spered gand largentez hag a ra burzudou en ho touez, daoust hag henn ober a ra en abeg ma virit al Lezenn pe en abeg ma selaouit kemennadurez ar feiz ?

-6- Peogwir e-noa Abraham feiz e Doue, ha ma oa bet kontet kement-se dezañ da justis, -7- intentit mad eta eo an dud a feiz mibien da Abraham. -8- Hag ar Skritur, o houzoud en a-raog eo dre ar feiz e teufe Doue da justiza ar bayaned, e-neus embannet en a-raog ar helou mad da Abraham : «Ennout, emezi, e vo benniget an oll bayaned». -9- Evel-se eta, an dud a feiz a zo benniget da heul Abraham, an den a feiz. -10- Rag ar re a heuill al Lezenn a gouez oll dindan ar valloz, peogwir eo skrivet : «Malloz da gement hini ne zalh ket da vired kement a zo skrivet e levr al Lezenn.» -11- Ha sklêr eo ne vez justizet den ebed dirag Doue dre al Lezenn peogwir «e vevo dre ar feiz an hini a zo just», -12- hag al Lezenn ne zeu ket diwar ar memez urz evel ar feiz, eviti an neb a viro gourhemennou al Lezenn e-no buez diworno. -13- Ar Hrist e-neus paet evid hor frankiza euz malloz al Lezenn, o tond da veza e-unan malloz evidom peogwir eo skrivet : «Milliget ra vezò an hini a zo e-skourr ouz ar c'hoad.» -14- hag an dra-ze evid ma tremenfe beteg ar bayaned bennoz Abraham e Jezuz Krist ha ma resevfeñ dre ar feiz ar Spered prometet.

-15- Breudeur, gwelom boazamañchou an dud : netra nemed eun testament greget gand eun den hervez ar reiz, n'hell den e derri pe e astenn. -16- Mad, Abraham eo an hini a zo bet greet dezañ ha d'e ziskennadur ar promesaou. N'euz ket lavaret d'e lignezou, evel ma vefe ano euz meur a hini; med n'eus ano nemed euz unan hebken; ha d'e ziskennadur, da lavared eo ar Hrist. -17- Setu a-mañ va zoñj : eun testament reiz a zo bet savet da genta gand Doue, al Lezenn deuet pevar hant bloaz ha tregont diwezatoh ne dorr ket anežañ, ar pez a rentfe didalvez ar promesaou. -18- Rag mar deo dre al Lezenn eo e teuer da veza heritour, n'eo ket mui diwar ar bromesa. Hogen, dre eur bromesa eo e-neus roet e hrsas da Abraham.

-19- Neuze 'ta , petra 'zeu da ober al Lezenn ? Dond a ra da askoueza evid ma vo disklieriet ar pehejou da hortoz ma teufe an diskennadur ma oa greet evitañ ar bromesa. Embannet eo bet gand an élez dre zorn eun hanterour. -20- Hogen n'eus ket a hanterour pa vezet an unan; ha Doue a zo e-unan. -21- daoust hag ez afe al Lezenn a-eneb da bromesaou Doue? Ne da ket avad! Rag ma vije bet roet eul lezenn galloud dezi da rei buez, neuze eo dre al Lezenn eo e teufe e gwirionez ar justis. -22- Med ar Skritur he-deus lakeet peb tra e dalth ar pehed evid ma vefe sevenet ar bromesa d'ar re a gredfe dre ar feiz e Jezuz Krist.

-23- Araog donedigez ar feiz edom e dalth al Lezenn da hortoz ar feiz a dlee beza diskuliet, -24- evel-se eta eo bet al Lezenn or gward da hortoz ar Hrist evid ma vefem justizet dre or feiz. -25- Med, eur wech deuet ar feiz, n'om mui sujet d'ar gward-se; -26- rag dre ar feiz ez oh oll bugale da Zoue e Jezuz Krist. -27- Ya, c'hwi oll a zo bet badezet e Jezuz Krist a zo warnoh dreemm an Aotrou Jezuz Krist. -28- N'eus mui ano euz Juzeo na payan, euz sklav na den libr, euz gwaz na maouez, peogwir n'hoh nemed unan, c'hwi oll, er Zalver Jezuz. -29- Ha ma 'z oh d'or Zalver, ez oh eta bugale Abraham, heritourien hervez ar bromesa.

IV -1- Setu eta va zoñj: e-keit ha m'eo krouadur an heritour, n'eus kemm ebed etrezañ hag eur sklav, eñ hag a zo mestr war beb tra. -2- sujet eo koulskoude da warded ha da gulatored. -3- Ha ni, en heveleb doare: pa oam bugale e oam sujet da c'hoariou ar bed, sklav e oam. -4- P'e-neus greet an amzer e hent, Doue e-neus kaset e Vab ganet gand eur vaouez ha sujet d'al Lezenn, -5- evid paea frankiza an dud a oa sujet d'al Lezenn, ha ma vefe roet deom beza bugale per-hennet da Zoue. -6- Mibien ez oh a-dra-zur; Doue e-neus digaset en ho kalonou Spered e Vab a zo o krial: «Abba! Tad!». -7- N'out ket mui eta sklav, med mab dezañ ez out ives lodeg hag hérez dre hrsas Doue.

-8- Gwechall pa ne anavezeh ket Doue e oah sujet da zoueed ha n'int ket doueed e gwirionez, -9- med bremañ, pa anavezit Doue, pe gentoh pa 'z oh anavezet gantañ, penaoz e hellit distrei en-dro da stuziou gwan ha paour gand ar c'hoant da zuja dezo en-dro. -10- Mirout a rit gand aked an deiziou, ar miziou, mareou ar bloaveziou. -11-Aon a rit din, am-befe en amer kemeret poan ganeoh.

-12- Renit ho puez eveldon, peogwir ez on deuet da veya evel unan ahano, me ho ped. N'ho-peus greet gaou ebed ouzin. -13- Her gouzoud mad a rit : eur hleñved eo e-neus roet tro din da brezeg deoh, evid ar wech kenta, ar helou mad. -14- Ha daoust d'an digonfort ma oa evidoh stad va horv, n'ho-peus ket diskouezet din na dispriz, na euz. Er hontrol eo, va degemeret ho-peus evel eun êl da zoue, evel Jezuz Krist. -15- E peleh ema ho joa a neuze, rag an testeni-mañ a roan deoh, m'ho-pefe gellet ho pefe tennet ho taoulagad euz ho penn evid o rei din. -16- Ha bremañ, daoust ha deuet e vijen hoh enebour en abeg ma lavar an deoh ar wirionez? -17- An hast a vez greet ouzoh n'eo ket eeun, n'o-deus

ken c'hoant nemed distaga ahanoh diouzin evid ma teufent int-i o-unan da gaoud o mignoniez. -18- Ar pez a zo brao eo gweled e vez greet hast ouzor, eun hast a youl vad, ha n'eo ket hebken p'edon en ho touez. -19- Va bugaligou, c'hwi hag a hanan en-dro er boan beteg ma vo stummet ennoh ar Hrist, -20-, me garfe beza er mare-mañ en ho kichenn evid kavoud an doare a zere, rag n'ouzon ket kaer penaoz en em denna ganeoh.

-21- Lavarit din, c'hwi hag a fell deoh suja d'al Lezenn, ha ne glevit c'hwi ket petra a lavar al Lezenn-se? -22- Rag skrivet eo e-noa Abraham daou vab, unan euz eur sklavez hag unan euz eur vaouez frank. -23- Med mab ar sklavez a oa ganet hervez ar horv, hag hini ar wreg frank, diwar ar bromesa. -24- Eur skeudenn eo on-eus aze: an diou vaouez-se a zo daou emgleo: unan, an hini a zeu euz menez Sinai, a han evid ar sklavelez, Agar an hini eo.. -25- Rag en Arabia ema ar menez Sinai, hag Agar a zo eur skeudenn euz ar Jeruzalem a vremañ, peogwir eo sklavez hag he bugale ganti. -26- Med ar Jeruzalem euz an neh a zo frank, hag hi eo or mamm. -27- Rag skrivet eo: «Bez laouen, maouez gaonah, te ha ne hanez ket; tarz a. levenez, te ha ne houzañvas ket ar gwentlou, rag niverusoh e vo bugale an hini dilezet eged an hini e-deus pried.» -28- Ha c'hwi, breudeur, evel Izaag, c'hwi a zo bugale ar bromesa. -29- Rag evel ma veze heskinet neuze an hini ganet hervez ar spered gand ar hrouadur ganet hervez ar horv, evel-se ema kont hirio c'hoaz. -30- Ahanta! Petra lavar ar Skritur? - Kas kuit ar sklavez hag he mab, rag ne dle ket mab eur sklavez beza heritour gand mab ar vaouez frank. -31- Evel-se eta, breudeur, n'om ket bugale eur sklavez, med re eur vaouez frank.

V -1- Evid ober ahanom tud libr, e-neus or Zalver or frankizet; dalhit mad eta ha diwallit da gemered en-dro chadennou ar sklaverez. -2- Me, Paol a lavar deoh: ma lakit hoh amdroha, ne dalvezo mui ar Hrist deoh da netra. -3- Testenia a ran adarre da gement hini a laka e amdroha ; mired a rank al Lezenn penn da benn. -4- En em zistaget oh diouz ar Hrist, ma lakit ho justis el Lezenn; n'e-maoh mui en e hrs. -5- Ni avad, eo dre ar Spered euz ar feiz eo e hortozom stard e-teufe da wir ar pez a ra deom esper ar justizadeg. -6- Rag evid an hini a zo e Jezuz Krist, nag an amdroh, nag an diamdroh n'o-deus talvoudegez, med ar feiz oh Oberia dre ar garantez. -7- Redeg mad a reeh; piou, o stanka an hent ouzoh, a vir ouzoh da veza sachet gand ar wirionez? -8- Eur seurt levezon ne zeu ket a-berz an hini e-neus ho kalvet. -9- Eun tammig goell, hag an toaz a-bez a zeu da hoi. -10- Evidon-me am-eus fiziañs en Aotrou evid ar pez a zell ouzoh-c'hwi; ne jeñchoh ket soñj. An neb avad a laka trubuill da zevil en ho touez a vo kastizet a gement-se, piou bennag e vefe. -11- Evidon-me, breudeur, ma prezegan c'hoaz an amdroh, perag e vezan neuze heskinet. Neuze eo echu gand droukskoill ar groaz. -12- Ha perag ne 'z afent ket beteg en em spaza ar re a had dizurz en ho touez?

-13- C'hwi, breudeur, a zo bet galvet d'ar frankiz, med arabad e ve ar frankiz-se eun digarez deoh da heulia youlou fall an natur; bezit kentoh dre ar garantez, servicherien an eil d'egile. -14- Al Lezenn penn da benn a gaver dastumet en eur gourhemenn hebken: «Karet a ri da nesa eveldout da-unan.» -15- Ma ne rit nemed en em gia hag en em zebri kenetrezoh, diwallit na zeufeh d'en em zistruja an eil egile.

-16- Henn lavared a ran: lezit ař Spered Santel da ren ahanoh, ha neuze ne ble-goh ket da youlou fall ho natur. -17- Rag c'hoantegeziou fall an natur ha c'hoantegeziou ar Spered a vez an eil a-eneb egile, beteg mired ouzoh da ober ar pez a garfeh. -18- Med ma lakit Spered Doue da ren ho puez n'hoh mui sujet d'al Lezenn. -19- Anad eo d'an oll petra eo oberou ar horv : ribodèrèz, loustoni, dirollèrèz, -20- idolatriez, sorsèrèz, kasoni, disunvaniez, gwarizi, buanegez, kevezèrèz, disemgleo, disrannèrèz, -21- drougrañs (avi), mezventi, lontegez, ha pehejou all evel-se; ar re a ra seurt pehejou, henn lavared a ran deoh evel m'am-eus greet dija, n'o-devo ket lod e rouantelez Doue. -22- Ha bremañ setu amañ frouez ar Spered: karantez, levenez, peoh, pasianted, hegarañed, madelez, feiz, -23- dousder, rezidur ar vuez; a-eneb d'an oberou-se n'eus lezenn ebed. -24- Ar re a zo d'ar Hrist o-deus eta staget ouz a r groaz o horv gand e youlou fall hag e c'hoantegeziou. -25- Ma vevom dre ar Spered, bevom ive poulzet gand ar Spered. -26- Na glaskom ket beza gwelet; kenetrezom, netra dicheg ha tamm avi ebed.

VI -1- Breudeur, ma teu gand unan bennag beza paket en eur faot bennag, deoh-c'hwi eo, tud spredel, repren anezañ gand douster a spred; taol evez, te da-unan ha n'hellez-te ket beza tentet iveau? -2- En em zikourit da zougen ho sammou, an eil egile: mirit evel-se Lezenn ar Hrist. -3- Rag ma kred da unan bennag beza eun den euz an dibab pa n'eo netra, e fazi warnañ e-unan. -4- Ra gompreno peb hini er pez a ra e vuez e-unan; ma kav aze leh d'en em veuli, en-nañ e-unan eo e vez, ha n'eo ket oh en em lakaad e-skoaz gand unan all; -5- rag e targ e-unan eo e-nevo peb hini da zougen.


-6- D'an hini e vez kelennet ar Gomz dezañ, rei eul lodenn euz e vadou d'an hini a gelenn anezañ. -7- N'it ket da fazia, ne lez ket Doue ober goap anezañ, rag eosti a ray an den ar pez e-no hadet; -8- an hini a had evid ar horv a eosto frouez ar horv: ar vreinadurez; an hini a had evid ar Spered a eosto frouez ar Spred: ar vuez peurbaduz. -9- Greom ar mad heb skuiza ganti, rag d'ar mare merket, e.vø evidom mare an eost, ma talhom mad. -10- Neuze 'ta, e-keit ha m'on-eus amzer, poaniom evid mad an oll dreist oll e keñver ar re a zo tost deom er feiz.

-11- Gwelit pebez lizerenou: gand va dorm va-unan eo e skrivan deoh! -12- Ar re a glak ho redia. da veza amdrohet ne viront ket al Lezenn. Felloud a ra dezo avad e.vefeh amdrohet evid kaoud, en ho korv, peadra da denna gloar. -14- Evidon-me, nann, ne glaskan tenna gloar euz netra all nemed euz kroaz an Ao-

trou Jezuz Krist, rag drezañ eo bet staget ar bed ouz ar groaz evidon ha me evid ar bed. -15- Rag an amdroh n'eo netra, nag an diamdroh; ar pez a gont eo beza eur grouadelez nevez. -16- D'ar re a heulio ar reolenn-se (a vuez) peoh ha trugarez hag iveau da Israel Doue. -17- Ha bremañ, arabad eo da zen rei trubuill din, rag dougen a ran em horv merkou Jezuz. -18- Breudeur, ra vezo gras an Aotrou Jezuz Krist gand ho spered!



lizer d'an efesianed



EFESIANED

Al lizer-mañ a zo bet skrivet, evel al lizer d'ar Go
rintianed, evid oll gristenien an Azia-Izella. Dis-
plega a ra mister an Iliz, korr ha pried ar Hrist:
en Iliz, Juzevien ha payaned, beteg neuze ene-
bourien touet, a zeud'en em unani en eun Den
Nevez hebken : ar Hrist. Rag hiviziken, dre fur-
nez doueul ar Hrist hag e garantez divuzul, ar
bayaned int-i iveau o-deus lod er bennoziou dou-
eul en o fez.

LIZER D'AN EFESIANED

I -1- Paol, abostol Jezuz Krist dre volontez Doue, d'an dud santel, fidel e Jezuz Krist : -2- deoh gras ha peoh, a-berz Doue an Tad ha Jezuz Krist an Aotrou.

EUR HRAS DIVENT

-3- Meulet ra vezou Doue, Tad or Zalver Jezuz Krist, e-neus skuillet warnom, euz lein an neñvou, peb bennoz speredel en Aotrou Krist. -4- On dibabet e-neus ennan, araog ma oa krouet ar bed, evid bez a dirazan̄ santel ha direbech er garantez. -5- En araog e-neus divizet ober ahanom bugale perhennet dre Jezuz Krist, setu ar pez a zo plijet d'e volontez : -6- ma vo meulet e hloar hag ar hrs roet deom brokuz en e Vab muia-karet. -7- Ennañ, dré e wad, ez om dasprenet hag on-eus ar pardon euz or pehejou, ken puill eo e hrs -8- roet deom brokuz gantañ, e stumm peb furnez ha peb skiant, -9- o tiskleria deom ar mister euz e volontez divizet gantañ en e vadelez, -10- evid urzia an amzeriou diweza, o suja ar bed a-bez d'an Aotrou Krist, kement a zo en neñvou ha kement a zo war an douar. -11- Ennañ iveau on-eus bet ol lod : hervez an hini a ra e peb tra e volontez, ez om bet dibabet en araog -12- evid ma vefem-ni -evid meuleudi e hloar ar re o-deus en araog lakeet o fizian̄s e Doue. -13- Ennañ c'hoaz ho-peus klevet komz ar wirionez, Aviel ar zilvidigez, ha lakeet ennañ ho feiz, c'hwi hag a zo bet merket gand siell ar Spered prometet, -14- a zo an arrez euz on heritach, evid silvidigez ar bobl dasprenet evid meuli e hloar.

AR BEDENN EVID KAOUD SKLERIJENN

-15- Setu perag, me iveau, abaoe m'am-eus klevet ano euz ho feiz er Zalver Jezuz, hag euz ho karantez evid ar zent oll, -16- ne baouezan ket da drugarekaad ablamour deoh, pa zoñjan ennoh em fedennou. -17- Plijet gand Doue or Zalver Jezuz Krist, an Tad a zo dezañ ar hloar, rei deoh eur spered a furnez, da ziskuill anezañ deoh, da ober deoh e anaoud da vad ; -18- ra zigoro ho kalon d'e sklerijenn, evid ober deoh gouzoud peseurt esperan̄s a zeu deoh diwar e halvadenn, peseurt teñzor eo e hloar, hag an hérez lodennet gantañ etrezoh hag ar zent ;

-19- pegen braz eo bet e halloud diskouezet en or heñver deom-ni an dud a feiz, e nerz, e oll halloud -20- o lakeet e-neus da labourad en Aotrou Krist, p'e-neus e zavet a-douez ar re varo, hag e lakeet da azeza a zehou dezañ en neñvou, -21- kalz uhelloh eged peb beli, peb galloud, peb domani, peb mestroniez, n'eus forz pe ano o-defe, n'eo ket hebken er bed a-vremañ, med ives er bed da zond. -22- Ya, lakeet e-neus pep tra dindan e dreid, roet e-neus anezañ da veza ar penn euz an Iliz e gorv, a zo hi leunder an. Hini a zo peurleuniet gand Doue e-unan.

EUZ AR MARO D'AR VUEZ

II -1- C'hwi hag a oa maro ablamour d'ho faziou ha d'ar pehejou, -2- a reeh gwechall, pa 'z eeh da heul doue ar bed-mañ, ar priñs a zo o ren etre an neñv hag an douar, ar spered a zo bremañ oh oberia e-touez an dud disent, -3- Ni a oa anezo, ni oll ives a en em leze da vond da youlou on natur-den, o plega d'e dechou fall hag ez oam dre natur heñvel ouz ar re all tonket d'ar gounnar. -4- Doue avad, leun a druez ablamour d'ar garantez dreist e-neus evidom, -5- d'ar mare m'oam maro dre or pehejou, e-neus buezekeet ahanom a-unan gand ar Hrist -dre hrsas eo ez oh salvet- a-unan gantañ e-neus on adsavet da veo hag on lakeet da azeza en neñvou, e Jezuz Krist.

-7- Dre e vadelez evidom eta, e Jezuz Krist, eo fellet dezañ diskouez evid an amzeriou da zond eo e hrsas pinvidig-mor a vadelez en or heñver, e Jezuz Krist. -8- rag gand ar hrsas eo ez oh salvet, dre ar feiz ; n'eo tamm ebed drezoh hoh-unan, an donezon euz a Zoue eo. -9- Kement-se ne zeu ket diwar an oberou, evid ma ne zeuio nikun da lorha gantañ. -10- Rag eñ eo e-neus greet ahanom, e-neus or hrouet e Jezuz Krist evid an oberou mad, bet en araog, pourchaset gand Doue evid ma rafem anezo.

OLL UNANET ER HRIST

-11- Dalhit soñj eta, c'hwi hag a zouge gwechall en ho kory sin ar bayaned, c'hwi hag a veze greet diamdrohet ahanoh, gand ar re a gav dezo beza amdrohet, en abeg d'an amdroh greet dezo gand dorn an den. -12- Dalhit soñj ez oah d'ar mare-se heb Mesiaz, en diavez da bobl Israel heb lod ebed e emgleviou ar bromesa, heb esperañs ebed, heb Doue ebed er bed. -13- Bremañ avad e Jezuz Krist, c'hwi hag a oa gwechall pell a zo degaset da dost dre wad ar Hrist -14- rag eñ eo or peoh, eñ hag e-neus lakeet an daou rummad en unan hebken ; en e gorv e-neus diskaret moger an disparti : ar gasoni. -15- Torret e-neus al Lezenn hag he gourhemennou gand o reolennou. Evel se eo fellet dezañ ober ennañ eun den nevez anezo o-daou Juzeo ha payan o lakaad ar peoh, -16- o lakaad anezo o-daou d'en em glevet gand Doue en eur horv hebken, dre ar groaz e-neus lazet ar gasoni. -17- Deuet eo da embann ar peoh deoh, c'hwi, hag a oa pell hag ar peoh d'ar re a oa tost.

-18- Gras dezañ eo on-eus, an eil hag egile, darempred gand an Tad en eur Spered hebken. -19- Evel-se eta n'hoh mui tud estren na tremenidi, c'hwi a zo kenvroïdi d'ar zent, hag euz famill Doue. -20- Plas a zo bet roet deoh er zavadur

a zo diazezet war an Ebestel hag ar Brofeded, ha war Jezuz Krist e-unan egiz men korn. -21- Ennañ peb savadur a vez renket hag a zav beteg eun templ santel en Aotrou. -22- Ennañ c'hwi iveau a zo renket asamblez er zavadur evid dont da veza eun demeurañs da Zoue dre ar Spered.

PAOL, DEN MISTER DOUE

III -1- Setu perag, me Paol, prizoniad Jezuz Krist evidoh-hwi ar bayaned, -2- m'ho-peus da vianna klevet ano euz ar hras roet din gand Doue evidoh, evid kas da benn ar pez e-noa divizet, -3- penaoz dre eur weladenn on deuet da anaoud ar mister, evel m'am-eus henn lavaret e berr-gomzou. -4- Evel-se, ouz va lenn, e hellit gouzoud pebez anaoudegez am-eus euz mister ar Hrist ; -5- ar mister-se n'oa ket bet diskuitlet da rummadou tud an amzer dremenet, evel m'ema o paouez beza greet bremañ dre ar Spered d'e Ebestel santel ha d'ar Brofeded : -6- ar bayaned a zo kenlodeg en heritach, kenlodeg er Horv kenlodeg er bromesa e Jezuz Krist dre an Aviel.

-7- Greet eo bet ahanon ar ministr a gement-se dre zonezon ar hras roet din gand Doue dre nerz e halloud. -8- Me an disterra hini a zo e-touez ar Zent, am-eus bet ar hras-se da embann d'ar bayaned e-neus ar Hrist eur binvidigez a n'hell ket beza dirouestlet, -9- ha diskouez sklér penaoz e kas Doue da benn ar mister miret kuzet ennañ a oll viskoaz, eñ krouer ar bed a-bez. -10- Hiviziken eta beli ha galloudziou en neñvou a anavez dre an Iliz liez furmou furnez Doue -11- hervez ar mennad peurbadel e-neus kaset da benn e Jezuz Krist on Aotrou. -12- Er Hrist on-eus, dre or feiz ennañ, ar frankiz da dostaad leun a fiziañs. -13- Setu perag, na zeuit ket, me ho ped, da fallgaloni en abeg d'an trubuillou a houzañvan evidoh, ho kloar int.

-14- Setu perag e plegan va daoulin dirag Doue an Tad. -15- Anezañ e tenn peb famill e ano, en neñv ha war an douar. -16- Ra blijo gantañ, hervez sked e hloar, ho kennerzi dre e Spered evid ma vo krefveet ennoh an den a-zibarz, -17- ha ma vo ar Hrist dre ar feiz oh ober e zemourañs en ho kalonou deoh gwriennet er garantez ha diazezet warni, -18- evid ma vezoh gouest evel-se da intent gand an oll zent petra eo al ledander, an hirder, an uhelder, an donder... -19- ha da anaoud karantez ar Hrist a zo dreist peb anaoudegez, evid m'ho pezo a-founn beteg reseo a-bez leunder Doue.

-20- D'an hini a hell dre e halloud oh oberia ennom, ober muioh, kalz muioh egod a houlennom hag a zoñjom, -21- dezañ ar hloar en Iliz hag e Jezuz Krist a rummad da rummad, a gantved da gantvejou. Amen.

SEVEL KORV AR HRIST EN UNANIEZ

IV -1- Hoh alia a ran eta en Aotrou, me hag a zo prizoniad, renit ho puez hervez ar halvadenn ho-peus bet ; -2- izel a galon ha leun a zouster, gand passioned, en em houzañvit an eil egile er garantez ; -3- lakin ho poan da zehel unvaniez ar spered dre liamm ar peoh. -4- Eur horv hebken a zo, eur Spered hebken, evel-se iveau ez oh galvet d'eun esperañs hebken, -5- eun Aotrou heb-

ken, eur feiz hebken, eur vadeziant hebken, -6- eun Doue hebken ha Tad d'an oll, a ra e labour dre an oll, hag a jom en oll. -7- Da beb hini ahanom koulkoude eo bet roet ar hras hervez donezon ar Hrist. -8- Ahano ar Gomz-mañ : «Pignet d'an uhel, e-neus greet prizonidi, ha roet donezonou d'an dud». -9- Pignet eo ! Petra eo an dra-ze ? Kement-mañ, diskennet eo beteg an traon war an douar. -10- An hini a zo diskennet a zo iveau an hini a zo pignet uhelloc egred an oll neñvou evid leunia ar bed a-bez -11- hag eñ eo e-neus greet Ebestel euz lod, profed euz lod all, avielerien euz lod all c'hoaz, hag euz lod erfin pastored ha kelennerien -12- evid ma vo ar zent e stad da ober ar vinistrerez evid diorrenn korv ar Hrist, -13- beteg ma tegouezim oll asamblez e unaniez ar feiz hag en anaoudegez euz Mab Doue e stad eun den greet, deuet da vent ar Hrist en e wella. -14- Evel-se ne vezim ket mui bugale hejet hadihejet, kaset ha degaset gand peb avel a gelennadurez, touplet gand tud korvigillet d'on lakaad da fazia. -15- Med o veva en eur garantez gwirion e kreskim e peb doare war-zu an hini a zo ar penn : ar Hrist. -16- Ar horv a-bez, kenaozet ha kennerzed gand an oll liammou a zegas dezañ magadurez hervez al labour merket da beb ezel, a deu dre ar Hrist da greski evid en em ober er garantez.

GWECHALL HA BREMAN

-17- Setu amañ eta ar pez a lavaran hag an testeni a roan en Aotrou : na vevit mui evel ar bayaned gand o zoñjou goullo, -18- beuzet o spered en deñvalijenn, n'o-deus perz ebed e buez Doue, dizesk ma 'z int ha kaledet o halon ; -19- diskiant ma 'z int, o-deus en em roet d'an hudurnez beteg en em rei d'eul loustoni diroll. -20- C'hwi avad, n'eo ket evel-se ho-peus desket ar Hrist, -21- da vianna mar deo anezañ e gwirionez eo ho-peus klevet ano, mar deo eñ eo a zo bet desket deoh, hervez ar wirionez a zo e Jezuz : -22- red eo deoh en em zizober euz ho puez tremenet, dilemel diwarnoh an den koz a zeu da vreina er c'hoantegeliou touelluz. -23- Red eo deoh beza renevezet gand eur spered a jeñch ho kalon -24- ha gwiska an den nevez krouet hervez Doue er justis hag er zantelez a zeu euz ar wirionez.

-25- Setu eta ma'z oh dieubet euz ar gevier : ra lavaro peb hini ar wirionez d'nesa, rag izili om an eil d'egile. -26- Ma 'z eus droug ennoh ? Na behit ket. Arabad ez afe an heol da guzad war ho kounnar. -27- Na roit ket ennoh krog d'an diaoul. -28- An hini a laere, dezañ paouez da laerez : kentoh kemered ar boan da labourad gand e zaouarn en eun doare onest, evid kaoud peadra da ranna gand an den ezommeg. -29- Komz noazuz ebed ne dle dont diwar ho muzel-lou, med, diouz red, eur gomz vad bennag, gouest da skoueria ha da rei eur hras bennag d'ar re a glev anezi. -30- Na lhaharit ket ar Spered Santel, e verk dezañ e-neus Doue lakeet warnoh evel eur ziell evid deiz ar frankizadur. -31- Komzou treñk, froudennou, kounnar, dismegansou, na vo ano ebed mui a gement-se kenetrezoh, na kennebeud tamm fallagriez ebed. -32- Bezit madelezuz an eil e-keñver egile, bezit kalon vad. Pardonit an eil d'egile evel m'e-neus Doue par-donet deoh er Hrist.

SKOUERIOU AN AOTROU DOUE

V -1- Kemerit skouer diwar Doue, peogwir ez oh bugale karet gantañ. -2- Bevit ër garantez, evel m'e-neus ar Hrist or haret, hag en em roet evidom da Zoue en eur brovadenn hag eur zakrifis plijuz da Zoue. -3- Euz orged, hudurnez, n'eus forz e peseurt doare e vefent, euz skraperez, na vo ano ebed zoken en ho touez, evel ma tere da dud santel, -4- nag euz loustoni, diotachou, farserez -kement-se n'eo ket deread- med kentoh en em roit d'ar bedenn a drugarez. -5- Rag, intentit mad, n'e-neus an orgeder, nag an den a ra hudurnez nag ar skraper -eun azeuler faisdoueou a zo anezañ- da gaoud perz e rouantelez ar Hrist, rouantelez Doue. -6- Arabad da zen touella gand komzou goullo, an dra-ze eo a denn kounnar Doue war an dud disent, -7- na vezit ket kenlodeg ganto.

-8- Gwechall ez oah teñvalijenn, bremâñ avad ez oh sklerijenn en Aotrou Krist ; bevit evel bugale ar sklerijenn, -9- rag froucez ar sklerijenn eo peb maledez, peb justis, peb gwirionez. -10- Gwelit mad petra 'blij d'an Aotrou. -11- Arabad deoh kenlabourad evid oberou difrouez an deñvalijenn, diskuillit anezo kentoh. -12- Ar pez a ra an dud-se e kuz, mez eo zoken hel lavared. -13- Med kement a vez diskuillet a vez diskouezet gand ar sklerijenn, -14- rag sklerijenn eo ar pez a zo diskouezet, setu perag e vez lavaret :

Dihun 'ta te hag a zo kousket,
sav a-douez ar re varo,
ha warnout ar Hrist a skedo.

-15- Taolit evez ouz ho toare beva, n'eo ket evel tud diskiant, med evel tud fur, -16- o lakaad da dalvezoud ar mare-mañ, rag fall eo an amzer a vevom. -17- Na vezit ket diskiant eta, med intentit mad petra eo bolonbez Doue. -18- Arabad deoh beza mezo, kement-se a zoug d'ar vuez diroll, bezit avad leun a Spered Santel: -19- Lavarit asamblez salmou, imnou, ha kantikou speredel, kanit meu-lit an Aotrou a greiz kalon. -20- E peb amzer, da beb degouez, lavarit bennoz da Zoue an Tad en ano Jezuz Krist on Aotrou.

AN DAREMPREDOU NEVEZ

-21- C'hwi hag ho-peus doujañs evid ar Hrist, sujit an eil d'egile. -22- Gwragez, sujit d'ho pried, evel d'or Zalver, -23- rag ar gwaz a zo ar penn evid ar vaouez, evel m'eo ar Hrist ar penn evid an Iliz, hag ar Zalver evid he horv. -24- Med evel ma suj an Iliz d'ar Hrist, ra zujo ar merhed e peb tra d'o gwazed. -25- C'hwi, gwazed, karit ho kwragez, evel m'e-neus an Aotrou Krist karet an Iliz, ha m'e-neus en em roet eviti, -26- evid he zantellaad en eur walhi anezi gand dour ar vadeziant hag ar Gomz, -27- hag evid lakaad dirazañ an Iliz leun a hloar, warni na si, na rouenn, na netra evel-se, med santel ha divlam. -28- Evel-se iveau e tle ar gwaz kared e bried e gorr dezañ e-unan ; an neb a gar e bried, en em gar e-unan, -29- rag morse ne zeuas den da gaoud kas ouz e gorr, er hontrol eo, e vaga a ra ha kemer soursi anezañ ; evel-se e ra an Aotrou Krist evid e Iliz, -30- rag ni a zo izili euz e gorr. -31- Setu perag e kuitaio ar gwaz e dad hag e

vamm evid en em staga ouz e bried, ha ne vezint o-daou nemed eur horv hebken. -32- Braz eo ar mister-se, lavared a ran eo hennez mister ar Hrist hag an Iliz. -33- N'eus forz, peb hini ahanoh, evid ar pez a zell outañ, a dle kared e wreg eveldañ e-unan, hag ar wreg a dle douja d'he gwaz.


VI -1- Bugale, sentit ouz ho kerent en Aotrou, an dra-ze a zo just. -2- «Da dad, da vamm a enori», setu aze ar gourhemenn kenta, bet staget outañ eur bromesa : -3- «evid m'az po eürusted ha buez hir war an douar». -4- C'hwi, tadow, arabad deoh hegasi ho pugale, med diorrennit anezo hervez an urz vad ha kenteliou an Aotrou. -5- C'hwi, sklaved, sentit ouz ho mistri euz an douarmañ gand doujañs, en eur grena, eeuun a galon, evel ouz ar Hrist, n'eo ket ablamour m'emaoh dirag an dud, evel ma vijeh o klask plijoud dezo, med evel sklav-ed d'ar Hrist, aketuz da ober bolontez Doue. -7- Grit, a volontez vad ho servich, evel pa vijeh e servich an Aotrou, ha n'eo ket e servich an dud. -8- Her gouzoud a rit, ar vad e-no greet peb hini, sklav pe frank e ve, a gavo e zigoll a-berz an Aotrou ; -9- ha c'hwi, mistri, grit kemend-all en o heñver. Na hour-drouzit ket : c'hwi a oar, evidoh hag evito ar mestr a zo en nefñ, ha dirazañ den ne vo espernet.

AR STOURMAD EVID AR FEIZ


-10- A hend-all, tennit ho nerz euz nerz oll-halloudeg an Aotrou. -11- Gwiskit armou Doue evid beza e stad da zerhel penn da droiou-pleg an diaoul, -12- rag n'eo ket ouz an den on-eus da stourm, med ouz gallouduziou, beli ha domaniez ar bed a deñvalijenn-mañ, ouz sperejou an droug a zo en oablou. -13- Gwiskit eta arm Doue evid gelloud, d'an deiz fall, enebi ha chom en ho sav, o veza greet kement a oa red. -14- En ho sav, eta, ouz ho targreiz gouriz ar wirionez, gwisket ganeoh skoed ar justis, en ho treid boutou al lañs evid embann aviel ar peoh. -15- Kemerit dreist-oll skoed ar feiz, gantañ e helloh mouga oll virou entanet an diaoul ; -17- resevit erfin tok-brezel ar zilvidigez, hag ar hlez speredel, da lavared eo Komz Doue. -18- Ra zeuio ar Spered d'ober deoh pedi e peb doare, ha goulenn da beb mare ; implijit ho peilladegou da bedi dalhmad evid an oll zent -19- hag evidon-me iveau. Ra vo ar Gomz war ho muzellou evid embann gand hardisegez mister an Aviel, -20- ez on anezañ ar hannad en ereou ; gand ma vo posubl din eo, evel m'eo dleet din henn ober, embann anezañ gand hardisegez.

KEMENNADUREZ

-21- Felloud a ra din e ouijeh, c'hwi iveau, e peseurt stad emaon, ar pez a ran. Tichik va breur karet, eur ministr gwirion en Aotrou, a roio deoh an oll geleier. -22- E gas a ran deoh a-ratoz, evid lavared deoh e peseurt stad emaom hag evid ho frealzi. -23- Peoh d'ar vreudeur, karantez ha feiz a-berz Doue an Tad ha Jezuz Krist an Aotrou. -24- Ra vo ar hrs gand ar re oll o-deus evid or Zalver Jezuz Krist eur garantez divarvel,



lizer d'ar filipianned



FILIPIANED

Iliz kêr Filip e Makedonia a zo bet brudet bepred evid he zentidigez parfed, he harantez tener hag an troet ma 'zeo da renta servij da Baol, an hini e-neushe zavet. Diouz e du, an abostol a gav enni e levenez hag e frealzidigez: diganti, ha netra nemed diganti, eh asantas reseou sikouriou ha donezonou ... Amañ e tiskouez kaoud fiziañs enni, ha karantez eviti, o rei dezi eun nebeud ku-zuliou war an doare da ren ar vuez.

LIZER D'AR FILIPIANED

I -1- Paol ha Timote, servicherien da Jezuz Krist, d'an oll zent e Jezuz Krist a zo e Filip, gand o episkobed hag o diagoned, -2- deoh, gras ha peoh a-berz Doue on Tad hag an Aotrou Jezuz Krist.

GRASOU HA PEDENNOU

-3- Trugarekaad a ran va Doue, bewech ma teu da zoñj din ennoh, -4- e peb amzer, e peb pedenn, a galon laouen e pedan evidoh oll, -5- ablavour d'an unaniez ho-peus ganin en Aviel, azaleg an deiz kenta beteg bremañ. -6- Sur on a gement-mañ : an Hini e-neus boulhet ennoh al labour-se a gaso anezañ da benn beteg Deiz ar Zalver Jezuz. -7- Just eo din beza troet evel-se en ho keñver deoh oll, peo-gwir emaoħ em halon, c'hwi hag a gemer oll perz er hras roet din, koulz pa vezan ēr prizon ha pa vezañ o tivenn hag o kennerza an Aviel. -8- Doue a zo test din, e karan ahanoh oll e kalon or Zalver Jezuz ; -9- ha setu amañ va fedenn : ma kresko muioħ c'hoaz ho karantez, ha muioħ-mui an anaoudegez euz ho feiz hag ar skiant evid deoh dibaba ar pez a zère ar gwella, -10- hag evel-se e vezoh divlam ha direbech a-benn Deiz or Zalver, -11- leun ho taouarn euz ar frouez a justis a zeu deom dre Jezuz Krist, evid gloar ha meuleudi Doue.

PAOL ER PRIZON

-12- Me a fell din e ouezfeh kement-mañ, va breudeur : ar pez a zo degouezet ganin, a zo deuet da veza emsav evid kas an Aviel war araog ; -13- rag er pretordi a-bez, hag e kement leh all, eo sklér bremañ, ez on ereet evid ar Hrist, -14- hag an darn vrasa euz ar vreudeur, kennerzet en Aotrou en-abeg d'am ereou, a embann dispont ar Gomz gand an hanter muioħ a hardisegez. -15- Lod, gwir eo, her gra dre avi pe dre gevezērèz, med re all a embann ar Hrist gand eur galon eeun. -16- Dre garantez eo e labour ar re-mañ. Goûd a ouzont emaoñ amañ evid divenn an Aviel. -17- Ar re all eo dre gevezērèz eo eħi ambannont ar Hrist. N'eo ket leal o menoż, soñjal a ra dezo lakaad c'hoaz da greski va foaniou er prizon. -18- An dra-ze ne ra netra, n'eus forz penaoz pe gand menoziou kuz pe gand lealded, embannet eo ar Hrist. Kement-se a ra din beza laouen ha kendelher a rin zoken da veza laouen. -19- Rag me a oar e troio an drá-ze d'am zilvidigez dre ho pedennou ha sikour Spered Jezuz Krist, -20- hervetz ar pez a vezen o hortoz stard hag hervez va esperāns, n'am bezo ket da ruzia gand ar vez, med gand eun hardisegez stard eo chomet va fizian̄s bremañ evel atao, ha beo pe

varo e vefen, brazder ar Hrist a vo roet da anaoud em horv ; -21- rag evidon-me, beva eo ar Hrist, ha mervel a zo eur gounid evidon. -22- Med neuze ma hellan, o chom da veva em horv er bed-mañ, ober eul labour talvouduz, n'ouzon ket petra da zibaba, -23- rag etre an daou emaoñ : kared a rafen mond kuit euz ar bed-mañ, evid beza gand ar Hrist, rag kalz gwelloh eo an dra-ze. -24- A-hend-all, ablamour deoh-hwi eo talvoudusoh e chomfen war an douar. -25- Setu perag e kred stard din, goûd a ouzon e chomin, chom a rin en ho kichenn deoh oll evid hoh emsav hag evid levenez ho feiz, -26- evid ma lakin-me da greski, o tis-trei davedoh, ar hloar ho-peus e Jezuz Krist.

KENDELHER GAND AR STOURMAD

-27- Ha c'hwi, renit eur vuez din euz Aviel an Aotrou Krist, evid ma klevin, ma teuan davedoh pe ma ne zeuan ket, ma klevin ano, ha gouzoud e talhit stard er memez spered, o stourm esamblez, unanet a-galon, hervez feiz an Aviel. -28- Heb beza lenteet e netra gand hoh enebourien, ar pez a vo evito eur zin sklêr ez int kollet ha c'hwi salvet, hag an dra-ze a zeu euz a Zoue, -29- rag greet e-neus deoh ar hras, ablamour d'ar Hrist, n'eo ket hebken da gredi ennañ, med ives da houzañ evitañ, o stourm, evel m'ho-peus va gweled o stourm, evel ma stourman hirio c'hoaz, her gouzoud a rit.

UNANIEZ HA IZELEGEZ

II -1- Ma 'z eus eta eur galv er Hrist, ma kaver frealzidigez er garantez, una-niez er Spered, hag eul lañs a garantez hag a drugarez -2- neuze, lakit barr va levenez, oh en em gleved kenetrezoñ, bezit eun heveleb karantez, eun heveleb kalon, klaskit an unaniez. -3- Na rit netra dre eur spered gwariziuz, netra dre lorhentez, med, izel a galon, prizit ar re all gwelloh egedoh, -4- peb hini, o tel-her kont, n'eo ket hebken anezañ e-unan, med ives euz ar re all. -5- Bezit kene-trezoñ, evel ma vezet er Hrist Jezuz, -6- eñ hag a zo e stad doueel, n'e-noa ket soñjet ez oa eur preiz da gregi ennañ, beza par da Zoue. -7- Er hontroul eo, dile-zet e-neus peb tra, kemeret gantañ ar stad a sklav, o tenna da stad an dud ha, diouz e zoare anavezet evel eun den. -8- En em izelleet e-neus, o tond da veza sentuz beteg mervel ha mervel war eur groaz. -9- Setu perag e-neus Doue savet uhel anezañ ha roet dezañ an Ano a zo dreist peb ano, -10- evid ma plego peb glin da ano Jezuz, en nefivou, war an douar ha dindan an douar -11- ma teuio peb teod da ziskleria ez eo Jezuz Krist an Aotrou evid gloar Doue an Tad.

LABOUR AR GRISTENIEN

-12- Setu eta, va re vuia karet, c'hwi hag a zo bet atao sentuz, sentit, n'eo ket hebken pa vezan war al leh, med kalz muioh bremañ pa n'emaon ket ganeoh. Gand doujañs hag en eur greno, poaniit gand ho silvidigez, -13- rag Doue eo a ra ennoh ar mennoud hag an oberia, hervez an hegarañ m'eo e venoz. -14- grit peb tra heb grozmolad na tabutal, -15- evid beza direbechha kalonég, bugale dinamm da Zoue, e-kreiz eur rummad tud diroll ha dizonest, e skedoh en o zouez war ar bed evel eien a sklerijenn. -16- C'hwi hag a zo ganeoh ar gomz

a vuez, va gloar eo evid deiz ar Hrist, peogwir n'am-bezo na redet, na kemeret poan en aner. -17- Ha goude ma vefe zoken skuillet va gwad e sakrifis hag er zervich euz ho feiz, an dra-ze a ra din beza laouen, ha laouen on asamblez ganeoh oll. -18- Evel-se, c'hwi iveau bezit laouen, ha laouen asamblez ganin.

TIMOTE HAG EPAFRODIT

-19- Fiziañs am-eus, en Aotrou Jezuz, da gas deoh dizale Timote, evid beza frealzet, me iveau, gand ar heleier am-bo diwar ho penn. -20- N'am-eus den all ebed hag a wel an traou evel ma ran, hag a gemer soursi gand kement a zell ouzoh. -21- Evito oll, o zraou o-unan, eo a gont ha n'eo ket re Jezuz Krist. -22- Eñ avad, c'hwi a oar, e-neus diskouezet a betra e oa gouest ; evel eur mab e-kichenn e dad, e-neus en em lakeet ganin e servich an Aviel. -23- Eñ eo eta am-eus fiziañs da gas deoh, kerkent ha m'am-bo gwelet petra zeuan da veza. -24- A-hend-all, e kredan stard en Aotrou, e teuin iveau dizale. -25- Kouskoude, kavoud a ree din e ranken kas deoh Epafrodit, va breur, va hompagnun a labour hag a stourmad, degaset ganeoh evid va zervicha, pa edon en ezomm ; -26- rag braz e oa e hoant da zistrei d'ho kweled oll hag enkrezet e oa, en abeg m'ho-poa klevet ez oa klañv. -27- Gwir eo, klañv eo bet ha dare da verval, med truez e-neus bet Doue outañ, ha n'eo ket hebken outañ, med ouzin-me iveau, evid mi-red n'am-befe tristidigez war dristidigez. -28- Hasta buan a ran eta da gas anenzañ deoh en-dro ma vezoh laouen adarre ouz e weled, ha m'am-bo nebeutoh a dristidigez. -29- Grit eta eur gwir degemer laouen dezañ en Aotrou ; grit stad ouz tud eveldañ, -30- peogwir evid labour ar Hrist eo bet darbet dezañ mervel, risklet e-neus e vuez evid ober en ho leh ar pez n'helleh ket ober hoh-unan evid va zervicha.

III 1- Ha bremañ va breudeur, bezit laouen en Aotrou. Ne gavan ket diêz skriva deoh ar memez tra, ha dre-ze e vezoh-hwi starteet. -2- Taolit evez ouz ar chas, taolit evez ouz al labourerien fall ! Taolit evez ouz ar re fals-amdrohet ; -3- rag ni eo ar re amdroh, ni hag a rent, a spered gloar, da Zoue, a laka or gloar e Jezuz Krist, ha ne lakom ket or fiziañs ennom on-unañ. -4- Koulskoude n'eo ket heb abeg e hellfen kaoud fiziañs ennon va-unan. Ma kred da unan bennag all kaoud fiziañs ennañ-e-unan, me avad a hell kalz muioh, me, -5- amdrohet d'an eizved devez, euz gouenn Israel, euz meuriad Benjamin, Hebreid, mab da Hebreiz ; evid al Lezenn, eur Farizian, -6- evid ar gred, heskiner an Iliz, evid ar justis a gaver el Lezenn, deuet da veza direbech. -7- Hogen an oll draouze, gounidou evidon, me am-eus kemeret anezo evel diouer en-abeg d'ar Hrist. -8- Ya avad, kavoud a ra din eo kement tra koll, e keñver an uhella mad m'eo an anaoudegez euz Jezuz Krist va Aotrou, ablavour dezañ am-eus kollet peb tra, ha kement-se a zo loustoni d'am menoz, evid beza d'ar Hrist, -9- ha beza kavet ennañ, n'eo ket mui gand eur justis din-me, a zeu euz al Lezenn, med gand an hini a zeu dre ar feiz er Hrist, ar justis a zeu euz a Zoue, hag a zo harpet war ar feiz. -10- Ar pez a gont eo e anaoud, eñ, ha galloud e adsao da veo, hag an unaniez gantañ en e boaniou, ha dont da veza heñvel outañ en e varo -11- evid degouezoud mar deo posUBL en adsao a-douez ar re varo.

-12- N'eo ket m'am-befe bet dija an oll draou-ze pe ma vefen deuet da veza par-fed, med va lañs a gemeran evid kregi ennañ peogwir, me va-unan a zo bet kroget ennon gand ar Zalver Jezuz. -13- Nann, va breudeur, ne gav ket din am-befe c'hoaz paket peg ennañ, med eun dra hebken a gont : heb en em jala gand ar pez a zo a-dreñv din, med o skei euz va oll nerz war-zu ar pez a zo en araog, -14- e kemeran va lañs war-zu ar pal, war-zu ar priz on galvet gand Doue da gaoud e baradoz an Aotrou Krist. -15- Ni oll, ar re barfed, greom eta evel-se, ha ma teu deoh e tra pe dra, ober en eun doare all, war gement-se iveau, Doue ho sklerijenno. -16- Da hortoz, er stad m'emaom degouezet, kerzom gand ar me-mez hent.

-17- Kemerit oll skouer diwarnon, ha sellit ervad ouz ar re a vev hervez ar skouer a gavit ennom. -18- Siwaz, meur a hini a zo, dre o buez, evel ma lavaren deoh aliez, ha bremañ henn lavaran c'hoaz, an dour em daoulagad, enebourien da groaz ar Zalver, -19- d'en em goll ez eont. O hov eo doue, o fouse a lakont en o mez, ha ne brizont nemed traou an douar-mañ. -20- Ni avad, eo an neñv or gwir-vro ; ahano eo e hortozom da zond, evel Salver, Jezuz Krist on Aotrou, -21- a jeñcho, eñ, doare d'or horvou dister hag o lakaio par d'e gorr gloriuz, dre ar galloud e-neus da veza rener war beb-tra.

IV

-1- Evel-se, va breudeur ker, c'hwi hag am-eus kement a vall da weled a-nevez, va levez, va hurunenn, dalhit stard evel-se en Aotrou Krist, c'hwi va re muia-karet. -2- Evodia ha Sintika, o alia a ran d'en em gleved mad en Aotrou. -3- Ha te, kompagnun gwirion din, diganit e hou lennañ, deus war o zikour, rag poaniet o-deus evid an Aviel asamblez ganin ha gand Klement hag oll ar re all hag o-deus kenlabouret ganin, o ano dezo a zo skrivet el levr a vuez. -4- Bezit bepred laouen en Aotrou or Zalver, ya, henn azlavared a ran : bezit laouen -5- ra vo anavezet ho madelez gand an oll. An Aotrou a zo tost. -6- Arabad eo beza enkrezet gand netra, med e peb degouez, abouez pedi hag aspedi, o trugarekaad, kasit ho koulenou dirag Doue, -7- ha peoh Doue, hag a zo dreist peb skiant, a ziwallo ho kalonou hag ho sperezou er Zalver Jezuz. -8- A-hent-all va breudeur : kement a zo gwir, kement a zo onest, kement a zo just, kement a zo glan, kement a zo din da veza karet hag enoret, kement a zo santel ha din da veza meulet, gand an oll draou-ze eo deoh trei ho spered. -9- Ar pez ho-peus desket ha resevet, ar pez ho-peus klevet euz va ferz ha gwelet ahanon oh ober, grit kemend-all hag an Doue a beoh a vo ganeoh.

-10- Laouen braz on bet en Aotrou, o veza m'he-deus gellet pelloh ho karantez bleunia a-nevez evidon; gwir eo, douget ez oah din, med n'ho-poa ket a dro d'henn diskouez. -11- N'eo ket an dienez eo a ra din komz, rag desket am-eus en em denna euz n'eus forz pe-seurt stad. -12- Gouzoud a ran beva en dienez ha beva en ézamant, goûd a ouzon e peb degouez hag e peb doare kaoud va gwali, hag iveau kaoud naon, beva gand kalz hag iveau gand re nebeud. -13- Ober a hellan peb tra en hini a ro nerz din. -14- Ha koulskoude, mad ho-peus greet o tond da gemer perz em dienez.


-15- Goûd a ouzoh, c'hwi Filipianed ; er penn kenta euz an Aviel, p'am-eus kuiteet ar Makedonia, Iliz all ebed n'he-doa va skoazellet, dre eur gont-red, ne-medoh, -16- c'hwi, hag ho-poa e Tesalonika dija, degaset din, ha meur a wech,

ar pez a ree diouer din. -17- N'eo ket ma vefen o klask provou, ar pez a glaskan eo, ma kresko ar frouez war ho kont deoh-hwi. -18- Ha neuze, etre va daouarn am-eus kement a zo red hag ouspenn zoken, awalh am-eus bremañ p'am-eus resevet ar pez e-neus Epafrdit roet din euz ho perz, provadenn a c'hwez vad, zakrifis kavet mad gand Doue ha plijuz dezañ, -19- ha va Doue a bourvezo gand largentez en eun doare dispar d'hoh oll ezommou, hervez e binvidigez, en Aotrou Krist Jezuz. -20- Da Zoue an Tad eta gloar da virviken. Amen.

-21- Saludit e Jezuz Krist an oll zent. -22- Ar breudeur a zo ganin ho salud. An oll zent ho salud hag ar re euz ti Sezar. -23- Ra vo gras an Aotrou Jezuz Krist gand ho spered.



lizer d'ar holosianed



KOLOSIANED

En Azia-Izella, e Kolos dreist-oil, Juzevien ha pa-yaned a veze dalhmad tabut ganto diwarbenn ar sperejou, ar «halloudegeziou euz an neñv», an êlez hag ar pouez o-devoa war blanedenn an dud ha war mister ar zilvidigez da dizoud. Paol a zegas da zoñj d'ar gristenien eo ar Hrist, e kement ha m'eo krouer hag Aotrou, adsavet da veo, a ren ar bed, a ro lusk d'an Iliz hag a ro buez da beb hini euz e izili. Eñ eo a dle peb kristen kemer skouer diwarnañ.

LIZER D'AR GOLOSIANED

SALUDOU

I - 1- Paol, abostol Jezuz Krist, dre volontez Doue hag ar breur Timote, -2- d'ar zent a zo e Kolos, breudeur fidel er Hrist, gras ha peoh a-berz Doue on Tad. -3- Trugarekaad a reom Doue, Tad Or Zalver Jezuz Krist, o pedi anezañ heb ehan evidoh, -4- rag, klevet on-eus ober ano euz ho feiz e Jezuz Krist, hag euz ho karantez evid an oll zent, -5- en abeg d'an esperafis a zo ouz ho kortoz en nefivou, an esperafis-se a zo bet embannet deoh dre gomz ar wirionez, an Aviel -6- a zo erruet beteg ennoch ; evel ma toug frouvez ha ma kresk dre ar bed a-bez, evel-se ivez e ra en ho touez, abaoe an deiz m'ho-peus klevet hag anavezet e gwirionez gras Doue, -7- hervez ar gelennadurez roet deoh gand Epafras, or mignon hag or hompagnun er zervich ; eñ, hag a zo ministr fidel er Hrist en on leh, -8- e-neus displeget deom euz peseurt karantez oh karget gand ar Spered.

AR BEDENN EVID AN ILIZ

-9- Setu perag, ni ivez diouz on tu, azaleg an deiz m'on-eus klevet kement-se, ne ehanom ket da bedi evidoh. Goulenn a reom digand Doue ma vefeh peur-anaoudeg euz e volontez, leun a furnez hag a skiant speredel, -10- ma renfeh eur vuez din euz an Aotrou, o klask plijoud dezañ e peb tra ; c'hwi a reno neuze eur vuez troet d'ar mad ha frouezuz e peb doare hag a gresko dre an anaoudegez a Zoue. -11- Kennerzet e vezoh, e peb doare, dre nerz e hloar ha douget evel-se da houzañ ha da zelher mad e peb doare.

KAN AR HRIST MESTR AR BED

-12- Gand levenez, trugarekait an Tad e-neus ho lakeet gouest da gaoud perz e lod ar zent er sklerijenn. -13- On diframmet e-neus euz galloud an deñvalijenn hag on degaset e rouantelez e vab karet, -14- ennañ on-eus an daspren, ar pardon euz ar pehejou, -15- eñ eo ar skeudenn euz an Doue na weler ket, ar henta ganet euz an oll grouadurien, -16- rag ennañ eo bet krouet peb tra, en nefiv ha war an douar, an traou a weler hag an traou na weler ket : troniou, aotroneziou, beliou, galloudegeziou. Drezañ hag evitañ eo krouet peb tra.

-17- Eñ, a zo anezañ araog peb tra hag ennañ eo e kendalh peb tra da veza.
 -18- Eñ eo ar penn euz ar hory m'eo an Iliz. Ar penn kenta eo, ar henta ganet
 a-douez ar re varo, evid kaoud ar renk kenta e pêb tra, -19- rag plijet eo gand
 Doue lakaad da jom ennañ al leunder a-bez, ha lakaad d'en em gleved drezañ
 hag evitañ an oll draou war an douar hag en nefñ, o veza lakeet ar peoh dre
 ar gwad euz ar groaz. -21- Ha c'hwi hag a oa gwechall tud estren hag enebourien
 dre ho kalon troet d'an oberou fall ; -22- setu m'e-neus bremañ Doue hoh adun-
 vaniet e kory-den e Vab, dre e varo evid ma teufeh da veza dirazañ santed,
 direbech ha didamall. -23- Med red eo e talfeh mort ha stard er feiz heb lezel
 da veza distaget diouz esperañs an Aviel, ho-peus klevet hag a zo bet emban-
 net d'an oll grouadurien a zo dindan an nefñvou, ha degouezet eo din-me,
 dont da veza ar ministr euz an esperañs-se.

STOURMAD AN ABOSTOL

-24- Er poaniou a houzañvan evidoh e kavan bremañ va levez, hag ar pez
 a jom da houzañv evid peurleunia trubuillou Jezuz Krist, eo a zougan em
 hory va-unan evid e gorr dezañ, da lavared eo an Iliz. -25- Anezi on deuet
 da veza ar ministr, dre ar garg e-neus fiziet ennon en ho keñver : peurembann
 penn-da-benn Komz Doue : -26- ar mister dalhet kuz beteg henn, a hed. a
 hed ar hanvejou, ha bremañ diskleriet d'ar zent, -27- fellet eo dezañ rei da
 anaoud dezo peseurt teñzor a hloar eo ar mister-se e keñver ar bayaned, ar
 Hrist en ho touez, an esperañs euz ar hloar. -28- Eñ eo a embannom o kuzu-
 lia peb hini, o kelenn peb hini, e peb furnez evid degas peb hini d'ar zantelez
 er Hrist. -29- Evid kement-se e poanian, o stourm gand e nerz dezañ a zo e
 labour gallouduz ennom.

II -1- Rag felloud a ra din e oufeh pegent garo eo va stourmad evidoh,
 evid tud Laodise hag evid kement a re all ha n'o-deus morse va gwelet, me
 va-unan ; -2- me a fell din e vefe evel-se kennerzet o halon ha ma vefent unanet
 ken stard er garantez ma teufent evel-se da dizoud en e oll binividigeziou
 leunder ar spered hag an anaoudegez euz mister Doue : ar Hrist, -3- a zo
 kuzet ennañ oll defñzoriou ar furnez hag ar skiant. -4- Kement-se a lavaran
 evid mired na zeufe den d'ho touella gand komzou flour. -5- Rag n'emaon
 ket ganeoh a gorr, gwir eo, med a spered emaon ganeoh, laouen ouz ho kweled
 fidel d'ho karg ha stard en ho feiz e Jezuz Krist.

PEB TRA EN AOTROU KRIST

-6- Kendalhit eta gand hoh hent en Aotrou Krist, evel m'ho-peus rerevet anezañ.
 -7- Bezit gwiziennet ha fountet ennañ, startet evel-se er feiz evel m'eo bet
 kelenet deoh, ha leun-barr a anaoudegez vad. -8- Diwallit na zeufe den d'ho
 lakaad da fazia dre brederioriez a zo eun douellèrèz goullo, hervez envor
 pobleg an dud, hervez galloudegeziou ar bed ha n'eo mui hervez ar Hrist.
 -9- Rag ennañ ema o chom e doare eur hory, oll leunder an doueelez. -10-
 Ha c'hwi ho-peus bet dreist ho kwalh gantañ, eñ hag a zo ar penn euz peb beli
 ha peb galloud.

-11- Ennañ oh bet amdrohet, eun amdroh ha n'e-neus ket bet dorn an den perz ebed ennañ, hag e-neus tennet diwarnoh ho kory-natur, setu aze amdroh ar Hrist ; -12- lakeet er bez a-unan gantañ d'ar Vadeziant, ennañ iveau ez oh bet adsavet a-douez ar re varo. -13- Ha c'hwi hag a oa maro ablamour d'o pehejou ha d'an diamdroh ma 'z oa ho kory, Doue e-neus roet buez deoh a-unan gantañ : pardonet e-neus deom on oll behejou ; -14- freuzet e-neus al lizer-dle a yee a-eneb deom gand e hourhemennou ha tennet e-neus anezañ kuit, ha staget anezañ ouz ar groaz. -15- Diberhennet e-neus an Arhelezou hag ar hal-loudiziou ha diskouezet e-neus anezo da hoapèrèz an dud o stleja anezo gantañ e kerzadenn a enor ar groaz.

-16- Neuze eta, arabad da zen barn ahanoh diwar-benn boued pe evach, diwarbenn eur gouel, pe al loar nevez, pe ar zabad ; n'eo kement-se nemed eur skeudenn euz ar pez a oa da zond, med ar wirionez a zeu euz ar Hrist. -18- Na lezit ket laerez an treh diganeoh gand tud en em blij e devosionou, e servich an éllez, a vev gand gweledigeziou hag o spered danvezel a ra dezo beza c'hwezet gand sorhennou. -19- Ne jomont ket unanet gand ar penn a denn anezañ ar horv a-bez, unanet gand e goulblou hag e stagellou, ar hresk a ro Doue dezañ.

FRANKIZ AN DUD BADEZET

-20- Peogwir ez oh marvet gand ar Hrist da draou ar bed, perag plega da reolennou evel pa vefeh c'hoaz o veva er bed : arabad kemered, arabad tañva, arabad touch... ! -22- Ha kement-se evid traou hag a ya da netra dre ma vezont implijet ! Setu ar gourhemennou ha kelennaduriou an dud. -23- Kaer o-deus kaoud eun doare a furnez, o relijon dezo o-unan o devosion hag o ferz da ziouered n'o-deus talvoudegez ebed, n'int mad nemed da blijoud d'ar horv.

III -1- Peogwir oh savet da veo a-unan gand ar Hrist, klaskit madou an neñv, el leh m'ema ar Hrist azezet en tu dehou da Zoue. -2- En neñv ema ar pal da dizoud ha n'eo ket war an douar, -3- rag c'hwi a zo maro hag ho puez a zo kuzet, a-unan gand ar Hrist, e Doue. -4- P'en em ziskouezo ar Hrist, ho puez, neuze c'hwi iveau a vo gwelet gantañ e kreiz e hloar. -5- Lakit eta da vovel ennoch ar pez a zo euz an douar : gadaliez, huđurnez, youlou direiz, c'hoantegeziou fall hag ar skrapèrèz a zo eun idolèrèz. -6- Diwar gement-se e teu kounnar Doue war an dud difeiz. -7- Setu aze penaoy e veveh gwechall, Kement-se oa ho puez. -8- Bremañ eta, deoh-hwi iveau en em zistroba a gement-se : kounnar, buanegez, falloni, kunujennou, komzou louz deuet diwar ho muzellou. -9- Gaou ebed mui kenetrezoh, rag taolet ho-peus kuit diouzoh ho toareou koz da veva, -10- evid kemer doareou nevez an den renevezet e anaoudegez ar skeudenn euz e grouer.

-11- N'eus aze mui Gresian ha Juzeo, amdrohet ha diamdrohet, barbared ha Sited, sklaved ha tud frank, n'eus nemed ar Hrist, a zo peb tra e peb hini. -12- Peogwir oh tud dibabet, santelleet, ha karet gand Doue, bezit età truezuz, madelezuz, izel ha tener a galon, pasiañt. -13- En em houzañvit ha m'e-neus

hini pe hini da glemm euz unan all bennag, pardonit an eil d'egile evel m'eus an Aotrou pardonet deoh grit iveau kemend-all. -14- Ha dreist peb tra lakin ennoh ar garantez, setu aze al liamm parfed. -15- Peoh or Zalver da ren en ho kalonou, d'ar peoh-se ez oh bet oll galvet en eur horv hebken, bezit leun a drugarez. -16- Ra vo komz ar Hrist o chom en ho touez gand e oll binvidigez, kentelit ha kuzulit an eil egile gand kalz a furnez. Kanit da Zoue en ho kalon hoh anaoudegez vad gand salmou, himnou ha kantikou speredel. -17- Ha kement a hellit lavared pe ober ra vo bepred en ano an Aotrou Jezuz, o trugarekaad drezañ Doue an Tad.

-18- C'hwi gwagez, bezit doujuz d'ho priejou evel m'eo dereum en Aotrou. -19- C'hwi gwazed, karit ho kwragez, na hegasit ket anezo. C'hwi bugale, sentit e peb tra ouz ho tud kement-se a zo plijuz d'an Aotrou. -21- Kerent, arabad eo deoh hegasi ho pugale gand aon na zeufent da fallgaloni. -22- C'hwi, sklaved sentit e peb tra ouz ho mistri euz an douar-mañ, servichit anezo, n'eo ket ablamour m'emaer war evez ahanoh, evel ma klaksfeh plijoud d'an dud, med gand eur galon zidro, o touja d'an Aotrou. -23- Ho labour, n'eus forz pehini e vefe, grit anezafañ a galon vad, evel pa vefe evid an Aotrou. ha n'eo ket evid an dud ; -24- o houzoud ho-pezo digand an Aotrou an hérez da hobr. Ar mestr eo ar Hrist, o servicha anezafañ emao. -25- An hini a zo disleal a vo paet hervez e zislealded. Ne vez ket greet diouz dremm an dud.

ALIOU DA BEB HINI


IV -1- Mistri bezit just ha leal e keñver ho sklaved, o houzoud ho-peus c'hwi eur mestr en neñvou. -2- Kendalhit gand ar bedenn, chomit war evez, o trugarekaad. -3- War ar memez tro, pedit iveau evidom-ni, ma teuio Doue da zigeri eun nor evid or prezegérèz, ma 'h embannin mister ar Hrist - m'emaom er prizon ablamour dezañ - ma 'h embannin anezafañ evel m'eo red din henn ober. -5- Grit evid ar gwella evito an darempredou gand an dud digristen. -6- Ra vo ho komzou bepred hegarad, ha morse trenk, mad da respont da beb hini evel ma tere. -7- Kement tra diwar va fenn a vo kemennet deoh gand Tichik, ar breur karet, ar ministr leal, va hompagnun e servich an Aotrou. -8- E gaset am-eus deoh a-ratoz-kaer, evid rei deoh kelou ahanon ha kennerza ho kalon. -9- Onezim, ar breur fidel ha karet meurbed, a yelo gantañ. Unan ahanoh eo, kement a dremenamañ a roio deoh da anaoud.

-10- Ho saludi a ra Aristark, a zo er prizon asamblez ganin hag iveau Mark, kenderv Barnabaz ; resevet ho-peus kemennadurez diwar e Benn :ma teu dave-doh, grit degemer vad dezañ. -11- Ho saludi a ra iveau Jezuz, an hini a anver Justus. N'eus nemeto e-touez ar Juzevien, o labourad ganin, evid rouantelez Doue. Eur frealzidigez int bet evidon. -12- Epafras, ho kenvroad ho salud iveau. Ar zervicher-se da Jezuz Krist ne ehan ket da stourm evidoh dre ar bedenn, evid ma talhfeh da veza parfed ha da zenti penn-da-benn ouz peb bo-lonteze Doue.


-13- An testeni-mañ a roan dezañ : kalz a boan a gerner evidoh, evid tud Lao-dise, ha Seropolis. -14- Ho saludi a ra Lukaz, or mignon ar medesin, hag iveau Demas.

-15- Saludit ar vreudeur euz Laodise, ha iveau Nimfa, hag an Iliz en em vod en e di. -16- Pa vo bet lennet al lizer ganeoh, grit ma vo lennet iveau e Iliz Laodise. -17- Lavarit da Arkip : taol evez ouz ar ministrèrèz az-peus resevet en Aotrou evid henn ober penn-da-benn.

-18- Ar zalud a zo skrivet gand va dorn va-unan. Dalhit soñj euz va jadennou. Ar hras ra vo ganeoh.



kenta lizer d'an tesalonisianed



TESALOSIANED I

Gwallgaset gand ar Juzevien, Paol e-neus ranket kuitaad Tesalonig, heb beza gellet rei deskadurez a-walh d'ar re genta deuet d'ar feiz. O veza klevet e choment stard en o feiz, Paol a skriv dezo evid o meuli da veza roet degemer vad d'an Aviel ha da veza dalhet mad e-kreiz an Heskinérèz. Evid ar pez a zell ouz ar gristenien eet dija da anaon, e lavar dezo chom heb nehamant: adsevel a raint endro da veo, abred awalh evid gweled distro-meur ar Hrist en e hloar da fin ar bed.

LIZER KENTA D'AN DESALONISIANED

I -1- Paol, Silvan ha Timote da Iliz an Desalonisianed a zo e Doue an Tad, hag en Aotrou Jezuz Krist. Deoh gras ha peoh. -2- Heb ehan e lavarom bennoz da Zoue, ablamour deoh oll, oh ober meneg ahanoh en or pedennou. -3- Heb ehan e talhom soñj dirag Doue an Tad, pegen nerzuz eo ho feiz, pegen aketuz ho karantez, pegen stard hoh esperâns silet ennoh gand Jezuz Krist on Aotrou, dirag Doue on Tad, -4- rag ni a oar mad, breudeur karet gand Doue, ez oh bet dibabet gantañ, -5- rag an Aviel a embannom, n'eus ket bet anezañ komzou hebken en ho touuez, med diskouezet e-neus dreist-fonn, galloud ha vertuz ar Spered Santel; setu aze iveau, c'hwi a oar, ar pez on-eus greet en ho touuez evid ho mad. -6- Ha c'hwi a zo deuet da gemer skouer diwarnom, ha diwar an Aotrou, o tegemer ar Gomz, e kreiz kalz a drubuillou, gand levezenez ar Spered Santel. -7- Evel-se ez oh deuet da veza eur skouer evid an oll dud fidel euz ar Makedonia hag an Akaia. -8- Rag n'eo ket hebken Komz Doue he-deus tregernet er Makedonia hag en Akaia, azaleg ho pro, med e peb leh eo brudet ho feiz e Doue, evel-se n'on-eus ezomm ebed da lavared netra diwar he fenn. -9- Rag ar re-ze a laver o komz ahanom, penaoz ho-peus on degemeret, penaoz oh deuet da drei ouz Doue, o trei kein d'ar fals-kredennou evid servicha an Doue beo ha gwirion, -10- hag evid gortoz euz an nefvou e Vab e-neus savet a-douez ar re varo, en hag on diwall euz ar gounnar da zond.

LABOUR ABOSTOL SANT PAOL

II -1- Gouzoud mad a rit hoh-unan, breudeur, n'eo ket en aner ho-peus roet degemer deom. -2- Med goude ar poaniou hag an ~~d~~ismegañsou or-boa bet da houzañv e kér Filip, evel m'a ouzoh, on-eus kavet en on Doue, e kreiz e-leiz a stourmajou, an hardisegez da brezeg Aviel Doue. -3- Rag ne brezegom ket eur fals-kredenn na traou dizonest, ne glaskom ket korvigella. -4- Med, evel m'e-neus Doue or havet mad da fizioud ennom an Aviel a brezegom, evel-se iveau e komzom heb klask plijoud d'an dud med da Zoue a amprou or halonou. -5- Morse, her gouzoud a rit, n'on-eus bet komzou luban, na morse menoziou kuz da hounid arhant, test eo Doue a gement-se; morse n'on-eus klasket gloar a-berz an dud, nag en ho touuez, nag e leh all ebed. -7- Gellet on-nije, evel ebrestel ar Hrist, beva diwar ho koust.

Er hontrol eo, leun a zouster om bet en ho touez, evel eur vamm-vagéréd a domm war boull he halon ar re ema o vaga. -8- Kement a garantez or-boa evidoh ma 'z oam prest da rei deoh n'eo ket hebken Aviel Doue, med or buez zoken, ken tomm oa or harantez evidoh. -9- Sofj ho-peus, va breudeur, euz or poaniou, euz or skuizder: o labourad noz-deiz da vired na vefem eur zamm evid nikun ahanoh eo on-eus embannet deoh Aviel Doue. -10- C'hwi a zo test, ha Doue ives, euz ar vuez santel, just ha dire-bech on-eus renet en hoh andred deoh, an dud fidel. -11- Ha gouzoud a rit ives: evel ma ra eun tad evid e vugale, on-eus, peb hini ahanoh d'e dro, -12- ho kuzuliet, frealzet, hag hoh aspedet da veva en eun doare din a Zoue, an hini ho kalv d'e rouantelez ha d'e hloar. -13- Set amañ perag e lavarom, ni ives, bennoz da Zoue heb ehan : p'ho-peus resevet komz Doue a embannem deoh, ho-peus he degemeret n'eo ket evel eur gomz a-berz tud, med evid ar pez ma 'z eo e gwirionez: komz Doue a zo ives o labourad ennoch-c'hwi, an dud fidel. -14- Rag, breudeur, kemeret ho-peus skouer diwar Ilizou Doue a zo e bro Judea, er hrist Jezuz, peogwir ho-peus bet, c'hwi ives, da houzañv, a-berz ho kenvroiz, ar pez o-deus int-i ives gouzañvet a-berz ar Juzevien; -15- int-i hag o-deus lazet an Aotrou Jezuz hag e brofeded, o-deus on hes-kinet ni ives, ne blijont ket da Zoue, enebourien int d'an oll dud. -16- Mired a reont ouzom da brezeg d'ar bayaned evid o zilvidigez, gand kement-se e kasont o fehed d'e wasa. Med d'ar fin eo kouezet ar gouunnar warno. -17- Evidom-ni hag a zo dispartiet diouzoh evid eur pennad amzer, pell diouz on daoulagad, med n'eo ket diouz or halon, ni or-boa mall braz da vond d'ho kweled dre garantez vraz. -18- Setu perag on-eus klasket mond davedoh, me va-unan Paol, diou wech... ha Satan e-neus miret ouzom. -19- Rag piou eo on esperafs, ol levez, or hurunenn a lorh dirag an Aotrou Jezuz pa zistroio, piou nemedoh? -20- Ya, c'hwi eo or gloar hag ol levez.

III -1- Neuze eta, ma n'hellom ket gortoz pelloh, on-eus kavet gwelloh chom ni on-unan e Aten, -2- hag on-eus kaset deoh Timote, or breur, servicher Doue, da brezeg Aviel ar Hrist, evid ho startaad, ho kennerzi en ho feiz, -3- evid ma ne zeuio den da horjella e-kreiz an trubuilou a-vreman, rag gouzoud a rit on-eus d'o houzañv. -4- Pa edom en ho touez on-eus kemenet deoh orbefe trubuilou da houzañv ha degouezet eo kement-se, her gouzoud a rit. -5- Setu aze perag, pa n'hellom ket gortoz muioh, am-eus kaset da houllenn kelou euz ho feiz, gand aon na vefe deuet an Toueller d'ho touella ha n'or befe kollet or poan. -6- Bremañ, ema Timote o tegouezoud amañ o tond euz du-ze; degas a ra deom kelou mad euz ho feiz hag euz ho karantez. Lavared a ra e talhit atao sofj vad ahanom, hag ho-peus c'hoant d'or gweled kement ha m'on-eus-ni c'hoant d'ho kweled. -7- Evel-se, breudeur, ez om-ni bet frealzet ganeoh dre ho feiz deoh, e-kreiz on oll enkrez hag or poaniou, -8- ha bremañ e teu buez nevez deom peogwir e chomit stard en Aotrou. -9- Penaoz truga-rekaad Doue diwar ho penn evid an oll levez a darz ennom ablavour deoh

dirag Doue? -10- Noz-deiz e houennom stard ma vo roet deom ar hras d'ho kweled ha da rei ar pez a vank d'ho feiz. -12- Plijet gand an Aotrou lakaad da greski ennoh a-fonn ar garantez an eil e keñver egile hag e keñver an oll, kenkoulz ha ma karom ahanoh. -13- Ra zalho stard ha direbech ho kalo-nou er zantelez dirag Doue an Tad a-beññ distro an Aotrou gand an oll zent.

IV -1- A hend-all, breudeur , e pedom hag e aspedom ahanoh en Aotrou Krist: evel m'ho-peus desket ganeom penaoz eo red deoh ren ho puez evid plijoud da Zoue,- hag evel-se eo e renit-, kendalhit da vond war wellaad. -2- Rag c'hwi a oar peseurt kenteliou on-eus roet deoh a-berz an aotrou Jezuz. -3- Setu amañ petra eo bolontez Doue hag ar zantelez evidoh: en em vired ouz an hudurnez, -4- gouzoud peb hini ahanoh beva gand e wreg er zantelez hag en onestiz, ha n'eo ket o heulia ar c'hoantegeziou fall evel ma ra ar banyaned ha na anavezont ket Doue. -6- Arabad eo da zen noazoud d'e vreur nag ober gaou outañ war ar poent-se, rag reiza a ra an Aotrou an oll draou-se, evel m'on-eus dija lavaret ha testeniet deoh. -7- Rag Doue e-neus or galvet n'eo ket da veva en hudurnez, med da veva er zantelez. -8- Rag-se eta an hi-ni a zisprij ar gelennadurez-se, n'eo ket eun den eo a zisprij, med Doue, eñ hag a ro deom ar Spered Santel. -9- Diwarbenn ar garantez etre breudeur,n'ho-peus ket ezomm e vefe skrivet deoh, rag c'hwi hoh-unan ho-peus desket gand Doue en em gared an eil egile. -10-Hag henn ober a rit a-vad e keñver an oll vreudeur euz ar Masedonia a-bez. Ni ho ped, breudeur, da ober gwelloh c'hoaz: -11- klaskit a-zevri beva e peoh, kemerit preder gand hoh aferiou hoh-unan, labourit gand ho taouarn, evel m'on-eus kemennet deoh, -12- evid beza dirag an diavézidi tud a vrud vad, ha chom heb kaoud ezomm a zen. -13- Ne fell ket deom e chomfeh heb gouzoud ar wirionez diwarbenn ar re varo; na vezit ket glaharet evel ar re all ha n'o-deus esperañs ebed; -14- rag ma kredom eo marvet Jezuz hag adsavet da veo, kredom kenkoulz all e la-kaio Doue da vond gand e Vab ar re a zo maro e karantez Jezuz. -15- Setu a-mañ petra lavarom deoh hérvez komz Doue : ni, ar re veo, ni, ar re a vo lezet beteg distro an Aotrou or Zalver, ne vezim ket a-raog ar re varo; rag an Aotrou e-unan, pa vo roet an urz gand mouez an arhêl ha gand trompill Doue, a ziskeno euz an nefiv hag ar re varo er Hrist a adsavo da genta. -17- Da hou-de, ni, ar re veo, lezet beteg neuze, a vo douget a-unan ganto war goabrenn an nefiv, evid mond da ziambroug or Zalver en ér, hg evel-se e vezim da viken gand an Aotrou Doue. -18- En em frealzit eta an eil egile dre ar homzou-se.

V -1- Evid ar pez a zell ouz an amzer hag ar poent, n'ho-peus ket e-zomm, breudeur, e vefe skrivet deoh diwar gement-se. -2- Rag gouzoud a rit ervad e tegouezo deiz an Aotrou, evel eul laer en noz. -3- Pa lavaro an dud: «Pebez peoh, pebez dienkrez!», neuze, end-eün e kouezo warnoh an dismantre, en eun taol kont, evel gwentiou war ar vaouez dougéréz; n'hellint ket tehed;

-4- c'hwí avad, breudeur, o veza ma n'emaoh ket en deñvalijenn, ne gouezo ket an deiz-se warnoh evel eul laer, -5- rag oll ez oh bugale ar sklerijenn, bugale an deiz: n'om ket tud an noz, na tud an deñvalijenn. -6- Neuze 'ta, arabad eo deom en em rei da gousked, evel ma ra ar re all, beillom, mirom da eva re. -7- Ar re a gousk, en noz eo e kouskont, ar re en em vezv, en noz eo eh en em vezvont. -8- Med ni hag a zo euz an deiz, mirom da eva re, gwisket ganeom hobregon ar feiz hag ar garantez, gand tok-brezel esperañs ar zilvidigez. -9- Rag Doue n'e-neus ket or galvet evid ar gounnar, med evid kaoud da lod ar zilvidigez dre or Zalver Jezuz Krist maro evidom, -10- evid ma vefem o veva unanet gantañ, pe zihun pe gousket e vefem. -11- Setu perag, roit frealzidigez ha skouer vad an eil d'egile evel m'her grit dija. -12- Goulenn a reom diganeoh, breudeur, ober stad ouz ar re a gemer poan en ho touez evid ho hencha en Aotrou hag ho reiza. -13- Bezit evito ar vrasa karantez ablamour d'o labour. Bevit e peoh kenetrezoh. -14- Ho pedi a reom, breudeur, reizit an dud direiz, kennerzit ar re laosk, sikourit ar re wan, bezit habask e keñiver an oll. -15- Diwallit na zeufe den da renta droug evid droug, klaskit avad atao ar mad kenetrezoh hag e keñiver an oll. -16- Bezit atao laouen. -17- Pedit heb ehan. -18- Trugarekait e peb tra, kement-se eo bolontez Doue en ho keñiver e Jezuz Krist. -19- Arabad eo deoh mouga ar Spered. -20- Na rit ket fae war ar brofediez. -21- Pouezit mad peb tra ha dalhit d'ar pez a zo mad. -22- En em ziwallit diouz peb droug. -23- Ra zeuio Doue ar peoh e-unan d'ho peurzantellaad; ra vo dalhet direbech ho spered, hoh ene hag ho korv evid distro an Aotrou Jezuz Krist. -24- Feal eo an hini ho kalv, eñ c'hoaz a raio kement-se. -25- Breudeur, pedit evidom-ni ives. -26- Dre eur pok sanctel, saludit an oll vreudeur. -28- Ra vo ganeoh gras an Aotrou Jezuz Krist.



eil lizer d'an tesalonisianed



TESALONISIANED II

Paol a lavar adarre meuleudi da gristenien Tesanionig, peogwir o-deus dalhet mad e-kreiz an heskinèr; digollet e vezint da zevez ar varnedigez. Araog an devez-se e vo gwall drubuillou evid ar gristenien, med ne oar den pe vare e tegouezo. Neuze 'ta, e-leh gortoz an devez-se, heb ober nera, eo red da beb hini labourad evid gounid e voued.

EIL LIZER D'AN DESALONISIANED

I -1- Paol, Silvan ha Timote da iliz Tesalonika a zo e Doue an Tad hag en Aotrou Jezuz Krist, -2- deoh gras ha peoh a-berz Doue an Tad ha Jezuz Krist on Aotrou. -3- Red eo deom lavared heb ehan, bennoz da Zoue evidoh, breudeur ; hag eun dra just eo, rag kreski a ra kalz ho feiz, hag ho karantez an eil evid egile a gresk e peb hini ahanoh. -4- Setu perag, ni, e ilizou Doue, a zo lorh ennom ganeoh ablamour ma chomit fidel d'ho feiz e-kreiz an heskinaden-nou ha trubuillou ho-peus da houzañv. -5- Diskouez a reont eo just barnedigez Doue ; evid beza din euz Rouantelez Doue, ho-peus da houzañv evitañ, -6- rag just eo e rofe Doue trubuill d'ar re a drubuill ahanoh. -7- Hag e rofe deoh-hwi hag a zo trubuillet an diskuiadur Jezuz an Aotrou a zeuio euz an neñv gand élez e halloud, -8- e - kreiz eur flamm - tan evid kastiza ar re na anavezont ket Doue hag ar re na zentont ket ouz aviel an Aotrou.

-9- Beza kollet da viken, pell diouz dremm an Aotrou ha diouz sked e halloud, a vo o hastiz, -10- pa zeuio en deiz-se da reseo gloar diwar goust e zent hag estlamm diwar goust ar re oll o-dezo kredet ; hogen, c'hwi ho-peus kredet en on testeni deom-ni. -11- Setu perag e pedom heb ehan evidoh, evid ma vezoh kavet din gand Doue euz e halvidigez a zo bet ho lod euz e berz, ha ma roio deoh dre e halloud ar hrsas da gas da benn ar vad c'hoanteet ganeoh ha renta oberiant ho feiz. -12- Evel-se e vo enoret ennoch ano Jezuz Krist, on Aotrou, ha c'hwi ennañ hervez gras on Doue hag an Aotrou Jezuz Krist.

PETRA A VO ARAOG DISTRO OR ZALVER

II -1- Goulenn a reom an dra-mañ diganeoh, breudeur, diwarbenn distro or Zalver hag on unaniez gantañ : -2- na dit ket da goll ho penn re vuan na da veza enkrezet ablamour d'eun diskuiadur a brofed, pe d'eur gomz, pe d'ueil lizer a vefe lakeet war or hont deom hag a rofe da gredi e vefe degouezet deiz an Aotrou. -3- Arabad eo da zen dont d'ho touella e doare ebed ; da genta eo red e vefe nahet ar feiz hag e teufe d'en em ziskouez an den peher mab ar gollidigez. -4- An hini en em zav a-eñeb kement tra a anver Doue, pe a vez adoret, beteg mond da azeza eñ, e-unan, e templ Doue ha da ziskle-ria ez eo Doue.

-5- Ha n'ho-peus ket a zoñj e lavaren deoh kement-se pa edon c'hoaz ganeoh ? -6- Ha bremañ c'hoaz, c'hwi a oar petra 'zalh warnañ evid ma ne vo diskouezet nemed d'e boent. -7- Rag mister ar fallagriez a zo dija gand e labour o hortoz ma vefe eet kuit an hini a harz outañ bremañ. -8- Neuze eh en em ziskouezo ar Fallagr ; gand Jezuz an Aotrou e vo distrujet, dre eur c'houezadenn euz e henou ha sked e zistro a gaso anezañ da netra. -9- Evid ar pez a zell ouz done-digez ar Fallagr a-vad merket gand oberiant Satan, en em ziskouez a raio dre oberou gallouduz a beb seurt, miraklou, fals-burzudou, -10- ha dre douel-lèrèz fallagr a beb seurt evid ar re a ya da goll, en-abeg ma n'o-deus ket digoret o halon d'ar wirionez, he dije o zaveteet. -11- Setu perag Doue a gas dezo eur

spered touelluz, -12- evid ma vo barnet ar re oll n'o-deus ket kredet er wirionez med o-deus kavet o flijadur en droug.

-13- Ni a-vad a dle renta dalhmad bennoz da Zoue evidoh, breudeur ken karet gand an Aotrou, rag Doue e-neus ho tibabet azaleg ar penn-kenta evid ho savetei dre ar Spered a ro santelez ha dre ar feiz er wirionez ; -14- evid kement-se e-neus ho tibabet dre an Aviel da ober deoh gounid gloar an Aotrou Jezuz Krist. -15- Evel-se eta breudeur, dalhit mad, mirit stard ar gelennadurez on-eus desket deoh dre gomz, pe dre lizer. -16- Ra zeuio an Aotrou Jezuz Krist e-unan ha Doue on Tad, e-neus or haret ha roet deom gras eur frealzidigez peurbaduz, -17- dre ar hrsas, da frealzi ho kalonou ha d'ho startaad e kement a lavarit hag a rit evid ar mad.

ALIOU DA BEDI HA DA LABOURAD

III -1- A-hent-all, breudeur, pedit evidom, m'en em strewo komz or Zalver, ha ma vo enoret evel du-ze -2- hag evid ma vezim diframmet diouz an dud fall ha fallagr, rag n'o-deus ket ar feiz. -3- Feal a-vad eo an Aotrou, ho startaad a ray hag ho tiwall diouz ar Fallagr. -4- Evidoh-hwi e kredom stard en Aotrou e rit hag e kendalhit da ober ar pez a gemennom deoh. -5- Plijet gand an aotrou ren ho kalonou e karantez Doue hag e pasianfet ar Hrist.

-6- Kemann a reom deoh en ano an Aotrou Jezuz Krist tehed pell diouz kement breur a vev eur vuez dilabour ha kontrol d'ar gelennadurez o-deus resevet diganeom. -7- C'hwi hoh-unan a oar penaoz ho-peus da gemer skouer diwar-nom, rag n'om ket chomet dilabour en ho touez, -8- n'on-eus goulenet digand den rei deom evid netra ar bara on-eus debret, med er boan, er skuizder noz-deiz, on-eus labouret evid mired da zamma hini ebed ahanoh. -9- N'eo ket a-vad n'or-boa ket a wir a gement-se, med felloud a ree deom beza on-unan eur skouer deoh da heulia. -10- Rag pa edom en ho touez e tisklieriem deoh : ma 'z eus unan bennag ha na fell ket dezaf labourad, arabad eo dezañ debri kennebeur. -11- Ha koulskoude e klevom lavared ez euz en ho-touez tud dilabour ha ne reont netra, prederiet ma 'z int gand traouachou, -12- o fed a reom hag o alia stard, en ano an Aotrou Jezuz Krist, da labourad e peoh evid debri eur bara gounezet ganto o-unan.

-13- Evidoh-hwi breudeur, na skuizit ket oh ober ar mad, -14- ha ma teu unan bennag da zisenti ouz an urz roet dezaf dre al lizer-mañ, na zarempredit ket anezaf. -15- Arabad eo koulskoude e vefe eun enebour evidoh, med reprenit anezaf evel eur breur. -16- Ra zeuio Aotrou ar peoh e-unan da rei deoh ar peoh e peb amzer hag e peb doare.

Ra vo an Aotrou ganeoh oll. -17- Ar zalud am-eus skrivet gand va dorn vanan ; me Paol, sina a ran evel-se va oll liziri, Setu aze va skritur.

-18- Ra vo gras an Aotrou Jezuz Krist ganeoh oll.

kent a lizer da dimote



TIMOTE I

Paol e-neus goulenet digand Timote, e genlabourer mad, chom e. Efez evid teurel evez war an Iliz. Evez a dle teurel war doare-beva an oll gristenien: mérhed, eskobed, diagoned, doktored hag, e kement ha ma 'z eo ministr ar Hrist, e tle divenn ha mired ar wir gelennadurez hag iveauz rei ar skouer euz eur vuez santel.

LIZER KENTA DA DIMOTE

I -1- Paol, abostol Jezuz Krist, hervez gourhemenn Doue or Zalver, ha Jezuz Krist, on esperâns, -2- da Dimote, va gwir vab er feiz, gras, trugarez, peoh a-berz Doue on Tad ha Jezuz Krist on Aotrou.

AR FALS DOKTORED A ENEB AR GARANTEZ

-3- Evel m'am-eus kemennet dit pa edon o vond d'ar Makedonia, chom e Efez evid kemenn da lod chom heb embann eur gelennadurez all -4- ha heb kredi koñchennou, na taolennou-lignez didermen, kement-se a gas en-dro ar breutadeg kentoh egred n'eo menoz Doue, a zeu da wir dre ar feiz. -5- Ar gourhemenn-se a zo greet evid degas ar garantez a zeu euz eur galon hlan, eur goustians vad hag eur feiz wirion. -6- O tehoud diwar ar roudenn-se, darn a zo kouezet e glabousérèz goullo. -7- C'hoant o-deus beza doktored war al Lezenn, petra bennag ne ouzont ket nag ar pez a lavaront, nag ar pez a lakont stard beza gwir.

PERZ GWIRION AL LEZENN

-8- Ni a oar eo mad al Lezenn, ma kemerer anezi da Lezenn, -9- rag kompre-nom mad an dra-mañ : al Lezenn, n'eo ket greet evid an den just, med evid an dud disuj ha disent, difeiz ha peher, disakr ha dizoue, lazerien-o-zad, lazerien-o-mamm, muntreren, -10- orgederien, saotrerien-paotred, trafikerien-sklaved, gaouiaied, falz-touerien, hag evid kement a zav a-eneb ar gemennadurez yah, -11- hervez Aviel a hloar an Doue eüruz a zo bet fiziet ennon. -12- Anaoudegez vad am-eus evid an Hini a roas din nerz Jezuz Krist an Aotrou, rag kavet e-neus ahanon din a fizian evid ar ministrièréz, -13- me hag a oa ken troet da vallozi, da wallgas, ha da zismegansi. Med truez a zo bet ouzin, rag ne ouien ket petra reen, o veza ma 'z oan difeiz. -14- Med puill dreist eo bet evidon gras on Aotrou hag iverz ar feiz hag ar garantez a zo e Jezuz Krist. -15- Din a fizian eo ar gomz-mañ, ha mad da veza degemet mad gand an oll : «Jezuz Krist a zo deuet er bed evid savetei ar beherien, ha me ar henta anezo». -16- Med ma 'z eus bet truez, eo evid ma tiskouezfe Jezuz Krist ennon-me da genta e oll basianted, da skouer evid ar re a dlee kredi ennañ er gwel euz ar vuez peurbaduz. -17- Da Roue ar hantvejou, d'an Doue divarvel ha na vez ket gwelet, ha n'eus nemetañ, enor ha gloar evid an oll gantvejou.

-18- Setu aze ar gemennadurez a fizian ennout Timote va mab, hervez ar bro-fediez displeget warnout gwechall, evid ma vezi kennerzet evel-se ha ma vo kaer da stourmad -19- gand feiz ha koustiañ vad ; dezi o-deus lod troet kein hag o feiz a zo bet kollet. -20- Himene hag Aleksandr a zo daou anezo. Da Zatan am-eus roet anezo, evid ma teskint chom heb blasfemi.

AR BEDENN A LIDEREZ

II -1- Gouenn a ran eta dreist peb tra ma vo greet goulennou, pedennou, aspedennou, trugarezou evid an oll dud, -2- evid ar rouaned, ar re oll a zo e karg, ma hellim ren e peoh eur vuez sioul, din ha devod. -3- Setu ar pez a zo kaer ha plijuz da Zoue or Zalver, -4- eñ hag a fell dezañ e vefe salvet an oll dud ha ma teufent da anaoud ar wirionez, -5- rag n'eus nemed eun Doue, hag hanterour iveau, unan hebken etre Doue hag an dud, eun den, Jezuz Krist, e-neus en em roet e-unan evid dasprena an oll. -6- Setu an testeni a zo bet diskleriet en e amzer ; hag evid e skigna on bet lakeet da embanner ha da abostol - ar wirionez a lavaran ha n'eo ket gevier a zo ganin - da zoktor ar poblou payan er feiz hag er wirionez. -8- Me a fell din eta e pedfe ar wazed e peb leh, en eur zevel warzu an neñv daouarn santel heb kounnar na rendael. -9- Evid ar merhed, ra vezint gwisket en eun doare derez, dezo en em ficha gand elevez ha furnez, n'eo ket gand bleo rodellet na braoigou aour ha perbez, na dillajou a briz -10- med gand oberou mad evel ma tere da verhed gouest-led d'an devosion. -11- E-pad ar brezegenn ar vaouez a dle chom sioul, doujuz.

-12- Ar vaouez, ne aotrean ket anezi da brezeg na da ober he mestrez war ar gwaz. Ra jomo sioul -13- rag Adam a oe krouet da genta. Eva goudeze. -14- Ha n'eo ket Adam a oe touellet, med ar vaouez eo a oe touellet hag a zisentas. -15- Koulskoude, salvet e vez o lakaad bugale er bed gand ma kendalho er feiz, er garantez hag er zantelez, gand reiz.

AN ESKOBED

III -1- Din a fiziañs eo ar gomz-mañ : an hini e-neus youl beza eskob a c'hoanta eur gaer a garg. -2- Red eo eta d'an eskob beza direbech, pried d'eur vaouez hebken. Arabad e vefe ever med habask, seven, mad da zegemer an estren ha da gelenn, nag ever gwin, na tabuter, dous med pas rendaeler na troet gand an arhant, -4- mad ha houarn brao e diegez e-unan, ha da ober d'e zugale beza doujuz ha glan. -5- Rag ma vefe unan bennag ha na ouesfe ket gouarn e diegez e-unan, penaoz e teufe a-benn da houarn eun Iliz da Zoue. -6- Arabad e vefe eun den nevez badezet gand aon na vefe dallet gand an ourgouill ha kondaonet evel an diaoul. -7- Red eo ouspenn e-nefe istim a-berz an diavêzidi, evid ma ne gouezo ket en dismogañs ha ma ne gouezo ket e rouejou an diaoul.

AN DIAGONED

-8- Er memez doare, an diagoned a dle beza tud poelleg, didroidell en o homzou, na troet da eva gwin, na de glask gounidou mezuz. -9- Ra zalhint mister ar feiz, en eur goustiañs hlan. -10- Int-i iveau o-deus da veza amprouet, goudeze, ma n'eus netra da rebech dezo e raint gand o harg a ziagon . -11- Ar gwragez iveau a dle beza glan ; arabad eo dezo beza troet da deodata, na da lonka, med fidel e peb doare. -12- Ra vo an diagoned pried d'eur vaouez hebken ; dezo, da zevel mad o bugale ha da houarn o zi o-unan. -13- Rag ar re a ra mad o ministrêrèz a ziagon a hounid eur renk enoruz ha kalz a asur

er feiz a zo e Jezuz Krist. -14- Kement-se a skrivan dit, oh esperoud mond da weled ahanout dizale. -15- Ha ma talefen e ouezi evel-se penaoz eo red ober e ti an Aotrou Doue a zo Iliz an Doue beo, peulvan ha skor ar wirionez. -16- A-dra-zur braz eo mister ar relijion. Diskouezet eo bet en eur horv-den ha justizet er Spered Santel, gwelet gand an élez, embannet e-touez ar poblou payan, kredet er bed, dibradet er hloar.

MADELEZ KEMENT A ZO BET KROUET GAND DOUE

IV -1- Ar Spered hel lavar sklér , en amzeriou diweza darn a droio kein d'ar feiz evit heulia sperejou touelluz ha kelennadureziou a-berz diaoulou, -2- diheñchet a vezint gand ar re a gont gevier dre guz, a zo merket gand eun houarn ruz en o houstonians, -3- a zivenn dimezi, ha debri seurjou boued a zo, daoust m'e-neus Doue krouet anezo evit beza kemeret gand anaoudegez vad gand an dud fidel hag a anavez mad ar wirionez, hag a gemer anezo gand trugarez. -4- Rag kement tra e-neus krouet, a zo mad, ha ne dle ket beza taolet kuit, ma kemerer anezo en eur drugarekaad. -5- Rag santelleet eo dre gomz Doue hag ar bedenn.

-6- O tisplega an oll draou-se d'ar vreudeur e vezi eun diagorn mad da Jezuz Krist, maget gand komzou ar feiz, hag ar gelennadurez gaer az-peus heuliet gand aked. -7- Ar marvailiou diffeiz, konchou gwrahed koz, teh diouto, embreg da galon d'an devosion, -8- rag an embregerez kory ne dalvez ket da galz a dra, e leh an devosion a dalvez da beb tra, peogwir he-deus ar bromesa euz ar vuez a vremañ koulz hag euz ar vuez da zond.

-9- Din a fiziañs eo ar Gom-se, ha mad da veza degemeret gand an oll. -10- Rag ma poaniom ha ma stourmon eo ablamour m'on-eus lakeet on espérañs en Doue beo, a zo salver an dud ha dreist oll an dud a feiz. -11- Setu ar pez a dleez gourhemenn ha kelenn.

-12- Arabad da nikun disprizoud da yaouankiz, bez a-vad eur skouer evit an dud fidel dre da gomz, da vuez reizet mad, da garantez, da feiz, da hlanded. -13- Da hortoz ma teuin, en em ro da lemn ar Skritur, da alia, da gelenn. -14- Na zilez ket ar hrs a zo ennout hag a oe bet roet dit dre vertuz ar brofediez ha dre ar gozidi o-deus astennet o daouarn warnout. -15- Setu aze ar pez a dleez kemer preder ganto, ar pez a dleez kenderhel ganto, evit ma vo evel-se, anad d'an oll ar wellaenn a zo ennout. -16- Bez war evez warnout daunan, ha war da gelennadurez. Dalh mad war gement-se. Oh ober evel-se, te da unan a vo saveteet ha ganit ar re da zelaou.

AR RUMMADOU TUD FIDEL

V -1- Arabad eo dit gourdrouz an den koz, med kennerz anezañ evel eun tad, hag ar yaouankizou evel breudeur, -2- ar merhed en oad evel mammou, ar plahed yaouank evel c'hoarez er wir hlanded.

AN INTANVEZED

-3- Gra enor d'an intañvezed, d'ar re a zo gwir intañvezed ; -4- m'he-deus eun

intañvez pe vugale pe vugale vian, dezo eo da genta enqri o famill o-unan ha paea d'o zro o dle d'o herent : setu aze, a-dra-zur, ar pez a bliij da Zoue. -5- Ar wir intañvez a-vad, an hini a zo chomet heh-unan-penn, he-deus lakeet he esperañs e Doue, ha kenderhel a ra noz-deiz gand he fedennou hag he aspedennou. -6- Er hontrol, an hini ne zoñj nemed er plijaduriou, a zo maro, eviti da veza beo. -7- Setu aze iveau ar pez a dleez gourhemenn, evid ma vezint direbech. -8- Ma 'z eus unan bennag ha ne gemer ket preder gand e dud, dreistoll gand tud e di, hennez e-neus nahet e feiz, gwasoh eo eged eun den difeiz.

-9- Eur vaouez ne vezo lakeet war roll an intañvezed nemed oajet e vefe ha dri-ugent vloaz d'an nebeuta, ha bet dezi eur pried hebken, -10- brudet evid heh oberou mad o veza m'he-deus savet he bugale, degemeret an estren, servichet mad ar zent, skoazellet an dud reuzeudig, en em roet d'an oll oberou mad. -11- An intañvezed yaouank a lezi a-gostez, rag pa zeu c'hoantegeziou d'o distrei diouz ar Hrist e fell dezo dimezi a-nevez, o tenna evel-se warno ar varnedigez pegwir o-deus nahet o feiz kenta. -13- Hag ouspenn o veza ma vezont dilabour e teskont ober tro an tiez, ha n'eo ket hebken dilabour, med iveau glabouser ha ranell ; komz a reont a-dreuz hag a-hed. -12- Me a fell din eta e teufe an intañvezed yaouank da zimezi, o defe bugale, e renfent o ziegez, ha ne rofent ket a dro d'an enebour da wallgomz anezo. -15- Rag bez ez-eus dija hinienou hag a zo dileñchet o vond da heul Satan. -16- Eur vaouez a feiz, m'he-deus kerent intañvezed, ra zeuio war o zikour ; arabad eo he-defe an Iliz ar zamm anezo, evid ma hello sikour ar re a zo gwir intañvezed.

AR GOZIDI

-17- Ar gozidi hag a ren mad o bodadegou a dle kaoud an hanter muioh a enor, dreist oll ar re a laka o foan da breezeg ha da gelenn. -18- Rag ar Skritur end-eun a lavar : «Ne vinelli ket an ejenn a bil ar greun» ha c'hoaz : «Al labourer a hounid e hopr». -19- Na zelaou tamall ebed a-eneb eur hoziad, nemed war desteni daou pe dri. -20- Ar re a beh, difazi anezo dirag an oll, evid m'o-dezo ar re all aon iveau. -21- Stard e pedan ahanout dirag Doue, ar Hrist Jezuz, koulz hag an élez mad : mir ar reolennou direbech, heb ober gwelloh da lod egéda da lod all. -22- Na astenn ket re vuan da zaouarn war zen ebed. Te da-unan mir da hlanded. Paouez da eva netra nemed dour, kemer eur banniig gwin ablamour d'az stomog, ha d'az fallaennou niveruz. -23- Bez ez eus tud hag a zo diskleriet o fehejou araog zoken ma vezont barnet, evid lod all ne vezont anavezet nemed diwezatoh. -24- Evel-se iveau, an oberou mad a vez diskleriet, zoken ar re disheñvel, ne hellont ket chom ku-zet.

SKLAVEREZ

VI -1- Ar re oll a zo dindan yeo ar sklavèrèz a dle soñjal eo o mistri din a beb resped, evid ma ne vo ket ano Doue mallozet nag e gelennadurez. -2- Ar re o-deus da vistri tud a feiz a dle diwall d'o disprizoud war zigarez ma 'z int breudeur, med gwelloh e tleont o zervicha, peogwir eo tud a feiz ha breudeur karet eo a brofit euz o labour.

AR GWIR ZEVOSION

Setu aze ar pez a dleez kelenn hag alia. -3- Ma teu unan bennag da rei eur gelennadurez all, ma ne vir ket komzou reiz on Aotrou Jezuz Krist hag ar gelennadurez hervez an devosion, -4- hennez a zo dallet gand an ourgouill, ne intent netra ; klasf eo gand enklaskou ha rendaelou diwar-benn geriou ; ahano e sav avi, breutadegou, malloziou, difiziañs droug-youleg -5- stourmajou etre tud trevariet o spered hag a ra diouer dezo ar wirionez ; soñjal a ra dezo e teu gounidegez diwar an devosion. -6- Ya, gounidegez vraz a zeu diwar an devosion, evid an hini a zo laouen gand ar pez e-neus. -7- Rag n'on-eus degaset netra ganeom o tond er bed, ha n'hellom kas netra ebed ganeom. -8- M'on-eus eta bevañs ha dillac e tremenim ganto. -9- Ar re a fell dezo sevel da binvidig a gouez e pech an tentadur, e kalz youlou diskiant ha noazuz, a stlap an dud er maro hag en argoll.

-10- Rag gwazienn an oll zrougou eo ar youl evid an arhant. Oh en em rei dezi, darn a zo dianket pell diouz ar feiz hag o-deus krignet o halon gand kalz a enkreziou. -11- Te a-vad, dêñ a Zoue, teh diouz an traou-ze. Klask ar justis, an devosion, ar feiz, ar garantez, ar perz da zelher mad, an douster. -12- Dall mad d'ar stourmad kaer evid ar feiz, gounid ar vuez peurbaduz : dezi out bet galvet, evel m'az-peus henn anzavet kaer o tiskleria da feiz dirag eun niver braz a destou. -13- Dirag Doue hag a ro buez da beb tra, ha dirag Jezuz Krist e-neus roet ken kaer testeni dirag Pons-Pilat setu amañ an ali stard a roan dit : -14- Mir ar gourhemenn o chom direbech ha didamall beteg diskuliadur on Aotrou Jezuz Krist -15- a vo diskouezet d'e amzer gand ar mestr-meur ben-niget, n'eus nemetañ, roue ar rouaned hag aotrou hag aotronez, -16- eñ hebken a zo diwarvel hag a jom en eur sklerijenn n'hell ket beza tizet, ha n'eo ket bet gwelet gand den ebed, ha n'hell beza gwelet gand den. Dezañ gloar ha galloud da viken. Amen.

KUZULIOU EVID AN DUD PINVIDIG

-17- An dud pinvidig a zo er bed-mañ, kemenn dezo en em vired diouz an ourgouill, ha lakaad o fiziañs n'eo ket en eur binvidigez a hell mond da goll, med kentoh e Doue, a ro deom a-fonn an oll vadou, evid tenna anezo on oll vadou.


-18- Ali anezo da ober ar mad, da binvidikaad en oberou kaer, da veza brokuz, mad da ranna gand ar re all. -19- Evel-se e tastumint evito o-unan eun tenñzor kaer, diazezet mad evid an amzer da zond, hag evid kaoud ar gwir vuez.

AR ZALUDOUI DIWEZA

-20- O Timote, mir ar gelennadurez fiziet ennout diwall diouz ar hoñchou difeiz ha goullo ha diouz enebadenou ar fals-ouziegez. -21- O veza diskleriet kement-se o-deus lod tehet diouz ar feiz.

Ar hras ra vezoganeoh.

eillizer da dimote



TIMOTE II

Paol a zo moarvad e prizon e Rom, en amzer Neron, dilezet gand an oll, da vare e varnedigez evel Jezuz e vestr; o hortoz ar maro ema; kredi a ra dezañ stard e-neus greet mad ar garg fiziet ennañ e-touez kalz a drubuillou. E gortoz ema eta kaoud digand e Vestr, ar gurunenn a hloar. Amañ ez eus evel eul lizer testamant euz e berz. Aspedi a ra e genlabourer ken karet da jom fidel d'ar Hrist, da brezeg an Aviel heb ehan, da stourm ouz ar fals-doktored ha da gas da benn e vinistrèrèz en desped d'an avel a-benn.

EIL LIZER DA DIMOTE

I -1- Paol, abostol Jezuz Krist, dre volontez Doue, hervez ar bromesa a vuez a zo e Jezuz Krist, -2- da Dimote va mab karet meurbed, gras, trugarez ha peoh, a-berz Doue an Tad hag a-berz Jezuz Krist on Aotrou.

-3- Leun on a anaoudegez vad e keñver Doue a zervichan, war-lerh va zud koz, divlam va houstiañs, pa ran dalhmad, noz-deiz, ano ahanout em fedennou : -4- pa zeu da zoñj din en da zaerou, e teu c'hoant braz din da weled ahanout, evid beza leun a joa. -5- Dond a ran da zoñjal er feiz gwirion a zo ennout, feiz hag a veze dalhmad da genta e Loiza, da vamm goz hag Eunik da vamm, hag a zo, me 'zo sur, ennout te ives. -6- Setu perag e tegasan dit da zoñj e rankez renevezi donezon Doue a zo ennout abaoe m'am-eus astennet va daouarn warnout. -7- Rag ar spered e-neus roet Doue deom n'eo ket eur spered a lentegez, med eur spered a nerz, a garantez, a furnez.

-8- Arabad eo dit eta kaoud mez euz testeni an Aotrou, na mez ahanon-me a zo er prizon evitañ, med kemer da lod a boan evid an Aviel, gand nerz an Aotrou. -9- Or zaveteet e-neus hag or galvet dre eur halvadenn zantel, n'eo ket ablamour d'on oberou deom-ni, med ablamour d'e venoz ha d'e hrsas roet deom a oll-viskoaz e Jezuz ar Hrist ; -10- ha bremañ eo bet diskleriet splann dre ziskouezidigez or Zalver Jezuz Krist e-neus, eñ, distrujet ar maro ha lakeet da skedi ar vuez peurbaduz dre an Aviel -11- ez on bet lakeet da embanner, da abostol ha da gelenner anezañ. -12- Setu aze perag e houzañvan ar poaniouze, med n'am-eus ket a vez ganto, rag me a oar piou am-eus lakeet va feiz ennañ, ha sur on eo gouest da vired an teñzor fiziet ennon beteg an Deiz-se. -13- Renk da vuez war ar gelennadurez yaç'h am-eus roet dit er feiz hag er garantez a zo e Jezuz Krist. -14- An teñzor kaer a zo bet fiziet ennom, mir anezañ gand sikour ar Spered Santel a zo o chom ennom.

-15- Goûd a ouzout o-deus oll dud an Azia va dilezet, en o zouez Frigel hag Ermojel. -16- Ra skuillo an Aotrou e druez war famill Onezifor, rag aliez e-neus va frealzet, ha n'o-deus ket va jadennou greet mez dezañ. -17- Er hontrol eo, a-veh degouezet e Rom eo bet aketuz d'am hlask, hag e-neus kavet ahanon. -18- Ra zeuio an Aotrou da gaoud truez outañ d'an Deiz-se. Ha kement servich e-neus rentet din e Efez, te o anavez gwelloh eged n'euş forz piou.

KEMER DA LOD ER BOAN

II -1- Te eta, va mab, kemer nerz er hrsas a zo er Hrist Jezuz. -2- Ar gelennadurez az-peus klevet ganin dirag kalz a destou, ro anezi da anaoud da dud sur, a vezó ives gouest da gelenn re all ; -3- Kemer da lod a boaniou, evel eur gwir zoudard da Jezuz-Krist : -4- Den ebed, o vond da zoudard, ne jom d'en em stroba gand traouachou ar bed, ma fell dezañ plijoud d'an hini e-neus enrollet anezañ.

-5- Evel-se ives, ne reseo ar gourener ar gurunenn, nemed ha stourmet e-nefe hervez ar reolennou. -6- D'ar houer a gemer poan e tle dond al lodenn genta a frouez. -7- Intent ar pez a layaran, an Aotrou a roio dit da intent an oll draouze.

-8- Dalh soñj euz Jezuz Krist adsavet a-douez ar re varo, ganet euz gouenn David hervez an Aviel a embannan. -9- Evitañ e houzañvan beteg beza chadennet evel eun torfedour. Komz Doue a-vad n'eo ket chadennet. -10- Setu perag e houzañvan peb tra evid ar re zibabet, evid m'o dezo int-i iyez ar zilvidigez a zo er Hrist Jezuz hag e hloar peurbaduz ; -11- din a fiziañs eo ar gomz-mañ : «Ma varvom a-unan gantañ, a-unan gantañ e vevim ; -12- ma houzañvom a-unan gantañ, a-unan gantañ e renim ; ma nahom anezan, eñ ives on naho. -13- Ma ne jomom ket fidel, eñ a jom fidel, rag ne hell ket en em zinah e-unan.

-14- An oll draou-se a ziskouez sklér dirag Doue eo red en em vired diouz rendaelou diwar-benn ger pe her, kement-se ne zervich da netra, nemed da goll ar re a zelaou anezo. -15- Laka da boan evid beza dirag Doue eun den amprouet, eur micherour ha n'e-neus ket da gaoud mez oh embann ar gomiz a wirionez. -16- Evid ar homzou goulou ha disakr, diwall outô . Ar re a zo troet ganto a zeuio muioh-mui da veza difeiz ; -17- o homz a zo heñvel ouz ar hrign-beo a en em astenñ. -18- Evel-se ema kont gand Himenea ha Filetos : pelleet o-deus diouz ar wirionez o lavared eo dija degouezet adsao ar re varo, hag evel-se e tiskaront o feiz da veur a hini. -19- Koulskoude, chom a ra divrall an diazez bet lakeet gand Doue, siellet eo gand ar gomz-mañ : «An Aotrou a anavez e dud», ha c'hoaz : «Ra deho diouz ar fallentez en neb a bed ano an Aotrou.»

-20- En eun ti braz ne vez ket hebken listri aour hag arhant, bez 'e vez ives re goad ha re bri. Lod a zo evid eur zervich enoruz, lod all evid eur zervich disterroh. -21- An den a laka dilastez e goustians euz ar saotrajou-ze a zo eul lestr nobl, santelleet, talvouduz evid ar mestr, mad evid kement labour a zo -22- tro kein da youlou fall ar yaouankiz, klask ar justis, ar feiz, ar garantez, ar peoh gand ar re a bed an Aotrou a galon vad -23- na jom ket da ranel-lad diwar-benn traou didalvez ha diboell, te a oar e tegasont rendaelou. -24- Servicher Doue ne dle ket rendaela, med beza laouen ouz an oll, goust da gelenn ha da houzañv enebiez ; -25- gand dousder e tle kentelia an enebourien ; Doue, piou a oar, a raio dezo marteze cheñch buez evid anaoud ar wirionez, -26- ha dont en o rezon vad, oh en em denna euz pejou an diaoul a zalhe anezo ereet ha sujet dezan.

TUD DIFEIZ AN AMZERIOU DIWEZA

III -1- Red eo dit gouzoud mad kement-mañ : en deiziou diweza e tegouezo mareou kriz. -2- An dud a vo troet ganto o-unan, skraperien arhant e vezint, lorhuz, ourgouilluz, touerien Doue, disent ouz o zud, dihrad, disakr, -3- digalon, dihabask, droug-prezeger, direiz kriz, enebour d'ar mad, -4- divergont, trubard, dallet gand an ourgouill, gwelloh ganto plijaduriou eged Doue. -5- Da weled e chomint tud a relijon, med heb kaoud fiziañs ebed ken en he galloud. Tro da gein d'an dud-se ives, -6- rag ar seurt tud-se eo ar re a ya en tiez da gemered en o rouejou merhedigou sammet a behejou, poulzet gand youlou a beb seurt, -7- dalhmad o teski, med heb gelloud morse dont da anaoud ar wirionez. -8- Hag evel ma 'h enebas Jannez ha Jambrez ouz Moizez, evel-se ives an dud-se a eneb ouz ar wirionez, fallagr int a spered ha bresk a feiz.

-9- Med ne 'z aint ket pelloh, rag sklêr eo o fallentez d'an oll, evel ma oe hini an daou-se.

-10- Te a-vad, gand hast out deuet d'am heul er gelennadurez, en doare beva, er mennadou, er feiz, er basianted, er garantez, en nerz kalon, -11- en heskina-duriou hag er poaniou am-eus bet da houzañv e Antiochia, e Ikonion, e Listr.

-12- Ya, kement hini a fell dezañ ren eur vuez devod e Jezuz Krist, a vezogwallgaset. -13- An dud fallagras int-i, an douellerien a yelo war fallaad, o tou-ella ar re all hag o veza touellet o-unan. -14- Te a-vad, dalmad d'ar pez a zo bet desket dit ha degemeret ganit : gouzoud a rez gand piou out bet keleñnet.

-15- Abaoe da vugaleaj eh anavezez ar Skrituriou sakr, ar re a hell rei dit ar furnez a gas d'ar zilvidigez dre ar feiz e Jezuz Krist. -16- Ar Skritur Sakr a-bez a zo awenet gand Doue, talvouduz eo evid keleñn, evid divenn ar wirionez, diarbenn diouz an droug ha deski beva hervez ar justis. -17- Evel-se servicher Doue a zeu da veza pourvezet mad ; dezañ kement a zo red evid peb oberenn vad.

EMBANN AR GOMZ


IV -1- Dirag Doue hag ar Hrist Jezuz, eñ hag a zeuio dizale da varn ar re veo hag ar re varo, e roan testeni euz e zonedigez hag e rouantelez. -2- Embann ar gomz, pouez warni, pe e ve ar mare pe ne ve ket, divenn ar wirionez, gourdrouz, poagn da alia gand kalz a basianted hag hervez ar gelennadurez. -3- Rag eur poent a zeuio ha ne houzañvo mui an dud ar gelennadurez gwirion, med hervez o youlou hag hervez ar pez a blij dezo kleved e klaskint keleñnerien dezo o-unan. -4- Stouva 'raint o diskouarn ouz ar wirionez evid trei war-zu sorhennou. -5- Te a-vad bez evezieg war beb tra, kemer poan, gra da labour a avieler, kas da benn da zervich, -6- rag me a zo dija kinniget e sakrifis hag erruet eo mare va zremenvan, -7- stourmet am-eus ar stourmad kaer, echuet va redadenn ha miret ar feiz. -8- A wel ema din dija kurunenn ar justis a roio din en deiz-se an Aotrou Krist, ar barner just, ha n'eo ket din-me hebken, med da gement hini e-no c'hoanteet e ziskouezadenn.

-9- Hast a-fo dond davedon. -10- Rag dilezet e-neus Demas ahanon dre garantez evid ar bed-mañ. Eet eo eñ da Desalonika, Kresens d'ar Galatia, Tit d'an Dalmatia. -11- N'eus ganin nemed Lukaz, Kemer Mark ha degas anezañ ganit rag priziuz eo din evid ar zervich. -12- Tichik am-eus kaset da Efèze. -13- Ar vantell am-boa lezet e Troas, e ti karpos, degas anezi din en eur zond hag iveauz al leoriou, ar parchou dreist-oll. -14- Aleksandr, an teuzer arem, e-neus greet kalz a zroug din : ra vo roet dezañ, gand an Aotrou, hervez e Oberou. -15- Te iveauz, taol evez outañ, gwäll enebet e-neus ouz or homzou. -16- En dro genta m'am-boa bet d'en em zivenn, n'oa deuet den d'am zikour, dilezet on bet gand an oll. Gand ma ne vo ket rebechet dezo kement-se ! -17- An Aotrou a-vad e-neus va zikouret ha va hennerzet, evid ma hellin prezeg an Aviel beteg penn, evid ma vo klevet gand an oll bayaned ; hag on bet tennet euz geol al leon. -18- An Aotrou a denno ahanon euz kement embregèrèz fallagras hag am zaveteio evid e routantelez neñvel. Dezañ ar hloar da virviken ! Amen.

SALUDOU DIWEZA

- 19- Salud Priska hag Akuilas hag iveau tiegez Onezifor. -20- Eراست a zo chomet e Korint. Lezet am-eus Trofim klañv e Milet. -21- Poagn da zond araog ar goañv. Eubul ha Prudens, Lin ha Klaodia, hag an oll vreudeur a zalud ahanout. -22- Ra vo an Aotrou gand da spered, ra vo ar hras ganeoh oll.
-

lizer da dit

**TIT**

Paol a garg Timote da renka peb tra e Iliz Efez ha Tit da ober kement all en Iliz savet e enez Kreta. Lavared a ra dezañ teurel iveau mad pa vez o ti-baba presbiterien, beza kaloneg o stourm ouz ar fals-doktored. Degas a ra da zoñj e berr-gomzou er menoziou penna a dle ren ar gristenien en o buez.

LIZER DA DIT

SALUDOU

I -1- Paol servicher Doue, abostol Jezuz Krist, evid degas an dud dibabet gand Doue d'ar feiz ha da anaoudegez ar wirionez, a zo hervez an devotion evid Doue, -2- en esperafs da reseo ar vuez peurbaduz, prometet araog an oll gantvejou gand Doue, na lavar ket a hevier, -3- hag e-neus, d'an amzeriou merket, diskleriet e Gomz en eur gemennadurez bet fiziet ennon , hervez bolontez Doue or Zalver, da Dit, gwir vab er feiz on-eus on daou ,gras ha peoh a-berz Doue an Tad ha Jezuz or Zalver.

URZIADUR AN ILIZ E ENEZ KRETA

-5- M'am-eus da lezet e enez Kreta, eo evid peur-reizia kement a jom da urzia, ha lakaad kozidi e peb leh evel m'am-eus gourhemennet dit. -6- Red eo, da beb hini anezo beza direbech, beza dimezet nemed eur wech hebken, kaoud bugale fidel, ha n'heller ket rebech dezo kaoud eur vuez diroll pe disent. -7- An episkob a dle beza direbech o veza m'eo merour da Zoue, ne dle ket beza dicheg na feulz, nag ever, nag emganner, na troet da glask gounidou mezuz. -8- Red eo dezañ beza mad da zegemered an dud, beza troet ouz ar mad, evezieg, just, santel, mestr warnañ e-unan, -9- stag mad ouz ar Gomz,din da veza kredet, hag a zo hervez ar gelenadurez. Evel-se e vo gouest da guzulia en eun doare reiz ha da ziarbenn ar re a vefe a-eneb.

AR FALS DOKTORED

-10- Niveruz int, dreist-oll e kostezenn an dud amdrohet, ar re a zo disent glabouser ha toueller ; -11- red eo stanka dezo o genou ; freuz a lakont e famillou a-bez, o kelenn ar pez ne dleer ket evid eur gounid mezuz. -12- Unan anezo, o frofed dezo o-unan, e-neus lavaret : «Kretiz, n'eus nemed gevier anezo,loened droug, kovou teo ha dieguz».

-13- Gwir eo an testeni-se ; setù perag eo dit repren anezo rust ma vezò dibis-tig o feiz. -14- Arabad eo dezo heulia mojennou ar Juzevien, na reolennou tud hag a dro kein d'ar wirionez -15- Glan eo peb tra evid an dud glan. Ar re a zo saotret a-vad ha difeiz, n'eus netra hlan evito, er hontrol eo, o spered hag o houstiañs a zo saotret. -16- Diskleria a reont eh anavezont Doue, med dre o oberou e tianavezont anezañ, -17- tud euzuz ha disuj ma 'z int ha dihaloud evid kement oberenn vad.

AN DUD EN OAD

II -1- Te a-vad, komz hervez ar gelennadurez reiz. -2- An dud en oad, dezo beza fur et keñver an eva, tud a zoare, evezieg, stard er feiz, er garantez, er basiañited. -3- Ar merhed en oad, int-i, iveau dezo beva en eun doare hag a zere ouz tud santel : na troet da zroug-prezeg na da eva re, med dezo kelenn ar mad, -4- o teski evel-se d'ar gwragez yaouank kared o fried hag o bugale, -5- beza modest, glan, prederiet gand o ziegez, madelezuz, doujuz d'o fried, evid ma ne vo ket mallozet komz Doue.

AR YAOUANKIZOU

-6- Ar yaouankizou, ro ali dezo da veza fur e peb doare. Te, da-unan, ra vo da vuez eur skouer a oberou mad, digemmesk da gelennadurez, reiz ha didamall da gomzou, evid m'e-no mez, pa ne gavo an enebour netra da lavared diwar or penn.

AR SKLAVED

Ar sklaved, dezo beza sentuz ouz o mistri e peb tra, plijoud dezo o chom heb o dislavared, -10- hag heb laerez netra diwarno dre guz. Ra vezint bepred feal meurbed, evid ma raint enor e peb tra da lezenn Doue Or Zalver.

EUR BOBL HAG A ZO DEZAN

-11- En em ziskouezet eo gras Doue er sklerijenn, evid silvidigez an oll dud. -12- Deski a ra deom trei kein d'ar vuez difeiz ha da c'hoantegeliou ar bed, evid beva, en amzer a-vremañ hervez ar furnez, ar justis hag an doujañs a Zoue, -13- o hortoz an eürusted a esperom ha donedigez leun a hloar on Doue braz ha Salver, Jezuz Krist. -14- E-unan e-neus en em roet evidom d'on dasprena a beb fallentez ha da hlannaad eur bobl dibabet da veza dezañ, eur bobl douget d'an oberou mad. -15- Evel-se eo dit komz, repren, gand oll-halloud. Arabad e vefe da zen disprijoud ahanout.

DEVERIOU AN DUD FIDEL

III -1- Degas da Zouj d'an oll e tleont suja da bennou-kêr, d'ar pennadureziou ; e tleont senti, beza prest evid peb oberenn vad. -2- Na lavar komz dismegansuz ebed da zen. Diwall ouz ar rendaelou, bez hegarañd ha diskouez heb ehan douster e-keñver an oll. -3- Rag ni iveau a oa gwechall diskiant, disuj, diankad, sklav da beb seurt youlou ha plijaduriou, o veva er fallagriez, en avi, o tenna warnom kasoni, o vaga kasoni an eil ouz egile. -4- Hogen p'eo en em ziskouezet madelez Doue or Zalver, hag e garantez evid an dud, -5- e-neus or zaveteet n'eo ket en abeg da oberou mad on-nefe

greet-ni, med hervez an drugarez, o walhi ahanom, evid genel a-nevez ha beza renevezet dre ar Spered Santel. -6- Ar Spered-se eo e-neus skuillet puill warnom dre Jezuz Krist Or Zalver, -7- evid ma teuim da veza, eur wech santelleet dre e hras, heritourien, hervez an Esperañs, d'ar vuez peurbaduz. -8- Din a fizianz eo ar gomz-se, ha me a fell din e vefe fréz da desteni war ar poent-se, evid ma poanio ar re oll o-deus lakeet o feiz e Doue da veza gand ar re genta war dachenn an oberou mad. Setu aze hag a zo kaer ha talvouduz evid an dud. -9- Med an enklaskou diboell, an taolennou lignez, an tabutou, an daeladuriou diwar-benn al Lezen, diwall outo rag ma 'z int didalvez ha goullo.

-10- An hini a ra an dibab e-touez ar gwirioneziou, kas anezañ diwar da dro goude beza e genteliet eur wech pe ziou. -11- Goûd a rez, eur seurt den a zo war an hent fall, eur peher eo, oh en em gondaoni e-unan. -12- P'am-bo kaset dit Artemas pe Tichik, klask an tu da zond davedon, da Nikopolis, rag greet am-eus va zoñj da dremen ar goañv eno. -13- Evesa mad ouz beaj Zenas, an den a lezenn, hag Apollos, ma ne ray netra diouer dezo. -14- On tud-ni iveauz a dle deski beza gand ar re wella gand an oberou mad, evid sikour ar re o defe kalz ezomm ! Evel-se ne vezint ket difrouez. -15- Da zaludi a ra ar re oll a zo ganin. Salud iveauz ar re a gar ahanom er feiz. Ra vo ar hras ganeoh oll.



lizer da da filemon



FILEMON

Ar sklav Onesim a zo tehet kuit euz ti e vestr Filemon. Dégemeret eo bet gand Paol. Hemañ eneus degaset anezañ d'ar feiz evel m'e-noa greet dija evid Filemon e-unan. Ha setu ma skriv al lizer-mañ, evid goulenn digand Filemon kaoud ar vadelez da zegemer Onesim, n'eo ket avad evel sklav, med evel eur breur hag e lavar dezañ, diwar hanter-her, rei e frankiz da Onesim.


LIZER DA FILEMON

-1- Paol, prizoniad Jezuz Krist, hag ar breur Timote, da Filemon, or henlabouer karet, -2- da Apia or c'hoar, da Arkip or henstourmer, ha d'an Iliz en em vod en da di, -3- deoh gras ha peoh a-berz Doue on Tad hag a-berz Jezuz Krist an Aotrou.

-4- Trugarekaad a ran va Doue oh ober dalhmad ano ahanout em fedennou, -5- rag kleved a ran ano euz da garantez hag euz da feiz e-keñver an Aotrou Jezuz, hag e-keñver an oll zent. -6- Evel-se e vo frouezuz ar perz a gemerez er feiz, o tiskouez kement a hellom ober evid an Aotrou Krist. -7- Rag, kalz levez ha frealzidigez am-eus bet ablamour d'az karantez, rag frealzet eo bet kallon ar zent drezout-te , breur. -8- Setu perag, goude kaoud er Hrist hardisegez da hourhemen dit da zever, -9- eo kentoh dre garantez e ran eur goulenn ouzit: ya, me Paol, hag a zo koz, ha bremañ iveau prizoniad Jezuz Krist, -10- a asped ahanout, evid va mab Onezim, an hini am-eus ganet er prizon. -11- Didalvez eo bet evidout gwechall ha talvoudeg bremañ evidout-te hag evidon-me, -12- kas a ran anezañ dit endro, eñ hag a zo evel va halon va-unan. -13- A galon vad am-bije dalhet anezañ ganin evid va zervicha en da blas, er prizon m'e-maon ablamour d'an Aviel.

-14- Med, n'eo ket fellet din ober netra heb da asant evid n'e-nefe ket ar madober-se tres eun dra greet ganit dre red, med unan greet a galon vad. -15- Onezim marteze n'eo ket eet kuit diouzit evid eun nebeud amzer, nemed evid beza rentet dit da viken, -16- n'eo ket evel eur sklav, med evel kalz gwelloh egred eur sklav, evel eur breur karet meurbed. -17- Ken karet ganin ha na pegement muioh ganit, e-giz den, hag e-giz kristen. Setu eta, evel ma 'z on breur dit er feiz, gra dezañ an degemer az-pije greet din va-unan. -18- Ha m'e-nije greet gaou ouzit e doare pe zoare, mar deo dleour dit euz tra-pe-dra, laka an dra-ze din war va hont. -19- Me, Paol a skriv kement-mañ gand va dorn va-unan, me a baeo. Ha ne zegasan ket dit da zoñj out da-unan dleour em heñver, ha te eo an dle-ze. -20- Ya, breur, gortoz a ran kement-se diouzit, ro d'am halon he frealzidigez en Aotrou Krist. -21- Gand fizianz en da zentedigez, am-eus skrivet. Goûd a ouzon e ri muioh c'hoaz egred na lavaraz, -22- War eun dro, pourchas din lojeiz, rag fizianz am-eus, gand sikour ho pedennou, da veza rentet deoh. -23- Epafras, prizoniad ganin e jesus Krist, ho salud; -24- hag ive Mark, Aristark, Demaz ha Lukaz va henlabourerien. Gras an Aotrou ra vo ganeoh!

LIZER D'AN HEBREED



HEBREED

Stumm skriva al lizer-mañ n'eo ket diouz doare hini Sant Paol. Lod a lavar eo diwar bluenn Apolloz, deñ desket ha gouizieg war ar Skritur-Zakr. Skrivet eo bet evid ar veleien Juzeo deuet d'ar feiz Kristen, med deuet an heskinèrz warno, int deuet da gredi dezo o-deus greet fall ha da gaoud keuz da lidou kaer ar Juzevien. Oberour al lizer-mañ a zeu da startaad o feiz, o tisplega sklêr hag hir ar gelennadurez.

Jezuz a zo eun hanterour uhelloh eged an êlez ha Moizez.

Beleg braz eo da viken. E garg a veleg a ra e sàntual an nefñv dirag Doue. Kinnig a ra d'e Dad ar sakrifis euz e wad e-unan, ar gwad-se hag e-neus siellet da vad an emgleo etre Doue hag an dud hag e-neus dilamet pehejou ar bed.

Setu eta m'eo red chom stard er feiz e-kreiz an heskinèrz zoken, evel m'o-deus greet tud brudet e-touez on tadou, ha Jezuz e-unan.

AL LIZER D'AN HEBREED

DOUE E NEUS KOMZET DEOM DRE E VAB

I -1- Meur a wech, hag e meur a hiz, e-noa Doue, gwechall, komzet d'on tadow dre ar brofeded. -2- En amzer ziweza, e-neus komzet deom dre e Vab. Lakeet e-neus hemañ da heritour euz a beb tra, ha drezañ iveau e-neus krouet ar bed. -3- Ar mab-se, sked euz e hloar, louh euz e natur, a zoug peb tra grouet dre nerz e gomz. Goude beza glanneet ar pehejou, eo azezet en neñv a-zehou d'an Doue uhel-meurbed ; -4- seul uhelloh eo savet dreist an élez, m'e-neus bet digand e Dad eun ano disheñvel diouz o hini.

MAB DOUE UHELLOH EGED AN ELEZ

-5- Rag, pehini euz an élez, e-neus Doue lavaret dezañ biskoaz : «Te a zo mab din, hirio ez out ganet ganin», «Me a vo eun tad evitan hag en a vo eur mab evidon». -6- Ha pa zegas adarre e vab unganet er bed e lavar : «Ra stouo d'e adori oll élez Doue». -7- Hag evid an élez e lavar evel-henn : «Ober a ra sperejou euz e élez ha flammou-tan euz e gannaded». -8- Med evid ar mab e lavar : «Da dron, o Doue, a zo evid atao. Eur walenn a justis eo da walenn a roue. -9- Karet az-peus ar justis ha kaseet an droug, setu perag, Doue, da Zoue, a olevo ahanout-te, kentoh egod da gompagnuned, gand eun eoul a levez», -10- hag ouzpenn : «Te eo az-peus, er pennkenta, fontet an douar, hag an neñvou a zo bet greet gand da zaouarn. -11- Da netra ez ay an oll draou-ze, te avad a gendalho ; oll e teuint da goza evel eur vantell, -12- hag evel eur pez-dillad, e rolli anezo, cheñchet e vezint evel ma vez cheñchet an dillad, te avad a jom henvel atao ha da vloaveziou ne vo fin ebed dezo». -13- Pehini euz an élez, e-neus Doue biskoaz lavaret dezañ : «Azez a-zehou din beteg ma rin euz da enebourien eur skaof dindan da dreid. -14- Daoust ha n'int ket oll sperejou, da beb hini e vinistrerrez, kaset ma 'z int da zervicha ar re a zo o vond da gaoud ar zilvidigez da hérez.

TALVOUDEGEZ AR ZILVIDIGEZ

II -1- Setu perag eo red deom teurel muioh a evez ouz ar gelennadurez on-eus klevet, gand aon na 'z afem gand red an dour. -2- Rag m'he-deus ar gomz embannet dre an élez, kemeret pouez, ha m'e-neus peb fazi ha peb disentidigez resevet eur gopr deread, -3- penaaoz e tehim-ni on-unan, ma tilezom eun heveleb silvidigez, e-noa an Aotrou staget da genta da embann, ha goudeze bet diskleriet deom gand nerz, gand ar re o-doa he hlevet, ha starteet c'hoaz gand testeni Doue -4- dre zinou, burzudou ha miraklou a beb seurt ha gand donezonou ar Spered Santel ingalet gantañ hervez e volontez.

BREUR D'AN DUD

-5- Rag n'eo ket da élez eo e-neus Doue sujet ar bed da zond a gomzom anezañ,
 -6- test eo a gement-se an hini e-neus lavaret kement-mañ : Petra eo an den ma talhez soñj anezañ, pe mab an den ma taolez da zellou warnañ ? -7- Lakeet az-peus anezañ eun tammig izelloc eged an élez hag e gurunet a hloar hag a enor.
 -8- Dindan e dreid az-peus lakeet peb tra. O suja dezañ peb tra, n'e-neus lezet netra ha na ve ket sujet dezañ. Gwir eo avad ne welom ket c'hoaz e vefe bet sujet an oll draou dezañ. -9- Med gweled a reom, an hini a zo bet izelleet eun nebeudig e-keñver an élez, Jezuz, en abeg d'ar maro e-neus gouzañvet, a zo bet kurunet a hloar hag a enor, evel-se dre hrsas Doue eo e-neus tanveet ar maro evid kement den. -10- Rag an hini a zo bet greet peb tra gantañ ha peb tra evitañ, karget ma 'z oa da heñcha d'ar hloar eun niver braz a vibien, a oa deread dezañ peurreiza, dre e boaniou, an hini a ren anezo d'ar zilvidigez. -11- Rag an hini a ro santelez hag ar re zo santeleet, o-deus oll ar memez tad ; setu perag ne zeu ket da ruzia o lavared dezo : breudeur, na pa lavar : -12- Embann a rin da ano d'am breudeur, e-kreiz an Iliz, me da veulo, ha c'hoaz : «Setu me amañ hag ar vugale roet din gand Doue». -14- Peogwir eta eo kig ha gwad natur ar vugale, Jezuz ives en heveleb doare a gemeras an natur-se evid diskar dre e varo an hini a oa mestr war ar maro, da lavared eo an diaoul, -15- ha terri liammou ar re a oa, dre aon rag ar maro, dalhet er sklavelez hed o buhez. -16- Rag n'eo ket euz élez eo bet karget, med euz gouenn Abraham eo e-neus karg. -17- Ablamour da-ze e ranke beza par d'e vreudeur e peb tra, evid beza beleg-meur trugarezuz ha feal e keñver Doue evid lemel pehejou ar bobl. -18- Rag ablamour m'e-neus gouzañvet ha m'eo bet e-unan gwasket, eo e hell dont war zikour an dud gwasket.

JEZUZ HA MOIZEZ

III -1- Rag-se eta, breudeur santel, c'hwi hag a zo kenlodeg en eur halvadenn deuet euz an neñv, sellit mad ouz an abostol hag ar beleg-meur euz ar feiz a embannom : Jezuz. -2- Feal eo e keñver an hini e-neus e lakeet e karg evel ma oe Moizez en e diegez a-bez. -3- Evid gwir, kavet eo bet hemañ din euz brasoh gloar eged hini Moizez, kement ha m'eo dleet brasoh enor d'an hini a zav an ti eged d'an ti e-unan. -4- Kement ti, gwir eo, e-neus e vañsoner, ha mañsoner peb tra eo Doue. -5- Moizez a zo bet feal en e diegez a-bez, e-giz servicher, evid beza test euz ar pez edod o vond da lavared, med ar Hrist eo e-giz Mab ha war e diegez, -6- ni eo e diegez dezañ, gand ma chomim hardiz ha leun a lorh en on esperañs.

ANTREAL DRE AR FEIZ E DISKUIZ DOUE

-7- Setu perag, evel a lavar ar Spered Santel : «Hirio ma klevit e vouez, na galedit ket ho kalon, evel da vare an dabutêrèz, da zeiz an amprouenn er goueleh, -9- pa deuas ho tadou da amproui ahanon ha d'am hlask, daoust m'o-doa gwelet va oberou epad daou ugent vloaz. -10- Setu perag on bet kounaret a-eneb ar rummad tud-se, hag am-eus lavaret : «Dalhmad e fazi ho halon,

n'o-deus ket anavezet va heñchou. -11- Evel-se, droug ennon am-eus touet : nann, ne antreint ket em diskui». -12- Taolit evez, va breudeur, na ve hini pe hini ahanoh troet fall e galon, ha diskredig awalh evid he distaga diouz an Doue leun a vuhez. -13- Roit bermdez frealzidigez an eil d'egile, e-pad ma vo ano euz «Hirio», ma ne zeuio hini ebed ahanoh da galedi dre douellerez ar pehed, -14- deuet om da veza kenlodeg er Hrist, gand ma talhim stard beteg penn d'ar feiz or-boa er penn-kenta, -15- d'ar mare ma veze lavaret : «hirio, ma klevit e vouez, na galedit ket ho kalonou, evel da vare an dabutérèz».

-16- Rag, piou eo ar re a glevas hag a lakeas tabut ? Daoust ha n'eo ket ar re oll a oa deuet er mêz euz an Ejipt dre zorn Moizez ? -17- A-eneb piou ez eas e kounnar e-pad an daou ugent vloaz ? Daoust ha n'eo ket a-eneb ar re o-doa pehet hag a lezas o relegou er goueleh ? -18- Ha da biou e touas ne antrenfent ket en e ziskuiz ? Nemed d'ar re a oa bet disent ! -19- Ha sklér eo deom n'o-deus ket gellet antreal ablamour d'o diskred.

IV -1- Da gaoud aon on-eus na zeufe hini pe hini ahanoh da zoñjal beza degouezet re ziwezad ha koulskoude e kendalh evitañ ar bromesa da antreal en e ziskuiz, -2- rag ni iveauz on-eus bet ar helou mad eveldo, med dezo ne dalvezas da netra ar gomz o-doa klevet, rag n'oant ket chomet unanet dre ar feiz gand ar re o-doa selaouet. -3- Ni avad, tud a feiz, a antre en diskui evel m'e-neus lavaret : «Em houunnar am-eus touet : n'antreint ket em diskui !» Gwir eo, e oa echu e oberou kerkent ha krouidigez ar bed. -4- Rag euz ar seizved devez ez eus bet lavaret : «Ha Doue a ziskuizas d'ar seizved devez euz e oll la-bouriou» -5- hag adarre, er skrid-mañ : «Ne antreint ket em diskui».

-6- Peogwir eta eo galvet lod da antreal ennañ, ha peogwir ne antreas ket ar re a oa bet da genta o kaoud ar helou mad, ablamour d'o diskred, -7- a-nevez Doue a verk eun devez «Hirio» o lavared dre Zavid, med kalz diwezatoh «hirio, ma klevit e vouez na galedit ket ho kalonou», -8- rag m'e-nije bet Jozue lakeet e dud da vond en diskui-se, n'e-nefe ket Doue komzet diwezatoh euz eun devez all. -9- Diskui ar seizved devez, eta, a zo miret da bobl Doue, -10- rag an hini a antre en e ziskuiz, hennez iveauz a ziskuiz euz e labouriou, evel ma reas Doue euz e re e-unan. -11- Klaskom eta mond en diskui-se, ma ne zeuio den da gouenza, o kemered skouer diwar an diskred-se. -12- Rag beo, nerzuz eo komz Doue, ha lemmoh eged n'eus forz peseurt kleze a zaou droh, mond a ra don, beteg dispartia an ene hag ar spered, ar mellou hag ar meleskern , barn a ra menoziou ha soñjou ar galon. -13- N'eus netra grouet hag a vefe kuzet evitañ ; noaz ha dizolo eo peb tra ouz daoulagad an hini on-eus da gomz diwar e benn.

BEZA D'AR HRIST BELEG MEUR

-14- Eur beleg-meur dispar on-eus : Jezuz mab Doue, treuzet gantañ an neñvou, dalhom eta stard d'ar feiz, -15- rag n'on-eus ket eur beleg-meur dihalloud da druezi ouz or zempladureziou, rag amprouet eo bet eveldom-ni e kement tra, nemed ar pehed. -16- Gand hardisegez, kerzom eta war-zu tron ar hrs, ma kavim trugarez ha gras evid or skoazella, bewech ma vo ezomm.

AR HRIST BELEG MEUR TRUEZUZ

V -1- Kement beleg-meur, dibabet a-douez an dud, a vez lakeet e karg evid mad an dud en o darempredou gand Doue hag evid kinnig provou ha sakrifisou evid ar pehejou. -2- Truezi a hell ouz an dud dizesk hag an dud dianket, peogwir e kav sempladurez en-dro dezañ e-unan, -3- hag ablavour da-ze e rank kinnig sakrifisou evid ar pehejou, koulz evitañ e-unan hag evid ar bobl. -4- Ne gemer den an enor-se drezañ e-unan ; galvet e vezet gand Doue evel ma oe Aaron. -5- Evel-se iveau, evid dont da veza beleg-meur, n'e-neus ket an Aotrou Krist kemeret an enor-se anezañ e-unan, roet eo bet dezañ gand an hini a lavaras dezañ : «Va mab out, diwarnon out ganet hirio», -6- hag e lavar c'hoaz en eul leh all : «Beleg out da viken hervez urz Melkisedeg». -7- Eñ a ginnigas e-pad e vuhez war an douar, pedennou hag aspedennou gand eur youhadenn greñv ha daerou, d'an Hini a helle e zavetei euz ar maro. Se laouet eo bet en abeg d'e zoujanis a Zoue. -8- Goude dezañ beza mab, e teskas diwar e boaniou petra oa senti. -9- Ha, deuet da veza parfed, eo iveau penn-kaoz euz ar zilvidigez peurbaduz evid ar re oll a zent outañ, -10- peogwir eo bet embannet gand Doue beleg-meur hervez urz Melkisedeg.

-11- War ar poent-se, on-eus kalz traou da lavared, ha kalz traou djéz da zisplega, rag pounner-gleo oh deuet da veza. -12- Abaoe keid-all ma tlefah beza deuet da veza kelennerien, ha padal eo red adarre e vefe desket deoh ar henteliou kenta euz komzou Doue ; deuet oh da gaoud ezomm a léz ha n'eo ket a voued kreñv, -13- rag an hini a zo c'hoaz gand léz ne dañv ket kelenndurez ar justis, rag eur bugelig eo. -14- An dud deuet, er hontrol, a gemer boued kreñv, int-i hag a oar mad, dre o skiant-prena ober an disparti etre ar mad hag an droug.

VI -1- Neuze eta, dilezom ar henteliou kenta diwar-benn ar Hrist evid sevel d'eur gelennadurez parfed, o chom fidel d'ar gwirioneziou-diazez, ar heuz d'an oberou maro, ar feiz e Doue, -2- ar gelennadurez diwarbenn ar Vadenziant, an daouarn astennet, adsao ar re varo da veo, ar varnedigez peurbaduz, -3- hag evel-se eo e raim, da vianna ma plij gand Doue. -4- N'eo ket posubl d'ar re a zo bet sklerijennet eur wech hag o-deus bet an tañva euz donezon an neñv, ha deuet da gaoud perz er Spered Santel, -5- hag o-deus kavet saour gand komz ken mad Doue ha burzudou ar bed da zond, -6- hag a zo kouezet koulskoude, n'eo ket posubl o renevezi evid o degas da jeñch buhez, pa stagont Mab Doue ouz ar groaz, euz o ferz o-unan ha pa zismegansont anezan.

-7- Eun tamm douar, p'en-devez evet ar glao kouezet puill warnañ ha lakeet da zevel an drevajou talyouduz evid ar re a labour anezañ, a reseo digand Doue e lod a vennoz, -8- med an hini na zav diwarnañ nemed spern ha prez a vez disprijet, e vez tost da veza mallozet, ha da veza a-benn ar fin lakeet an tan ennañ. -9- Evidoh-c'hwi tud karet, o komz evel-se, ni a gred deom emaoch en tu mad, hini ar zilvidigez, -10- rag Doue n'eo ket disleal, ne da ket da ankou-nac'haad nag ar pez ho-peus greet, nag ar garantez ho-peus diskouezet evid e ano, c'hwi hag a zo bet hag a zo atao e servich ar zent. -11- C'hoant on-eus e teufe peb hini ahanoh da gaoud ar memez gred, ma vleunio en he haerra

an esperâns beteg penn, -12- ha ma na zeufeh ket da vez a lezireg, med da gemed skouer diwar an dud o-deus resevet dre o feiz hag o habaskded ar brome-sau da hêrez.

PROMESAOU DOUE HAG ESPERANS

-13- Pa reas Doue e bromesa da Abraham, peogwir n'helle ket toui dre uhel-loh egetañ, e touas drezañ e-unan. -14- Lavared a reas : «Puill e skuillin war-nout va bennoz hag e lakin da lignez da greski». -15- Eñ, stard en e venoz a welas ar bromesa o tond da vad. -16- Toui a ra an dud dre unan uhelloh egeto, kred ha ledouet a laka eun termen da beb rendael. -17- Evel-se eta, Doue, evid diskouez kalz gwelloh da heritourien ar bromesa, e talhe stard d'e venoz, a roas e her dre le. -18- Evel-se, daou dra, ha n'hellont na beza torret na beza gevier a-berz Doue, a zegas deom eur frealzidigez nerzuz, deom-ni hag on-eus dilezet peb tra evid kregi en esperâns kinniget deom ; -19- evel eun eor evid on ene eo hemañ evidom, sanket eo stard, treuzi a ra d'an tu-all d'ar ouel, -20- el leh m'eo, en on raog, antreet Jezuz evidom evel kannad, eñ deuet da vez a beleg-meur da viken hervez urz Melkisedeg.

MELKISEDEG

VII -1- Melkisedeg, eñ, roue Salem, beleg euz an Doue uhel-meurbed, a yeas en arbenn da Abraham, pa edo hemañ o tistrei euz ar stourmad a-eneb ar rouaned, hag a vennigas anezañ. -2- Dezañ e roas Abraham an deog euz peb tra. E ano a dalvez da genta : «Roue a justis», ha goudeze «Roue Salem», da lavared eo «Roue a beoh». -3- Heñvel eo ouz Mab Doue, beleg e chom da viken, heb tad na mamm, na lignez, na deiz kenta evid e vuhez, na deiz diweza, med heñivelet ouz Mab Doue, e chom beleg da viken. -4- Gwelit pegen braz eo an hini e-neus Abraham roet dezañ an deog euz ar pe wella euz e breiz, eñ an tad-meur. -5- Hogen ar re euz bugale Levi hag a vez beleget, a dle hervez al lezenn deoga ar bobl, da lavared eo o breudeur, a zeu koulskoude euz lignez Abraham. -6- Med, eñ, an hini n'oa ket euz o lignez, e-neus deoget Abraham ha benniget an hini a oa dezañ ar bromesaou. -7- Hogen, heb mar ebed, an hini izella a vez benniget gand an hini uhella. -8- Hag amañ ar re a reseo an deog, a zo tud marvel, med aze avad, eo an hini a zo testeniet da vez a beo da vad. -9- Erfin, koulz lavared eo Levi e-unan, eñ hag a reseo an deog, e-neus paeet anezi dre Abraham, -10- rag e kerhen an tad-meur edo Levi, pa 'z eas Melkisedeg en arbenn da Abraham.

BELEG MEUR HERVEZ URZ MELKISEDEG

-11- Ma vije bet deuet eta santelez dre velegiez Levi - rag warnañ oa diazezet al lezenn roet d'ar bobl - peseurt ezomm a vefe bet c'hoaz euz eur beleg all a zeufe eur urz Melkisedeg, e-leh euz urz Aaron ? -12- Rag cheñchet ar velegiez, e rank iveau al lezenn beza cheñchet. -13- Rag an hini a zo ano anezañ amañ, a zo euz eur meuriad ha n'oa bet den ebed anezañ e servich an aoter. -14- Anad mad tre eo : an Aotrou a zo deuet euz Juda, eur meuriad ha n'e-

neus Moizez lavaret netra anezañ pa gomz diwar benn ar veleien. -15- Ha sklérro eo c'hoaz ma tegouez eur beleg all hefivel ouz Melkisedeg, -16- ha n'eo ket savet da veza beleg, euz eur famill beleien, med dre halloud eur vuhez diwarvel, -17- Setu an testeni roet dezañ : «Beleg out da viken, hervez urz Melkisedeg». -18- Evel-se eo torret ar gourhemenn kenta, rag ma 'z qa dinerz ha didalvez.

-19- Rag al lezenn n'he-deus kaset netra da benn - med digoret eo evidom eun esperafis 'welloh, drezi e tostaom ouz Doue, -20- ha surroh a-ze, pa n'eo ket bet greet kement-se heb le. -21- Evid hemañ eo ez eus bet eul ledouet greet gand an hini e-neus lavaret : «Touet e-neus an Aotrou, ha ne zistroio ket war e her : beleg out da viken», -22- ha seulvui gwelloh iveau eo an Emgleo diazezet gand Jezuz. -23- Hag ouspenn, ar re-ze a zo deuet niveruz da veza beleg, rag ar maro a vire outo da badoud. -24- Med eñ, o veza ma pado beo da viken, e-neus eur velegiez beurbaduz. -25- Setu perag e hell iveau savetei evid atao ar re a zeu drezañ da dostaad ouz Doue rag m'eo beo bepred evid erbedi evito. -26- Setu aze ar beleg-meur on-oa ezomm anezañ, santel, direbech, dinamm, dispartiet diouz ar beherien, savet uhelloc egred an nefivou. -27- N'eo ket red dezañ, evel d'ar veleien-veur all, kinnig bemdez sakrifisou evid e behejou e-unan, ha goudeze evid re ar bobl. Kement-se e-neus greet eur wech evid mad, oh en em ginnig e-unan. -28- Al lezenn a ra beleien-meur euz tud leun a zempladurez, med al ledouet deuet warlerh al lezenn a reas beleg-meur ar Mab santelleet da viken.

AR BELEG-MEUR HAG AL LIDEREZ DOUAREL

VIII -1- Setu, talbenn ar pez a lavarom eo : eur beleg-meur evel-se on-eus, eet eo da azeza en nefivou a-zehou da dron on Doue braz meurbed, -2- eñ, ministr ar zantual hag an deltenn wirion, savet n'eo ket gand eun den med gand an Aotrou, -3- Rag, peb beleg-meur a zo karget da ginnig provou ha sakrifisou, red e oa dezañ eta kaoud eun dra bennag da ginnig. -4- E gwirionez, ma vije bet Jezuz war an douar, ne vije ket bet beleg zoken, peogwir ez eus re all da ginnig ar provou hervez al lezenn. -5- Ar re-ze a zo e servich eun dra ha n'eo nemed eur skouer, eur skeudenn euz traou an neñv, evel ma oe bet lavaret da Voizez pa oe karget da ober an deltenn : «Evesa, emezañ, da ober peb tra hervez ar skouer a zo bet diskouezet dit war ar menez». -6- Bremañ avad, e-neus ar Hrist resevet eur ministrèz kalz uhelloc, seul ma 'z eo hanterour eun Emgleo kalz gwelloh diazezet war bromesaou kaerroph.

EMBANN EUN EMGLEO NEVEZ

-7- Rag ma vije bet direbech an Emgleo kenta, ne vije ket bet red sevel unan all en e blas. -8- Rag eur rebech a ra Doue dezo pa lavar : «Deiziou a zo o tond, eme an Aotrou, ma rin gand tud Israel ha tud Juda eun Emgleo nevez, -9- ne vo ket hefivel ouz an Emgleo am-boa greet gand o zadou, da'n deiz m'am boa kroget en o dorn evid o zenna er mèz euz an Ejipt ; peogwir n'int ket chomet em Emgleo, me d'am zro, am-eus o dilezet, eme an Aotrou, -10- rag setu amañ dre beseurte Emgleo eh en em glevin gand tutach Israel goude

an deiziou-se, eme an Aotrou, va lezennou a lakin en o spered hag en o halon, me a vez o Doue, int-i a vez o fobl. -11- N'o dezo hini ebed anezo da rei kenteliou d'o henvroiz na d'o breudeur o lavared : «Desk piou eo Doue, rag oll eh anavezint ahanon azaleg ar bianna beteg ar brasa» ; -12- rag truezuz e vezin e-keñver o faziou ha ne zalhin koun ebed euz o fehejou». -13- O lavared eun «Emgleo nevez» e-neus greet euz ar henta eun Emgleo koz. Hogen, ar pez a zo koseet hag uzet a zo tost da vond da netra.

AL LIDEREZ KOZ

IX -1- An Emgleo kenta e-noa eta lidou sakr, hag iveau eur zantual war an douar. -2- Eun deltenn a zo bet savet ha renket, an deltenn a ziaraog a gaved enni ar hantolor, an daol baraennou, hounnez a vez greet anezo ar «Santual». -3- Pelloh, ha goude an eil ouel, ez oa eun deltenn greet anezo : «Santual ar zantualiou», -4- enni eun aoter aour evid al louzou c'hwez-vad, hag arh an Emgleo, goleot tro-dro a aour, enni eur jarl aour hag er jarl e kaved ar mann, ha baz Aaron, an hini e-noa bleuniet, ha taolennou an Emgleo. -5- A-us dezi ar heroubined a hloar a skeudenne an tron a drugarez, med n'ema ket ar poent da gomz tra-ha-tra euz an traou-se. -6- Renket an traou evel-se, ar veleien a antre, da beb mare en deltenn genta evid ober o zervich sakr. -7- En eil avad ne antre nemed ar beleg-meur, ha c'hoaz eur wech ar bloaz nemedken, ha n'eo ket heb kaoud gantañ gwad da ginnig evid e faziou e-unan ha re ar bobl. -8- Diskouez a ra evel-se ar Spered Santel, n'eo ket digor hent ar Zantual, endra ma 'z eus euz an deltenn genta. -9- Eur skeudenn eo kement-se, evid an amzer a vremañ, kinniget e vez c'hoaz eno provou ha sakrifisou a zo dihalloid evid justiza en e goustiañs an hini a ra al lid, -10- reolennou int evid ar horv ha ne zellont nemed ouz boued hag evach, an emwalhou a beb seurt, ordrenet beteg poent an nevezadur.

SAKRIFIS AR HRIST

-11- Ar Hrist avad, degouezet e-giz beleg-meur euz ar madou da zond, o treuzi an deltenn welloh ha brasoh, ha n'eo ket bet savet gand an den, da lavared eo, n'eo ket euz ar bed-mañ, -12- a antreas eur wech evid mad er zantual, n'eo ket gand gwad loened ha tirvi, med gand e wad e-unan, o veza evel-se or frankizet evid atao, -13- rag ma teu gwad loened pe dirvi pe ludu onneri ledet war dud saotret, d'o zantellaad en eur rei dezo glanded ar horv, -14- na pegen muioh e hell gwad ar Hrist, e-neus dre e Spered peurbadel greet ar hinnig anezañ e-unan da Zoue, e-giz eur brovadenn dinamm, gwalhi or houstiañs euz an obrou maro evid servicha an Doue beo.

AN TESTAMANT SIELLET ER GWAD

-15- Setu perag eo eñ, an hini e-neus savet an testament nevez, e-neus dre e varo dasprenet ar pehejou greet e-pad an testament kenta, hag ar re a zo galvet da reseo an herez peurbaduz bet dija prometet ; -6- rag pa vez eun testament, eo red e vefe gouezet skler ha maro eo an testamanter, -17- rag eun

testament n'e-neus talvoudegez nemed goude ar maro, ne dalyv da netra e-keid ha m'eo beo an testamanter. -18- Setu perag an testament kenta zoken n'eo ket bet savet heb gwad. -19- Pa embannas Moizez d'ar bobl a-bez hervez al lezenn, peb gourhemenn, e kemeras gwad tirvi yaouank ha loened, gand dour, gloan ruz-tan ha sikadez hag e sparfas al levr e-unan hag ar bobl a-bez en eur lavared : «An dra-mañ eo gwad an testament e-neus Doue gourhemennet evidoh. -21- Evel-se ives e sparfas gand gwad an deltenn ha kement a zervijfe evid al lidou. -22- Hervez al lezenn e vez gand gwad glanneet koulz lavared peb tra, hag heb skuill gwad n'eus pardon ebed. -23- Red eo eta e vefe glanneet evel-se ar skeudennou euz traou an neñvou, red eo ives e vefe glanneet d'o zro traou an neñvou, med dre zakrifisou kalz gwelloh egred ar re-ze.

AR HRIST OH ANTREAL EN NENV

-24- Antreet eo ar Hrist, n'eo ket en eur zantual savet diwar dorn an den, skeudenn eo euz ar zantual gwirion, med e-barz an neñv zoken, d'en em ziskouez evidom bremañ dirag fas Doue. -25- N'eo ket evid en em ginnig meur a wech evel ma ra ar beleg braz, a antre en templ beb bloaz da ginnig eur gwad ha n'eo ket e hini, -26- rag neuze e nije ranket gouzañv e basion meur a wech abaoe penn-kenta ar bed; padal, bremañ e termen ar hantvejou, eo deuet d'en em ziskouez eur wech hebken evid distruja ar pehed dre e zakrifis, -27- hag, evel m'eo merket da beb den mervel eur wech hebken, ha goudeze ema ar varn, -28- evel-se ives ar Hrist, goude beza en em ginniget eur wech evid dilemel pehejou an oll, a en em ziskouezo evid eun eilved gwech, n'eo ket mui ablavour d'ar pehed, d'ar re a hortoz anezañ evid ar zilvidigez.

EUR SAKRIFIS EFEDUZ ,UNAN HEBKEN

X -1- Al lezenn, peogwir n'eo nemed an damskeud euz ar madou da zond, ha n'eo ket ar madou-se, a vezo dihallooud gand ar sakrifisou-se, a vez kinniget, atao ar memez re, a vloaz da vloaz heb ehan, da justiza ar re a dosta ouz Doue. -2- A-hend-all, daoust ha ne vefed ket ehanet d'o hinnig, peogwir al liderien, glanneet eur wech evid mad, ne zoñje ket dezo beza c'hoaz e dalh pehed ebed ? -3- Er hontrol eo, dre ar zakrifisou-se, e vez degaset da zoñj beb bloaz er pehejou ; -4- rag gwad tirvi ha loened a zo dihallooud evid dilemel ar pehejou. -5- Ha setu perag o tond er bed e lavar ar Hrist : «N'eo ket fellet dit na sakrifisou, na provou, med eur horv az-peus stummet din. -6- N'eo ket plijet dit sakrifisou peurlosket, na provadennou evid ar pehed ; -7- neuze am-eus lavaret : «Emaon o tond, rag diwar va fenn eo skrivet e talbenn al levr : deuet on, va Doue, evid ober da volontez». -8- Lavaret e-noa kentoh : «Sakrifisou, provadennou, re peurlosket ha re evid ar pehejou, n'az-peus ket bet ezomm anezo, n'o-deus ket plijet dit, ha koulskoude red eo lavared int bet kinniget hervez al lezenn.

-9- Ha neuze e lavaras : «Setu ma teuan evid ober da volontez», terri a ra al lezenn genta ha diazeza an eil, -10- hag hervez ar volontez-se eo ez om bet santelleet dre brovadenn korv Jezuz Krist kinniget eur wech evid mad. -11-

Bemdez e stage peb beleg d'ober e lidou, o kinnig meur a wech ar memez sakrifisou dihallooud evid dilemel ar pehejou. -12- Hemañ avad, goude beza kinniget evid ar pehejou eur zakrifis hebken, a zo eet da azeza evid atao en tu dehou da Zoue, -13- o hortoz hiviziken ma vo greet euz e enebourien eur skabell evid e dreid, -14- rag dre eur provadenn hebken, e-neus peurreizet evid atao ar re e-neus santelleet. -15- Da dest on-eus iveau ar Spered Santel rag goude beza diskleriet : -16- «Setu aze an Engleo a rin ganto goude an deiziou-ze», e lavaras an Aotrou : en eur rei va lezennou, e lakin anezo en o halon, o engrava a rin en o spered, -17- soñj ebed ne zalhin mui, nag euz o fehejou nag euz o faziou». -18- Hogen e leh ma vez bet pardonet kement-se, ne vez greet provadenn ebed mui evid ar pehed.

BEZA EUR GWIR GRISTEN

-19- Peogwir on-eus fiziañs da gaoud antre er zantual dre wad Jezuz, -20- aze on-eus eun hent nevez, eun hent a vuez, digoret deom a-dreuz ar ouel, da lavared eo, e gorr, -21- ha peogwir on-eus eur beleg-meur e penn tiegez Doue, -22- tostaom eta gand eur galon nêteet, leun a feiz, nêt a galon a beb saotr, hag or horv gwalhet en dour glan. -23- Kendalhom divrall da anzav on esperafis, rag fidel eo an hini e-neus greet ar promesaou. -24- Taolom evez an eil ouz egile, evid on entana a garantez hag a oberou mad. -25- Na zilezom ket or bodadegou evel m'eo kustum da lod, med en em frealzom an eil egile, seulvuiouh ma welom an Deiz o tostaad ; -26- rag ma teu deom asanti d'ar pehed goude beza anavezet ar wirionez, n'eus mui sakrifis ebed evid ar pehejou, -27- med spontuz e vo gortoz ar varnedigez ha gwrez an tan a bulluho e enebourien. -28- Ma teu unan bennag da derri Lezenn Voizez, testeni daou pe dri a gaso anezañ didruez d'ar maro. -29- Na pegen gwasoh kastiz e-no an hini a zeu da vresa Mab Doue, da ober eun dra disakr euz gwad an testament, e-neus santelleet anezañ, da deurel dismegan war Spered ar Hras, -30- rag anaoud a reom an hini e-neus lavaret : «Din-me eo kastiza ha din-me eo digoll» ha c'hoaz : «Barn a ray an Aotrou e Bobl». -31- Spontuz eo koueza etre daouarn an Doue beo.

-32- Med dalhit soñj en hoh amzer genta ; a-veh m'ho-poa resevet ar sklerijenn, m'ho-poa bet da houzañ eur stourmad poaniuz. -33- Gwech, dismegan set hag heskinet a well d'an oll, ha gwech all a galon gand ar re o-doa da houzañ, -34- kemeret ho-peus perz e poaniou ar brizonidi, asantet ho-peus gand levinez e veve greet skrapérèz war ho madou, sur ma 'z oah da gaoud madou gwelloh ha paduz. -35- Na gollit ket ho hardisegez, eun digoll kaer a zeu da heul. -36- Red eo deoh kenderhel da ober bolontez Doue, evid ma teuio da vad evidoh ar bromesa. -37- Rag c'hoaz eur pennadig, eun nebeudig amzer, hag e teuio aze an hini a zo da zond, ne zaleo ket. -38- Dre ar feiz e vevo an den just, med ma teu dezañ kiza, ennañ va ene ne gavo mui he dudi. -39- Ni avad, n'om ket tud da giza evid mond da goll, med tud a feiz evid silvidigez on eneou.

OBEROU AR FEIZ

XI -1- Ar feiz a zo eun doare da gaoud dija er herz an-unan ar pez a esperer,

eun doare da anaoud ar pez na weler ket. -2- Ablamour dezi eo bet meulet tud an amzer goz. -3- Dre ar feiz eh intentom eo bet stummet ar bed a-bez gand eur gomz a-berz Doue hag ahano e teu ar pez a weler euz ar pez na weler ket. -4- Dre ar feiz eo e kinnigas Abel eur zakrifis kalz talvoudusoh eged hini Kain, ha dre-ze e oa roet da anaoud ez oa just. Doue e-noa greet degemer vad d'e zonezonou, ha drezi, daoust m'eo maro, e kendalh da gomz. -5- Dre ar feiz, Enok a oe skrapet e doare ma ne varvas ket, ha ne oe ket kavet mui, rag Doue e-noa e skrapet. Araog beza skrapet, e oe lavaret diwar e benn, e-noa plijet da Zoue. -6- Hogen heb feiz, n'heller ket plijoud da Zoue, rag an hini a dosta ouz Doue a dle kredi ez eus anezañ hag e tigoll ar re a zo ouz e glask. -7- Dre ar feiz, Noe, roet dezañ da anaoud ar pez na weled ket c'hoaz, leun a zoujañs santel, a reas eun arh evid savetei e famill. Drezi e kondaonas ar bed, hag e teuas dezañ da hêrez ar justis a zeu dre ar feiz. -8- Dre ar feiz, sentuz ouz ar halvardenn, ez eas Abraham warzu eur vro a dlee beza dezañ dà hêrez, hag ez eas en hent heb gouzoud da beleh ez ee. -9- Dre ar feiz e chormas evel diavéziad en douar prometet, o veva dindan telenn gand Izaag ha Jakob, kenhéred gantañ er memez promesa, -10- rag o hortoz edo ar gér fontet mad da veza ijinet ha mañsonet gand Doue e-unan. -11- Dre ar feiz, Sara, hi iveau, daoust d'he oad, a reseave ar halloud da veza dougêrèz, rag d'he zoñj dezi, e talhfe d'e her an hini e-noa greet ar bromesa. -12- Ha setu perag, diwar eun den hebken, warnañ dija tres ar maro, e teuas er bed eur bobl tud ken niveruz ha stered an nefiv, diniver evel an trêz war rîbl ar mor.

-13- Er feiz-ze int marvet oll, heb beza gwelet ar promesaou sevenet, med goude beza o gwelet ha saludet euz a bell ha beza diskleriet ez oant tud estrenn ha tremenidi war an douar. -14- Ar re a gomz evel-se, a ziskouez sklér beza war glask euz eur vamm-vro. -15- Ha ma vije bet en o zoñj ar vro o-doa kuiteet, o-defe kavet an tu da zistrei di. -16- Med warzu eur vro welloh oa troet o halon, hini an nefiv. Setu perag, Doue n'e-neus ket a vez da veza anvet o Doue, rag kempennet e-neus eur gér evito. -17- Dre ar feiz, Abraham en e amprou, a ginnigas Izaag, kinnig a ree ar mab unganet goude m'e-noa resevet ar promesaou, -18- ha m'oа bet lavaret dezañ : «Diwar Izaag e savo dit eul lignez». -19- Gouest eo Doue, a zoñje dezañ, da adsevel da veo eun den maro. Setu penaoy eh adkavas e vab, eur skeudenn e oa euz an amzer da zond. -20- Dre ar feiz c'hoaz, Izaag a vennigas Jakob hag Ezaü evid an amzer da zond. -21- Dre ar feiz, Jakob war e dremenvan a vennigas peb hini euz mibien Josef, hag e stouas harpet war benn e vaz. -22- Dre ar feiz, Josef, tost d'ar maro, a lakeas soñjal e distro pobl Israel hag e roas gourhemennou diwar-benn e relegou. -23- Dre ar feiz, Moizez, a-veh ganet, a oe kuzet gand e dud e-pad tri miz, rag gwelet o-doa ez oa koant ar hrouadur ha ne zentjont ket ouz gourhemenn ar roue. -24- Dre ar feiz, Moizez, deuet braz, a nahas beza kemeret evid eur mab da verh ar Faraon. -25- Gwelloh e kavas beza gwallgaset a-unan gand pobl Doue, eged beva evid eur mare e plijadureziou ar pehed. -26- Hervez e zoñj oa dis-megañs ar Hrist talvoudusoh eged teñzoriou an Ejipt, rag war an digoll da zond e pare e zaoulagad. -27- Dre ar feiz e kuiteas bro Ejipt heb kaoud aon rag kounnar ar roue, hag evel m'e-nije gwelet ar pez n'helled ket gweled e talhas mad. -28- Dre ar feiz e lidas ar Pask, hag e vennigas gand gwad evid mired na zeufe

an distrujer da skei bugale kenta-ganet pobl Israel. -29- Dre ar feiz e treuzjont ar Mor-Ruz evel eun douar seh, an ejipsianed o klask ober kemend-all a oe lonket. -30- Dre ar feiz e kouezas mogeriou Jeriko, goude m'oa bet greet an dro dezo e-pad sezvez devez. -31- Dre ar feiz, Rahab, ar vaouez a vuez fall a oe espernet er hontrol d'an duz difeiz, rag m'he-doa roet degemer d'ar spierien. -32- Ha petra a lavarin c'hoaz ? Rag n'am-befe ket amzer awalh evid komz euz Jedeon, Barak, Samson, Jefte, David, Samuel hag ar profeded. -33- Int-i o-doa dre ar feiz aloubet rouanteleziou, lakeet da ren ar justis, gwelet ar promesaou o tond da vad, klozet o geol da leoned. -34- Mouget o-doa herrder an tan, tehet diouz dremm ar hleze, greet e oe anezo tud kreñv, int-i hag a oa bet klanv, kaloneg e oent er brezel, bounta rejont et mêz ar strolledou estren. -35- Merhed a adkavas beo a-nevez o zud maro. Lod a zo bet boureviet, o tinah beza espernet ha tennet a boan evid kaoud gwelloh adsao da veo. -36- Lod all c'hoaz o-deus bet da houzañv goapèrèz, skourjerez, chedenn zoken ha prizoniou ; -37- labezet int bet, eskennet, lazet a daoliou kleze, mond a reent da veva euz eun tu d'egile, gwisket gand krohenn déñved, pe greon givri, diouer dezo a beb tra, gwasket, gwallgaset, -38- int-i ha n'oa ket ar bed din anezo, redeg ha diredeg a reent dre al lehiou gouez, ar meneziou, ar heviou, ha toullou an douar. -39- Ar re-ze oll, daoust m'o-deus bet eun testeni mad dre o feiz, n'o-deus ket resevet ar promesaou, -40- rag Doue a wele en araog, gwelloh c'hoaz egedom, hag int-i ne dleent ket hebdom-ni dont da veza parfed.

GOUZANV ER POANIQU

XII -1- Setu eta, ni iveau hag on-eus endro deom kement a destou, taolom kuit diwarnom peb samm hag ar pehed a oar, ken brao, or gronna, ha redom dalhmad d'ar stourmad kinniget deom, -2- on daoulagad o para war an hini e-neus diazezet ar feiz ha kaset anezo d'he zermen. Eñ, Jezuz, e leh al levenez kinniget dezañ, a houzañvas ar groaz, en desped d'ar vez staget outi hag a zo eet da azeza en tu dehou da dron Doue. -3- Taolit pled ouz an hini e-neus gouzañvet seurt enebiez a-berz ar beherien evid na zeufeh ket da fallgaloni. -4- N'ho-peus ket enebet c'hoaz beteg ar gwad en ho stourmad a-eneb ar pehed. -5- Ankounac-heet ho-pefe an ali roet deoh evel da vugale dezañ : «Va mab, arabad eo dit disprizoud reizadurez an Aotrou Doue, na fallgalon ket pa ra rebechou dit, -6- rag Doue a gastiz an neb a zo karet gantañ, ha fusta kement mab a zo d'e c'hoant. -7- Evid beza heñchet eo ho-peus da houzañv, ober a ra Doue deoh evel da vibien; pe vab ne vez ket reizet gand e dad? Ma n'ho-peus ket bet ho lod a reizded evel m'o-devez an oll, n'eo ket mibien qh, med bastarded.

-9- Evid or reiza eo on-eus bet tadou an douar ha ni a zouje anezo, ha n'ezafem ket da zouja kalz muioh c'hoaz Tad ar sperejou evid kaoud ar vuez ? -10- Int-i or reize evid berr-amzer hervez o zoñj, med eñ evid or mad, evid rei deom perz en e zantelez. -11- Peb reizadur war an taol ne zegas ket gantañ tro da veza laouen, med da veza doaniet. Diwezatoh avad e teu diwar ar hastiz eur frouezenn a beoh hag a justis. -12- Savit eta ho taouarn dinerzet hag o taoulin o krena. -13- Digorit heñchou eeun da gerzed ganto, hag evel-se an den kamm ne vo ket distreset e droad, med kentoh pareet.

BEZA GWIR GRISTENIEN

-14- Klaskit ar peoh gand an oll, ha renit eur vuez santel, rag hehti ne welo den an Aotrou. -15- Grit ma ne vo den ebed o lezel gras Doue da dremen, ma ne zeuio gwirzienn c'houero ebed da vouillasi, da lakaad dizurz hag evel-se da gontammi an oll er gumuniez, -16- ha ma ne vo den orgeduz, na den disakr ebed. Ezaü a werzas e wir a vab hena evid eur pladad boued ; -17- rag c'hwi a oar, pa glaskas diwezatoh kaoud ar bennoz da hêrez, e oe dilezet, ha ne hellas cheñch daoust d'e bedennou ha d'e zaerou. -18- Tosteet oh, n'eo ket ouz eur menez a hellfed touch outañ, nag ouz tan beo, nag ouz eur goa-brenn zu, nag ouz teñvalijenn na korventenn, -19- nag ouz son an drompil, nag ouz eur vuez a dregerne kement, ma houlennas ar re he hlevas ma vefe roet peoh dezo hiviziken. -20- N'oant ket evid gouzañv ar pez a oa kemennet dezo : «An neb a stoko ouz ar menez, ha goude ma vefe eun aneval, a vo la-bezet». -21- Ken spontuz oa ar gwel a gement-se, ma lavaras Moizez : «Spon-tet on, ken na grenan».

-22- Deuet avad oh da dostaad ouz Menez Sion, ouz kér an Doue beo Jeruzalem an neñv, ouz miliadou a éllez, oh ober gouel, -23- ouz bodadenn ar re genta-ganet a zo skrivet o ano en neñvou, ouz Doue barner an oll, ouz spere-jou an dud justizet da vad, -24- hag ouz Jezuz hanterour eun testament nevez, ouz gwad sparfat, a gomz gwelloh c'hoaz eged hini Abel.

-25- Taolit evez na stoufreh ho tiskouarn ouz an hini a gomz deoh, rag ma n'o-deus ket ar re-ze tehet diouz ar hastiz pa vontjont o diskouarn ouz an hini a gomze war an douar, ni, surroh c'hoaz, n'hellim ket henn ober, ma troom kein d'an hini a gomz ouzom euz lein an neñvou. -26- En, an hini a lakeas neuze an douar da grena gand e vuez, a embann deom bremañ kement-mañ : «Eur wech c'hoaz e lakin da grena n'eo ket hebken an douar, med iveauz an neñv». -27- Ar gériou-se : «Eur wech c'hoaz» a ziskouez e vo cheñchet kement ha n'eo ket divrall, evel ar bed krouet, ma ne jomo nemed an traou divralluz. -28- Peogwir e resevom eur rouantelez divralluz, dalhom stard d'ar hras-se, drezi bezom e servich Doue en eur doare da blijoud dezaf, santel ha doujuz. -29- Rag on Doue a zo eun tan hag a bulluh.

AR GUMUNIEZ WIRION

XIII -1- Kendalhit d'en em gared etre breudeur. -2- N'ankounac'hait ket beza mad da zegemer, rag evel-se, lod o-deus, heb her gouzoud, degememer éllez. -3- Dalhit soñj er brizonidi, evel ma vefeh c'hwi iveauz er prizon asamblez ganto, hag er re a zo gwallgaset, rag c'hwi iveauz ho-peus eur horv. -4- Ra vo ar briedelez enoret gand an oll, ha distlabez gwele ar priejou, rag Doue a varn an dud lubrig hag an dud avoultrer. -5- Dalhit ho kalon distag diouz an arhant, awalh eo deoh ar pez ho-peus bremañ, rag an Aotrou e-unan e-neus lavaret : «Nann, ne guitain ket ahanout, na zilezin ket ahanout», -6- ken ma hellom lavared a-dra-zur : «Va zikour eo an Aotrou, n'am-bo aon ebed ; petra hello an den ober din ?»

-7- Ho pet soñj er re a zo o houarn ahanoh hag o-deus embannet deoh Komz Doue, evesait e peseurt doare eo echuet o buez, bezit eveldo tud a feiz. -8- Jezuz Krist a zo ar memez hini deh hag hirio ha da virviken. -9- Na lezit ket kredennou estren a beb seurt d'ho touella, rag mad eo d'ar galon beza kennerzet dre ar hras, ha n'eo ket dre ar boued, ha n'e-neus talvezet da netra evid ar re o-deus e zebret. -10- Eun aoter on-eus, med n'o-deus ket autre ar re a zo e servich an deltenn da denna diouti o magadurez. -11- Rag ar chatal a vez douget o gwad er zantual gand ar belez-meur evid ar pehed, o horv dezo a vez devet er-mêz euz ar hamp.

-12- Setu perag, Jezuz, eñ iveau, evid santellaad ar bobl dre e wad e-unan, e-neus bet da houzañ en tu all da zor kér. -13- Deom eta en arbenn dezañ, er-mêz euz ar hamp, en eur zougen e zismegañs. -14- Rag n'on-eus ket war an douar-mañ eur gér da badoud ; war glask emaom euz ar gér an amzer da zond. -15- Drezañ eta, kinnigom dalhmad da Zoue eur zakrifis a veuleudi, da lavared eo frouzezen ar muzellou a anzav e ano. -16- Ar vadelez hag an unaniez, diwallit d'o ankou-nac'hAAD, rag sakrifisou evel-se a blij da Zoue. -17- Sentit ouz ar re a houarn ahanoh, doujit anezo - rag evesaad a reont ouz hoh eneou, ha bez' o dezo da renta kont anezo - evid ma raint kément-se gand joa ha n'eo ket en eur glemm. Ne vefe ket mad kement-se evidoh. -18- Pedit evidom, rag kredi a reom stard eo nêt or houstiañs, ha troet or bolontez da jom e peb degouez war an hent mad. -19- Hoh alia a ran startoh c'hoaz d'henn ober, evid ma vezin rentet deoh kentoh a-ze.


REKETOU DIWEZA

-20- Ra zeuiou Doue ar peoh, e-neus lakeet da zevil a-douez ar re varo, dre wad eun Emgleo peurbaduz, Pastor-meur an deñved : Jezuz an Aotrou, -21- da ober deoh gellooud senti outañ e kement mad a zo, ma ray ennom ar pez a blij dezañ dre Jezuz Krist ; gloar dezañ a-hed ar hantvejou. -22- Me ho ped, breudeur, grit degemer vad d'ar brezegenn-mañ, hag ouspenn n'eo ket hir va fennad skrid. -23- Klevit 'ta eo bet frankizet or breur Timote. Ma teu prestig awalh, ez in gantañ d'ho kweled.

-24- Saludit ar re oll a zo o ren ahanoh, hag an oll zent. Re an Itali ho salud.
-25- Ra vo ar hras ganeoh oll. Amen.



lizer sant Jakez



JAKEZ

Sant Jakez, «breur an Aotrou», penn-rener doujet Iliz-vamm Jeruzalem, a gas al lizer-mañ d'e oll vreudeur Juzeo deuet d'ar feiz. Aliez e vezont heskinet. Sant Jakez a ali anezo da veza kaloneg, da veza laouen zoken. Poueza a ra dreist-oll war an doujañs a dleer d'ar beorien ha war an unañiez a zo etre ar feiz gwirion hag an oberou a drugarez. Erfin e houenn ma teufe beleien an Iliz da zegas harp ha konfort d'ar glañvourien olevi anezo gand oleo sakr e ser pedi ganto.

LIZER SANT JAKEZ

SALUDOU

I -1- Jakez, servicher Doue ha Jezuz Krist an Aotrou, d'an daouzez meuriad a zo strewet dre ar bed a-bez, salud. -2- Degemerit gand eur joa vraz, va breudeur, an trubuillou a beb seurt a gouez warnoh, -3- o houzoud e zav pasiañted diwar ar pez a amprou ho feiz. -4- Med ra zeuio ho pasianted da veza oberiant en eun doare dispar, evid ma vezoh, c'hwi hoh-unan peurvad ha parfed, kuit a beb tech fall. -5- Ma ra ar furnez diouer da unan bennag ahanoh, ra houlenno anezi digand Doue, a ro puill d'an oll hag heb ober rebech ebed, hag e vo roet dezañ. -6- Ra houlenno a-vad gand feiz, heb douetañs ebed rag heñvel eo an hini e-neus douetañs ouz houl ar mor, hejet ha dihejet gand an avel. -7- An den-se, arabad eo dezañ kredi e roio an Aotrou tra-pe-dra -8- d'an hini a zo etre an daou, hedro en e oll oberou. -9- Ar breur a renk izel ra vo lorf ennañ da veza uhelleet ; -10- hag ar pinvidig da veza izelleet, rag tremen a raio evel bleuñ er prad ; -11- rag savet eo an heol, tomm eo an amzer, dizehet ar yeo-tenn, kouezet eo he bleunienn, kollet he-deus he gened. Evel-se ez ay ar pinvidig da fall en e venosiou.

-12- Eüruz an neb e-neus da houzañv beza amprouet ; goude beza bet amprouet e resevo ar gurunenn a vuez prometet gand Doue d'ar re a gar anezañ. -13- Arabad eo da zen lavared, pa vez tentet : «Va zentadur a zeu din digand Doue». Rag n'hell ket Doue beza tentet da ober an droug ha ne dent e-unan den ebed. -14- Peb hini a vez tentet gand e c'hoantegeziou e-unan a zo ouz e zach a hag o teseo anezañ. -15- Ar c'hoantegeziou, eur wech diwanet, a zeu ar pehed diwar no ha, deuet e amzer, ar pehed a zeu ar maro diwarnañ. -16- Na faziat ket war gement-se, breudeur ker : -17- peb gras a briz, peb provadenn peurvad a ziskenn euz an nefñ, a-berz tad ar sklerijenn, n'eus ennañ na chefichamant na teñvalijenn a zeufe diwar tro ar stered. -18- Eñ eo a zo fellet dezañ engehenti ahanom dre ar gomz a wirionez evid ma vefem , evel pa lavarf, ar ouenn genta euz ar grouadurien. -19- Tud desket oh, breudeur ker, koulskoude, na vo den lezireg ebed evid beza mad da zelaou, med ra vo luguduz da gomz ha da gounnari. -20- Rag diwar kounnar ne zav ket justis Doue. -21- Setu perag, dieubet euz peb sklabez, euz peb fallagriez dreist muzul, degemerit gand douster ar gomz silet ennoch hag a zo gouest da zavetei ho puez.

-22- Lakit ar gomz da dalvezoud, n'eo ket awalh he zelaou hebken, fazia a rafeh hoh unan. -23- Rag ma selaou unan bennag ar gomz heb lakaad anezi da dalvezoud eo heñvel ouz eun den o sellé en eur melezour, ouz an dremm e-neus abaoe m'eo ganet. -24- Piz e-neus sellet, eet eo kuit ha raktal e-neus ankounac'heet euz a betra e-noa an êr. -25- An hini a-vad e-neus sellet a dost ouz eul lezenn peurvad, hini ar frankiz, hag e-neus poaniet ganti n'eo ket e-giz eur selaouer dievezieg, med e-giz eul labourer gand e labour, hennez a gavo eürusted gand e labour. -26- An hini a zoñj dezañ beza den a feiz ha

ne zalh ket war e deod oh en em douella e-unan, a zo didalvez e feiz. -27- Eur relijon hlan ha dinamm dirag an Tad, setu amañanezi : mond da weled an emzivaded hag an intañivezed en o dienez, en em ziwall diouz ar bed evid mired da veza sklabezet.

BEZA A DU GAND AR RE BINVIDIG , A ZO MOND A ENEB AL LEZENN

II -1- Va breudeur arabad eo e teufe ho toujañs evid den pe zen da boueza war ho feiz e Jezuz Krist, on Aotrou leun a hloar. -2- Lakit e teufe en ho touez eun den gantañ gwalinier aour, gwisket kran, hag iveauz eur paour-kêz gwisket truilleg. -3- Ma teu deoh teurel evez ouz an den gwisket kran, ha lavared dezañ : «Te, azez er plas brao-mañ», ha ma lavarez d'ar paour : «Te, kee adu-ze en da zav», pe, «azez e harz va skabell», -4- daoust ha n'ho-pije ket lakeet kemm etrezo, daoust ha ne vijeh ket deuet da varn en eun doare fallagr ? -5- Selaouit, va breudeur ker, daoust ha n'eo ket Doue eo e-neus dibabet ar re a zo paour hervez ar bed, evid beza pinvidig hervez ar feiz hag heritourien ar Rouantelez e-noa prometet d'ar re a gar anezañ ? -6- Med c'hwi ho-peus dismeganset ar paour ; daoust ha n'eo ket ar re binvidig a zo o vresa ahanoh hag int-i iveauz ouz ho kas dirag al lezvarniou. -7- Ha n'eo ket int-i a daol brud fall war an ano kaer a zougit? -8- Moarvard, ma virit al lezenn roueel hervez ar pez a zo skrivet : kared a ri da nesa eveldout da unan, e ri mad. -9- Med ma rit gwelloh da lod eged da lod all, e rit eur pehed hag al lezenn a damall ahanoh da veza torret anezzi. -10- Rag beza fidel d'al lezenn a-bez, ha strebotti war eur poent hebken a ra beza kabluz a beb tra. -11- Rag an hini e-neus lavaret : «na ri ket avoultriez», e-neus lavaret iveauz : «na lazi ket, ha ma teuez da ober avoultriez, da ober eun torfed, e torrez al lezenn». -12- Komzit ha grit evel tud galvet da veza barnet hervez lezenn ar frankiz. -13- Rag didruez eo ar varnedigez evid ar re n'o-deus ket bet a druez. An druez n'he-deus ket aon rag ar varnedigez.

-14- Petra dalvez d'an den, va breudeur, lavared e-neus feiz, ma ... n'e-neus ket an oberou. Daoust hag ar feiz a hello e zalvi ? Lakom e vefe unan bennag euz or breudeur pe or c'hoarezet ha n'e-nefe ket peadra d'en em wiska, ha netra da zebri bemdez : ma lavarfe dezo unan bennag ahanoh : «it e peoh da domma, torrit ho naon», heb rei dezo peadra da jom beo, da betra e talvfe kement-se ? -17- Evel-se iveauz ema kont gand ar feiz ma ne zeu ket oberou diwarni eo maro enni heh unan. -18- Med unan bennag a lavaro : «feiz az-peus, ha me oberou ; diskouez din da feiz heb an oberou ha me a ziskouezo dit va feiz dre va oberou».

-19- Kredi a rez ez eus eun Doue hebken, mad a rez ; an droug-sperejou a gred kemend all hag e krenont. -20- Paour kêz den, c'hoant az-peus gouzoud eo diefed ar feiz heb an oberou ? -21- Abraham, on tad, daoust ha n'eo ket dre an oberou eo bet justizet evid beza lakeet e vab Izaag war an aoter. -22- Gweled a rez aze e laboure a-unan ar feiz gand an oberou, ha dre an oberou e oe peurhreet ar feiz, -22- ha deuet da wir ar pez a lavar ar skritur : Abraham e-noe feiz e Doue, ha kement-se a oe kontet d'ezañ da justis hag e resevas an

ano a vignon da Zoue. -24- Gweled a rit, n'eo ket diwar ar feiz hebken eo justizet an den med iveau diwar an oberou. -25- Kenkoulz all evid Rahab, ar zerh, daoust ha n'eo ket deuet dezi ar justizadeg diwar an oberou, evid beza degemeret ar gannaded ha greet dezo mond kuit dre eun hent all ? -26- Gwir eo, evel m'eo maro ar horv heb an ene, eo maro an feiz heb an oberou.

C'HWI ,KELENNERIEN ,DALHIT WAR HO TEOD

III -1- N'it ket oll da gelenn, va breudeur, c'hwi a oar pegen rust e vo evidom ar varnedigez ; -2- ken aliez e teu deom fazia. Eun den ma ne fazi ket en e gomzou a zo parfed, gouest da lakaad ar brid war e gorr a-bez. -3- Ma lakom ar westenn e genou ar hezeg, evid o lakaad da zenti ouzom, e renom iveau ar horv a-bez ; -4- gwelit iveau al listri, pegen braz bennag e vefent, ha pegen kreñv e vefe an avel o pouenza anezo, eur sturig bian a zo awalh evid ren anezo . d'al leh ma fell d'ar sturier mond. -5- Evel-se iveau euz ezel dister eo an teod, fouseal a ra gand an traou braz a ra. Gwelit eun tanig a zo awalh evid entana eur hoald braz. -6- An teod a zo iveau euz tan, eur bed a fallentez eo. An teod a zo unan euz on izili, eñ hag a gontamm ar horv a-bez, entana a ra kelhiad ar bed krouet a zo iveau entanet gand ar gehenn. -7- N'eus rummad ebed, pe a loened gouez, pe a laboused, pe a loened stlej ha pesked, ha ne zeufe a-benn an dud da zoñvaad anezo. -8- An teod avad ne hell den e zoñvaad :gwalenn liez-doare, leun a vilim marvuz. -9- Gantañ e trugare-kaom an Aotrou ha Tad, gantañ e vallozom war an dud bet greet hervez an heñveledigez euz a Zoue. -10- Euz ar memez genou e teu bennoz ha malloz ; va breudeur, ne dle ket beza kont evel-se. -11- Daoust hag an eienenn a daol, dre ar memez toull, an dour dous hag an dour c'hwer? -12- Eur fizeenn, daoust ha e hello rei olivez, pe eur winienn rei fiez ? Eun eienenn dour zall ne hell ket rei dour dous. Piou a zo fur ha gouizieg en ho touez ? Ra ziskouezo dre e vuez reizet mad ema ar furnez oh ober dezañ beza hegarañ.

FURNEZ EUZ AN DOUAR ,HA FURNEZ EUZ AN NENV

-14- Med ma 'z eo beuzet ho kalon a warizi c'hwer, hag ho spered a dabut, arabad deoh fouseal, n'it ket da noazoud d'ar wirionez gand ho kevier. -15- Ar furnez se ne zeu ket euz an neh, douarel eo, loeneg ha diaouleg. -16- Rag diwar warizi ha tabut e sav dizurz ha droug a beob seurt. -17- Med ar furnez a zeu euz an neh a zo glan da genta, habask goudeze, divlam, êz beva ganti, leun a drugarez hag a frouez mad, n'eo ket aheurtet a-neb den leal eo gand an oll. -18- Frouez ar justis a zo hadet er peoh evid ar re a ra eul labour a beoh.

MIGNON D'AR BED ,ENEBOUR DA ZOUE

IV -1- A-beleh e sav brezeliou, a-beleh e sav stourmajou en ho-touez ? Daoust ha n'eo ket euz ho plijaduriou o virvi en ho kalonou ? -2- C'hoantaad a rit ha n'ho-peus ket ho c'hoant, muntrer oh hag aviuz, ha n'helloh ket dont a-benn da gaoud netra. Stourm a rit hag en em ganna. N'ho pevez ket, rag ma ne houlennit ket. -3- Goulen a rit ha ne resevit ket, rag ho koulenou

ne glaskont netra muioh egod gelloud dispign en ho plijaduriou. -4- Avoultréréd ! Ha n'ouzoh c'hwi ket eo ar garantez evid ar bed enebiez ouz Doue ? An hini a fell dezañ beza mignon d'ar bed a zeu da veza enebour da Zoue. -5- Pe, soñjal a ra deoh eo en aner e lavar ar Skritur : beteg beza gwariziuz e fell da Zoue e vefe dezañ ar spered e-neus lakeet ennom. -6- Med braoh e ra evid diskouez e vadelez, setu perag e lavar ar Skritur : Doue a herz ouz an dud ourgouilluz, med troet mad eo ouz an dud. izel a galon. -7- Sujit eta da Zoue, med dalhit penn d'an droug-spered, hag e teho diouzoh. -8- Tostait ouz Doue hag eñ a dostaio ouzoh. Gwalhit ho taouarn, peherien ; ha glannait ha kalonou, tud etre an daou. -9- Anzavit ar reuzeudig ma 'z oh, grit kañv, skuillit daerou, ra zeuio ho c'hoarz da drei e kañv, ho levez e tristidigez. -10- En em izellait dirag Doue, eñ hoh uhellia.


-11- Na zrougprezegit ket an eil a-eneb egile. An hini a zrougprezeg eur breur a zrougprezeg eul lezenn hag a varn eul lezenn. -12- Uman hebken a zo lezener ha barner, an hini a hell salvi ha kas da goll. Piou out te hag a varn an nesa ? -13- Neuze 'ta c'hwi hag a lavar : «Hirio - pe warhoaz - ez aim d'ar gêr-mañ 'r gêr, epad bloaz e chomin eno, kenwerz a raim, arhant a hounezim». -14- C'hwi ha n'ouzoh ket zoken petra a vo ho puez antronoz, rag eur vogedenn oh, a vez gwelet eur frappadig hag a vez steusiet goudeze. -15- E leh lavared : «Ma plij gand Doue e vevim hag e raim an dra-mañ pe an dra-ze». -16- Fougeal a rit gand ho prabañsérèz. Kement fougeérèz evel-se a zo fall. -17- An neb a oar ober ar mad, ha n'her gra ket a ra eur pehed.

SIWAZ DEOH ,TUD PINVIDIG !


V -1- C'hwi a-vad tud pinvidig, skuillit daerou, klemmit war ar gwaleuriou a zo o vond da goueza warnoh. -2- Brein eo ho pinvidigeziou ha preñvedet ho tillad ; -3- merglet hoh aour hag hoh arhant hag ar mergl anezo a damallo a-eneb deoh hag evel eun tan e tebro ho korv.

Madou ho-peus berniet en amzeriou diweza. -4- Gwelit gopr al labourerien o-deus greet an eost er perkeier, dalhet ho-peus anezañ ganeoh, youhal a ra, ha klemmou an eosterien a zo savet beteg skouarn an Aotrou Sabaod. -5- Bevet ho-peus war an douar e-kreiz an dudi hag ar plijaduriou, ho kwalh ho-peus bet da zeiz al lazadeg. -6- Kondaonet ho-peus, lazet ho-peus an hini just ; ne herz ket ouzoh. -7- Ho-pet eta pasianted, va breudeur, beteg donedigez an Aotrou, gwelit al labourer-douar : gortoz a ra gand pasianted war gement-se, ken n'e-no dastumet frouez ar ouenn a abred hag ar ouenn ziwezad. -8- C'hwi ives, ho pet pasianted, startait ho kalonou rag tost ema donedigez ar Zalver. -9- Arabad eo deoh klemm an eil a-eneb egile, gand aon da veza barnet ; gwelit ar barner a zo e toull an nor. -10- Evid kaoud kalon da houzañv ha pasianted, kemerit skouer diwar ar brofeded, o-deus komzet en aon on Aotrou, rag eur galon domm ha truezuz eo an Aotrou. -11- Gwelled a rit : Meuleudi a room d'ar re a oar delher mad. Klevet ho-peus ano euz pasianted Job ha gwelet mennad an Aotrou, rag eur galon dom ha truezuz eo an Aotrou. -12- Dreist peb tra, va breudeur arabad eo deoh toui, na dre an neñv, na dre an douar, na dre eun doare all bennag ; ra vo ya ho ya, ha nann ho nann, evid chom evel-se heb koueza dindan ar varnedigez.

- 13- Er boan ema unan bennag ahanoh? Dezañ pedi. El levezon e veze? Dezañ kana salmou. -14- Klañv eo unan benn ahanoh? dezañ gelver ar gozidi euz an iliz ar re-mañ a bedo evitañ, goude beza olevet anezañ en an Aotrou.
- 15- Ha pedenn ar feiz a zaveteio an hini klañv, ha m'e-neus pehejou war e goustianis, ar pehejou a vo pardonet dezañ. -16- Kovesait eta ho pehejou an eil d'egile, pedit an eil evid egile, evid kaoud ar pare, rag levezon e-neus goulenn an den just. -17- Eliaz a oa eun den eveldom-ni, pedi c'hwek a reas evid ma ne rafe ket a hlao war an douar, hag e-pad tri bloaz-hanter, glao ebed ne gouezas war an douar. -18- Pedi a reas adarre hag euz an néfiv e kouezas glao hag an douar a zougas e frouez.
- 19- M'e-neus unan bennag ahanoh tehet pell diouz ar wirionez, ha ma vez degaset en dro, -20- red eo deoh gouzoud, an hini a zegas eur peher diwar an hent a gase anezañ da goll, a zaveteio dezañ e vuez hag a gaso da get eun niver braz a behejou.



kenta lizer sant per



PER I

Euz a Rom moarvad ha nebeud amzer araog e varo eo e skriv Pèr da gristenien Azia-Izella, heskinet d'ar mare-se. Goulenn a ra diganto trugarekaad Doue da veza roet dezo eur vuez nevez dre ar feiz hag ar vadeziant ha da veza o galvet da reseo hêrez an neñv, an hêrez-se ha n'eo an heskièrèz nemed ar bromesa anezafñ.

Displega a ra dezo ar menoziou brasa euz kelennadurez an Ebestel; alia anezo da ren eur vuez kristen, santed penn-da-benn ha da ziwall ouz ar fals-kredennou.

LIZER KENTA SANT PER

SALUDOU HA TRUGAREZ

I -1- Pèr, abostol Jezuz Krist, d'an dud dibabet a zo, evid eur pennad, o ve-va evel tud estren en Diaspora, er Pont, er galatia, er Hapadosia, en Azia hag er Bitinia, -2- dibabet hervez menoz Doue an Tad dre ar zantelez a zeu euz ar Spered evid senti ouz Jezuz Krist ha kaoud perz er grasou sparfat warnañ gand e wad; ra zeuio a-fonn deoh ar hras hag ar peoh. -3- Bennoz da Zoue, Tad an Aotrou Jezuz Krist; en e drugarez vraz e-neus or ganet a-nevez dre adsao Or Zalver Jezuz Krist a-douez ar re varo, evid eun esperâns veo; -4- evid eun hêrez ha ne hell na breina, na beza saotret, na beza gweñvet, eun hêrez miret evidoh en neñvou. -5- C hwi a zo diwallet gand galloud Doue dre ar feiz evid ar zilvidigez a zo prest da veza diskouezet da fin an amzeriou. -6- O sonjal e kement-se e tridit gand al levenez, daoust m'eo red deoh c'hoaz, e-pad eun nebeud amzer, beza glaharet gand trubuillou a beb seurt, -7- evid ma teuio an dalvoudegez amprouet euz ho feiz -kalz priziusoh eged an aour a ya da fall hag a vez koulskoude amprouet dre an tan- da zegas meuleudi, gloar hag enor p'en em ziskouezo Jezuz Krist.

-8- Eñ , hag a garit heb beza e welet, eñ hag a gredit ennañ heb e weled bremañ c'hoaz. -9- Tridal a rit gand eul levenez vraz meurbed, o veza gounezet ar zilvidigez evid hoh eneou da briz euz ho feiz. -10- Ar zilvidigez-se, ar brofeded o-deus enklasket hag enklasket piz, ha profedet diwarbenn ar hras a dle beza roet deoh. -11- Klask a reent gouzoud e pe-seurt amzer hag e pe-seurt degouez e ree ano anezo Spered ar Hrist a oa enno hag a verke en araog pe-seurt poaniou e-nefe ar Hrist da houzañ hag ar hloar a zeufe da heul.

BEVA EN EUN DOARE SANTEL

-13- Roet e oe dezo da anaoud, n'oa ket evito, med evidoh-c'hwi, evid ar gemennadurez-se o-deus bremañ prezegerien an Aviel embannet deoh dre ar Spered Santel degaset euz an neñv, eur gemennadurez o-deus c'hoant an éllez sellet outi. -13- Setu perag bezit prest a spered evid ar zervich; bezit war evez ha likit hoh oll esperâns er hras a dle beza roet p'en em ziskouezo Jezuz Krist. -14- Evel bugale zentus na vevit mui hervez ar youlou a-wechall, pa oah diouizieg.-15- Med evel m'eo santel an hini e-neus ho kalvet, c'hwi iveau bezit santel en hoh oll doareou-beva. -16- Rag skrivet eo: bezit santel, rag me a zo santel.

-17- Ha ma roit an ano a Dad d'an hini a varn pëb hini hervez e oberou, heb ober gwelloh da hini pe hini, bevit en doujañs e-pad amzer hoh harlu, -18- oh ouzoud n'eo ket gand traou a ya da get : arhant pe aour, eo ez oh bet frankizet

euz eun doare beva didalvez deuet deoh da hêrez digand ho tadou, -19- med gand eur gwad priziuz, hini eun oan disi ha dinamm, gwad ar Hrist, -20- a zo bet dibabet araog krouidigez ar bed, ha roet deoh da anaoud splann en amzeriou diweza, ablamour deoh. -21- Drezañ e kredit e Doue, e-neus e zavet a-douez ar re varo, ha roet dezañ gloar e doare ma kav ho feiz hag hoh esperafñ harp e Doue. -22- Glanneet ho-peus hoh eneou o senti ouz ar wirionez evid beva er garantez a vreur heb pilpouzèrèz. En em garit an eil egile heb fallgaloni, gand eur galon hlan.

-23- C'hwi hag a zo bet engehetet endro n'eo ket diwar eun hadenn vreinuz, med diwar gomz beo ha peurbaduz an Aotrou Doue; -24- rag heñvel ouz ar yeotenn eo ar horv, heñvel ouz bleunienn ar yeotenn eo e hloar; ar yeotenn a zi-zeh hag he bleunienn a gouez; -25- med padout a ra da viken Komz an Aotrou. Hogen ar Gomz-se eo an Aviel a zo bet embannet deoh.

AR MEN BEO

II -1- Taolit eta pell diouzoh peb falloni, peb gwidre, peb seurt pilpouzèrèz, avi ha drouk-prezegèrèz. -2- Evel bugale nevez-ganet, c'hoantait lêz digemmesk ar wirionez, ma kreskoh drezañ evid ar zilvidigez. -3- m'ho-peus tañveet madelez Doue. -4- O tostaad outañ, ar mén beo taolet a gostez gand an dud, med dibabet ha priziuz dirag Doue, -5- eo oh bet savet, c'hwi iver evel mein beo da veza eun ti spredel evid ober ahanoh eur gumuniez santel a veleien, evid kin-nig sakrifisou spredel, plijuz da Zoue dre Jezuz Krist. -6- Rag kavet e vez er Skritur: Setu ma lakan e Sion eur mén-korn euz an dibab, a briz braz, hag an neb a laka ennañ e fiziañs n'e-no ket a vez. -7- Deoh eta an dud a feiz, an enor; evid an dud difeiz a-vad, ar mén taolet a-gostez gand ar zaverien a zo deuet da veza mén-korn, -8- med iver eur mén skoill, eur roh hag a laka da gouenza. Mond a reont da skei outi dre ma ne-gredont ket er gomz ha kement-se eo a zo bet tonket deoh.

BEZA SERVICHERIEN DA ZOUÉ

-9- Med c'hwi a zo ar ouenn zibabet, ar gumuniez santel a veleien, ar vroad santel, ar bobl e-neus Doue perhennet evid embann burzudou an hini e-neus ho kalvet euz an deñvalijenn d'e sklerijenn estlammuz; -10- c'hwi ha n'oah ket eur bobl, hag a zo bremañ pobl Doue, c'hwi ha n'ho-poa ket kavet a drugarez hag ho-peus bremañ kavet trugarez.

-11- Va re muia-karet, me ho ped stard evel tremenidi ha tud estren d'en em vi-red ouz youlou fall ar horv, a ra brezel d'an ene. -12- Renit eur vuez vad e-touez ar bayaned, evid ma teufent, sklerijennet gand hoh oberou mad, da veuli Doue da zeiz e zonedigez war ar poent end-eeun ma tamallont ahanoh e gaou evel torfedourien. -13- Ablamour d'an Aotrou, doujitz da gement urz savet gand an dud, pe d'ar Roue, e-giz an uhella renier, -14- pe d'ar houarnerien degaset gantañ evid kastiza an dorfedourien hag evid meuli an dud a ra ar mad.

-15- Rag bolontez Doue eo e teufeh, oh ober ar mad, da lakaad da devel an dud dizesk ha diskiant. -16- Bevit evel tud frank heb lakaad ho frankiz evel eur ouel da guzad ho fallagriez, med bevit evel servicherien da Zoue. -17- Enorit an oll, karit ho preudeur, doujit da Zoue, enorit ar roue. -18- C'hwi servicherien, su-jit gand ar vrasa doujañs d'ho mistri, n'eo ket hebken ouz ar re a zo mad ha jentil, med ives ouz ar re a zo kintuz, -19- rag eur hras eo gouzañv, dre zoujañs evid Doue, poaniou hag a houzañver a-eneb peb gwir.

-20- Evid gwir, peseurt gloar a zo o houzañv taoliou, m'ho-peus greet an droug? Med ma houzañvit gand pasianted, goude beza greet ar mad, kement-se a zo eur hras dirag Doue. -21- Hogen, evid an dra-ze eo ez oh bet galvet, rag ar Hrist ives e-neus gouzañvet evidoh, o lezel eur skouer ganeoh evid ma valefah war e roudou, -22- eñ ha n'e-neus ket pehet ha n'eus bet en e henou gaou ebed, eñ, dismekañset ha ne zismegañse ket; en e boaniou ne hourdrouze ket, med a lakee e fiziañs en Hini a varn gand lealded. -23- Eñ hag e-neus douget en e gory e-unan, or pehejou war ar hoad, -24- evid ma varfem d'or pehejou ha ma vev-fem evid ar justis; eñ hag o-deus e houliou pareet ahanoh; -25- rag dianket e oah, evel deñved, med bremañ ez oh troet ouz ar pastor, diwaller hoh eneou.

BEZA KRISTEN E STAD AR BRIEDELEZ

III -1- Kenkoulz all c'hwi, ar gwragez, doujit d'ho pried, evel-se, ma 'z eus lod ha ne fell ket dezo kredi er Gomz, e vezint gounezet, heb ar gomz, gand buez o gwragez, -2- o weled ho puez glan ha leun a zoujañs. -3- Ho kened n'eo ket en diavêz eo e tle beza: bleo plansonet, braoigou aour, dillac kran; -4- med ra vezhe lufr kuzet er galon, kened divreinuz eur spered dous hag habask, setu ar pez e-neus priz braz dirag Doue. -5- Evel-se eo eh en em fiche gwechall ar merhed santel, a lakee o fizaiñs e Doue, doujuz ma vezent d'o friejou. -6- Evel-se Sara a zente ouz Abraham, heh Aotrou a ree anezañ; merhed dezi ez oh deuet da veza, oh ober ar mad hag o vired na zeufe aon ebed d'o touella.

KEMENT A ZO RED EVID BEVA ASAMBLEZ

-7- Diouz ho tu, c'hwi ive, gwazed, er vuez a renit asamblez a ouezo eo kizidikoh ar merhed. Bezit doujañs evito rag koulz ha c'hwi o-deus perz er hras a ro ar vuez. Evel-se ne zeuio netra d'hoh hegasi en ho pedennou. -8- Erfin, c'hwi oll, en em glevit kenetrezoh, leun a drugarez, a garantez-vreur, a druez, a izel-ded. -9- Na rentit ket droug evid droug, dismekañs evid dismekañs, med benniggit, rag evid an dra-ze eo ez oh bet galvet, evid kaoud ar vennoz da hèrez. Rag -10- «an hini a fell dezañ kared ar vuez ha gweled deiziou eüruz a dle mired e deod diouz an droug bag e vuzellou diouz ar homzou faoz; -11- trei kein d'an droug bag ober ar mad, klask ar peob ba kendelber ganti. -12- rag daoulagad an Aotrou a bar war an dud just, bag e skouarn a zo digor d'e bedenn, med dremm Doue a dro a-eneb ar re a ra an droug.»

FIZIANS E-KREIZ AN TRUBUILLOU

-13- Ha piou a raio droug deoh ma kemerit preder gand ar mad? -14- Gwelloh c'hoaz, m'ho pefe tro da houzañv evid ar justis, na c'hwi a zo eüruz; n'ho-pet ket aon rag an dud, na vezit ket strafuillet. -15- Med bennigit ar Hrist an Aotrou en ho kalonou. Bezit prest atao da renta kont euz ho esperañs, med gand douster ha resped euz an esperañs a zo ennoh dirag kement hini her gouleñn diganeoh; -16- med kement-se gand eur goustiañs eeun, evid ma vo, war ar pez end-eeun a rebechont deoh e gaou goloet a vez ar re a gav abeg er vuez vad a renit en Aotrou Krist. -17- Med gwelloh eo gouzañv oh ober ar mad, mar deo bolontez Doue, eged oh ober an droug.

-18- Rag ar Hrist iveau a zo maro eur wech evid ar pehejou, eñ, an hini dibeh, evid ar beherien, evid o hinnig da Zoue; eñ, bet lakeet d'ar maro en e gory, med rentet d'ar vuez dre ar Spered. -19- Neuze eo eet da brezeg d'an eneou dalhet er prizon zoken, -20- o-doa disentet gwechall pa gemere pasianted doue heh amzer, en deiziou Noe, pa edod oh ober an arh a oe saveteet enni eun nebeud a dud, seiz anezo,a-dreuz an dour.. -21- Ar skeudenn e oa euz ar vadeziant a ra deoh bremañ beza salvet, n'eo ket o lemel sklabez ar horv, med o uestla da Zoue eur goustiañs vad dre adsao Jezuz Krist, -22- a zo a zehou da Zoue, eet d'an neñv hag a zuj dezañ an êlez, ar briñzéléziou hag ar gallou-degeziou.

CHENCH BUEZ

IV --1- Peogwir e-neus gouzañvet Jezuz Krist en e gory, c'hwi iveau, kredit stard kement-mañ : an neb e-neus bet da houzañv en e gory e-neus troet kein d'ar pehed, -2- evid beva an nemorant euz e vuez douarel, n'eo mui hervez youlou an dud, med hervez bolontez Doue. -3- Awalh eo a-vad beza greet en amzer dremenet, bolontez ar bayaned, o veva en dizurziou, er youlou fall, en dirollèrèz, en evadegou hag en azeulidigez mezuz ar fals-doueou; -4- war gement-se e kavont iskiz ne redfeh mui ganto da glask an heveleb dirollèrèz a hadaliez, hag e tismegañsont ahanoh. -5- Med da renta kont o-dezo d'an hini a zo prest da varn ar re veo hag ar re varo.

-6- Setu perag, gwir eo, eo bet embannet ar Helou Mad d'ar re varo zoken, evid ma vevfent hervez Doue dre ar Spered, int-i hag a zo barnet er horv hervez an dud. -7- Tost eo an termen evid peb tra; bezit dalhmad e karantez an eil evid egile, rag ar garantez a zilam eun niver braz a behejou. -9- Roit heb klemm degemer an eil d'egile. -10- Ra zeuio peb hini hervez an donezon e-neus bet, d'en em lakaad an eil e servich egile, evel merourien vad gras Doue a zo dezi liesseurt a fruez. -11- Ma komz unan bennag, ra vo evid embann komzou Doue; m'e-neus unan bennag eur zervich en e garg, ra zervicho gand an nerz a ro Doue evid ma vo, e peb tra, dre Jezuz Krist, rentet gloar da Zoue, eñ hag a zo dezañ gloar hag Aotroniez evid an oll gantvejou. Amen!

-12- Va re muia-karet, arabad deoh beza souezet gand an tan-gwall bet elumet en ho touez evid amproui ahano h evel ma vije aze eun dra divoaz. -13- Med e kement ha m'ho-peus perz e poaniou ar Hrist, bezit laouen evid beza er joa hag el levenez pa vezo diskouezet e hloar. -14- Ma vezit dismagañset ablamo ur da ano ar Hrist, eüruz oh c'hwi, rag ar Spered a hloar , Spered Doue a blav warnoh. -15- Arabad eo e-nefe hini ebed ahano h da houzañv e-giz muntrer, laer, torfedour pe flatrer. -16- Mar deo e-giz kristen a-vad, arabad eo dezañ kaoud mez a gement-se, ra gano meuleudi da Zoue ablamo ur d'an ano-se.

-17- Rag deuet eo ar mare ma vo digoret ar varnedigez dre zemeurañs Doue, ha ma stager ganeom-ni da genta, pe-seurt finvez e vo evid ar re na zentont ket ouz Aviel Douéé -18- Ha m'eo dièz d'an den just beza salvet, pena oaz e vo kont gand an den difeiz, ar peher? -19- Evel-se eta, ra zeuio ar re a houzañv hervez bolontez Doue da fizioud o eneou er Hrouer fidel, oh ober ar mad.

KEMERED PREDER GAND AN DROPELL

V -1- Alia a ran eta ar gozidi a zo en ho touez, me eur hoziad eveldo ha test euz poaniou ar Hrist, me hag am-eus perz er hloar a zo o vond da veza diskouezet : -2- evesait ouz tropell Doue fiziet ennoh, ouz e ren n'eo ket dre heg, med dre gaer, hervez Doue, n'eo ket gand eur volontez-gounid direiz, med a galon vad. -3- N'it ket da ober ho mestr war ar re a zo degouezet ganeoh da lod, med deuit da veza skouer an tropell ; -4- ha p'en em ziskouezo ar Pastor-meur, c'hwi a resevo ar gurunenn a hloar ha na zeu ket da weñvi. -5- Evel-se ives, c'hwi yaouankizou, sujitz d'ar gozidi hag oll kenetrezo, bezit izel a galon, rag «*Doue a zalb penn d'an den lorbuz bag a ro e bras d'an den izel a galon.*» -6- Bezit eta izel a galon dindan dorn gallouduz Doue, ma 'h uhellaio ahano h pa zeuio ar mare - 7- Dizammit warnañ hoh oll enkreziou, rag eñ e-unan a gerner preder ganeoh. -8- Na vezit ket troet da eva, bezit war evez, hoh enebour, an diaoul, evel eul leon o yudal, a zo war ho tro o klask unan bennag da lonka. -9- Stourmit stard outañ dre ar feiz, o houzoud o-deus ho preudeur, strewet dre ar bed, da houzañv ar memez poaniou. -10- Doue an oll hrsou e-neus ho kalvet d'e hloar peurbadel er Hrist; goude m'ho pezo bet da houzañv e-pad eun nebeud amzer hoh adasavo, eñ e-unan; eñ ho startaio, ho kennerzo, a roio deoh beza divrall. -11- Dezañ an Aotroniez da virviken. Amen!

-12- Skrivet am-eus deoh an nebeud geriou-mañ gand sikour Silvan a zo evidon eur breur feal, evid ho kennerza ha renta testeni deoh ez oh unanet e gwir hrs Doue. -13- Kumuniez an dud dibabet a zo e babilon ho salud, hag ives Mark va mab. -14- Roit ar zalud an eil d'egile dre eur pok a vreur. Peoh deoh-c'hwi oll a zo er Hrist.

ELLIZÉR SANT PER



PER.II

En anō Simon Pèr, e houlenn ar skrivagner trugarekaad evid ar grasou resevet digand Doue; goudeze e houlenn chom fidel da gelennadurez an Ebrestel, rag ar reze a zo testou hag o-deus gwelet brazder an Aotrou Doue. Evid ar pez a zell ouz ar fals-doktored, e ranker o lezel da vond da goll, int-i hag à ra goap ahanom war zigarez ne zistro ket an Aotrou. Med dñnd a ray d'e eur da renevezi ar bed. Red eo e hortoz o veva en eun doare santel.

EIL LIZER SANT PER

SALUDOU

I -1- Simon Pèr, servicher hag abostol Jezuz Krist, d'ar re o-deus resevet dre justis Jezuz Krist, on Doue hag or Zalver, eur feiz ken talvouduz hag on hini. -2- Ra zeuio a-fonn deoh ar hras hag ar peoh dre an anaoudegez a Zoue hag euz or Zalver Jezuz Krist.

GALVET DA VEZA KRISTEN

-3- Rag galloud Doue e-neus roet deom, e donezon, kement a zo red evid ar vuez hag evid an devosion, o rei deom da anaoud an hini e-neus or galvet dre e hloar e-unan ha dre e vertuz. -4- An talvoudusa madou bet prometet deom a zo bet roet deom evid ma helloh, drezo, antreal e kumuniez gand an natur doueel, o veza en em ziframmet euz ar vreinadurez maget er bed gand ar you-lou fall. -5- Setu perag eta, lakit hoh oll nerz da unani ar vertuz gand ho feiz, -6- gand ar vertuz an anaoudegez, gand an anaoudegez ar vestroniez warnoh hoh-unan, gand ar vestroniez warnoh hoh-unan ar basianted, gand ar basian-ted, an devosion, -7- gand an devosion ar vignoniez a vreur, gand ar vignoniez a vreur, ar garantez. -8- Rag ar perziou mad-se, ho-peus anezo puill n'ho lezont ket dilabour na difrouez evid anaoud an Aotrou Krist. -9- Rag an hini a ra diouer anezo dezañ, a zo eun den dall, o tastorna, ankounac'haad a ra ez eo bet glanneet euz e behejou a-wechall.

-10- Setu perag, breudeur, bezit aketusoh c'hoaz da boania evid startaad ho kalvadenn hag ho tibabidigez; oh ober evel-se n'ho-peus riskl ebed da goueza morse. -11- Evel-se e vo digoret frank doriou rouantelez peurbadel on Aotrou ha Salver Jezuz Krist.

DELHER DA GOMZOU AN EBESTEL HAG AR BROFEDED

-12- Setu perag eo va menoz degas kement-se deoh da zonj, daoust ma 'h ou-zoh an dra-ze ha ma kendalhit stard er wirionez a-vremañ; -13- just e kavan e keid ha m'emaon er bed-mañ, delher ahano war evez dre galz a aliou, -14- oh ouzoud mad ema tost evidoh deiz an disparti, evel m-e-neus an Aotrou Jezuz Krist roet din da houzoud. -15- Med teurel evez mad a rin, ma helloh e peb degouez, pa vezin eet kuit, delher sonj euz ar gelennadurez-se. -16- N'eo ket diwar konchennou savet brao on-eus roet deoh da anaoud galloud ha done-digez Jezuz Krist, med diwar beza bet test gand qn daoulagad e-kreiz e veurded, -17- rag resevet e-neus digand e Dad enor ha gloar, pa zeuas euz splannder e hloar, eur vouez o lavared : «Va Mab muia kared eo hemañ, ennañ e kavan va dudi. » -18- Ar vouez-se, ni ievez on-eus he hlevet, dont a ree euz an nefiv, p'e-dom gantañ war ar menez santel. -19- Evel-se eo bet starteet ennom c'hoaz or feiz e komzou ar brofeded, ha mad a rit teurel evez outi evel ouz eul lamp o

lugerni en eul lêh teñival. -20- Da genta , red eo deoh gouzoud mad kement-mañ, profesiou ar Skritur n'int ket da veza diskleriet en eun doare prevez, -21- rag n'e-neus ket morse bolontez eun den profedet tra-pe-dra, med poulzet gand ar Spered, tud o-deus komzet a-berz Doue.

A-ENEB AR FALS-DOKTORED

II -1- Fals-profeded a zo bet ive e-touez an dud; evel-se e vo iveau en ho touez fals-profeded a zegaso, dre zindan, kelennadureziou noazuz kenañ, o vond beteg nah ar Mestr e-neus o dasprenet, o sacha warno eun dismantr hag a zeuio prim, -2- ha kalz a yelo d'o heul en o buhez diroll. Ablamour dezo e vo mallozet hent ar wirionez, -3- ha stag ouz an arhant evel ma 'z int, e waskint ahanoh gand komzou faoz. Evito, pell a zo dija ne ehan ket ar varnedigez ha n'ema ket o hollidigez o kousked: -4- Rag Doue n'eo ket bet damantuz e keñver an élez fall, med plujet e-neus anezo hag o lakeet e dalh an islonk teñival, o terhel anezo evid ar varnedigez. -5- N'e-neus ket bet damant kennebeud evid ar bed koz, med da vare an dour-beuz e vougas an dud difeiz, e viras Noe, an eizved euz ar re a oa chomet beo, eñ hag a embanne ar justis.

-6- Goudeze e oe kondaonet Sodom ha Gomor da veza pulluhet ha distrujet, da veza eur skouer evid an dud difeiz da zond. -7- Frankiza a reas Lot, an den just, feuket gand doareou beva an dorfedourien gadal. -8- Rag an den just, o veva en o-zouez, a wele hag a gleve euz an eil devez d'egile o oberou a skouer fall a oa eur rann-galon evid e ene a zen just.. -9- Gwir eo e hell an Aotrou tenna a boan an dud just ha lakaad a-gostez an dud fallagez evid o hastiza da zeiz ar varn, -10- da genta ar re a red warlerh youlou fall ar horv gand o hoantegeziou louz ha n'o-deus nemed dispriz evid ar Mestr-Meur, re sur anezo o-unan, dicheg, n'o-deus ket aon da zismegañsi ar Hloariou ; -11- ha koulkoude an élez, daoust dezo beza nerzusoh ha galloudusoh egeto, a jom heb dougen a-eneb dezo, dirag an Aotrou, eur varnedigez dismagañsuz. -12- Med an dud-se, evel leoned diskiant, tonket dre natur da veza paket ha da zond da vreina a wall-gomz a-eneb ar pez ne anavezont ket hag a vreino evel ma vrein al loened.

-13- Dastum a raint evel-se gopr an dislealded, o flijadur a gavont o ren eur vu-ez fall ouz sklerijenn an deiz, bez ez int saotr ha loustoni, o flijadur a gavont er gevier pa vezont oh ober chervad. -14- O daoulagad karget a avoultriez ne gavont ket o gwali a behejou, o teseo an dud sempl a bakont en o fejou, troet gand ar gwall-c'hoantegeziou ne glaskont nemed gounid arhant, bugale a valloz int, -15- dilezet ganto an hent mad ez int eet diwar o hent, o vond warlerh Balaam, mab da Vosor, e-noa lezet beza tentet gand eur gopr disleal; -16- med eur gentel a oe roet dezañ evid beza eet a-eneb al lezenn, eul loen-samm mud, kemeret gantañ eur vouez-den a lakeaz harz da follentez ar profed.

-17- Ar re-ze a zo feunteuniou eet d'an hesk, koumouennou poulzet gand ar

wall-amzer, evito eo dalhet an deñvalijenn a vo o lod. -18- En o genou komzou groz ha goullo, e sachont ganto dre youlou-fall ar horv, ar re o-deus a veh en em dennen a-douez an dud a vev e gaou. -19- Frankiz a brometont dezo, daoust ma 'z int o-unan sklav d'ar vreinadurez; rag sklav e vezet da gement e-nevez an treh warnor. -20- Rag ar re a zo en em dennen euz loustoni ar bed, en-abeg m'o-deus greet anaoudegez gand Or Zalver, an Aotrou Krist, ma teu dezo lezel anezo d'o faka a-nevez ha da ober o mestr warno, o stad a zeu da veza a-benn ar fin kalz falloh eged ar henta. -21- Gwelloh e vefe bet dezo beza chomet heb anaoud hent ar justis, eged trei kein d'ar gourhemenn santel a oa bet roet dezo, goude beza henn anavezet. -22- Degouezet eo ganto ar pez a lavar ken brao ar hrenn-lavar : distroet eo ar hi d'ar pez e-neus dislonket, hag ar wiz, a-veh gwalhet, da ruill er vouillenn.

DOND A REY DEIZ AN AOTROU

III -1- Mignoned, hemañ eo dija an eil lizer a skrivan deoh; en daou lizer-mañ eh houllennan ma teufeh da zoñjal en amzer dremenet, ma teuio ennoh an doare reiz da zoñjal. -2- Ho pet soñj euz ar homzou bet lavaret en araog gand ar brofeded santel hag euz-gourhemenn hoh ebrestel, hini an Aotrou ha Salver. -3- Ha da genta, gouezit mad : en deveziou diweza e teuio tud diskredig, goapauz, poulzet gand o youlou fall, hag a lavar : -4- «Peleh ema ar bromesa euz e zonedigez? Rag abaoe m'eo maro on tadoù, an oll draou a jom e stad m'e-dont er penn-kenta euz ar groudigez.» -5- O lavared groñis kement-se e tizoñ-jont ez oa pell a oa neñvou ha douar deuet diwar an dour ha dalhet en eur pez gand an dour dre hrs komz Doue; -6- hag evel-se ives e oe ar bed beuzet en dour.


-7- an neñvou avad hag an douar a-vremañ, an hevelèb komz a vir anezo evid an tan, evid deiz ar varn, an deiz ma vo kaset da goll an dud difeiz. -8- Eun dra a zo da vianna, va mignoned, ha na dleit ket dizoñjal : evid an Aotrou, eun devez hebken a zo evel mil bloavez, ha mil bloavez evel eun devez hebken. -9- An Aotrou ne vez dale ebed gantañ evid delher d'e bromesa, daoust ma lavar lod e-neus dale, med pasiañited eo e-neus en ho keñver, ne fêll ket dezañ ez afe neb-hini da goll, med ma teufe an oll da ober pinijenn. -10- Deiz an Aotrou a zeuio evel eul laer, en devez-se an neñvou a strako, o vond da get, teuzi a ray an elfennou entanet hag e vo barnet an douar ha kement e-neus greet. -11- Evel-se, peogwir an oll draou-ze a dle mond da get, petra dlefem-ni beza? Pebez santelez a vuez! Pebez doujañs a Zoue!

-12- C'hwi a zo o hortoz donedigez Doue hag a ra dezañ dont buannoh, an deiz ma 'z ay da get an neñvou entanet, ma teuzo an elfennou en tan. -13- O hortoz emaom, hervez e bromesa, neñvou nevez, douar nevez, a zo enno ar justis oh ober he anneze.

BEZA WAR EVEZ

-14- Setu perag, va mignonned, e-pad m'emaoh o hortoz, lakin ho poan da vez a gantañ e peoh, nêt ha direbech. -15- Bezit sur eo pasianted hir an Aotrou, ho silvidigez. Evel-se e-neus skrivet deoh Paol, or breur karet, hervez ar furnez a zo bet roet dezañ. -16- ha kement-se eo a lavar en e oll liziri pa gomz euz an traou-se, penriadou diëz a zo enno hag an dud dizesk ha laosk en o feiz a gompren anezo a-dreuz, evel ma reont iveau ar skrituriou, ar pez o has da goll. -17- Mad, va mignonned, setu c'hwi prevenet; bezit war evez, na lezit ket an dud difeiz d'ho kas d'o heul na da denna hoh esperañs diganeoh. -18- ra gresko a-vad ho kras hag hoh anaoudegez euz or Zalver Jezuz Krist. Dezañ gloar azaleg bremañ ha da virviken. Amen!





kenta lizer sant yann



YANN I

Gand an heveleb stumm-skriva evel an Aviel, Yann a glask degas ar gristenien a Azia-Izella da veva e kommuniez gand Doue. Evid an dra-ze e ranker beva ouz sklerijenn ar feiz ha trei kein d'ar pehed, o vired ar gourhemennou, oh en em ziwall ouz ar bed hag an antikristou, red eo ive beva er garantez gand an nesa. Euz Doue e unan eo e teu ar sklerijenn hag ar garantez; en a zo sklerijenn, en a zo karantez. Dre ar hom-zou-se e ro Yann deom an diverra euz an diskulliadur euz a Zoue en e bez.

KENTA LIZER SANT YANN

KENTLAVAR

I -1- Ar pez a oa anezafñ abaoe ar penn kenta, ar pez on-eus klevet, ar pez o-deus gwelet on daoulagad, ar pez on-eus arrestet hag on-eus touchet gand on daouarn euz ar gomz a vuez, -2- rag en em ziskouezet he-deus ar vuez, ha ni on-eus gwelet, a ro testeni hag a embann deoh ar vuez peurbaduz, a oa troet warzu an Tad, hag he-deus en em ziskouezet deom. -3- Kement on-eus gwelet ha klevet a embannom deoh-hwi iveauz, evid ma vefeh, c'hwi iveauz, unanet ganeom. On unaniez deom-ni a zo unaniez gand an Tad ha gand e Vab Jezuz Krist. -4- Ha ni a skriv deoh an dra-ze, evid ma vo leun-barr on levenez.

KERZED ER SKLERIJENN DIEUBET EUZ AR PEHED

-5- Ha setu amañ ar gemennadurez on-eus klevet gantañ, hag a ziskuillom deoh: sklerijenn eo Doue, ha n'eus ennañ tres ebed a deñvalijenn. -6- Ma lavarom: «U-nanet om gantañ », ha ni o kerzed en deñvalijenn, e lavarom gevier, ne reom ket ar wirionez. -7- Med ma kerzom er sklerijenn evel m'ema eñ er sklerijenn, ez om unanet kenetrezm ha gwad ar Hrist e Vab, a zo ouz or glannaad a beb pehed. -8- Ma lavarom n'on-eus ket a behed, e faziom ha n'ema ket ar wirionez ennom. -9- Ma'h anzavom or pehejou, fidel ha just evel ma 'z eo, e pardonno deom, hag or glannaio a beb falloni. -10- Ma lavarom n'om ket peherien, e reom anezafñ eur gaouiad, hag e gomz n'ema ket ennom.

II -1- Va bugaligou, skriva a ran deoh kement-mañ evid ma chomfeh heb pehi. Med ma tegouez da hini pe hini koueza er pehed,, ni on-eus eun diennour dirag an Tad: Jezuz Krist, an hini a zo dibeh, eñ eo an hini lidlazet evid an digoll euz ar pehejou ha n'eo ket hebken euz or re, med ouspenn euz re ar bed a-bez.

MIRED GOURHEMENN AR GARANTEZ

-3- Gand an dra-mañ eh ouzom eh anavezom anezafñ, ma talhom d'e hourhemennou. -4- An neb a lavar :«Me a anavez anezafñ», ha na vir ket e hourhemennou, hennez a lavar gevier, ha n'ema ket ar wirionez ennañ. -5- Med an hini a vir e gomz e gwirionez, eo deuet da wir ar garantez ennañ. E kement-mañ eh ouzom mad emaom ennañ.

-6- An hini a lavar chom ennañ a dle eñ kerzed dre an hent e-neus Jezuz Krist , eñ iveauz, kerzed drezañ. -7- Va re-muija karet, n'eo ket eur gourhemenn nevez a skrivan deoh, med eur gourhemenn hag a zo anezafñ abaoe pell 'zo; abaoe ar penn-kenta ho-peus anezafñ, hag ar gourhemenn ho-peus a-bell 'zo eo ar gomz ho-peus klevet. -8- Koulskoude eur gourhemenn nevez eo a skrivan deoh -kement-se a zo gwir ennañ hag ennoh-, peogwir e tremen an deñva-

lijenn hag e sked dija ar sklerijenn wirion. -9- An hini a lavar beza er sklerijenn, hag en kasoni dezañ ouz e vreur, a zo c'hoaz en deñvalijenn. -10- An hini a gar e vreur a zo er sklerijenn, ha n'eus netra ennañ d'e lakaad da strebotti. -11- An neb a-vad e-neus kas ouz e vreur a zo en deñvalijenn, ne oar ket da beleh ez a, peogwir eo dallet e zaoulagad gand an deñvalijenn.

FEIZ AR GRISTENIEN DIRAG AR BED

-12- Va bugaligou, skriva a ran deoh eo pardonet deoh ho pehejou ablamour d'e ano dezañ: Jezuz. -13- Deoh tadou e lavaran : anaoud a rit an hini a zo anezañ abaoe ar penn-kenta; ha deoh yaouankizou e lavaran : treh oh d'ar Fallagr. -14- Deoh va bugaligou am-eus lavaret : c'hwi a anavez an Tad; deoh, tadou am-eus lavaret: c'hwi a anavez an hini a zo abaoe ar penn-kenta; c'hwi yaouankizou, am-eus lavaret deoh, c'hwi a zo kreñv, komz Doue a zo o chom ennoh, treh oh bet d'ar Fallagr. -15- Na garit ket ar bed, nag ar pez a zo er bed, An hini a gar ar bed, n'emaket ennañ karantez an Tad; -16- peogwir kement a zo er bed, youlou fall an natur, c'hoantegziou an daoulagad, ar fiziañs ourgouilluz er binvidigez ne zeuont ket euz an Tad, med euz ar bed, -17- Hogen ar bed a dremen ha gantañ e c'hoantegziou med an hini a ra bolontez Doue a jom da viken.

-18- Va bugaligou, en eur ziweza emaom. Klevet ho-peus lavared ez eus eun Antikrist o tond, hogen, azaleg bremañ, meur a Antikrist a zo aze hag evel-se eh ouzom ema an eur ziweza. -19- Euz on touez deom eo ez int savet; ma vijent bet euz on tud e vijent chomet ganeom. Med red e oa e vije diskouezet sklêr ne oant ket euz on tud-ni. -20- C'hwi avad a zo bet olevet gand ar Zant hag oll eh ouzoh. -21- N'am-eus ket skrivet ne ouieh ket ar wirionez, med lavaret am-eus eh anavezit anezi; ha, diwar ar wirionez ne zav netra hag a vefe gaou. -22- Ar gaouiad, piou eo ? nemed an hini a nah eo Jezuz Krist ar Hrist, hennez eo an Antikrist. -23- An neb a nah ar Mab, n'emaket kennebeud an Tad gantañ.

-24- Evidoh-hwi, ra jomo ennoh ar gemennadurez ho-peus klevet azaleg ar penn-kenta. Ma chom ennoh ar gemennadurez ho-peus klevet azaleg ar penn-kenta, c'hwi iveau a jomo er Mab hag en Tad, -25- hag ar bromesa e-neus en greet deom eo ar vuez peurbaduz.

-26- setu aze ar pez a felle din skriva deoh diwarbenn ar re a glask ho kas da goll. -27- Evidoh-hwi an olevadur ho-peus resevet digantañ a jom ennoh ha n'ho-peus ezomm ebed da veza kenteliet war beb tra gand an olevadur, ha gwirion eo ha n'eo ket gevier-, peogwir e-neus ho kenteliet; c'hwi a jom ennañ. -28- Neuze 'ta, va bugaligou, chomit ennañ evid beza leun a asurañs, p'en em zis-kouezo hag heb mez ebed pell dioutañ, da zeiz e zonedigez.

BEVA HERVEZ AR JUSTIS

-29- Peogwir eh ouzoh eo just Doue, diskleirit iveau eo ganet anezañ kement hini a vev hervez ar justis.

III -1- Gwelit eta pegen braz donezon eo bet karantez vraz an Tad evidom, beteg beza anvet bugale da Zoue, ha bez 'ez om! Setu amañ perag n'hell ket ar bed anaoud anezañ : n'e-neus ket anavezet Doue. -2- Va re muia-karet, bremañ dija ez om bugale da Zoue, med n'eo ket c'hoaz displeget splann ar pez a vezim, goûd a ouzom, p'en em ziskouezo, e vezim hefivel cutañ, o veza ma welim anezañ evel m'ema. -3- Kement-hini e-neus eun heveleb esperañs e Doue, a zeu da veza glan evel m'eo glan eñ, Jezuz. -4- Kement-hini a beh a dorr al lezenn, rag pehia zo terri al lezenn. -5- med c'hwi a oar eo deuet Jezuz evid dilemel ar pehejou hag ennañ n'eus ket a behed.

-6- An-neb-piou-bennag a ra e zemeurañs ennañ, ne beh ket. An neb a beh ne wel ket anezañ, ne anavez ket anezañ. -7- Va bugaligou, arabad eo da zen dond d'ho touella, an neb a vev hervez ar justis a zo just, evel m'eo just, eñ, Jezuz. -8- An neb a beh, a zo diwar an diaoul, peogwir an diaoul a zo peher abaoe ar penn-kenta. Setu amañ perag eo deuet Mab Doue da ziskar an diaoul. -9- An neb a zo ganet euz a Zoue, ne beh mui, rag chom a ra ennañ an hadenn anezañ; n'hell ket mui pehi, peogwir eo ganet euz a Zoue. -10- Setu amañ penaor e weler pere a zo bugale da Zoue, ha pere a zo bugale d'an diaoul: an neb n'eo ket just n'eo ket a Zoue, na kennebeud an neb ne gar ket e vreur.

-11- Setu amañ ar gemennadurez ho-peus klevet abaoe ar penn-kenta: en em gared a dleom an eil egile. -12- N'eo ket evel Kain a oa diwar ar Fallagr, hag a lazas e vreur; ha perag e lazas anezañ? Fall oa e oberou e keid ha ma oa just re e vreur. -13- Na vezit ket souezet, breudeur, m'e-neus ar bed kasoni ouzoh. -14- Ni a oar ez om tremenet euz ar maro d'ar vuez o veza ma karom or breudeur. An hini ne gar ket a jom er maro. -15- An neb e-neus kasoni ouz e vreur a zo eur muntrer ha c'hwi a oar, muntrer ebed ne jom gantañ ar vuez peurbaduz. -16- Hiviziken, eo evel-henn eh ouzoh petra eo ar garantez: Jezuz, eñ, e-neus roet e vuez evidom, ni a dle iveau rei or buez evid or breudeur. -17- An hini e-neus madou er bed-mañ, hag a wel e vreur en dienez, ma teu dezañ mouga ennañ peb truez, penaor e chomfe ennañ karantez evid Doue?

-18- Va bugaligou, karantez a dleom kaoud, n'eo ket dre gomz, na diwar beg an teod, med dre ober hag er wirionez. -19- Setu amañ penaor e vezim heb douetañs ebed er wirionez hag e lakim or houstiañs e peoh dirag Doue. -20- Ma teu or houstiañs d'on tamall, Doue a zo brasoh eged or halon, hag anaoud a ra peb tra. -21- Va re-muia-karet, ma ne rebech or houstiañs netra deom, neuze ez om da Zoue gand asurañs hag e resevom digantañ petra bennag a houlen-fem, ablamour ma virom e hourhemennou ha ma reom ar pez a blij dezañ. -23- ha setu e hourhemenn : kredi stard e Jezuz Krist hag en em gared kenetrezom,

evel m'e-neus gourhemennet deom. -24- An neb a wir e hourhemennou a jom e Doue ha Doue ennañ, ha dre-ze eh ouzom ema o chom ennom dre ar Spered e-neus roet deom.

MERZOUD AR SPEREJOU DRE AR FEIZ E JEZUZ KRIST

IV - -1- Va re-muia-karet, arabad eo deoh kredi e n'eus forz pe brofed, med taolit evez war o frofesiou, evid gweled ha dont a reont euz a Zoue, rag kalz a fals-profeded a zo o reded dre ar bed. -2- Diwar an dra-mañ eh anavezit Spered Doue : kement hini a embann Jezuz Krist deuet en eur horv a zo euz a Zoue, -3- ha kement spered ha ne anzav ket ar Jezuz-se, n'eo ket euz a Zoue; spered an Antikrist eo, ho-peus klevet embann ema o tond, hag azaleg bremañ ema er bed. -4- C'hwi va bugaligou hag a zo euz a Zoue a zo treh d'ar brofeded-se, rag m'eo brasoh an hini a zo o chom en ho touuez eged an hini a zo er bed. -5- Int-i a zo euz ar bed, setu perag ema ganto komzou ar bed, hag e selaou ar bed anezo. -6- Ni avad, ni a zo euz a Zoue; an hini a glask anaoud Doue a zelaou ahanom. Evel-se eo e reom an dibab etre ar spered a wirionez hag ar spered a fazi.

AR GARANTEZ A ZEU EUZ A ZOUE

-7- Va re muia-karet, en em garom an eil egile, rag euz a zoue e teu ar garantez, ha kement hini e-neus karantez a zo ganet euz a Zoue hag a zeu da anaoud Doue. -8- An neb ne gar ket ne anavez ket Doue, rag Doue a zo karantez. -9- Setu perag eo deuet karantez Doue d'en em ziskouez en on touez; e Vab muia-karet e-neus kaset er bed, deom da veva drezañ. -10- Amañ eo ema ar garantez: n'eo ket ni eo on-eus karet Doue, med eñ eo an hini e-neus karet ahanom, ha kaset e Vab da veza roet e sakrifis evid ar pardon euz ar pehejou. -11- Va re muia-karet, peogwir e-neus Doue or haret evel-se, ni, d'on tro a dle kaoud karantez an eil evid egile. -12- Doue, n'e-neus den gwelet anezañ biskoaz, med, m'en em garom an eil egile, ema Doue o chom ennon, hag e garantez a zo ennom en he haerra. -13- Gand an dra-mañ ez om sur emaom o chom ennañ, hag eñ o chom ennom : perz en e Spered e-neus roet deom. -14- Ha ni, p'on-eus gwelet gand on daoulagd, ni a zoug testeni e-neus an Tad kaset e Vab da veza Salver ar bed. -15- Kement-hini a ziskleir eo Jezuz Mab Doue, ema Doue o chom ennañ, hag eñ e Doue. -16- Ha ni a zo deuet da anaoud ervad, dre ar feiz, ar garantez e-neus Doue evidom. Karantez eo Doue; an neb a zo o chom er garantez a zo o chom e Doue ha Doue a zo o chom ennañ. -17- Evel-henn e teu ar garantez da veza peurvad en on touez; leun a fiziañs e hortozom deiz ar varn, rag evel m'ema eñ, Jezuz, evel-se emaom, ni iveau, er bed-mañ. -18- N'eus aon ebed er garantez, med ar garantez peurvad a daol an aon er mez, ha gand an aon ar hastiz hag an neb e-neus aon n'eo ket deuet d'eur garantez peurvad. -19- Ni avad on-eus karantez peogwir eñ eo e-neus or haret da genta. -20- Ma lavar hini pe hini : «me a gar Doue», hag e-neus kasoni ouz e vreur,

hennez a zo gaouiad, rag an hini ne gar ket e vreur hag a wel, ne hell ket kared Doue ha na wel ket. -21- Ha setu amañ ar gourhemenn on-eus bet digantañ: an neb a gar Doue, ra garo iveau e vreur.

AR FEIZ E DOUE GWRIZIENNNET ER GARANTEZ

V -1- Kement hini a gred eo Jezuz ar Hrist, hennez a zo ganet euz a Zoue, ha kement-hini e-neus karantez evid an Tad, a gar iveau e hini a zo ganet anezañ. -2- Anad eo deom e karom bugale Doue pa garom Doue ha pa virom e hourhemennou. -3- Rag an dra-mañ eo kared Doue: mired e hourhemennou, ha n'eo ket e hourhemennou eur zamm pounner, -4- peogwir kement-hini a zo ganet euz a Zoue, a zo treh d'ar bed hag ar pez e-neus greet deom beza treh d'ar bed, ar feiz an hini eo. -5- Piou eta eo an hini a zo treh d'ar bed, ma n'eo ket an hini a gred eo Jezuz Mab da Zoue. -6- Eñ eo Jezuz Krist, an hini a zo deuet dre an dour hag ar gwad, n'eo ket en dour hebken, med en dour hag er gwad, -ha test eo ar Spered, rag ar wirionez memez eo ar Spered.

-7- Tri a zo anezo o rei testeni : -8- ar Spered, an dour hag ar gwad, ha ne reont o zri nemed eun testeni hebken. -9- Ma tegemerom testeni an dud, testeni Doue a zo brasoh rag testeni Doue eo an hini e-neus roet diwarbenn e Vab. -10- An hini e-neus feiz e Mab Doue, e-neus ennañ e-unan an testeni-se; an hini ne gred ket e Doue hennez a ra eur gaouiad anezañ, peogwir ne gred ket en testeni e-neus Dgue roet d'e Vab, -11- ha setu amañ an testeni-se: Doue e-neus roet deom ar vuez peurbaduz hag ar vuez-se a zo en e Vab. -12- An neb e-neus ar Mab e-neus ar vuez, an neb n'e-neus ket Mab Doue n'e-neus ket ar vuez. -13- Skrivet am-eus deoh kement-se, evid reï deoh da anaoud ho-peus ar vuez peurbaduz , c'hwi hag a gred e ano Mab doue. -14- Ar pez a ra deom beza en asur dirag Doue eo ma selaou ahanom pa vez or gouleññ hervez e volontez. -15- Ha peogwir eh ouzom e selaou or gouleññ, n'eus forz pere e vefent, eh ouzom iveau on-eus ar pez on-eus goulenet. -16- Ma wel hini pe hini e vreur oh ober eur pehed, eur pehed ha na gas ket d'ar maro, dezañ pedi, ha Doue a roio dezañ ar vuez, da vianna ma ne gas ket d'ar maro ar pehed e-neus greet. Eur pehed a zo hag a gas d'ar maro, n'eo ket diwarbenn hennez eo e houllenn pedi. -17- Kement fallagriez a zo pehed, med kement pehed ne gas ket d'ar maro. -18- Her gouzoud a reom an neb a zo ganet euz a Zoue ne beh mui, med ar Mab ganet a Zoue a ziwall anezañ hag an hini fallag n'e-neus ket krog warnañ.

-19- Her gouzoud a reom, ni a zo euz a Zoue, daoust m'ema ar bed a-bez dindan galloud ar Fallagr. Her gouzoud a reom eo deuet Mab Doue hag e-neus roet deom ar Spered evid anaoud an hini gwirion, ha ni a zo en hini gwirion, en e Vab Jezuz Krist. Eñ eo an hini gwirion, eñ a zo Doue hag ar vuez peurbadel. -21- Va bugaligou, taolit evez na 'z aféh e servich ar fals-doueed.

YANN II ha III

Al liziri-mañ a zo bet kaset d'eun lliz hag a oa war-nez trei gand eur fals-kredenn, an hini a nah eo Jezuz Doue. Evid mired ouz ar gristenien da fazia war ar poent-se, oberour al liziri a lavar beza war evez ouz ar fals-doktored, ar re a embann menosiou nevez. Ra jomint stag ouz kelennadurez an Ebrestel.



-1- Ar Hoziad, d'an Itron dibabet, ha d'he bugale a garan e sklerijenn ar wirionez, ha n'eo ket me hebken, med iveau ar re oll o-deus anaoudegez euz ar wirionez' -2- hervez ar wirionez a zo ennom, hag a vo ganeom da viken. -3- Ganeom e vo gras, trugarez, peoh deuet digand Doue an Tad, ha digand Jezuz Krist, Mab d'an Tad er wirionez hag er garantez.

-4- Pebez laouenedigez evidon, gweled eul lodenn euz da vugale o vond gand hent ar wirionez, hervez ar gourhemenn on-eus bet digand an Tad. -5- Ha bremañ, Itron, e houlennañ diganit: -n'eo ket eur gourhemenn nevez eo a skriwan dit, med an hini on-eus abaoe ar penn-kenta-, en em garom an eil egile, -6- ha setu amañ petra eo ar garantez: ma kerzfem gand hent ar gourhemennou; hennez eo ar gourhemenn ho-peus klever abaoe ar penn-kenta evid ma kerzfëh gand an hent-se ; -7- rag touellerien e-leiz a zo en-em skignet dre ar bed; ne embannont ket ar feiz e donedigez Jezuz Krist er horv, setu aze an toueller, an Antikrist. -8- Taolit evez warnoh hoh-unan, gand aon da goll froucez hoh oberou, med evid gounid eun digoll kaer. -9- N'ema ket Doue gantañ, an neb a ya re bell war araog ha na jom ket e kelennadurez ar Hrist; an neb a jom er gelennadurez e-neus, eñ, hag an Tad hag ar Mab. -10- An neb a zeufe d'ho kavoud heb beza gantañ ar gelennadurez-se, na zegemerit ket anezañ en hoti, na lavarit ket salud dezañ.

-11- An neb a ra degemer vad dezañ e-neus perz en e oberou fall. -12- Kalz a draou am-eus da skriva deoh, koulskoude n'eo ket gand paper ha liou eo bet fellet din henn ober, rag fiziañs am-eus da vond davedoh, ha da gaozeal ganeoh evid ma vo leun-barr on levez. -13- Salud dit a-berz bugale da c'hoar, an hi-ni zibabet.

TREDE LIZER sant yann

-1- Ar Hoziad, da Gaius muia-karet a garan e sklerijenn ar wirionez; -2- Mignon kér, heti a ran e vefe mad ar bed ganit e peb keñver ha mad da yehed kenkoulz ha da ene, a zo hi e stad vad. -3- Kalz levez am-eus bet, rag breudeur degouezet amañ a ro testeni d'ar wirionez a weler sklér en da vuez, te hag a gerz ouz sklerijenn ar wirionez. -4- Va brasa levez eo kleved e kerz va bugale e sklerijenn ar wirionez. -5- Mignon ker, hervez ar feiz e prederiez gand da vreudeur, ha kement-se evid tud estren.

-6- Roet o-deus dirag an Iliz testeni euz da garantez. Mad a ri o pourvezi da ezommou o beaj en eun doare din euz a Zoue. -7- Rag evid an Ano eo ez int eet en hent heb reseo netra digand ar bayaned. -8- Ni eta a dle dond war zikour an dud-se, o kenlabourad ganto evid ar wirionez. -9- Skrivet am-eus eur gér d'an Iliz; med Diotrefez hag a blij dezañ ober e vestri war beb tra, ne fell ket dezañ on degemer. -10- Setu perag, pa zégouezin e tiskuillin e droiou hag ar homzou droug a lavar a-eneb deom. Ha n'eo ket awalh an dra-ze dezañ; ne fell ket dezañ rei degemer d'ar vreudeur hag ar re o-defe c'hoant d'o degemer e vir outo d'henn ober hag e kas anezo er mêz euz an iliz.

-11- Mignon ker, na gemer ket skouer diwar an droug, med diwar ar mad; an hini a ra ar mad a zo euz a Zoue; an hini a ra an droug ne wel ket Doue. -12- Demetriuz a-vad, an oll a ra e veuleudi dezañ, hag ar wirionez heh-unan med ni iveau a ro testeni dezañ, ha te a oar eo gwirion on testeni. -13- Kalz traou all am-befe da skriva dit, med ne felle ket din henn ober gand pluenn ha liou. -14- Rag fiziañs am-eus da weled ahanout dizale, hag e hellim komz an eil gand egile. -15- Ar peoh ra vezog anit. Salud dit a-berz da vignoned. Salud ar vignoned peb hini anezo.

lizer sant Jud



Jud, breur da Jakez, a skriv d'ar gristenien evid lavared dezo beza war evez ouz ar fals-prezegerien ; ar re-mañ n'int nemed gwez difrouez, n'int mad nemed da veza kastizet kaled gand Doue. D'ar gristenien vad en em zikour kenetrezo evid chom stard er gwir feiz.

SALUDOU

I -1- Jud, servicher Jezuz Krist, breur da Jakez, d'ar re a zo galvet ha karet gand Doue an Tad, ha miret evid Jezuz Krist, -2- ra vo puill ganeoh trugarez, peoh ha karantez.

AR FALS DOKTORED

-3- Va mignonned, c'hoant braz am-boa da skriva deoh diwarbenn ar zilvidigez a zell ouzom oll, ha padal eo bet red din henn ober evid ho kennerza da stourm evid ar feiz a zo bet roet d'ar zent evid mad.

-4- Rag en em zilet o-deus en ho touez tud hag a zo skrivet o barnedigez, en araog, abaoe pell amzer, tud diffeiz hag a dro gras Doue d'eur vuez diroll, hag a nah an hini n'on-eus nemetañ da vestr ha da Aotrou, Jezuz Krist.

-5- Felloud a ra din degas deoh da zonj, daoust ma ouzoh peb tra evid mad, e-neus an Aotrou, goude beza saveteet e bobl euz bro Egypt, lakeet d'ar maro goudeze ar re o-doa diskouezet beza diskred.

-6- An êlez ha n'ho-doa ket dalhet d'o renk, med o-doa dilezet o demeurañs, a zo dalhet gantañ da viken, chadennet en deñvalijenn, evid ar varnedigez d'an Deiz braz.

-7- Sodom ha Gomor hag ar gériadennou all diwar-dro, o-doa en em roet er memez doare d'ar zerhèrèz, ha redet war-lerh ar re a oa disheñvel outo dre natur, hag a zo miret bremañ, e-giz skouer, dindan kastiz an tan peurbaduz.

-8- En heveleb doare, an dud-se, oh alteri, evel ma reont, a zaotr o horv, a zispriz an Aotroniez, hag a zismegañs an Elez gloriuz. -9- Koulskoude, an Ar-hêl Mikêl zoken o tebati ouz an diaoul hag o tabutal diwar-benn korv Möüzez, ne gredas ket dougenn a-eneb dezañ eur varnedigez dismagañsuz, med lavared a reas «Doue ho կastizo».

-10- Med an dud, ar pez n'anavezont ket, a vez dismeganet ganto, hag ar pez a ouzont dre ijin-natur ha diskiant al loened, ne dalve dezo nemed evid o holl.

-11- Siwaz dezo, peogwir o-deus heuliet hent Kain, evid eur gopr o-deus en em lezet da fazia evel Balaam, hag ez int eet da goll e taol reversi Kore -12- Ar re-ze eo a vez o saotri ho prejou kenvreureg, pa reont chervad ha pa ze-bront re heb mez ebed: koumoul dizour skubet gand an aveliou, gwez euz fin an diskar-amzer, difrouez, maro diou wech, diwriziennet, -13- tonnou dirollet ar mor o strinka an eonenn euz o mez o-unan, stered kildroet, miret da viken e donder an défivalijenn. -14- Diwar o fenn e-neus ive profedet Henok, ar sez-ved abaoe Adam, o lavared: «Setu m'ema o tond an Aotrou gand e vilisou santel evid barn an oll dud ha lakaad an oll dud difeiz da anzao int kabluz euz o oll difeizded grevuz, hag euz kement komz divergont o-deus ar beherien difeiz lavaret a-eneb dezañ.

-16- Setu aze petra int! Tud tagnouz, kounnaruz, renet gand o youlou fall, komzou direiz a zeu euz o genou. Ne brizont an dud nemed hervez ar gou-nid a zeu diouto.

ALIOU D'AN DUD FIDEL

-17- C'hwi avañd va mignonned, dalhit sonj er homzou bet lavaret deoh en aragog gand ebestel or zalver Jezuz Krist. -18- Lavared a reent deoh: «Da fin an amzeriou e vo goaperien, youlou disakr o ren anezo». -19- Are-ze int! Dizunaniez a lakeont, douarel eo o homzou, ar Spered n'ema ket ganto. -20- Med c'hwi, va mignonned, kreskit war ziazez ho feiz santel meurbed; pedit ar Spered Santel, -21- chomit e karantez Doue; lakit hoh esperañs er vuez peurbaduz, e trugarez Jezuz Krist on Aotrou. -22- Ar re a zo nehet ho-pet truez outo. -23- Saveteit anezo o tenna anezo euz an tan. Evid ar re all, bezit truez outo, med bezit aon, kasait beteg an dillad saotret gand o horv.

BENNOZIOU

-24- D'an hini a hell ho mired da goueza, hag ho telher dinamm dirag e hloar, el levez, -25- d'an Doue n'eus nemetañ, or Zalver Jezuz Krist, gloar, brazder, galloud ha beli, araog an oll amzeriou, bremañ ha da viken. Amen.



diskuliadur sant yann



DISKULIADUR

Heskinèrèz a sko war an Azia-Izella; m'oarvad e amzer an impalaer Domisian, war-dro ar bloavez 96. Yann a zo harluet e enezenn Patmos. Pouëza a ra war ar red da ren eur vüez virvidig ha da jom stard er feiz. Doue e-neus bepred gwarranted d'ar Juzevien dre ar brofeded, d'ar gristenien dre an Aviel, o-defe an treh war o enebourienn, ma chomfe ar bobl fidel dezañ. E meur a weledigez e tegas an Aotrou da zoñj da Yann an asurañs-se. Distrujet e-neus an Aotrou Jeruzalem, he-deus lakeet ar Mesias d'ar maro hag heskinet ar gristenien. Eun deiz a zeuio e treho war impalaerez Rom a ra brezel d'ar Hrist ha d'an Iliz; en amzeriou diweza erfin, e treho war ar galloudureziou dastumet gand Satan evid eur stourmad diweza a-eneb, an Iliz hag a-eneb Doue. Goude m'e-no trehet war e enebourienn da vad, goude m'e-no trehet war ar maro e-unan, dre e adsao da veo, an Aotrou a roio lod d'an Iliz, e bried, en e rouantelez a beoh hag a eürusted barfed. Da hortoz, e-kreiz an trubuillou, ar Pried ne ehan da lavared :«O! Ya! Deus, Aotrou Jezuz!»

DISKULIADUR

ANO AL LEVR

I -1- Doue a roas an diskuliadur-se, evid diskouez d'e zervicherien ar pez a dlee c'hoarvezoud diwezatoh. Henn roet e-neus da anaoud dre e êl da Yann e zervicher. -2- Hemañ e-neus roet testeni, ez oa Komz Doue ha testeni Jezuz Krist kement e-noa gwelet. -3- Eüruz an hini a lenn, hag ar re a zelaou komzou ar brofediez, hag a vir ar pez a zo skrivet enni, rag tost eo ar poent.

LIZIRID'AR SEIZ ILIZ

-4- Yann, d'ar sez Iliz a zo en Azia : gras deoh ha peoh a-berz an Hini a zo, a zo bet hag a zeu, a-berz ar sez spered a zo dirag an tron, -5- hag a-berz Jezuz Krist an test leal, ar henta ganet a-douez ar re varo ha mestr rouaned an douar : -6- d'an hini e-neus or haret, or frankizet euz or pehejou dre e wad, hag e-neus greet ahanom eur rouantelez beleien evid Doue e Dad; dezañ gloar ha galloud da virviken. Amen ! -7- Setu m'ema o tond, a-dreuz ar goabrennou, ha kement lagad a welo anezañ, ar re o-deus toullet anezañ zoken : hirvoudi a ray oll veuriadou an douar ablavour dezañ. Ya ! Amen ! -8- Me a zo an Alfa hag an Omega, eme an Aotrou Doue, an Hini a zo, a zo bet hag a zeu, an Oll-halloudeg.

AR WELEDIGEZ

-9- Me Yann, ho preur hag ho kenseurt en drubuill, er rouantelez hag er basiated e Jezuz, me a oa en Enez Patmoz, ablavour da Gomz Doue ha da desteni Jezuz. -10- E dalh ar Spered edon, da Zeiz an Aotrou, a-dreñv kein din, e klevis eur vouez kreñv evel hini eun drompill, a lavare : «Ar pez a welez, skriv anezañ en eul levr, ha kas anezañ d'ar sez Iliz : Efez, Smirn, Pergam, Tiatir, Sard, Filadelfi ha Laodise». -12- Distrei a ris evid sellé ouz ar vouez a gomze ouzin, hag, o tistrei, e welis sez kantolor aour, unan damheñvel ouz eur mab-den, gwisket gantañ eur zae hir, gourizet gand eur houriz aour. -14- E benn hag e vleo a oa gwenn evel gloan gwenn, evel erh, e zaoulagad evel flanim-tan beo, -15- e dreid a oa heñvel ouz arem a briz braz, evel néeteet dre an teuzlestr, hag e vouez heñvel ouz mouez an doureier braz. -16- En e zorn dehou ez oa gantan sez steredenn, hag euz e henou e teue eur hleze lemm a zaou droh ; e zremm a oa evel an heol pa sked e-kreiz e nerz.

-17- Ouz e weled, e koueziz evel maro e-harz e dreid, med lakaad a reas e zorn dehou warnon en eur lavared : «Arabad eo dit kaoud aon, emezañ, me a zo ar henta hag an diweza, -18- an Hini beo, maro on bet ha setu me beo da virviken ; em herz ema alhweziou ar marc hag an iferniou. -19- Skriv eta ar pez az-peus gwelet hag ar pez a dle degouezoud goude-ze, -20- ha setu mister ar sez steredenn az-peus gwelet em dorn dehou hag ar sez kantolor aour : Ar sez steredenn eo élez ar sez Iliz.

DA ILIZ EFEZ

II -1- Da él an Iliz a zo e Efez skriv : kement-mañ a lavar an hini a zo ar sez steredenn en e zorn dehou, hag a gerz e-kreiz ar sez kantolor aour. -2- Anaoud a ran da oberou, da boan ha da basianted, gouzoud a ran n'hellez ket gouzañv an dud fallagr. Amprouet az-peus ar re a lavar beza ebrestel, ha n'ez int ket, ha kavet az-peus ez oant gaouiad. -3- Pasianted az-peus : da houzañv az-peus bet ablamour d'am Ano, ha n'out ket bet fallgalonet.

-4- Med da rebech dit am-eus beza kollet da garantez kenta. -5- Dalh soñj eta a beleh ez out kouezet, bez keuz, ha gra an oberou kenta, a-hend-all me a zeu dit, hag e tennin da gantolor euz e blas ma ne zistroez ket. -6- An dra-mañ koulskoude a zo mad evidout : heug az-peus euz oberou an Nikolaïded. -7- An neb e-neus diskouarn, ra zelaouo ar pez a lavar ar Spered d'an Ilizou. D'an treher, e roin da zebri euz eur wezenn a zo e baradoz Doue.

SMIRN

-8- Da él an Iliz a zo e Smirn skriv : kement-mañ a lavar ar Henta hag an Diweza, an Hini a zo bet maro, med a zo distroet d'ar vuez : -9- Anaoud a ran da drubuill ha da baourente - med pinvidig out - ar falstamallou greet gand ar re a zo Juzevien war o meno, ar pez n'int ket, n'int nemed eur zinagog da Zatan. -10- Arabad eo dit kaoud aon rag ar pez emaout o vond da houzañv. Setu m'ema an diaoul o vond da deurel er prizon lod ahanoh evid hoh amproui, ha deg devez e pado ho trubuill. Bez fidel beteg ar maro hag e roin dit ar gurunenn a vuez.

-11- An neb e-neus diskouarn, ra zelaouo ar pez a lavar ar Spered d'an Ilizou ; an treher ne vo ket gwallet gand an eil maro.

PERGAM

-12- Da él an Iliz a zo e Pergam skriv : kement mañ a lavar an hini e-neus ar hleze lemm a zaou dreumm. -13- Goûd a ouzon e peleh émaout o chom, eno eo ema tron Satan. Med delher a rez d'am Ano, n'az-peus ket nahet va feiz, zoken da genver amzer Antipas, test fidel din, lakeet d'ar maro du-ze, e leh m'ema Satan o chom. -14- Med eun nebeud rebechou am-eus da ober dit : du-ze ez euz lod hag a ya da heul kelennadurez ar Balaam-se a guzulias da Valak stegna eur pej da vugale Israel evid isa anezo da zebri kig bet kinniget d'an doueou-faoz, hag en em rei d'ar zerhêrêz. -15- Ganeoh ez euz iveau lod hag a heuill kelennadurez an Nikolaïded. -16- Distro eta, a-hend-all e teuin dit dizale, hag e stourmin outo gand ar hleze euz va genou.

-17- An neb e-neus diskouarn, ra zelaouo ar pez a lavar ar Spered d'an Ilizou. D'an treher e roin ar mann kuzet. Eur mén gwenn a roin dezañ hag engravet er mén, eun ano nevez dianavezet gand an oll, nemed gand an hini a reseo anezañ.

TIATIR

-18- Da él an Iliz a zo e Tiatir skriv : kement-mañ a lavar Mab Doue, an Hini a zo e zaoulagad heñvel ouz tan-flamm, hag e dreid heñvel ouz arem priui : -19-

Anaoud a ran da oberou, da garantez, da feiz, da zervich ha da basianted, ar re ziweza euz da oberou a zo niverusoh eged ar re genta. -20- Med da rebech dit am-eus, e houzañvez Jezabel, ar vaouez-se hag a lavar beza profedeze, a laka da vond da goll va zervicherien, o kelenn dezo debri kig bet kinniget d'an doueou faoz. -21- roet am-eus amzer dezi da zistrei, med ne fell ket dezi distrei euz he zerhèrèz. -22- Setu ma taolan anezi, hi hag ar re a ra avoultriez ganti, war eur gwele a glañvour, nemed ha distrei a rafent diouz o oberou. -23- D'he buale e roin taol ar maro hag e ouezo an oll Ilizou ez on an hini a anavez kement a dremen er galon hag er spered.

-24- Deoh-hwi a-vad e lavaran, c'hwi hag a zo e Tiatir, c'hwi oll ha na heuillit ket ar geleñnadurez-se, ha n'ho-peus ket anavezet «donderiou Satan» evel ma lavaront. Ne lakan samm all ebed warnoh. -25- nemed dalhit mad d'ar pez ho-peus, beteg ma teuin. -26- An treher, an hini a vir beteg penn va oberou, a roin dezañ galloud war an oll vroadou. -27- hag e reno anezo war ar peuri gand eur wialemn houarn, evel ma vez torret al listri-pri. -28- evel m'am-eus, me iveau, resevet galloud war gement-se digand va Zad, hag e roin dezañ ar steredenn vintin. -29- An neb e-neus diskouarn ra zelaouo ar pez a lavar ar Spered d'an Ilizou.

SARD

III -1- Da êl an Iliz a zo e Sard skriv : kement-mañ a lavar an Hini e-neus ar seiz spered a Zoue hag ar seiz steredenn : anaoud a ran da oberou, brud az-peus da veza beo hag ez out maro. -2- Bez war evez : kernez ar pez a jom hag a zo o vond da vervel, rag ne gav ket din e vefe peurvad da oberou dirag Doue. -3- Dalh soñj eta euz ar pez az-peus resevet ha klevet, mir anezañ ha distro. Ma ne vezez ket war evez, e teuin evel eul laer heb na oufez da bed eur e teuin davedout. -4- Koulskoude e Sard az-peus eun nebeud tud ha n'o-deus ket kaillaret o dillad. Va ambroug a raint, gwisket e gwenn, rag din int a gement-se. -5- Evel-se an treher a zougo dillad gwenn, ne lamin ket kuit e ano euz al levr a vuez, ha me en em zisklerio a-du gantañ dirag va Zad hag an èlez. -6- An neb e-neus diskouarn, dezañ kleved ar pez a lavar ar Spered d'an Ilizou.

FILADEFI

-7- Da êl an Iliz a zo e Filadelfi skriv : kement-mañ a lavar ar Zantel hag ar Gwirion, an Hini a zalh alhwetz David: eñ a zigor, ha den ne zero, eñ a zerr, ha den ne hell digeri. -8- Anaoud a ran da oberou, ha setu m'am-eus lakeet dirazout eun nor zigor ha n'hell den he zerri. Nebeud a nerz az-peus ha koul-skoude az-peus miret va Homz ha n'az-peus ket dinahet va Aino. -9- Ha setu ma roan dit tud euz sinagog Satan, euz ar re a lavar beza Juzevién, ha n'int ket, rag gevier a lavaront. Setu ma lakin anezo da zond ha da stoui e-harz da dreid hag e ouezint am-eus da garet. -10- Peogwir az-peus miret ar Gomz euz va fasianted, me iveau a viro ahanout da eur an amprouenn a zirollo war an oll dud, evid amproui ar re a zo o chom war an douar. -11- Dizale e teuin. Dalh mad d'ar pez az-peus, ma ne zeuio den da denna diganit da gurunenn.

-12- An treher a rin anezâñ eur golonenn e Templ Doue, ha biken mui ne zeuio er mêz, ha warnañ e skrivin anjo kér va Doue, ar Jeruzalem nevez, a ziskenn euz an neîv a-gichenn Doue, ha va ano nevez. -13- An neb e-neus diskouarn, dezañ selaou ar pez a lavar ar Spered d'an Ilizou.

LAODISE

-14- Da êl an Iliz a zo e Laodise skriv : kement-mañ a lavar an Amen, an test feal ha gwirion, ar penn kenta euz ar grouidigez greet gand Doue : -15- anaoud a ran da oberou, n'out na yen na tomm - Ma vijes bet yen pe domm eo ! -16- med peogwir ez out kluuar ha n'ez out na yen na tomm, ez an da zistaoler ahanout euz va genou ; -17- peogwir e lavarez : «pinvidig on, pinvidikeet on, n'am-eus ezomm a netra», ha n'ouzout ket ez out eur paour-kéz, din a druez, paour, dall ha noaz, -18- eh alian ahanout da brena diganin aour nêteet dre an tan, evid dit pinvidikaad ha dillad gwenn d'en em wiska, ma n'az-po ket a vez da veza gwelet en noaz, hag eul louzou evid da zaoulagad ma weli sklér adarre. -19- Me, kement hini a garan a vez difaziet ha reizet ganin. Bez greduz eta ha distro. -20- Setu m'emaon e toull an nor, hag e skoan. Ma klev hini pe hini va mouez, ha ma tigor an nor, ez in en e di, hag e tebrin koan gantañ hag eñ ganin-me. -21- An treher, me a roio dezañ azeza war va zron, evel m'am-eus me iveau trehet, ha ma 'z on eet da azeza gand va Zad war e dron. -22- An neb e-neus diskouarn, ra zelaouo ar pez a lavar ar Spered d'an Ilizou.

AR SEIZ SIELL

IV -1- Goude-ze e welis kement-mañ : eun nor a oa digor en neîv, hag ar vouez am-boa klevet da genta o komz ouzin, evel eun drompill, a lavaras : «pign amañ hag e tiskouezin dit ar pez a dle degouezoud da houde.» -2- Ker-kent e oen gourzavet gand ar Spered ha setu m'oa savet eun tron en neîv ha war an tron unan war e azez. -3- An hini a oa azezet e-noa lufr eur mén-yalp hag agatenn, killet e oa an tron gand eur helh a skede evel lufr emrodenn. -4- Endro d'an tron e oa pevar dron war 'n ugent, hag azezet war an troniou-ze e oa kozidi, pevar war 'n-ugent anezo, gwisket e gwenn ha war o fenn kurunennou aour. -5- Euz an tron e tarze luhed, moueziou ha kurunou ; seiz lamp leskidig a zeve dirag an tron, ar re-ze eo ar seiz spered a Zoue. -6- Dirag an tron e oa eur mor splann, mein-strink a vefe lavaret. E-kreiz an tron hag endro dezañ pevar loen goloet a lagadou en a-raog hag en a-dreîv. -7- Ar henta heñvel ouz eul leon, an eil heñvel ouz eun taro yaouank, an trede dezañ evel dremm eun den, hag ar pevare heñvel ouz eun erer o nijal.

-8- Hag ar pevar loen o-doa, peb hini anezo, c'hweh askell, goloet e oant a lagadou tro war-dro dezo hag en diabarz. Ne ehanent ket, noz-deiz, da embann : «santel, santel, santel an Aotrou Doue oll halloudeg, an hini a oa, a zo hag a zeu». -9- Ha bewech ma rent al loened gloar, enor ha trugarez d'an hini a zo azezet war an tron, d'an hini a vev da virviken, -10- ar pevar goziad war 'n-ugent a stou dirag an hini a zo azezet war an tron, adori a reont an hini a vev da virviken hag e taolont o hurunennou dirag an tron en eur lavared : «Din

out, Te, on Aotrou hag on Doue da reseo gloar, enor ha galloud, rag Te eo a grouas peb tra, fellet eo ganit e vefe anezo hag e oent krouet».

AL LEVR HAG AN OAN

V -1- Hag e welis : e dorn dehou an hini a oa azezet war an tron, eul levr rollet, skrivet en diabarz hag en diavêz anezaf, siellet gand sez siell, -2- hag e welis eun êl gallouduz oh embann a vouez kreñv : «Piou a zo din da zigeri al levr ha da derri ar ziellou ?» -3- Med den, nag en nefiv na war an douar n'e-noa galloud da zigeri al levr na da zelled ennañ. -4- Glañaret e oan en abeg ma ne oe kavet den din da zigeri al levr na da zelled ennañ. -5- Med unan euz ar gozidi a lavaras din :«Arabad eo dit gouela, setu m'e-neus trehet al leon euz meuriad Juda, ar greskenn euz David, digeri a ray al levr hag e zeiz siell».

-6- Neuze e welis : e-kreiz an tron hag ar pevar loen, e-touez ar gozidi, eun oan en e zav, lidlazet da weled. Seiz korn e-noa ha sez lagad, a zo ar seiz spered a Zoue kaset dre ar bed a-bez. -7- Tostaad a reas da reseo al levr euz dorn dehou an hini a oa azezet war an tron. -8- Ha p'e-noa resevet al levr, ar pevar loen hag ar pevar goziad war 'n-ugent a stouas dirag an Oan. Peb hini e-noa eun delenn hag eur hanaf aour leun a louzou c'hwez-vad ; pedennou ar zent eo ar re-mañ.

-9- Eur hantig nevez a ganent : «Din out da reseo al levr ha da derri ar ziellou anezaf, rag lidlazet out bet, ha dasprenet az-peus evid Doue, dre da wad, tud euz peb meuriad, peb yez, pobl ha broad. -10- Greet az-peus anezo, evid on Doue, eur rouantelez ha beleien, ha ren a raint war an douar». -11- Neuze e welis : hag e klevis mouez élez niveruz endro d'an tron, d'al loened ha d'ar gozidi, miliadou ha miliadou anezo. -12- Hag eh embannent a vouez uhel : «Din eo an Oan lidlazet da reseo galloud, pinvidigez ha furnez, nerz, enor, gloar ha meuleudi.» -13- Hag an oll grouaudurien a zo en nefiv, war an douar, dindan an douar ha war ar mor, ha kement tra a zo enno, me o hlevas oh embann : «D'an hini a zo azezet war an tron ha d'an Oan, meuleudi, enor, gloar, galloud da virviken». -14- Hag ar pevar loen e lavare amen, hag ar gozidi a stouas hag a adoras.

AR C'HWEH SIELL KENTA DIGORET

VI -1- Neuze e welis : pa zigoras an Oan ar genta euz ar sez siell, e klevis ar henta euz ar pevar loen o youhal gand eur vouez kreñv heñvel ouz ar gurun : «Deus». -2- Hag e welis : eur marh gwenn e oa. An hini a oa war e gein a oa eur wareg gantañ, eur gurunenn a oe roet dezaf hag ez eas e-giz eun treher, evid trehi. -3- Pa zigoras an eil siell e klevis an eil loen o lavared : «Deus». -4- Neuze e oe gwelet eur marh ruz-tan. An hini a oa war e gein, e oe roet dezaf galloud da skrapa ar peoh diwar an douar, evid ma hellfed en em laza. Eur mell kleze a oe roet dezaf. -5- Pa zigoras an trede siell, e klevis an trede loen o lavared : «Deus». Hag e welis eur marh du ; an hini a oa war e gein e-noa eur valañs en e zorn. -6- Hag e klevis evel eur vouez e-touez ar pevar loen hag a lavare : «Eur

muzuliad ed evid eun diner, ha tri vuzuliad heiz evid eun diner, an eoul avad hag ar gwin, arabad eo dit touch outo».

-7- Pa zigoras ar pederved siell, e klevis ar pevare loen o lavared : «Deus». -8- Hag e welis : eur marh glaz e oa. An hini a oa war e gein a vez greet an «Ankou» anezafñ hag an Iferniou a oa ouz e heul. Roet e oe dezañ galloud war ar palefarz euz an douar, evid laza dre ar hlez, an naonegez, ar vosenn, ha dre loened gouez an douar.

-9- Pa zigoras ar pemped siell e welis, dindan an aoter, eneou ar re a oa bet lazet en abeg da Gomz Doue ha d'an testeni o-doa roet. -10- A vouez uhel e youhent : «Beteg peur, Mestr santel ha gwirion e hortozi evid barn ha goullenn kont euz or gwad digand tud an douar ?» -11- Neuze e oe roet da beb hini eur zae wenn, hag e oe lavaret dezo kemered c'hoaz eun tammig pasian-ted, beteg ma vefe klok an niver euz o henseurte a oa diouz servich hag euz o breudeur a dlee beza lakeet d'ar maro eveldo.

-12- Hag e welis : pa zigoras ar c'hwehved siell e tegouezas eur gwall gren-douar, du e teuas an heol da veza evel eul liennenn reun, hag al loar a-bez evel gwad. -13- Stered an nefñ a gouezas war an douar evel fiez glaz eur wezenn fiez hejet gand ar gwall-amzer. -14- An oabl en em dennas kuit evel eul levr rollet, an oll veneziou hag an oll enezennou a oe kaset euz o flas. -15- Rouanned an douar, an dud a renk uhel, an ofiserien-veur, an dud pinvidig, ar re halloudeg, oll, sklaved ha tud frank a yeas da guzad er heviou hag e reier ar meneziou. -16- Lavared a reent d'ar meneziou ha d'ar reier : «Kouezit warnom, kuzit ahanom ouz dremm an hini a zo azezet war an tron, ouz kounnar an Oan, -17- rag deuet eo Deiz braz o houunnar, ha piou a hell chom en e zav ?»

AN ILIZ, POBL DOUE

VII -1- Goudeze e welis pevar él en o zav e pevar horn an douar ; herzel a reent ouz ar pevar avel euz an douar evid ma ne zeufe avel ebed da c'hweza war an douar, war ar mor na war gwezenn ebed, -2- hag e welis eun él all o sevel diouz kostez ar zav-heol, siell an Doue beo a oa gantañ, a vouez uhel e youhas d'ar pevar él o-doa resevet galloud da ober gaou ouz an douar hag ouz ar mor : «Na rit ket a haou ouz an douar nag ouz ar mor, nag ouz ar gwez, ken na vo bet merket ganeom war dal servicherien on Doue». -4- Hag e klevis ped a oa merket gand ar ziell : kant pevar mil ha daou ugent merket gand ar ziell euz oll veuriadou bugale Israel, -5- euz meuriad Juda, daouzeg mil merket gand ar ziell ; euz meuriad Ruben, daouzeg mil ; euz meuriad Gad, daouzeg mil ; -6- euz meuriad Aser, daouzeg mil ; euz meuriad Neftali, daouzeg mil ; euz meuriad Manasse, daouzeg mil ; -7- euz meuriad Simeon, daouzeg mil ; euz meuriad Levi, daouzeg mil ; euz meuriad Izakar, daouzeg mil ; -8- euz meuriad Zabulon, daouzeg mil ; euz meuriad Josef, daouzeg mil ; euz meuriad Benjamin daouzeg mil merket gand ar ziell.

-9- Goudeze e welis eun niver braz a dud, n'helle den o honta, euz kement bro, kement rumm, kement pobl ha kement yez a zo, oll en o zav dirag tron

Doue ha dirag an Oan, dillad gwenn ganto ha skourrou palmez en o daouarn, -10- hag e savent uhel o mouez da lavared : «Ar zilvidigez a zo d'on Doue, azezet war an tron, ha d'an Oan». -11- Hag an oll élez bodet endro d'an tron, d'ar gozidi ha d'ar pevar loen, a stouas beteg an douar dirag an tron evid adori Doue en eur lavared : -12- «Amen, bennoz ha gloar, furnez ha trugarez, enor, galloud ha nerz d'on Doue da virviken. Amen !»

-13- Unan euz ar gozidi, neuze, a lavaras din : «Ar re-ze, dillad gwenn ganto, piou int hag a beleh int deuet ?» -14- Ha me a respontas : «Va Aotrou, c'hwi a oar». Lavared a reas din : «Ar re-ze a zeu euz an drubuill vraz, gwalhet o-deus o dillad, ha kannet anezo e gwad an Oan. -15- Setu perag emaint dirag tron Doue, ouz e zervicha noz-deiz, en e zantual, hag an hini a zo azezet war an tron a roio goudor dezo en e delenn, -16- N'o-devo mui naon, n'o-devo mui sehed, ne vezint ket mui skoet gand an heol hag an dommder, -17- rag an Oan, an hini a zo e-kreiz an tron, a vo o fastor, ren a ray anezo daved feunteuniou dour a vuez ha Doue a zeho an oll daerou euz o daoulagad.

AR SEIZVED SIELL

VIII -1- Pa zigoras ar seizved siell, e oe sioulder en nefiv, e-pad war-dro eun hanter-eur. -2- Hag e welis ar sez el a en em zalh en o zav dirag Doue, roet e oe dezo sez trompill. -3- Eun el all a zeuas d'en em lakaad en e zav e-kichenn an Aoter, gantañ eun ezañsouer aour, roet e oe dezañ e-leiz a louzeier c'hwez-vad da giriñig gand pedennou an oll zent war an aoter aour a zo dirag an tron. -4- Hag euz dorn an el e savas eur moged fronduz, dirag Doue gand pedennou ar zent. -5- An el a gemeras an ezañsouer, e gargas a dan euz an aoter, hag e taolas anezañ war an douar, hag e oe neuze tarziou-kurun, mouzeiou, luher hag eur hren-douar.

AR C'HWEH TROMPILL GENTA

-6- Ar sez el a oa ganto sez trompill, en em lakeas e-taill da zeni ganto. -7- Ar henta a lakeas e drompill da zeni : kazarh ha tan, mesket a wad, a c'hoar-vezas hag e oent stlapet war an douar ; an drederenn euz an douar a flamas, an drederenn euz ar gwez a flamas ha kement glasvez a flamas. -8- An eil a lakeas e drompill da zeni, hag e vije bet lavaret e oa stlapet er mor eur menez braz entanet. E gwad e troas an drederenn euz ar mor. -9- An drederenn euz ar grouadurien a veve er mor a varvas, hag an drederenn euz al listri a oe distrujet. -10- An trede el a lakeas e drompill da zeni, hag e kouezas euz an nefiv eur steredenn vraz meurbed, entanet evel eun torchad ; koueza a reas war an drederenn euz ar steriou ha war eien an doureier. -11- Ar steredenn a oa «Huelenn-c'hwer» he ano, an drederenn euz an dour a zeuas da veza huelenn-c'hwer, hag e varvas kalz a dud ablamour d'an dour deuet da veza c'hwer. -12- Ar pevare a zones gand e drompill : hag e oe skoet an drederenn euz an heol, an drederenn euz al loar, hag an drederenn euz ar stered, tefivalaad a rejont euz an drederenn euz o sked, an deiz a gollas an drederenn euz e sklerder hag an noz kemend-all. -13- Neuze e welis hag e klevis eun erer, o nijal

e lein an neñv, o lavared a vouez kreñv : «Siwaz, siwaz, siwaz !» da dud an douar ablamour da zonèrèz trompillou an tri êl a zo o vond da zeni.

AR PEMPED TROMPILL

IX -1- Ar pemped êl a lakeas e drompill da zeni, hag e welis eur steredenn stlapet euz an neñv war an douar, hag e oe roet dezi alhwez puñs an islong. -2- Digeri a reas puñs an islong, hag anezañ e savas eur vogedenn heñvel ouz hini eur fornez vraz, teñvalaada a reas an heol hag an oabl. -3- Hag euz ar vogedenn-se e teuas killeienn-raden d'en em skigna war an douar. Hag e oe roet dezo galloud heñvel ouz hini kruged an douar. -4- Divennet e oa outo ober gaou ouz yeot an douar, ouz glasvezenn ebed, ouz gwezenn ebed, med netra nemed ouz an dud ha na zougont ket siell Doue war o zal. -5- Aotreet e oent, n'eo ket d'o lakaad d'ar maro, med d'o heskina e-pad pemp miz, hag o heskin a zo heñvel ouz heskin ar grug pa flemm an den. -6- En deiziou-se an dud a glasko ar maro ha n'he havint ket, c'hoant o-dezo da verval, med ar maro a deho diouto.

-7- Ar hilleienn-raden o-doa doare kezeg harnezet evid an emgann, war o fenn e tougent evel kurunennou aour, hag o dreemm a oa heñvel ouz dremmou tud, -8- o bleo heñvel ouz bleo merhed, hag o dent heñvel ouz dent al loened. -9- Da weled, e oant harnezet gand houarn, ha trouz o eskell a oa heñvel ouz trouz kirri stlejet gand e-leiz a gezeg, o reded d'an emgann. -10- Lostou o-deus, heñvel ouz re ar gruged daredou outo, en o lost ema o galloud da noazoud d'an dud e-pad pemp miz. -11- Da roue, o-deus êl an islong. Abaddon eo e ano en Hebreeg hag Appolluon e Gresianeg. -12- Tremenet eo ar gwalleur kenta, setu o tond war e lêrh daou walleur all.

-13- Ar c'hwehved êl a lakeas e drompill da zeni, hag e klevis eur vouez o tond euz pevar horn an aoter aour a zo dirag Doue ; -14- lavared a ree d'ar c'hwehved êl, an hini a oa an drompill gantañ : «Diliamm ar pevar êl a zo chadennet war ar ster Eufrad». -15- Diliammet e oe ar pevar êl, prest evid an eur, an deiz, ar miz hag ar bloaz, da lakaad d'ar maro an drederenn euz an dud. -16- Ar zoudarded war varh a oa anezo daouzeg miliad a zegmiliad. Kleved a ris an niver anezo. -17- Evel-se e welis e va gweledigez ar hezeg hag ar varheien ganto harnez tan, iasint ha soufr. Pennou ar hezeg a oa evel pennou leoned hag o genou a zistaole tan, moged ha soufr.

-18- Dre an teir walenn-se : an tan, ar moged hag ar soufr, distaolet euz o genou, e oe lazet an drederenn euz an dud, -19- rag galloud ar hezeg a zo en o genou koulz hag en o lost, rag heñvel ouz naered eo o lostou ; pennou o-deus ha ganto e hellont noazoud. -20- Evid ar peurrest euz an dud, ar re n'oant ket lazet dre ar gwalinier-se, ne zavas ket a geuz ganto da oberou o daouarn, kendelher a rejont da adori an diaouled, an idolou aour pe arhant, arem, mein pe goad, ha n'int ket evid gweled, kleved na kerzed. -21- Ne zistrojent ket euz o lazérèz, nag euz o zorsérèz, euz o zerhérèz, euz o laeroñsi.

AN EL HAG AL LEORIG

X -1- Hag e welis eun êl gallouduz o tiskenn euz an nefîv, gwisket gand eur goumoulem, e dal killet a hloar, e zremm heñvel ouz an heol hag e dreid heñvel ouz kolonennou tan. -2- Eul leorig digor a oa gantañ en e zorn, e droad dehou a lakeas war ar mor, e droad kleiz war an douar. -3- Youhal a reas a vouez kreñv evel ma yud eul leon. Goude m'e-noa youhet, e roas ar seiz kurun o mouzeziou da gleved. -4- P'o-doa tregernet ar seiz kurun, edon o vond da skriva, hag e klevis eur vouez o lavared din euz an nefîv : «Dalth kuzet ganit kemennadurez ar seiz kurun, na skriv ket anezi.» -5- Hag an êl am-boa gwelet en e zav war ar mor ha war an douar a zavas e zorn dehou warzu an nefîv, -6- hag e touas dre an hini a zo beo da virviken, hag e-neus krouet an nefîv ha kement a zo ennañ, ar mor ha kement a zo ennañ : «Ne vo dale ebed mui», -7- med en deiziou ma vo klevet ar sezived êl, pa stago da zeni gand an drompill, neuze e vo sevenet mister Doue, evel m'e-noa embannet anezañ d'ar brofeded e zervicherien.

-8- Hag ar vouez am-boa klevet o tond euz an nefîv a gomzas ouzin a-nevez, hag a lavaras : «Kee da gemer al levr digor e dorn an êl a zo en e zav war ar mor ha war an douar.» -9- Mond a ris war-zu an êl hag e bedi da rei din al levr bian. Lavared a reas din : «Kemer ha debr anezañ, c'hwerio e vo evid da vouzellou, med en da henou e vo dous evel ar mel.» -10- Neuze e kemeris al levr bian euz dorn an êl, hag e tebris anezañ. Em genou e oa dous evel ar mel, med p'am-boa e zebret e teuas va bouzellou da veza c'hwerio. -11- Hag e oe lavaret din : «Red eo dit profedi a-nevez war eun niver braz a boblou, broiou, yezou ha rouanteleziou».

AN DAOU DEST

XI -1- Neuze e oe roet din eur gorzenn evel eur vaz-muzulier, hag e oe lavaret din : «Sav, kemer ar muzul euz Templ Doue hag euz an aoter hag euz ar re a zo eno oh adori. -2- Med al leurenn a-ziavêz an Templ, lez anezi a-gostez, na gemer ket ar muzul anezi, rag roet eo bet d'ar poblou payan a vreso ar gêr zantel epad daou viz ha daou ugent, -3- ha, d'am daou dest me a raio dezo profedi, gwisket gand seier e-pad daouzez kant devez ha tri-ugent». 4- Bez ez int an diou olivezenn hag an daou gantolor a zo en o zav dirag Aotrou ar douar. -5- Ma klask unan bennag noazoud dezo, e teu eun tan euz o genou hag a bulluh o enebourien. Ya, ma klaskfe unan bennag noazoud dezo, evel-se e vefe red dezañ mervel. -6- Galloud o-deus da zerri an nefîv, ha glao ebed ne gouezo e-pad deveziou o frofediez, galloud o-deus da drei an dour e gwad, ha da lakaad gwalinier da skei an douar, ken aliez ha ma karint.

-7- Med p'o dezo echu da rei testeni, an euzvil a zav euz an islong a raio brezel dezo, a hounezo warno hag o lakaio d'ar maro. -8- O horvou a jomo war leurgêr ar gêr vraz, a anver dre barabolenn Sodom hag Ejipt, el leh, end-eeun, ma oe bet staget o Aotrou ouz ar groaz. -9- Euz poblou, rummadou, yezou ha broiou e teuor da zelled ouz o horvou, e-pad tri devez hanter, hag heb bezia anezo. -10- An dud a zo o chom war an douar a vo laouen diwar o fenn, er joa e vezint, donezonou a roint an eil d'egile, rag an daou brofed-se o-doa greet dezo e-leiz a drubuillou.

-11- Med goude an tri devez-hanter-se eur spered a vuez deuet euz Doue a antreas enno, hag e savjont en o zav. Neuze e kouezas eur spont braz war ar re a oa o sellec outo. -12- Klevet a rejont eur vouez kreñv, deuet euz an neñv, o lavared dezo : «Pignit amañ». Pignad a rejont d'an neñv en eur goabrenn, dirag daoulagad o enebourien. -13- D'an ampoent e c'hoarvezas eur gwall zarvoud; an degved euz kér a gouezas en e boull, ha sez mil den a oe lazet er gwall zarvoud-se. Spontet oll, ar re a oa chomet beo, a rentas gloar da Zoue an neñv.

-14- Tremenet eo an eil gwaleur, ne zale ket an trede da zond.

AR SEIZVED TROMPILL

-15- Ar seizved él a roas da gleved e drompill. Bez' e oa mouzeiou kreñv en neñv hag a lavare : «Deuet eo rouantelez ar bed d'on Aotrou ha d'e Grist. Ren a ray da virvikent». -16- Ar pevar goziad war 'n-ugent a zo dirag Doue azezet war o zron a gouezas, o dremm d'an douar, da adori Doue en eur lavared : -17- «Da drugarekaad a reom Aotrou Doue oll halloudeg, Te a zo hag a oa, peogwir az-peus diskouezet pegen braz eo da halloud, ha diazezet da rouantelez. -18- Ar poblou payan a zo e kounnar, med da gounnar dit eo a zo deuet. Deuet eo ar mare dà varn ar re varo, da zigoll ar brofeded, da zer-vicherien, ar zent hag ar re a zouj da Ano, bian ha braz, ha da zistruij ar re a zistruij an douar.

-19- Ha templ Doue en neñv a zigoras hag e teuas war wel en e dempl Arh an emgleo ; neuze e c'hoarvezas luhed, mouzeiou, kurunou, eur hren-douar hag eur barrad kazarh.

AR VAQUEZ HAG AN AEROUANT

XII -1- Eur zin vraz a eo gwelet en neñv : eur vaouez, an heol ouz he gwiska al loar dindan he zreid, hag eur gurunenn a zaouzez steredenn war he fenn. -2- Lougèrèz eo ha youhal a ra, gwasket gand poan ar gwilioudi. -3- Eur zin all a oe gwelet en neñv : eun aerouant braz, ruz-tan, sez penn ha deg korn dezañ, ha war e bennou sez taledenn. -4- E lost, hag a skube an drederenn euz stered an neñv, a stlapas anezo war an douar. Chom a reas an aerouant dirag ar vaouez war-nez gwilioudi, evid lonka ar hroudur kerkent ha ma vefe ganet. -5- Lakaad a reas eur mab er bed, eur paotr, an hini a dle beza pastor an oll boblou payan gand eur wialenn houarn, hag e oe tennet kuit ar bugel ha douget daved Doue ha daved e dron. -6- Hag af vaouez a dehas kuit, d'ar goueleh, el leh m'he-deus eur plas renket eviti gand Doue, evid ma vefe maget e-pad mil daou hant devez ha tri ugrent.

-7- Hag e c'hoarvezas eun emgann en neñv, Mikêl hag e êlez a stourmas a-eneb an aerouant, hag an aerouant hag e êlez a stourmas iveau. -8- Med ne zeuas ket an treh gantañ, ha ne oe ket mui a blas evito en neñv. -9- Stlapet e oe ar mell aerouant, ar zarpant koz, an hini a anved an diaoul ha satan, toueller ar bed a-bez. Stlapet e oe war an douar hag e êlez gantañ. -10- Hag e klevet en neñv eur vouez kreñv o lavared : «Bremañ e c'hoarvez amzer ar zilvidi-

gez, ar halloud hag ar rouantelez euz on Doue, hag amzer galloud e Grist, rag stlapet eo bet d'an traon tamaller or breudeur, an hini o zamalle noz-deiz dirag on Doue. -11- Med int-i o-deus bet an treh warnañ dre wad an Oan, ha dre e Gomz, m'o-deus rentet testeni anezi, rag disprizet o-deus o buez beteg mervel. -12- Setu perag bezit leun a levenez, c'hwi an nefivou, ha c'hwi hag a zo o chom enno. Med siwaz deoh, c'hwi an douar hag ar mor, rag an diaoul a zo diskennet davedoh, fuloret oll, o houzoud e chom gantañ nebeud a amzer.

-13- An aerouant, pa welas e oa bet stlapet war an douar, en em lakeas da rédeg warlerh ar vaouez he-doa lakeet ar paotr er bed. -14- Med diou askell an erer braz a oe roet d'ar vaouez evid nijal d'ar goueleh, d'al leh miret eviti, evid beza maget eno, pell diouz ar zarpant e-pad eur pennad, pennadou hag eun hanter pennad. -15- Neuze ar zarpant a zistaolas euz e henou evel eur steriad dour warlerh ar vaouez evid ma vefe kaset gand red an dour. -16- Med an douar a zeuas war zikour ar vaouez, an douar a zigoras hag a lonkas ar steriad distaolet gand an aerouant. -17- Fuloret a-eneb ar vaouez, an aerouant a droas da stourm a-eneb ar peurrest euz he bugale, ar re a vir gourhennennou Doue hag a zalh da desteni Jezuz. -18- Goudeze eh en em lakeas war drézenn ar mor.

AN DAOU LOEN

XIII -1- Neuze e welis o sevel euz ar mor eun euzvil a zeg korn ha seiz penn. War e gerniel deg talgenn, ha war e Bennou anoiou a vlasfemèrèz. -2- An euzvil a welis a oa heñvel ouz eul loupard, e baviou heñvel ouz re an arz, hag e heol heñvel ouz geol eul leon, hag an aerouant a roas dezañ e nerz, e dron hag eur halloud braz meurbed. -3- Unan euz ar pennou a oa evel ma vije bet skoet gand taol ar maro, med e hloaz marvuz a oe pareet. Bamet, ar bed a-bez a yeas da heul an euzvil. -4- Adori a rejont an aerouant ablamour m'e-noa roet galloud d'an euzvil, hag adori a rejont an euzvil en eur lavared : «Piou a zo par d'an euzvil, ha piou a hell stourn outañ ?» -5- Eur henou a eo roet dezañ evid lavared traou balh ha blasfemou. Galloud a oe roet dezañ da labourad e-pad daou viz ha daou ugent. -6- Digeri a reas e henou da doui Doue, da doui e ano, e deltenn hag ar re a oa o demeurañ en neñv. -7- Aotreet e oe da ober brezel d'ar zent ha da gaoud an treh warno. Roet e oe dezañ galloud war beb rummad, peb pobl, peb yez ha peb bro. -8- E adori a raint ar re oll a zo o chom war an douar, ar re ha n'eo ket skrivet o ano abaoe ar penn kenta euz ar bed e levr a vuez an Oan lidlazet. -9- An neb e-neus diskouarn dezañ kleved : -10- an neb a zo tonket da veza prizoniet a vo prizoniet, an neb a zo tonket da veza lazet gand ar hleze, a rank beza lazet gand ar hleze. Aze ema pasian-ted ha feiz ar zent.

-11- Neuze e welis o sevel euz an douar eun euzvil all. Daou gorn e-noa evel eun oan, med komz a ree evel eun aerouant. -12- Oberia a ra gand oll halloud an euzvil kenta, dirag e zaoulagad, hag e ra d'an douar ha d'an dud a zo war an douar adori an euzvil kenta, bet pareet dezañ e houli marvuz. -13- Ober a ra burzudou braz, beteg lakaad an tan da ziskenn euz an neñv war an douar

a wel d'an oll. -14- Touella a ra an dud war an douar gand ar burzudou roet dezañ da ober dirag lagad an euzvil, o lavared d'ar re a zo war an douar sevel eur skeudenn en enor d'an euzvil gloazet gand ar hlez, hag e-neus adkavet e vuez. -15- Roet e oe dezañ galloud da rei buez d'ar skeudenn euz an euzvil, e-doare ma helle ar skeudenn komz ha lakaad d'ar maro en neb na adorfe ket skeudenn an euzvil. -16- Lakaad a ree an oll, bian ha braz, pinvidig ha paour, tud frank ha sklaved da reseo eur merk war o dorm pe war o zal. -17- Ha den ne hello na prena, na gwerza, ma ne zoug ket ar merk, ano an euzvil pe niverenn e ano. D'an hini a zo digor e spered, gweled petra' dalvez niverenn an euzvil. -18- Amañ ema ar skiant : an hini e-neus eur spered lemm, ra gonto niverenn an euzvil, eun niverenn a zen eo, hag an niverenn eo c'hweh kant c'hweh ha tri ugent (666).

AN OAN HAG AN DUD DASPRENET

XIV -1- Hag e welis : an Oan a oa en e zav war menez Siōn, ha gantañ ar re o-doa e ano hag ano e Dad skrivet war o zal, kant pevar mil ha daou ugent a oa anezo. -2- Hag e klevis eur vouez o tond euz an neñv, heñvel ouz mouez douriou braz, heñvel ouz kroz eun taol-kurun pounner, hag ar vouez a glevis a oa heñvel ouz sonadenn telennenrien o c'hoari war o zelennou, -3- hag e kanent eur hantig nevez dirag an tron ha dirag ar pevar loen hag ar gozidi, ha n'helle den deski ar hantig-se, nemed ar hant pevar mil ha daou ugent bet dasprenet euz an douar. -4- Ar re-ze eo ar re n'int ket bet saotret gand merhed, rag gwerh int. Da heul an Oan ez eont da gement leh ma 'z a. Dasprenet int bet a-douez an dud evid beza al lodenn genta kinniget da Zoue ha d'an Oan. -5- N'eus bet Morse ebed war o muzellou, direbech int.

AR VARNEDIGEZ

-6- Hag e welis eun él all o nijal e lein an neñv. Eun Aviel peurbaduz e-noa da embann d'ar re a oa o chom war an douar, da beb bro, da beb meuriad, yez ha pobl. -7- Lavared a ree a vouez kreñv : «Doujit Doue, rentit gloar dezañ, rag deuet eo amzer ar varnedigez, adorit krouer an neñv, an douar, ar mor hag eien an douriou »; -8- hag unan all, eun eil él a zeuas war e lerh hag a lavaras : «Kouezet eo Babilon, ar gér vraz, hi hag he-deus skullet puill war an oll boblou gwinn e zerhêrèz kounnaret».

-9- Hag unan all, eun trede él, a zeuas war o-lerh, ha, kreñv e vouez, a lavaras : «ma 'h ador unan bennag an euzvil hag e skeudenn, ha ma reseo ar merk anezañ war e dal pe war e zorn, -10- hennez a evo, eñ iveau, gwin kounnar Doue, skullet digemmesk e hanaf e gounnar. Da houzañ e-no poaniou an tan hag ar soufr dirag an élez santel ha dirag an Oan. -11- Ar moged euz o foaniou a zav a gantved da gantved ha n'o-deus repu ebed, na deiz na noz, ar re a ador an euzvil, na kement hini a reseo ar merk euz e ano. -12- Deuet eo ar mare da jom stard, evid ar zent a vir gourhemennou Doue hag ar feiz e Jezuz. -13- Hag e klevis eur vouez o lavared euz an neñv : «skriv : eüruz, azaleg bremañ, ar re a zo maro en Aotrou : ya, eme ar Spered, dezo eo diskuiza euz o foaniou, rag o oberou a ya d'o heul».

EOST HA MENDEM

-14- Hag e welis : eur goabrenn wenn e oa, ha war ar goabrenn ez oa, war e azez, eur doare mab-den, eur gurunenn aour war e Benn hag en e zorn eur falz lemm. -15- Goudeze, eun él all a zeuas er mêz euz an templ, hag en eur youhal a vouez uhel d'an hini a oa en e azez war ar goabrenn : «Taol da falz, gra an eost, deuet eo amzer an eost, dare eo eost an douar». -17- Eun él all a zeuas er mêz euz templ an neñv, en e zorn ez oa ive eur falz lemm. -18- Hag eun él all a zeuas er mêz euz an aoter. Galloud e-noa war an tan ; gand eur vouez kreñv e krias d'an hini a oa gantañ ar falz lemm : «Taol da falz lemm ha mendem ar blokajou euz gwinienn an douar, rag dare eo e rejñ». -19- Hag an él a daolas e falz war an douar, mendem a reas ar winienn euz an douar, hag ar vendem a oe taolet e beol vraz kounnar Doue. -20- Breset e oe ar veolad er mêz euz kér, anezi e teuas gwad a zavas beteg gwestenn ar hezeg war eul ledander a vil c'hweh kant «stad».

AR SEIZ EL HAG AR WALINIER ZIWEZA

XV -1- Hag e welis en neñv eur zin all braz ha souezuz : seiz él, ganto sez gwalenn, ar re ziweza, rag ganto e vo sevenet kounnar Doue. -2- Hag e welis, heñvel ouz eur mor mén-strink mesket gand tan. En o zav war ar mor, ar re o-doa bet an treh war an euzvil, war e skeudenn ha war niverenn e ano, ganto ez oa telennou, -3- hag e kanent kantig Moizez, servicher Doue, ha kantig an Oan : braz hag estlammuz, emezo, eo da oberou, Aotrou Doue oll halloud deg Roue ar poblou, -4- Piou n'e-nefe ket a zoujañs, Aotrou, ha na rentfe ket gloar d'az Ano ? Rag Te, hebken, a zo santel. An oll boblou a zeuio hag a stouo dirazout rag sklér eo bet diskouezet da varnedigeziou.

-5- Goudeze e welis : an templ, ennañ telenn an testeni a zigoras en neñv. -6- Hag ar seiz él, ar re a oa ganto ar seiz gwalenn, a zeuas er mêz euz an templ ; gwisket e oant gand lin glan-lugermuz, gourizou aour o-doa endro d'o dargreiz. -7- Unan euz ar pevar loen a roas sez hanaf aour d'ar seiz él, hanafou leun euz kounnar Doue a vev a gantvejou da gantvejou. -8- Leun-voged e oe an templ, ablamour da hloar Doue ha d'e halloud, ha n'helle den mond en templ a-barz ma vefe peurzevenet seiz gwalenn ar seiz él.

AR SEIZ HANAF

XVI -1- Hag e klevis eur vouez kreñv o lavared euz an templ d'ar seiz él : «It, ha skuillit war an douar ar seiz hanaf euz kounnar Doue». -2- Mond a reas ar henta da skuilla e hanaf war an douar, eur gwall houli noazuz a skoas ar re a zouge merk an euzvil hag a stoue dirag e skeudenn. -3- An eil a skuil-las e hanaf war ar mor, ar mor a zeuas da vez a evel gwad unan maro, hag e varvas kement tra e-noa er mor eur c'hwezadenn a vuez. -4- An trede a skuil-las e hanaf war ar steriou ha war eien an doureier ; trei a rejont e gwad. -5- Hag e klevis él an doureier o lavared : «Just out, Te hag a zo, hag a zo bet, ar Zant, peogwir az-peus barnet evel-se, -6- rag gwad ar zent hag ar brofeded

o-deus skuillet, ha gwad iveauz az-peus roet dezo da eva. -7- Mad a zo greet dezo». Hag e klevis an aoter o lavared :«Ya, Aotrou Doue oll halloudeg, gwi-rion ha just eo da varnedigeziou».

-8- Ar pevare a skuillas e hanaf war an heol, hag e oe roet dezañ galloud da zevi an dud en tan. -9- Hag an dud a oe devet gand eun dommder vraz. Mallozi a rejont ano Doue e-neus galloud war ar gwalinier-se, med ne zeujont ket da zistrei evid renta gloar dezañ. -10- Ar pemped a skuillas e hanaf war dron an euzvil ; e rouantelez a oe beuzet en deñvalijenn ; gand ar boan, an dud a jaoke war o zeod. -11- Mallozi Doue an nefñ a rejont, en abeg d'o foaniou ha d'o gouliou, med ne zeuas ket a geuz dezo d'o oberou.

-12- Ar c'hwehved a skuillas e hanaf war ar ster vraz Eufrad, dizehet e oe evid digeri hent d'ar rouaned a zeu euz ar zav-heol. -13- Neuze, euz geol an aerouant, euz geol an euzvil, ha geol ar fals-profed, e welis o tond er-méz tri spered hudur heñvel ouz gwekleved, -14- rag bez ez int sperejou diaouleg, ober a reont burzudou ha mond da gaoud rouaned ar bed a-bez d'o boda evid an emgann a vo da zeiz braz an Doue oll halloudeg. -15- Setu ma teuan evel eul laer. Eüruz an hini a veill, hag a zalh e zillad ; evel-se n'e-no ket da vond en noaz na da gaoud mez dirag an dud. -16- Bodet e oent ganto en eul leh anvet, en hebreeg, Harmagedon.

-17- Ar seizved a skuillas e hanaf en êr, hag euz an templ e teuas, o tond euz an tron, eur vouez kreñv da lavared : «Degouezet eo». -18- Neuze e oe luhed, mouezioù, kurunou ha ken braz kren-douar ma ne oa bet biskoaz kemend-all abaoe m'emañ an den war an douar. -19- E teir lodenn e torras ar gêr vraz, hag ar hêriou dre ar broiou a gouezas en o foul. Neuze Doue a zeuas da zoñj dezañ euz Babilon, ar gêr vraz, evid rei dezi an hanaf a vourbouill enni gwin e gounnar. -20- Hag e tehas an oll inizi, hag ar meneziou ne oe mui anezo. -21- Karzarhennou ken pouunner ha talanchou a gouezas euz an nefñ war an dud, ar re-mañ a vallozas Doue, en abeg d'ar walenn gazarh, rag eur walenn skrijuz e oa, ma 'z eus unan.

BARNEDIGEZ AR ZERH-VRAZ

XVII -1- Dond a reas unan euz ar seiz êl a oa ganto ar seiz hanaf, hag e kom-zas ouzin evel-henn : «Deus, hag e tiskouezin dit, penaizo eo barnet ar zerh vraz a zo o chom war ribl ar moriou don. -2- Ganti o-deus serhet rouaned an douar, ha mezvet eo bet tud an douar gand gwin he zerhêrèz. -3- Neuze e oen kaset a spered d'ar goueleh hag e welis eur vaouez azezet war eun euzvil ruz-tan goleoet a anoiou a vlasfemêrèz, seiz penn e-noa ha deg korn. -4- Ar vaouez gwisket e mogw ha ruz-tan a sked warni aour, mein priziuz, ha perlez. En he dorn eun hanaf aour leun a draou euzuz, saotradurez he zerhêrèz. -5- He zal a oa skrivet warnañ eun ano, eur mister : Babilon ar vraz, mammenn ar zerhed hag an traou euzuz euz an douar. -6- Hag e welis ar vaouez mezvet gand gwad ar zent ha gwad testou Jezuz. Sabatuet e oen ouz he gweled. -7- Neuze e lavaras din an êl : «Perag beza sabatuet ? Me a lavaro dit mister ar vaouez ha mister an euzvil a zougen anezi hag e-neus seiz penn ha deg korn.

-8- An euzvil az-peus gwelet a zo bet anezañ, med n'eus ket mui ; o vond da zevel euz an islong ema, evid mond da goll tud an douar, ar re n'eo ket skrijet o ano war roll ar vuez azaleg krouidigez ar bed, a vo souezet o weled an euzvil, rag bez e oa anezañ ha n'eus ket mui, med distrei a ray. -9- Amañ ema deuet ar mare da gaoud ar spered sklerijennet gand ar furnez : ar seiz penn eo ar seize menez, el leh m'ema ar vaouez o chom, bez ez int iveauz seiz roue. -10- Pemp anezo a zo kouezet, ar c'hwehved a zo o ren, n'eo ket deuet c'hoaz, med pa zeuio ne jomo nemed eun nebeudig amzer. -11- An euzvil a oa anezañ ha n'eus ket mui, eñ iveauz a zo eun eizved roue. Unan euz ar seiz eo, hag ez a da goll.

-12- An deg korn az-peus gwelet a zo deg roue ha n'o-deus ket c'hoaz resevet o roueelez, med e-pad eun eur o dezo galloud a roue asamblez gand an euzvil. -13- Ar re-ze ne glaskont nemed eun dra : lakaad o nerz hag o galloud e servich an euzvil, -14- brezel a raint d'an Oan hag an Oan a dreho warno, rag bez ez eo Aotrou an Aotronez, roue ar rouaned, ha gantañ iveauz an dud galvet, an dud dibabet, an dud fidel a dreho. -15- An doureier az-peus gwelet, emezañ adarre, el leh m'ema ar zerh o chom, a zo poblou, berniou tud, broiou ha yezou.

-16- An deg korn az-peus gwelet, hag an euzvil, o-dezo kas ouz ar zerh, heh-unan e vo lezet ganto hag en noaz, debri a raint he horv, en tan e tevint anezi.

-17- Rag Doue e-neus lakeet en o halon ober e ziviz dezañ, eur memez diviz : lakaad o roueelez e servich an euzvil beteg ma vo sevenet komzou Doue. -18- Hag ar vaouez az-peus gwelet eo ar gêr vraz a ren war rouaned an douar.

DISTRUJ BABILON

XVIII -1- Goudeze e welis eun êl all o tiskenn euz an nefiv. Braz e oa e halloud, ha gand e hloar e oe sklerijennet an douar. -2- Youhal a reas a vouez krefiv : «Kouezet eo ! Kouezet eo ! Babilon ar gêr vraz deuet eo da veza eun demeurañs evid an diaouled, eun toull kuz evid an oll sperejou hudur, toull kuz an oll laboused hudur hag euzuz, -3- rag d'an oll boblou he-deus roet da eva gwin he hounnar a zerhêrez, ha rouaned an douar o-deus serhet ganti, ha marhadourien an douar a zo savet da binvidig diwar he fompadou direol. -4- Hag e klevis eur vouez all o lavared euz an nefiv : «It er mêz euz ar gêr-se, o va fobl, gand aon da gemered perz en he fehejou, ha da gaoud lod er gwaliñer a zo da zegouezoud ganti, -5- rag berniet eo he fehejou beteg an nefiv, ha Doue e-neus dalhet soñj euz he dizurziou. -6- Rentit dezi hervez ar pez he-deus greet d'ar re all, grit dezi an hanter muioh egod n'he-deus greet. En hanaf ma kemmeske ennañ he gwin, kemmeskit dezi an hanter muioh. -7- Grit dezi kaoud kement a boan, ha kaoud kement a gañv ha m'he-deus en em blijet el lorh hag er pompadou, peogwir e lavar-hi en he halon : «Rouanez on, war va zron, ha n'on ket intañvez, biken ne vezin e kañv». -8- Setu perag e teuio warni, en eun devez hebken, ar gwalinier pourchaset eviti : maro, kañv, nao-negez, pulluhet e vo dre an tan, rag gallouduz eo an Aotrou Doue e-neus he barnet.

-9- Neuze e ouelo, hag e hirvouido war he hont rouaned an douar o-deus kemeret perz en he zerhèrèz hag en he fompadou pa welint moged an tangwall lakeet enni. -10- Ne dostaingt ket gand aon rag he foan, hag e lavarint : «Siwaz ! Siwaz ! Babilon ar gér vraz, ar halloudeg, eun eur a zo bet awalh evid barn ahanout». -11- Marhadourien an douar a ouel hag a ra kañv dezi, rag ne bren den ebed mui o lestrajou : -12- lestrajou aour hag arhant, mein-brizieu ha perlez, lin, moug, koad c'hwez-vad, traou dent olifant, koad priziuz, arem, houarn pe varbr, -13- kanell, amon, louzeier c'hwez-vad, mir, ezans, gwin, eoul, bleud fin ha gwiniz, ejened, déñved, kezeg ha kirri, sklaved ha prizonidi. -14- Ar gounid a c'hoantee da galon a zo eet pell diouzit, kement tra flour ha splann a zo kollet evidout. Biken mui ne vezint kavet endro. -15- Ar varhadourien bet pinvidikeet ganti ne dostaingt ket gand aon rag he foan, en eur ouela hag o hirvoudi e lavarint : -16- «Allaz ! allaz ! Ar gér vraz, gwisket e lin, e moug ha ruz-tan, an aour o skedi warni, hag ar vein-brizieu hag ar perlez, -17- eun eur a zo bet awalh evid kas da netra kement a dalvoudegez».

Peb loman, peb merdead en andreou-se, peb martolod hag ar re a denn o boued euz ar mor ne dostaent ket, -18- hag e youhent o weled ar voged o sevel euz ar gér o tevi, hag e lavarent : «Peseurt kér a oa par d'ar gér vraz ?»

-19- Poultrenn a daolent war o fenn hag e youhent en eur ouela hag o hirvoudi «ar gér vraz pinvidig-mor, he-doa pinvidikeet ar re oll o-doa listri war ar mor, eun eur a zo bet awalh evid he gwasta».

-20- Bez laouen an neñv ha c'hwí iveau ar zent, an ebrestel, ar brofeded, rag Doue e-neus roet deoh a-eñeb dezi eur varnedigez just.

-21- Eun él gallouduz a grogas neuze en eur mén, evel eur mén-milin pounner, hag a stlapas anezañ er mor en eur lavared : «Gand kemend-all a feulsted e vo stlapet Babilon ar gér vraz. Ne vo ket kavet mui». -22- Ennout ne vo ket klevet mui kan an delennerien, nag hini ar vuzikerien, ar fleüterien, an drompillerien ; artizan ebed euz micher ebed, ne vo kavet ennout, trouz mén-milin ebed ne vo klevet ennout ; -23- Ne skedo mui ennout sklerijenn lamp ebed, mouez ar gwaz nevez hag e vreg ne vo mui klevet ennout, peogwir da varhadourien a oa ar pennou braz euz an douar, peogwir da zorsérèz he-deus touallet an oll boblou, peogwir ennout eo bet kavet gwad ar brofeded, ar zent, ar re oll a zo bet lazet war an douar.

TREHADENN HAG EURED AN OAN

XIX -1- Goudeze e klevis evel safar eur mor a dud hag a lavare e barr an neñv : «Alleluia ! d'on Doue eo ar zilvidigez, ar hloar hag ar galloud, -2- rag re wir ha just eo e varnedigez : barnet e-neus ar zerh vraz he-deus kontammet an douar gand he zerhèrèz veñjet e-neus warni gwad e zervicherien». -3- Hag adarre e lavarjont : «Alleluia ! hag ar moged anezai a zav a gantvejou da gantvejou». -4- Hag ar pevar goziad war 'n ugent hag ar pevar loen a stouas da adori an Doue a oa azezet war an tron hag e lavarjont : «Amen, Alleluia !»

-5- Neuze, o tond euz an tron, eur vouez a lavare : «Meulit on Doue, c'hwil e zervicherien, c'hwil, bian ha braz, hag a zouj anezan». -6- Hag e klevis evel safar eur mor a dud, evel kroz ar moriou don hag evel talmou kurun pounner. Lavared a reent : «Alleluia» rag staget e-neus da ren on Aotrou, on Doue oll halloudeg. -7- Bezom laouen, leun a levez, meulom anezan, rag degouezet eo eured an Oan ; en em fichez he-deus he bried. -8- Gwisket eo bet gand lin fin, skeduz ha glan, rag al lin eo oberou just ar zent.

-9- Hag e lavaras din : «Skriv : eürüz ar re zo pedet da vañvez eured an Oan», hag e lavaras din c'hoaz : «Ar re-ze a zo komzou gwirion a-berz Doue». -10- Neuze e stouis e-harz e dreid d'e adori ; med lavared a reas din : «Arabad eo dit henn ober, me a zo kenzervicher ganit ha gand da vreudeur a vir testeni Jezuz. Doue eo a dleez adori, hag testeni Jezuz eo ar Spered a brofediez.

TREH AR MESIAZ

-11- Neuze e welis an neñv digor : eur marh gwenn e oa ; an hini a zo war e gein a zo e ano : Fidel ha Gwirion. Barn ha stourm a ra gand justis. -12- E zaoulagad a zo flamm-tan, war e benn ez eus talgennou e-leiz, ha skrivet warnañ eun ano ha n'eus nemetañ ouz e anaoud. -13- Eur vantell trempet er gwad a zo ouz e wiska, e ano eo : Komz Doue. -14- Armeadou an neñv, gwisket gand lin gwenn ha glan, a heulie anezan war gezeg gwenn. -15- Eur hlez lemm a zeu er-mêz euz e henou evid skei gantañ ar broadou. En, e-unan, gand eur wialenn houarn a reno anezo war ar peuri, bresa a ray, e-unan, ar veol a vourbouill enni gwin kounnar on Doue oll halloudeg. -16- War e vantell ha war e vorzed e toug eun ano skrivet : Roue ar rouaned, hag Aotrou an Aotrounez.

-17- Neuze e welis eun êl en e zav e-barz an heol. A vouez uhel e youhas d'an oll laboused a nije uhel en oabl : «Deuit d'en em voda evid bañvez braz Doue, -18- evid debri kig ar rouaned, kig an ofiserien, kig an dud galloudeg, kig ar hezeg hag ar re a vez war o hein, kig an oll dud, frank pe sklav, bian ha bras. -19- Hag e welis an euzvil ha rouaned an douar hag o armeadou bodet evid stourm ouz ar marheg hag e armead. -20- Paket e oe an euzvil ha gantañ ar falsprofed, e-noa dre ar burzudou greet gantañ dirag an euzvil, touallet ar re o-doa resevet merk an euzvil hag adoret e skeudenn. O-daou e oent taolet ez-veo el lennad tan : eul lennad soufr entanet. -21- Ar re all a oe lazet gand ar hlez a zeue euz genou ar marheg, hag an oll laboused o devoa o gwall euz o hig.

EUR MILIAD BLOAVEZIOU

XX -1- Neuze e welis eun êl o tiskenn euz an neñv, en e zorn e oa gantañ alhwez an islong hag eur jadenn bounner. -2- Paka krog a reas en aerouant, ar zarpant a-wechall, an diaoul ha Satan eo, hag e chadennas anezan evid eur miliad bloaveziou. -3- En islong e taolas anezan, ha prenna ha siella warnañ evid ma chomfe heb touella an dud beteg ma vefe echu ar miliad bloaveziou. Goudeze e tle beza frankizet evid eun nebeud amzer. -4- Hag e welis troniou. Ar re a zeuas da azeza warno, e oe roet dezo galloud da varn. Hag e welis ives enezou ar re a oa bet dibennet en abeg da desteni Jezuz ha

da Gomz Doue hag ar re n'o-doa ket adoret an euzvil nag e skeudenn ha n'o-doa ket resevet ar merk na war o zal na war o dorn. Dond a rejont d'ar vuez ha ren gand ar Hrist e-pad eur miliad bloaveziou. -5- Ar peurrest euz ar re varo, ne zeujont ket d'ar vuez araog fin ar miliad bloaveziou. Hennez eo an adsao kenta da veo. -6- Eüruz ha santel ar re o-deus perz en adsao kenta da veo. N'e-neus krog ebed enno an eil maro. Beleien Doue hag ar Hrist e vezint, ha gantañ e renint e-pad ar miliad bloaveziou.

AN DREHADENN HAG AR VARN

-7- Pa vo eet da benn ar miliad bloaveziou, e vo frankizet Satan euz e brizon. -8- Hag ez ay da douella ar poblou a zo dre bevar horn an douar, Gog ha Magog, o boda a ray evid an emgann, ken niveruz int ha trézennou ar mor. -9- Dond a rejont war ar vro a-bez, kelhiet e oe tachenn ar zent hag ar gêr vuia-karet. Med eun tan a ziskennas euz an neñv hag a lonkas anezo. -10- Hag an diaoul, o zoueller, a oe stlapet el lenn a dan hag a zoufr, e-kichenn an euz-vil hag ar fals-profed. Poaniou o dezo da houzañ ; noz-deiz, da virviken. -11- Neuze e welis eun tron gwenn ha braz hag an hini a oa azezet warnañ : dirazañ e tehas an douar hag an neñv heb lezel roud ebed war o lerh. -12- Hag e welis ar re varo, ar re vraz hag ar re vian, en o zav dirag an tron, hag e oe digoret leoriou. Eul levr all a oe digoret, levr ar vuez, hag ar re varo a oe barnet hervez o oberou, hervez ar pez a oa skrivet el leoriou. -13- Ar mor a rentas ar re varo dalhet ennañ, ar Maro hag an Iferniou ar re varo dalhet ganto, hag e oe barnet peb hini hervez e oberou. -14- Neuze ar Maro hag an Iferniou a oe stlapet e lenn a dan. Al Lenn a dan, setu aze an eil maro. -15- Ha kement hini ne oe ket kavet e ano skrivet el levr a vuez a oe stlapet el lenn a dan.

NENVOU NEVEZ HA DOUAR NEVEZ

XXI -1- Hag e welis : eun neñv nevez e oa, hag eun douar nevez, rag an neñv kenta hag an douar kenta a oa eet da get, hag ar mor n'eus mui anezañ. -2- Ar gêr zantel, ar Jeruzalem nevez, a welis o tiskenn euz an neñv a-gichenn Doue, kempennet evel eur plah-nevez en em fichef evid he gwaz. -3- Hag e klevis eur vouez kreñv o tond euz an tron hag a lavare : «Setu amañ demeurañs Doue gand an dud, chom a ray ganto. Int-i a vo e bobl hag eñ a vo «An Doue a zo ganto». -4- Seha a ray an daerou euz o daoulagad, ar maro ne vo mui anezañ ; ne vo mui na kañv, na klemm, na poan, rag ar bed kenta a zo eet da get.

-5- Hag an hini a zo azezet war an tron a lavaras : «Setu ma ran nevez-flamm peb tra» hag e lavaras : «Skriv : sur ha gwirion eo ar homzou-se». -6- Hag e lavaras din : «Greet eo peb tra, an Alfa hag an Omega on, ar penn kenta hag ar penn diweza ; d'an neb e-neus sehed e roin, evid netra, euz eienenn an dour a vuez. -7- An treher a resevo kement-se da hêrez ; me a vo e Zoue hag eñ a vo va mab. -8- An dud laosk a-vad, an dud difeiz, ar re ziroll, ar vuntrerien, an dud hudur, ar zorzerien, an azeulerien fals-doueou hag ar gaouiajed, e lenn an tan hag ar soufr ema o lod ; hennez eo an eil maro.

AR JERUZALEM NEVEZ

-9- Neuze e teuas unan euz ar seiz êl, ar re a oa ganto ar seis hanaf leun euz ar seis gwalenn ziweza hag e lavaras din : «Deus, ma tiskouezin dit ar plah nevez, pried an Oan». -10- Va dougenn a reas a spered war eur menez braz hag uhel, hag e tiskouezas din ar gér zantel, Jeruzalem, o tiskenn euz an neñv a-gichenn Doue. -11- Skedi a ree euz gloar Doue e-unan. Tenna a ree he sked d'eur mén priziuz heñvel ouz eur mén-yalp treuz-weluz evel strink. -12- Mogeriou braz hag uhel he-doa gand daouzeg dor ; e toull an noriou ez oa daouzeg êl, hag anoiou skrivet, anoiou an daouzeg meuriad euz bugale Israel. -13- Diouz kostez ar zav-heol ez oa teir dor, diouz kostez an hanter-noz teir dor, diouz kostez ar hreisteiz teir dor, diouz kostez ar huz-heol teir dor. -14- Mogeriou kér a oa savet war daouzeg diazez, skrivet warno daouzeg an, anoiou daouzeg abostol an Oan. -15- An hini a gomze ouzin e-noa eur gorzenn aour e-giz muzul, evid muzula ar gér, he doriou hag he mogeriou-divenn. -16- Pevar-horneg e oa ar gér, keid-ha-keid a-dreuz hag a hed. He muzula a reas gand e gorzenn : daouzeg mil stad a ree, keid-ha-keid e oa a-dreuz, a hed hag a uhelder. -17- Muzula a reas ar mogeriou-divenn : kant pevar troatad ha daou ugent o-doa hervez muzul an dud implijet gand an êl. -18- Ar mogeriou-divenn a zo e mén-yalp ; aour pur, heñvel ouz strink pur eo ar gér. -19- Diazezou mogeriou kér a zo kinklet gand mein briui a beb seurt. An diazez kenta a zo mein-yalp ; an eil mein-safir ; an trede kalkedon ; ar pevare emrodez ; -20- ar pemped sardoniz ; ar c'hwehvéd agatenn ; ar seized aourven ; an eizved beril ; an naved topaz ; an degved mein-glaz aour ; an unnegved sirken ; an daouzegved ametist.

-21- An daouzeg dor a zo daouzeg perlezenn. Peb dor, en he fez, n'oa anezi nemed eur berlezenn aour pur ; heñvel ouz strink sklér oa al leur-gér. -22- Templ ebed n'am-eus gwelet e kér, rag templ kér eo an Aotrou Doue oll hal-loudeg hag an Oan. -23- Ar gér, n'he-deus ezomm nag euz an heol, nag euz al loar evid he sklerijenna, rag gloar Doue eo a sklerijenn anezi hag an Oan eo ar goulou. -24- Ar poblou payan a gerzo ouz he sklerijenn, ha rouaned an douar a zegaso dezi o gloar. -25- He dorojou né vezint ket serret war an deiz, rag el leh-se ne vo noz ebed ken. -26- Degaset e vo di gloar hag enor ar poblou payan.

XXII -1- Hag e tiskouezas din eur ster dour a vuez, skeduz evel strink, a darze euz tron Doue hag an Oan. -2- E-kreiz al leur-gér, hag etre diou vrehenn ar ster, ez eus eur wezenn a vuez, a daole daouzeg gwech he frouez, beb miz e roe frouez ; he deliou a vez implijet evid rei ar pare d'ar poblou payan. -3- Ne vo malloz ebed ken. Tron Doue hag an Oan a vo enni, hag e zervicherien a adoro anezañ : -4- gweled a raint e zremm hag e ano a vo war o zal. -5- Ne vo noz ebed ken, n'e-no den ezomm euz sklerijenn ar goulou, nag euz sklerijenn an heol, rag an Aotrou Doue a skuillo warno e sklerijenn ; ren a raint da virviken.

-6- Neuze e lavaras din : «Sur ha gwirion eo ar homzou-ze. An Aotrou, Doue sperejou ar brofeded, e-neus kaset e êl evid diskouez d'e zervicherien ar pez

a dle degouezoud dizale ; -7- setu, me a zeuio dizale. Eüruz an neb a vir ar homzou profedet el levr-mañ. -8- Me, Yann, am-eus klevet ha gwelet kement-se, me a zo servicher evidout hag evid da vreudeur ar brofeded, hag evid ar re a vir komzou al levr-mañ. Doue a dleez adori. -10- Neuze e lavaras din : «Na zah ket kuzet ar homzou profedet el levr-mañ, rag tost eo ar poent. -11- Ra gendalho an den disleal en dislealded, an den hudur en hudurnez, med ra gresko an den just er justis hag ar zant er zantel. -12- Setu ma teuan dizale, ha va gopr a zo ganin, evid rei da beb hini hervez e labour. -13- Bez ez on an Alfa hag an Omega, ar penn kenta hag ar penn diweza. -14- Eüruz ar re a wali o zae evid kaoud gwir war gwezenn ar vuez hag antreal e kér dre an noriou. -15- Er mēz, ar chas, ar zorserien, an dud gadal, ar vuntrierien, an azeulerien doueoufaoz, ha kement hini a zo troet gand ar gevier pe a zo gaouiad. -16- Me Jezuz, am-eus kaset va él da rei deoh an testeni-se, diwarbenn an Ilizou, me a zo gwirizienn a lignez David, ar steredenn-vintin lugernuz. -17- Ar Spered hag ar plah-nevez a lavar : «Deus», an neb a glev, ra lavar : «Deus» an neb e-neus sehed ra zeuio, an neb e-neuz c'hoant ra gémoro dour a vuez evid netra. -18- Test on evid kement hini a glev ar homzou profedet el levr-mañ. Ma teu unan bennag da lavared tra-pe-dra ouzpenn, Doue a lakaio da greski dezañ ar gwali-nier a zo bet ano anezo el levr-mañ. -19- Ma teu unan bennag da denna kuit tra-pe-dra euz ar homzou profedet el levr-mañ, Doue a dенно kuit e lod euz ar wezenn a vuez hag euz ar gēr zantel, a zo ano anezo el levr-mañ.

- 20- An hini a desteni kement-mañ a lavar : ya, dontd a rin heb dale.
- 21- Amen, amen, Aotrou Jezuz. Gras an Aotrou Jezuz ra vezo ganeoh oll!





Moulet e Karanteg gand R. Abjean - Pask 1988

Caolenn

Oberou Ebrestel	1
Lizer Sant Paol d'ar Romaned	47
Kenta Lizer Sant Paol d'ar Gorintianed	67
Eil Lizer Sant Paol d'ar Gorintianed	87
Lizer Sant Paol d'ar Halated	98
Lizer Sant Paol d'an Efezianed	106
Lizer Sant Paol d'ar Filipianed	114
Lizer Sant Paol d'ar Holosianed	120
Kenta Lizer Sant Paol d'an Tesalonisianed	126
Eil Lizer Sant Paol d'an Tesalonisianed	131
Kenta Lizer Sant Paol da Dimote	134
Eil Lizer Sant Paol da Dimote	140
Lizer Sant Paol da Dit	144
Lizer Sant Paol da Filemon	148
Lizer Sant Paol d'an Hebreed	150
Lizer Sant Jakez	164
Kenta Lizer Sant Pèr	170
Eil Lizer Sant Pèr	176
Kenta Lizer Sant Yann	182
Eil Lizer Sant Yann	188
Trede Lizer Sant Yann	189
Lizer Sant Jud	190
Diskuliadur Sant Yann	193



